

AR B ED K ELTIEK

KELAOUENN VIZIEK

KELEIER

ARZ

SKIANT


LENNEGEZH

ISTOR

KONTADENNOU

KANAOUENNOU

H. A...




Revue mensuelle-No.25-Janvier 1961 Kelaouenn vizeiek-Niv.25-Genver 1961  
Abonnement annuel : 7 NF. Koumanant-bloaz : 7 LN.  
CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, St.Marc, BREST.

# BLOAVEZH MAT !

## T A O L E N N

Ar miz .....	p.1
Al louzoù-kegin (Arzel Even) .....	p.4
Enklask ABK diwar-benn ar Brezhoneg .....	p.7
En Iwerzhon : an tiegezh hag ar yezh (Alan.Heussaff) ....	p.8
Skoazell d'ar Beilhadegoù (Roparz Hemon) .....	p.10
Skridoù nevez .....	p.11
Kanomp : <u>Er prenestr ahont - Ar stêrig</u> .....	p.12
- : <u>Ar baleer-bro - An derou-mat</u> .....	p.13
- : <u>E-barzh ar c'hoadoù glas</u> .....	p.14
<u>DALC'HOMP</u> : <u>Tamm ar paour</u> (Roparz Hemon) .....	p.15

O



## DRE AN DOUAR

DARVOUDOU ALJERIA : Dispac'h a voe en Aljeria e-pad gweladenn Prezidant Bro-C'hall e miz Kerzu. Pa zegouezhas, d'an 9, e tarzhas dizurzhioù en Aljer, Oran ha kêrioù all. Harz-labour a voe graet war urzh "Talbenn Aljeria C'hall". Galvet e voe an arme da skoazellañ an archerien. D'an 11, ez eas an traoù war washaat. Muzulmiz en em savas en Aljer hag en Oran. Ouzhpenn 80 a dud a voe lazhet en emgannoù, ha war-dro 1500 gloazet, hervez ar sifroù roet gant ar gouarnamant gall. Ar Prezidant a guitaas Aljeria d'an 13, un devezh a-raok an devezh merket. Nebeut amzer kent ma loc'has e garr-nij eus Bone, e tennas soudarded al Legion Estren war dibunadegoù displegadegerien, o lazhañ 2 Europad ha 2 Vuzulmad. Kann a voe ivez en Aljer, hogen a-benn neuze e oa dalc'het -start kêr, ha dreist-holl ar c'harterioù muzulmat, gant an arme c'hall.



"Talbenn Aljeria C'hall" a voe divodet war urzh ar gouarnamant d'an 14 Kerzu, koulz ha daou strollad studierien. 111

D'ar 5, Lagaillarde ha pevar all, a oa bet lezet e frankiz-da-c'hortoz e-pad o frosez e Pariz, lesanvet "Prosez ar Bardelloù", ne zeujont ket dirak o barnerien. Diflipet e oant da Vro-Spagn, nemet unan, en em zaskoras. 111

D'an 23 Du e oa bet roet da c'houzout e vije graet referendom e Bro-C'hall diwar-benn kudenn Aljeria. Ar referendom-se a vo graet d'an 8 Genver. 111

LOUMOUMBA HARZET : Loumoumba, ar rener kongoat a oa dalc'het en e di Kerleopold gant soudarded Moboutou, a gemeras an tec'h e diwezh miz Du. D'an 2 Kerzu, avat, e voe harzet e kreiz ar vro ha degaset en-dro d'ar gêrbenn evel prizoniad, staget e zaouarn gant ur gordenn a-dreñv e gein. 111

E Kerstanley, unan eus keneiled Loumoumba, B.Salamou, a embannas d'an 9 e vije bac'het an holl Velgiz a oa e kêr ma ne vije ket roet e frankiz da Loumoumba. Ar c'heloù-se a voe dislavaret da c'houde. Hogen e-keit-se e oa bet roet urzh gant Hammarskjöld da nerzhioù ar Broadou Unanet gwareziñ Europiz Kerstanley. D'an 13, ur c'henseurt all da Loumoumba, A.Gizenga, a embannas e oa gwir rener Bro-Gongo, hag e vije hiviziken Kerstanley ar gêrbenn. 111

DOUARIDIGEZH AR SOUDARDED IWERZHONAT LAZHET E BRO-GONGO : D'an 22 Du e voe douaret e Dulenn an 9 soudard iwerzhonat bet lazhet e Bro-Gongo d'an 8. Douget e voe an nav arched d'ar vered en un ambrougadeg vras a dremenas dre greiz kêr dirak unan eus ar brasañ engroeziou biskoazh dastumet eno. 111

EMRENEREZH MAOURITANIA : Emrenerzh Maouritania a voe embannet d'ar 27 Du, evel ezel ar Gumuniezh C'hallafrikat. Un devezh a gañv e voe e Maroko, a lavar n'eo Maouritania nemet ur rannvro anezhi. 111

MALI HA GANA : An Dr.Nkrumah, rener Gana, a zisklerias d'ar 27 Du ne vije nemet ur parlamant etre Gana ha Mali. Ne weler ket c'hoazh penaos e c'hellfe un ezel eus ar Gumuniezh Vreizhveurek bezañ unanet gant un ezel eus ar Gumuniezh C'hallafrikat. 111

TAOL-DISKAR EN ETIOPIA : D'ar 14 Kerzu e teuas keloù eus un taol-diskar Adis Ababa. Ar priñs-hêr Asfa Wasen en doa kemeret, a lavared, penn ur gouarnamant nevez, savet gant harp Gward Impalaerel ar Palez ha "tud yaouank desket". Pal ar gouarnamant nevez a vije reiñ muioc'h a frankiz d'ar bobl. An impalaer Haile Selasie a oa e Brazil d'an ampoent. 111

BREZEL-DIABARZH E LAOS : Tri strollad a seblant kemer perzh en dispac'h a ra reuz abaoe meur a viz e Laos. Bez' ez eus emgannoù dibaouez en-dro da Vientian, atizet gant komunourien hag enepkomunourien. 111

ALAMAGN HAG AR STADOU-UNANET : Ur strollad dileuridi amerikan, en o fenn an Ao.Anderson, Sekretour an Teñzorierzh, a oa aet da Vonn evit 111

111 divizout gant gouarnamant Alamagn Gornog. An Amerikaned a felle dezho  
 111 lakaat an Alamaned da bacañ muioc'h evit dalc'hidigezh an nerzhioù  
 111 amerikan a zo bremañ en Alamagn, pezh a voe nac'het.

111 AR ROUE BALDOEN DIMEZET : Roue Baldoen ar Velgiz a voe dimezet gant  
 111 ar Spagnolez Fabiola de Mora y Aragon e Brusel d'ar 15 Kerzu.

111 ARC'HESKOB CANTERBURY ER VATIKAN : An Dr. Fisher, arc'heskob Canterbury  
 111 ha penn Iliz Vro-Saoz, a voe degemeret gant ar Pab Yann XXIII er Vatikan  
 111 d'an 2 Kerzu, un darvoud a bouez en istor an darempredoù etre katoliked  
 111 ha protestanted.

111 "NERZH-SKO" AR C'HALLAOUED : D'ar 6 Kerzu e voe degemeret gant ar  
 111 Vodadenn Vroadel e Pariz ar mennad-lezenn kinniget gant ar gouarnamant  
 111 evit krouiñ un nerzh-sko nukleel gall. Nac'het e oa bet ar mennad gant  
 111 ar Sened, ha dont a reas teir gwech dirak ar Vodadenn, ar gouarnamant o  
 111 lakaat ar goulenn-fiziañs bep tro.

#### EN EC'HONDER

111 OABLESTR RUSIAN : Un trede oabllestr a voe taolet gant ar Rusianed  
 111 d'ar 1-añ Kerzu. Pouezañ a rae 4 zonellad 1/2. Ennañ e oa daou gi ha  
 111 loened all, plant hag ardivinkoù a bep seurt. Un dra bennak a c'hwitas,  
 111 avat, p'edo o vont da zouarañ, ha leskiñ a reas en aergelc'h.

111 LABOUR AN AMERIKANED : D'an 3 Du e voe taolet gant an Amerikaned un  
 111 "Explorer" 45 Kg. Kefridi an adplanedenn nevez-se eo studiañ darn eus  
 111 kudennoù ar skingelaouiñ er rann eus an ec'honder a zo tostañ d'an  
 111 Douar.

111 Diouzh un adplanedenn, "Discoverer 17", taolet d'an 13 Du, e voe  
 111 distaget antronoz ur glozenn 150 Kg. leun a ardivinkoù. Kouezhañ a reas  
 111 dre harz-lamm, ha paket e voe gant ur c'harr-nij er Mor Habask. An eil  
 111 gwech eo e teu an taol-se da vad.

111 D'an 23 Du e voe taolet "Tiros II", enni daou ardivink-skinwel a  
 111 gas skeudennoù tennet diouzh 600 Km. uhelder. Gant harp ar skeudennoù-  
 111 -se e c'heller tresañ kartennoù oablouriezh, hag e vo tu, a greder, da  
 111 ziouganañ gwelloc'h an amzer. Hervez ar Rusianed, ez eo graet "Tiros II"  
 111 evit spiañ warno.

111 D'ar 7 Kerzu e voe taolet "Discoverer 18". Er glozenn e oa gwiad-  
 111 -korf-den tennet diouzh al lagad, mel-askorn, ha danvez bev all. Paket  
 111 e voe ar glozenn en ur roued gant ur c'harr-nij p'edo o tiskenn en  
 111 aergelc'h tu bennak e-kichen Hawaii.

111 C'hwitañ a reas an Amerikaned, avat, o klask teurel adplanedennoù  
 111 etrezek al Loar.

111 AN AWAYL HERWYTH SEN MARK, troidigezh nevez eus Aviel Sant Mark e  
 111 kerneveg, ha gwellaet kalz, a zo bet aozet gant E.G. Retallack Hooper  
 111 (Talek), hag a zo embannet gant AN LEF KERNEWEK, 16, Trevu Rd.,  
 111 Camborne (Cornwall). Priz 4/6d. (lakaat 6d. ouzhpenn evit ar mizoù-post).



-----  
 - A L    L O U Z O U - K E G I N -  
 -            gant ARZEL EVEN            -  
 -----

Dre "louzoù-kegin" ez intentan amañ, n'eo ket al legumachoù, hogen ar plant hag a vez implijet evel temzioù-boued, pe c'hoazh d'ober evajoù ha traoù all blazet-mat pe yec'hedus, - en ur ger, ar plant a reer anezho "herbs" e saozneg. Un albac'henn eo ganin diorren hag implijout al louzoù-se, ha da heul e roan notennoù hag a c'hello bezañ talvoudus d'ar re a garfe gouestlañ ur c'hornig, - pe zoken ur c'horn bras, - eus o liorzhañ d'ar plant dudius-se, ur bam o c'hwez hag o blaz alies, ma n'int ket bepred plijus-tre d'al lagad. Talvoudus eo ivez kalz anezho evit pourchas boued d'ar gwenan d'ober mel frondus ha saourus.

Douar. N'eo ket re figus al louzoù-se e-keñver natur an douar. Gwell eo ganto koulskoude an douaroù un tamm razek ; ar re-se n'int ket stank e Breizh, hag un dra vat e vo temzañ an dachenn gant un tamm raz pe gleiz. Arabat d'an douar bezañ re zruz; re a azot, dreist-holl, a zo fall (nemet d'ar C'haol-garv), hogen un tamm potas a skoazell ar plant da gaout c'hwez-vat ha blaz.

Heol. Ar pep muiañ eus al louzoù-kegin a zo plant eus broioù tammik a-walc'h (aodoù ar Mor Kreizdouarek dreist-holl), ha karout a reont an heol. N'eo ket ez int rividik (un toulladig anezho hepken a vez lazhet gant ar yenijenn), hogen kalz gwelloc'h e vo o blaz hag o c'hwez ma kreskont en ul lec'h heoliek. Se a zo gwir dreist-holl evit kerentiad al Labiatae, e-giz an Tin, ar Roumarin, h.a. (nemet ar Vent, a zo gwell ganti an disheol) ; plant kerentiad an Umbelliferae Perisilh, Sarfilh, h.a.) a c'houlenn nebeutoc'h a heol.

Dour. Boas eo plant ar broioù kreizdouarek da c'houzañv ar sec'hor, hag en ur vro c'hleb evel Breizh (pe Gembre) n'eus ket d'en em chalañ diwar o fenn er c'heñver-se, zoken e-pad an hañv. Reoù 'zo evelato, evel ar Vent hag ar Sarfilh, a zo sec'hedikoc'h un disterañ.

Padelezh. Al louzoù-kegin, evel an holl blant, a c'hell bezañ rannet e pevar rummad e-keñver hirder o buhez : 1. ar re a vleugn hag a varv e korf ur bloavezh ; 2. ar re a vleugn an eil bloavezh hag a varv goude ; 3. ar re a vleugn bep bloaz a-c'houde an eil bloavezh, ar gwrizioù hepken o chom bev e-pad ar goañv ; 4. ar re a chom bev o c'hef hag o delioù kenkoulz hag o gwrizioù (plant "koadek" peurliesañ). Ar plant daouvloaziek (rummad 2) a c'heller astenn o buhez dezho en ur virout outo da vleuniañ.

Kutuilh ha mirout al louzoù. Darn eus al louzoù (re ar rummad 4 dreist-holl) a c'hell bezañ implijet fresk a-hed ar bloavezh (dreist-



111 -holl m'o diwaller diouzh ar riv). Ar re all a rank bezañ dastumet ha  
 111 disec'het da vezañ implijet e-pad ar goañv. O c'hutuilh a reer peur-  
 111 liesañ pa vezont e bleuñv (pe reoù 'zo dres a-raok bleuniañ), hag ur  
 111 beurevezh sec'h hah heoliek (met a-raok d'an heol bezañ re uhel) a zo  
 111 ar mare gwellañ evit al labour-se ; ar plant glebiet gant ar glav pe ar  
 111 glizh ne viront ket mat. Ret eo o sec'hañ buan-ha-buan, en ul lec'h  
 111 tomm ha sec'h met en disheol, - ar c'hriñol a zo mat-tre. Mar bez gleb  
 111 an hañv e c'heller ivez o sec'hañ en ur forn glouar (ket ouzhpenn  
 111 60°C). Al louzoù sec'h a dle bezañ miret e boestoù pe bodoù klozet-mat  
 111 (n'eo ket e seier paper evel ma reer alies), ha diwallet diouzh al  
 111 leizhder, an heol hag ar bouldrenn.

111 Notenn a bouez : ar Perisilh, ar Sarfilh hag an Tragon a zo  
 111 didalvez pa vezont sec'h.

111 Seurtoù. An darn vrasañ eus al louzoù-kegin a aparchant da zaou  
 111 gerentiad bras : hini ar Vent, pe Labiatae evit ar ouizieien, hag hini  
 111 ar Perisilh, pe Umbelliferae. Ar re gentañ a zo ardamezet gant ur  
 111 c'harenn garrezek (peurliesañ), delioù eeun keñver-ha-keñver, ha  
 111 bleunioù "divvuzellek" (ac'han an anv latin, diwar labium "muzell"),  
 111 heñvel ouzh re ar Saoj, da skouer. Plant an eil kerentiad a zo rannet-  
 111 -meurbet o delioù, ha strollet o bleunioù bihan gwenn pe velen e  
 111 stumm un disheolierig (ac'han an anv latin ivez). N'eo ket didalvez  
 111 degas da soñj ez eus er c'herentiad-se, ouzhpenn louzoù ha legumachoù  
 111 (Karotez, Panez, Ach), un nebeut plant dañjerus-meurbet, evel ar  
 111 C'hegid, ar Pempiz hag ar Perisilh-ki ; met bihan eo ar riskl d'o  
 111 c'havout e-mesk al louzoù ; c'hwez fall a zo ganto war ar marc'had.  
 111 Kalzig a louzoù a gaver ivez e kerentiad ar Compositae, a ro deomp  
 111 a-hend-all al Letuz ha saladennoù all, ha kalz bleunioù kaer  
 111 (Dahlia, h.a.).

111 Amañ da heul e kavor ur roll eus al louzoù a c'hounezhan pe am eus  
 111 gounezet da vare pe vare e-kerz ar bloavezhioù diwezhañ. O lakaet em  
 111 eus dindan o anvioù latin, ha da heul hemañ an anvioù brezhonek ha  
 111 gallek (da aesaat prenañ an hadoù ha pa ne ve ken ...), un niverenn o  
 111 tiskouez e pe rummad emaint e-keñver o fadelezh, o bro c'henidik, ha  
 111 munudoù diwar-benn o gounidigezh hag o implij.

#### Kerentiad ar Vent (Labiatae)

111 Mentha viridis. Bent c'hlas. Menthe verte. 3. Menezioù Kreiz  
 111 Europa. Daoust m'eo gwell ganti un tamm disheol ha glebor, e kresk ne  
 111 vern pelec'h, hag alies e ranker he c'hrennañ betek gouzout na zeufe da  
 111 aloubiñ al liorz. Plantet e vez ar gwrizioù (anezho garennoù dindan-  
 111 douar, e gwirionez) en nevez-amzer. Implijet e vez kalz e Breizh-Veur  
 111 evel temz-boued gant an avaloù-douar bervet, ar piz bihan hag ar c'hig-  
 111 -dañvad, - evidon-me n'on ket evit he gouzañv er c'hiz-se ! En hor bro  
 111 ne dalvez nemet d'ober dour-louzoù, ha d'am meno ez eo gwelloc'h ar  
 111 seurt da heul. Ret eo dastum an delioù a-raok d'ar blantenn bleuniañ.









-----		111
: EN IWERZHON :	:	111
: <u>AN TIEGEZH HAG AR YEZH</u> :	:	111
: gant ALAN HEUSSAFF :	:	111
-----		111

Bep bloaz en diskar-amzer e vez dalc'het an Oireachtas e Dulenn. Kenstrivadegoù a bep seurt a vez, koulz hag abadennoù-diduiñ. Pal ar Gouel eo reiñ lañs d'al lennegezh iwerzhonek ha da sevenadur ar vro dre vras : prizioù kaer a vez kinniget, - betek 200 lur sterling evit ar romant.

Hevlene ez eus bet aozet, evit ar wech kentañ e ser an Oireachtas, ur vodadeg evit ar gerent a zesav o bugale en iwerzhoneg er-maez eus ar Gouzelva. Evel ma verkas unan eus ar brezegerien, meur a gevredigezh a zo evit kas ar yezh war-raok, met n'eus hini ebet c'hoazh diazezet war ar familh e-giz unvez. Poent e vije sevel un urzhiadur evit difenn ar re o deus fiziañs a-walc'h e dazont an iwerzhoneg evit ober anezhañ yezh o ziegezh. Rak diouto, evit un tamm mat, e vo berzh pe zroukverzh an advuhezekaad.

War-dro 200 pe 250 den a oa er sal, muioc'h merc'hed marteze eget gwazed, ha peuzyaouank an darn vuiañ. Nebeut a-walc'h eo, pa soñjer ez eo bet desket iwerzhoneg da holl vugale ar skolioù e-doug an 20 pe 30 vloaz tremenet. Abeg a oa da souezhiñ koulskoude evit tud hag en em gav alies o-unan o stourm, e-kreiz ar saoznegerien, gant kudennoù diaes da ziluziañ. Daoust ha ne vije ket aesaet ar gefridi o lakaat skiant-prenet an hiniennoù da dalvout d'an holl ? Hep kennerzh e oa tonket kalz, en desped d'o youl-vat, da fallgaloniñ. Ar familhoù iwerzhonek o deus ezhommoù dibar. Gwalleget e vezont abalamour na gomzont ket a-unvouezh, ha ne skoazellont ket an eil re ar re all.

Ur skouer eus an dra-se eo c'hwitadenn ur rummad tud o deus klasket e-doug an daou vloaz tremenet sevel ur skol holliwerrzhonek e mervent Dulenn. Kavet e oa bet 200 bugel da lakaat er skol-se. Kavet e oa bet un ti a-feson ivez. Ne oa nemet un tamm kempenn da ober dezhañ. Ret e oa kaout ur merour. Peogwir e oa katolik ar vugale, e voe goulnnet ouzh person ar barrez kemer ar garg. Ar voaz eo. Ar person a nac'has : ne oa ket ezhomm eus ur seurt skol ; skolioù all ar barrez a gollfe skolidi, klasoù 'zo a zeufe da vezañ hanter c'houllo. Gwasterezh e vefe. Rener ar strollad a droas neuze war-du ur c'harter all. Mont a reas da gaout ar person. Hemañ a gounnaras : "ur mennad diboell e oa," emezañ. En ur c'harter all c'hoazh e c'hwitjont dirak ar person ivez. Neuze e c'houlennjont harp Ministr an Deskadurezh. Nac'het e voe ober tra evito : ar voaz degemeret e oa kaout ur person da verour. Daoust ma ne oa ket ul lezenn, an dud vat a gollas kalon, ha ne voe skol ebet.

Dres rener ar strollad-se eo a ginnigas ar mennad sevel un emglev evit difenn gwirioù an iwerzhonegerien. Ne voe nemet un den da sevel a-enep. Ha groñs ec'h enebas : gwir ar gerent da zesevel o bugale en iwerzhoneg, emezañ, a oa kretaet gant reizhadur-diazez ar Stad ; an holl dud er sal a bae tailhoù evit kaout deskadurezh kerkoulz marc'had

111 d'o bugale hag ar saoznegerien. Se ne oa ket roet dezho. Ar Stad a oa  
 111 kablus. Er Gouezelva e oa ar saozneg oc'h aloubiñ tachenn an iwerzhoneg  
 111 ken gwazh ha biskoazh. Daoust hag e talfe ar gevredigezh nevez ouzh ar  
 111 Stad ? A-hend-all ne dalve ket ar boan ...

111 Ar gadoridi a oa nec'het. Goulennet e voe ouzh an den ehanañ. Ar  
 111 gevredigezh ne emellfe ket e politikerezh.

111 Ne oa ket re sklaer piv a gemerfe penn ar gevredigezh, na peseurt  
 111 reolennoù-diazeze a vije dezhi. Divizet e voe kaout ur vodadeg all evit  
 111 dibab izili ur poellgor ha degemer reolennoù.

111 Ar brezegenn gentañ er vodadeg veneget a voe graet gant ur vaouez  
 111 hag he deus skiant-prenet eus kudennoù an deskadurezh. Diskouez a reas  
 111 war-bouez skouerioù peseurt diaesterioù a gave an iwerzhoneger bihan  
 111 war e hent er "Gallva". Dont a ra abred da verzout ne deo ket evel ar  
 111 vugale all. Perak ne gomz ket an hevelep yezh ha ma reont ? En e  
 111 c'hoarioù gant e genseurtes, - a-wechoù en e faltazi, - e vez graet gant  
 111 ar saozneg. Ma c'houlenner outañ komz en iwerzhoneg, e tirenker ar  
 111 c'hoari, e tistrujer ar voem. Hegaset e vez ar bugel ma c'houlenner  
 111 outañ : "Lavar din un dra bennak en iwerzhoneg 'ta !" evel pa vefe  
 111 anezhañ un ardigell. Daoust ma vez lavaret dizrouk-kaer, se a ra mezh  
 111 d'ar bugel. Koulz ha pa glev un den o c'houlenn ouzh e vamm : "Peseurt  
 111 yezh a gomzit outañ ? - Iwerzhoneg. - O ! ar paour kaezhig !"

111 Kejañ a ra gant enebourien ar yezh ivez. Ne vankont ket da zis-  
 111 plegañ dezhañ pegen displetus eo houmañ er vuhez pemdeziek. Ha pebezh  
 111 torr-penn e tle bezañ deskiñ e gentelioù drezi ! Peurvuiañ e taolo neuze  
 111 ar bugel ar garez war ar yezh ma ne ra ket berzh er skol.

111 Ar saoznegerien vihan a ginniger dezho levrioù kaer, ha testennoù  
 111 dibabet-aketus, disheñvel evit pep oad. "Petra 'c'hellomp prenañ d'hor  
 111 re ?" Diskouez a ra ar brezegerezh un nebeut skouerennoù. Nebeudig a dra  
 111 e-keñver ar pezh a vez graet e Bro-Gembre, emezi. Moulañ seurt levrioù  
 111 evit ur marc'had ken bihan hag hini Iwerzhon a vefe c'hoari war goll.  
 111 Koulskoude e ranker kavout un diskoulm.

111 Evit ur rummad koshikoc'h ez eus levrioù avanturioù, gant Cathal  
 111 O Sander. Ur bern anezho a zo bet moulet, ha re all a chom diembann.  
 111 Savet ez eus bet daou pe dri vloaz 'zo ur c'hlub levrioù evit ar  
 111 grennarded ivez. N'eus ket a-walc'h koulskoude evit kevezañ gant ar  
 111 saozneg.

111 Ezhomm a vefe da aozañ roudennoù-komz iwerzhonek o klotañ ouzh  
 111 filmoù evit ar vugale. Emeur o vont da gaout ur servij-pellwel en  
 111 Iwerzhon : petra a vo kinniget d'an iwerzhonegerien vihan ?

111 -----  
 111 -----  
 111 "AR-DRO AR MIZ-MAÑ E TEUY EUS AR WASK "AR PERSON TOUER", pezh-c'hoari e  
 111 tri devezh, gant YEUN AR GOW. Priz evit ar rakprenerien : 9 LN. war  
 111 baper kaer, 7 LN. war baper ordinal. Evit ar brenerien all : 10 LN. war  
 111 baper kaer, 8 LN. war baper ordinal. (Al levr, war a gredomp, a vo en  
 111 doare-skrivañ kozh). Kas an arc'hant war anv : Mme Marie Le Goff,  
 111 Keranna, Gouézec (Finistère) - CCP.1413-28-Rennes.

111 -----



I		I	111
I	<u>SKOAZELL D'AR BEILHADEGOU</u>	I	111
I	gant ROPARZ HEMON	I	111

Un oberenn a zo diwanet nevez 'zo : hini ar Beilhadegou. E-mesk an oberennoù poblel krouet er bloavezhioù-mañ ez eo heverk. He fal eo ledañ implij ar brezhoneg.

Savet eo bet an oberenn-se e korn-bro Lanuon gant R.Laouenan, skoaz-ellet gant ur bagad tud kozh ha yaouank. Emañ bremañ oc'h en em astenn dre Vro-Dreger a-bezh.

P.Even, ezel eus Poellgor Skourr Breizh, a gemer perzh bras en oberenn-se. Goulenn a ra digant ar Skourr reiñ harp.

### MENOS-STUR AR BEILHADEGOU

Frammañ ur sevenadur brezhonek uhel, - pezh a voe boulc'het gant Vallee, Meven Mordiern ha GWALARN, hag a vez graet bremañ gant ar strolladoù bodet hiziv e KUZUL AR BREZHONEG, - a zo ul labour ret.

Hogen e-kichen al labour-se e ranker aozañ ul labour all : krouiñ un emsav sevenadurel brezhonek e-mesk ar bobl.

Evit dont a-benn, e tle an emsav-pobl :

1) Bezañ, da gentañ-holl, un emsav dre c'henou, peogwir ne oar ket an darn vuiañ eus ar vrezhonegerien lenn o yezh.

2) Bezañ graet, da gentañ-holl, e lec'h ma'z eus brezhonegerien, da lavarout eo, e bourc'hioù bihan Breizh-Izel.

A dra sur, n'eo ket ur menoz nevez. Y.V.Perrot ha L.Herrieu, ha re all c'hoazh, o deus bet ur menoz heñvel, hag o deus graet kalz ivez d'e lakaat da zont da wir. Roudoù eus ar strivoù graet en hent-se a chom atav. Muioc'h a frouezh o dije douget, avat, ma vijent bet harpet gant un aozadur start.

### KROUIÑ UN AOZADUR

Krouiñ ur seurt aozadur da harpañ ar Beilhadegou a c'hell bezañ kefridi Skourr Breizh.

Div rann a zo el labour :

1) Studiañ an dachenn.

2) Pourchas danvez.

### STUDIAÑ AN DACHENN

Netra start ne vo sevenet hep un enklask resis ha padus war an dachenn, da lavarout eo, war stad kevredigezhel ar yezh :

1) E Breizh-Izel, kanton dre ganton, parrez dre barrez.

2) El lec'hioù all, enno brezhonegerien : Sant-Brieg, Roazhon, Sant-Malo, Naoned, Pariz. h.a.

An enklask-se, donoc'h eget an hini a voe graet e 1928 gant GWALARN, a verko etre traoù all : 1) Implij ar yezh er vuhez relijiel



111 2) Implij ar yezh er skolioù 3) Implij ar yezh en displegadegoù,  
 111 gouelioù, h.a. 4) Implij ar yezh er vuhez pemdeziek 5) Roll an dud a  
 111 bouez a-du pe a-enep 6) Roll ar ganerien, ar brezegerien, al lazou-  
 111 -kanañ, ar strolladoù-c'hoarierien, h.a.

111 POURCHAS DANVEZ

111 Aozerien ar Beilhadegoù a rank kaout danvez, da lavarout eo  
 111 kanaouennoù, istorioù berr, unangomzoù, pezhioù-c'hoari.

111 Daou seurt a zo : 1) Traoù kozh, kempennet diouzh ezhommoù hon  
 111 amzer 2) Traoù nevez.

111 Ur bern kudennoù a sav amañ, ha n'eo ket en ur pennad hepken e  
 111 c'heller o dirouestlañ. Berr-ha-berr e tleomp : 1) Tennañ evezh hor  
 111 skrivagnerien war al lennegezh komzet, a gemero, e pep bro, ul lec'h  
 111 brasoc'h-brasañ en amzer da zont 2) Sevel un ti-embann lennegezh komzet,  
 111 dre liesskridoù da gentañ, ha goude dre bladennoù pe vandennoù magnetek.  
 111 Ar greizenn a c'hell, d'am soñj, bezañ hor c'helaouenn ABK.

111 Harp hag ali a c'houlennan digant izili Skourr Breizh, dreist-holl  
 111 e-doug an emvodoù a vezo graet er bloaz-mañ hag er bloazioù war-lerc'h.  
 111 Al labour a ginnigan dezho a zo diaes, seul ziaesoc'h ma rankimp dilezel  
 111 darn eus an doareoù-stourm a wechall evit degemer doareoù nevez, deuet  
 111 boutin e broioù 'zo, hogen nebeut anavezet c'hoazh ganimp.

111 ----- AL LIAMM, niv.82, Gwengolo-Here 1960. Daouvizek.  
 111 = SKRIDOU NEVEZ = Koumanant-bloaz 12 LN. (war baper kaer 15 LN., kou-  
 111 manant-skoazell 20 LN.) : CCP.Paris 5349-06, P. Le  
 111 Bihan, 6, Domaine des Hocquettes, Suresnes (Seine). - Pennadoù lies-  
 111 seurt evel boaz, gant M.Glanndour, F.Elies, J.Priel, Y.Drezen, h.a.  
 111 Tennañ evezh a ran ouzh pennad-studi Abanna, "eus an Emsav d'an Enfram",  
 111 a bouez bras e meur a feur, marteze dreist-holl dre ma verk e c'hell ar  
 111 pobloù bihan lakaat da dalvezout en o stourm "skourroù arnevez 'zo eus  
 111 ar ouiziegezh". Dizoloadennoù graet er c'hantved-mañ war dachenn ar  
 111 yezhoniezh hag ar gelenouriezh, evel am eus lavaret meur a wech, a ro  
 111 dimp armoù nevez hag efedus er stourm evit ar yezh. Ha dizoloadennoù  
 111 graet war dachenn an eneoniezh ha skiantoù all a c'hell ivez hon harpañ  
 111 er stourm broadel.

111 WANIG HA WENIG, kelaouenn drimiziek evit ar vugale, niv.8, Du 1960. Kou-  
 111 manant-bloaz 2 LN. : CCP.Rennes-170596, Journal WANIG HA WENIG, Plouézec,  
 111 C.d.N. - War wellaat ez a atav ar gelaouennig savet evit bugale Vreizh.  
 111 War wellaat ez aio c'hoazh, mar kompren an dud a gar hor yezh ez eo unan  
 111 eus pouezusañ binvioù hor stourm. Ar c'houmanant-bloaz ne goust nemet  
 111 nemet 2 lur nevez. Kasit 10 lur nevez, pe 100 lur nevez mar gellit.  
 111 Setu an ali a roan deoc'h. Implijet-mat e vo ho arc'hant.

111 SKOL, niv.11. Du 1960. Dastumadenn drimiziek a gelenouriezh. Koumanant-  
 111 -bloaz 10 LN. CCP.Rennes-1911-06, Revue SKOL, Plouézec, C.d.N. - An  
 111 niverenn-mañ a zo un niverenn-vruderezh e galleg. Tud a zo c'hoazh e  
 111 Breizh a gav aesoc'h lenn galleg eget brezhoneg, ha ret eo soñjal en dud  
 111 keizh-se. Hogen prometiñ a reer dimp niverennoù bras e brezhoneg.

ROPARZ HEMON

m  
mm  
mm mm mm mm mmmmm mm  
mm m mm m m m m m m m m  
m m mm m m mmm m m m mmm

ER PRENESTR AHONT

(Dort in den Weiden steht ein Haus,  
A.W.von Zuccalmaglio)

1.  
Er prenestr ahont en he zi,  
En he zi, en he zi,  
Ar plac'hig koant a lak he fri,  
A lak he fri.  
Hag hi da sellout ouzh ar stêr,  
O c'hedal bag he mignon ker,  
Ar c'haerañ den a zo er vro,  
Da zont en-dro.

2/4

si'/Mi'Fd'Sol'la'/si'do'si-/  
/do're'do-/si'do'si'.  
Si"/Mi'Fd'Sol'la'/si'do'si'.  
Si"/Sol-Fd-/Mi- '  
MiFd"/Sol'la'si'do'/re'mi're'.  
re"/Fd'Sol'la'si'/do're'do'.  
do"/Mi'Fd'Sol'la'/si'do'si'.  
Si"/Sol-Fd-/Mi- '

2.  
Emañ o c'hedal 'hed an deiz,  
'Hed an deiz, 'hed an deiz,  
He sell o treiñ a zehou da gleiz,  
A zehou da gleiz.  
Ha ken na wel ar vag o tont,  
E kren he c'halon gant ar spont.  
Rak allas ! ne deu ket atav  
Ar c'hanfard brav.

3.

An eostig bihan, en e yezh,  
En e yezh, en e yezh,  
A lavar dezhi : "Merc'hig kaezh,  
O merc'hig kaezh !  
Da grenañ kement n'oc'h ket fur.  
Ho mignon karet, me 'zo sur,  
Ar gwellañ paotr a zo er bed,  
'Vo deoc'h bepred."

AR STERIG

(War an ton skosat : Afton Water)

3/4

Si-/Mi-Sod-Fd'Mi'/Fd'Sod'la-  
Sod'Fd'/Mi-Sod-Fd'Mi'/Mi-Rd-  
Si-/Mi-Sod-Fd'Mi'/Fd'Sod'si-  
mi'dd'/si-la'Sod'Fd'Sod'/Mi:  
si'dd'/re-mi're'dd'si'/si-  
dd-mi-/mi-Sod-Fd'Mi'/Mi-Rd-  
Si-/Mi-Sod-Fd'Mi'/Fd'Sod'si-  
mi'dd'/si-la'Sod'Fd'Sod'/Mi:~

1.

Ur stêrig, en ur saonenn goant,  
A red goustad ha distrafulh.  
War draezh flour, etre bodoù bleuñv,  
Dre ar c'horz, sioulik-sioule e ruilh.  
Ma fell deoc'h tec'hout diouzh ar bed,  
Ne deus lec'h hag a ve ken brav.  
D'ar spered ha d'ar galon faezh,  
E ro goudor ha peoc'h atav.

2.

Ar gwez bras, hag a daol o skeud,  
A vez hejet gant an aezhenn.  
An oabl glas, skedus dre o deil,  
'Hed an hañv, don en dour, a gren.  
O, me 'garfe da welout c'hoazh,  
Saonenn garet va yaouankiz !  
Ar soñj ac'hanout nemetken  
Zo din freälz em harlu kriz.



lll m  
 lll mmm mm mmm mmm mmmmm mmm  
 lll m m mm m m m m m m m m m m  
 lll m m mm m m mmm m m m mmm  
 lll m  
 lll m

AR BALEER-BRO

(War un ton-pobl, - skosat pe iwerzhonat, -  
 Danvez ar c'homzoù diwar varzhoneg  
 Walter Scott : Jock o' Hazeldean.)

1.

lll -Perak, itron, e leñvit 'ta,  
 lll Da zevezh kaer hoc'h eured ?  
 lll Ho koef dantelezh, ho prozh seiz,  
 lll Ha deoc'h ne blijont ket ?  
 lll -Va c'hoef dantelezh, va brozh seiz,  
 lll Matezhig, dit a vo,  
 lll Mar gallan tec'hout kuit fenozh  
 lll Gant ar baleer-bro.

2/4 hep re a vall  
 mb'/sb'Sol'Fa'.Mb"/Mb'Sol'Sb'  
 Do'/Mb'Mb'lb'.Sol"/Sol-Fa'  
 mb'/sb'Sol'Fa'.Mb"/Mb'Sol'Sb'  
 Do'/Mb'Sol'Fa'.Mb"/Mb-.  
 Sol'/lb'Sol'lb'sb'/do'sb'mb'  
 do'/sb'Sol'FaSol"sb'/do-.  
 mb'/sb'Sol'Fa'.Mb"/Mb'Sol'Sb'  
 Do'/Mb'Sol'Fa'.Mb"/Mb-.

2.

lll -Ar c'hleier bras a zo e brall.  
 lll Na vezomp ket diwezhat,  
 lll Fenozh e viot gant ho kwaz,  
 lll Itron, c'hwi 'oar ervat.  
 lll -Matezhig, sell ! al labous-hont,  
 lll En oabl, a nij afo !  
 lll Ma vefen hennezh, 'z afen prim  
 lll Gant ar baleer-bro.

3.  
 Gouleier a lugerne splann  
 E salioù kaer ar c'hastell.  
 Eus ar plac'h nevez ne oa roud.  
 Rak hi oa nijet pell.  
 He blev a-fuilh en avel vras,  
 Ha truilhoù war he zro,  
 O tec'hout edo dre an noz  
 Gant ar baleer-bro.

AN DEROU-MAT

1.

lll Kavet em eus 'tal an aod  
 lll Kregin ruz ha gwenn ha brizh,  
 lll Boull ha lINTR evel ar skorn,  
 lll Link ha lufR evel ar glizh.  
 lll Skrivet en o flegoù mistr,  
 lll E oa kevrin meur a oad,  
 lll Kened kozh an oabloù ledan,  
 lll Hag ar mor hag ar c'hoad.

4/4 gorrek hep bezañ re  
 la-do-/re-do-la-do-/Sol:  
 la-do-/re-fa-re-la-/do:  
 la-do-/re-do-la-Fa-/Sol:  
 Fa-Sol-/la-do-la-Re-/Fa:  
 Fa-Sol-/la-la-do-do-/re:  
 re-fa-/re-do-fa-la-/do:  
 fa-re-/do-la-Sol-la-/do-do-  
 do-re-/do:la-Re-/Fa:

2.

lll D'ober ur c'harlantez kaer,  
 lll Em eus poaniet meur a zeiz,  
 lll Gant va c'hregin bresk, a stumm  
 lll Gant va c'halon ha va meiz.  
 lll He c'hinniget em eus deoc'h.  
 lll Hogen merzet trumm em eus  
 lll Disfiz don en ho taoulagad,  
 lll Ivez fae war ho kweuz.

3.  
 Ur bitrakig kinklet-koant  
 Am eus prenet deoc'h e korn  
 Ar marc'hallac'h er gêr vras,  
 Hag e stlapet en ho torn.  
 Hag, evel oc'h ober goap,  
 En ur zerc'hel gant va hent,  
 Ar c'harlantez am boa plezhet  
 Am eus taolet er gwent.

lll -----  
 lll -----  
 lll -----  
 lll -----





mm m m m m m / m m m mmm mm m m  
 m m m m m m m m m m m m m m m m  
 mm m m mm m m m m m m m m m m m  
 o

# TAMM AR PAOUR

- Me 'garfe gouzout petra  
 emañ an den-se oc'h ober aze, -  
 eme Ulali ar geginerez, o sellout

Niv.47

- lll dre prenestr ar gegin.  
 lll - Pelec'h ? - eme Zita.  
 lll - Aze, er ru, evel o klask kuzhat, e-kichen moger ar porzh.  
 lll - Ne ouzon ket, - eme Zita.  
 lll Ar geginerez kozh a daolas ur sell karget a zisfiziañs ouzh ar  
 lll vatezhig.  
 lll - N'eo ket unan eus ho mignoned, o c'hortoz ac'hanoc'h ?  
 lll Zita ne respontas ket.  
 lll - Ne vijen ket souezhet, - eme Ulali. - Sellit 'ta ! Hep tog na  
 lll mantell, gant an amzer a ra ! Unan eus ar baotred didalvez-se, a weler  
 lll re anezho bremañ o redek ar ruioù, o laerezh, pa ne vezont ket o vont  
 lll war-lerc'h merc'hed. Ne vijen ket souezhet ...  
 lll Kloc'hig ar sal-debriñ a zeuas amañ war he c'homz.  
 lll - Petra fell dezho c'hoazh ? - eme Ulali. - Ar c'hafe ? Mat, n'eo  
 lll ket prest ! It da welout 'ta, e-lec'h chom da zigeriñ ho kenou !  
 lll Zita a sentas. An ti a oa a c'hiz kozh, ar gegin en traoñ. Ket e oa  
 lll pignat da vont d'ar sal-debriñ. An holl diegezh a oa eno : an Itron  
 lll Pichavant, ar vestrez, hag he c'herent, bet pedet ganti evel kustum da  
 lll ober Gouel ar Rouaned, he breur Frañsez, he merc'h Enora, he mab-kaer  
 lll Herve, he c'heniterv Fin, he div nizez Jertrud ha Matild, hag he  
 lll mab-bihan Gontran.  
 lll Tost echu e oa ar pred. An daol vras a oa heñvel ouzh un dachenn-  
 lll -emgann goude an emgann : pladoù, loaioù, kontilli lous skignet a bep  
 lll tu. Netra gempenn, nemet e-kreiz, evel ur c'hastell-kreñv en doa  
 lll dalc'het ouzh ar stourm, Gwastell ar Rouaned.  
 lll - Naetait an daol, Zita, - eme an Itron Pichavant. - Ha lakait an  
 lll tasoù, al loaioù bihan, an asiedoù bihan hag ar gwerennoù bihan. Evit  
 lll nav !  
 lll En ur lavarout "nav", e savas he fenn hag e sellas ouzh an dud. An  
 lll holl a chomas mut. Ne oa ouzh taol nemet eizh. Gouzout a raent petra a  
 lll oa o vont da c'hoarvezout.  
 lll Da zeiz ar Rouaned, e kustume an Itron Pichavant reiñ "tamm ar  
 lll paour". Ne oa ket ur vaouez douget da ober an aluzen. Met he dlead, a  
 lll grede, oa reiñ "tamm ar paour". Se a oa bet graet, a lavare, gant he  
 lll mamm, ha gant he mamm-gozh : pediñ en deiz-se un den paour da zont en  
 lll ti da gaout un tamm eus ar wastell.  
 lll An Itron Pichavant a yeas er-maez. An holl a chome atav dilavar.  
 lll Edont o soñjal, hep arvar, en dud iskis a oa bet kavet er bloavezhioù  
 lll a-raok da gaout "tamm ar paour" : an den lous na rae nemet skrabañ e  
 lll vruched dindan e varv hir, an inosantez na rae nemet hejañ he fenn, ar  
 lll martolod kozh en doa kanet ur ganaouenn dizereat, an intañvez he doa  
 lll evet kognak diouzh ar voutailh en ur vont kuit. Zita a laboure didrouz.

Eus ar gegin, Ulali a welas he mestrez o treuziñ ar porzh, o sellout  
a-gleiz hag a-zehou a-hed ar rù, ha neuze o vont etrezek an den a oa atav  
damguzhet e-kichen moger ar porzh. Ur pennadig goude, e tistroe, an den  
war he lerc'h. Bez' e oa ur paotr yaouank war-dro ugent vloaz, treut,  
gwisket gant ur bragoù du strizh-strizh, ur roched ruz hag ur jiletennig  
glas-sklaer. E vrec'h kleiz, sur-mat, a oa torret, rak dalc'het oa gant  
ur vandenn du. Ulali a voe displijet-bras.

An dud er sal-debriñ ne voent ket plijet muioc'h. Koulskoude, an  
"teddy boy" ne oa ket lous, ha ne seblante ket bezañ diseven. Azezañ a  
reas hep ur ger e-kichen e vadoberourez. Frañsez a voe karget da rannañ  
ar wastell, pezh a ouie ober dispar. Rannañ ur wastell en unnek tamm  
n'eo ket aes. Gontran a voe lakaet da dreiñ kein. Hag evel kustum e voe  
graet ar goulennoù gant mestrez an ti : "Da biv an tamm-mañ ? ... da biv  
hemañ ? ... da biv hemañ ?", unnek gwech.

Ulali a voe galvet da zont da gaout he zamm. Dont a reas, du he  
fenn. Gwin dous a voe diskennet gant Herve er gwerennoù, ha pep hini a  
grogas da zebriñ e damm.

- O ! - eme an estren a-greiz-holl.

Kavet en doa ar favenn !

- Ar Roue a ev ! - a grias an Itron Pichavant o sevel he gwerenn.

- Ha bremañ, - eme Frañsez, - eo ret dibab ur Rouanez.

Enora, Matild, Jertrud, Fin zoken a selle d'an traoñ. Pep unan,  
feiz, e don he c'halon, a vije bet laouen o vezañ dibabet.

- An dimezell-mañ ! - eme ar paotr o tiskouez Zita.

Zita, aet ar ruz d'he divjod, a voe graet plas dezhi da azezañ e-  
-kichen ar Roue. Hi ne seblante ket laouen. Ulali, o hejañ he skoaz, a  
ziskennas d'ar gegin.

Plijadur a voe neuze er sal-debriñ. Ar paotr yaouank-se, e gwir, a  
oa hegarat ha dereat. Charlig oa e anv. Ha ne gleved nemet "Charlig"  
amañ ha "Charlig" ahont. Ha penaos oa bet torret e vrec'h ? Ne oa ket  
torret, emezañ, goullet hepken o labourat. Goude ar gwin dous e voe evet  
champagn. Ar c'hoarzh a yeas war gresk. Matild a ganas. Jertrud a  
c'hoarias ar piano. Fin a ganas ivez. Zita hepken ne ranne ger.

Ulali, en ur evañ kafe, a selle atav dre brenestr ar gegin. Ha setu  
ma welas ur polis o tont er porzh. Kerkent ez eas da zigeriñ an nor.

- Emaon o klask, - eme ar polis, - ur paotr yaouank gant ur bragoù  
du, ur roched ruz hag ur jiletenn c'hlas. Gwellet eo bet o vont amañ.

Ar geginerez, livet ar valis war he dremm ledan, a gasas ar polis  
er sal-debriñ. An holl a chomas evel skornet.

- Digarezit, - emezañ o saludiñ. - Emaon o klask ar paotr-mañ. - Hag  
o treuziñ ar sal, e lakaas e zorn war skoaz Charlig. - Hemañ, - emezañ,-  
a zo bet goullet e vrec'h dec'h da noz o saveteiñ buhez ur bugel.

Karget omp bet gant tad ar bugel da glask anezhañ da reiñ dezhañ ur gopr.

Bez' e oa souezh c'hoazh da zont. - N'out mui fachel ouzhin, Zita ?

- eme Charlig. Zita a lakaas he dorn en e zorn. - Prometet em boa mont

ganti d'ar sinema dec'h da noz. Met ne c'hellen ket. Hag hiziv on deuet


da c'hortoz dirak an ti-mañ, en esper he gwelout, - eme c'hoazh Charlig.

- Divinet em boa ! - eme Ulali etre he dent. ROPARZ HEMON

Le Gérant : Mlle Y. Martin, 21, rue de Dixmude, St. Marc, Brest.

Ronéotypé par Rincaux, 1, rue Alain Fournier, Brest. - C.C.P.P. No. 36.242.






Revue mensuelle-No.26-Février 1961 Kelaouenn vizek-Niv.26-C'hwevrer 1961  
 Abonnement annuel : 7 NF. Koumanant-bloaz : 7 LN.  
 CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, St.Marc, BREST.

PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON

T A O L E N N

111  
 111  
 111  
 111  
 111 Ar miz ..... p.17  
 111 Al louzou-kegin, II (Arzel Even) ..... p.19  
 111 Stad ar Brezhoneg (Enklask ABK) ..... p.21  
 111 Skridoù nevez (Roparz Hemon) ..... p.23  
 111 Penaos e vez graet keltelezh (F.Ters) ..... p.25  
 111 Skol Sant Erwan (lizher digant an Itron Galbrun) ..... p.27  
 111 Kanomp : An dek kazhig gwenn ..... p.28  
 111 - : En devezh all, o vont d'ar foar ..... p.29  
 111 - : An avel yen a yud ..... p.30  
 111 DALC'HOMP : Ar c'harr-nezañ (Roparz Hemon) ..... p.31



111  
 111  
 111  
 111 HARZ-LABOUR E BELGIA : Strizhderioù a voe kinniget gant ar gouarnamant e  
 111 Belgia da heul koll Bro-Gongo. Nebeut a-raok Nedeleg e tarzhas harzou-  
 111 -labour dre ar vro : bigi, hentoù-houarn, gaz, tredan, skolioù, h.a.  
 111 An emsav, renet gant ar sokialourien, a yeas war greskiñ en devezhioù  
 111 war-lerc'h, gant displegadegoù e Brusel, Liej, Mons, Gent, ha kêrioù all.  
 111 Ar roue, a oa en e veaj-eured e Spagn, a zistroas d'an 29 Kerzu.  
 111 D'an 3 Genver, ar Parlamant, bodet dindan warez an archerien, a  
 111 ziarbennas ur goulenn graet gant ar sokialourien da lemel kuit ar  
 111 mennad-lezenn strizhderioù. Kann a voe adarre e Brusel hag e kêrioù all.  
 111 D'ar 6 Genver, dizurzhiou grevus e Liej. Tamm-ha-tamm e teuas anat  
 111 da renerien an emsav, ar re ar muiañ diouzh an tu kleiz, e rankjent  
 111 kemmañ doare o stourm a-enep ar gouarnamant : ober tagadennoù "brezel  
 111 bihan" e-lec'h un harz-labour bras. Fellout a ra dezho ouzhpenn dis-  
 111 rannañ Wallonia diouzh Flandrez, o treiñ Belgia da Stad kevredel. D'ar  
 111 15 Genver, avat, e voe kinniget un englev peoc'h gant ar sokialourien  
 111 a venn mirout ar Stad evel m'emañ.  
 111  
 111 BOMBEZENN ATOMEK : Ur vombezenn atomek (an trede) a voe lakaet da  
 111 darzhañ gant ar C'hallaoued er Sahara e diwezh Kerzu. Stadoù afrikat,  
 111 Maroko ha Gana dreist-holl, a savas o mouezh raktal a-enep ar C'hall-

- aoued. D'ar 5 Genver e torre Nigeria he darempredoù diplomatek gant Frañs. 111  
 111  
 111  
AR REFERENDOM GALL : Referendom a voe graet e Frañs hag en Aljeria d'an 8 Genver. Bez' e oa da respont, "ya" pe "nann", hag-eñ e vezed a-du gant De Gaulle. War-dro 75 % eus ar re a votas (da lavarout eo, war-dro 55 % eus ar re enskrivet war roll ar voterien) a respontas "ya". 111  
 111  
 111  
DISTRO IMPALAER ETIOPIA : An impalaer Haile Selasie a zigarrnijas en Asmara, en hanternoz Etiopia, d'ar 16 Kerzu. An emsaverien a voe buan trec'het. Ar priñs-hêr, a oa bet paket ganto, a voe dieubet. 111  
 111  
 111  
UN IWERZHOMAD O C'HOUREC'HEMENN E BRO-GONGO : Ar Major-Jeneral Sean McKeown, eus arme Iwerzhon, a voe anvet da gener lec'h ar Jeneral svedat Van Horn diwar ar 1-añ Genver e penn nerzhioù ar Broadoù Unanet e Bro-Gongo. 111  
 111  
 111  
BODADEG KASABLANKA : Renerien 5 Stad afrikat, ar Republik Arabek Unanet, Mali, Ginea, Gana ha Maroko, en em vodas e Kasablanka evit divizout diwar-benn kudennoù Afrika en amzer-mañ. Naser ha Nkrumah a oa eno. Bez' e oa ivez dileuridi eus broioù all. D'ar 6 Genver, pa echuas ar bodadeg, e voe embannet ur c'homunike a-du gant emsaverien Aljeria, o tiskleriañ, ma kendalc'hje c'hoazh brezel eno, e vije ret da Stadoù Afrika "prederiañ a-nevez war o darempredoù gant Bro-C'hall". 111  
 111  
 111  
BREZEL E LAOS : An enepkomunourien, ar "Strollad Gwenn" dindan ar Priñs Boun Oum, a chomas mistri e Vientian, o vezañ argaset komunourien ar "Strollad Ruz" diouzh kêr. Kalz tiez ha savadurioù a voe distrujet e-pad ar c'hrogad. D'an 30 Kerzu e teuas keloù e oa bet aloubet Laos gant bagadoù soudarded komunour eus Vietnam. Ar c'heloù-se, dinac'het da gentañ, a voe kretaet gant gouarnamant ar Stadoù-Unanet. N'eus mar ebet e vez skoazellet an daou du gant ar Rusianed hag an Amerikaned. 111  
 111  
 111  
KUBA HAG AR STADOU-UNANET : E derou miz Genver e voe roet urzh gant Castro d'ar c'hannadour amerikan en Habana da zigreskiñ niver implijidi ar c'hannaddi betek unnek, - da lavarout eo, niver implijidi kannaddi Kuba e Washington. D'an 3, ar Prezidant Eisenhower a roas da c'houzout e oa torret an darempredoù diplomatek etre an div vro. 111  
 111  
 111  
 -----  
 ooooo Eneur o lakaat levr Roparz Hemon, "Cours Élémentaire de Breton", war bladennoù. 111  
 111  
 ooooo Eil kaier liesskrivet (BIZ-CHIPOT) "Geriadur Istorel ar Brezhoneg", gant Roparz Hemon, a zo deuet er-maez. Priz, 7,50 LN. Kas an arc'hant d'an Dr.G.Etienne, Châteaulin, CCP.Paris 16-093-13. 111  
 111  
 ooooo Da rakprenañ diouzhtu, "An Tri Boulomig Kalon Aour", romant nevez gant Roparz Hemon. Priz, 9 LN., da gas da R.Huon, 132, rue de Verdun, Brest, CCP.Rennes 1629-14. (War baper kaer : 18 LN. pe 22 LN.) 111  
 111





Souezhusat tra, ar borfumerien a zo gwell ganto lavend Bro-Saoz (e-lec'h ma vez gounezet a-barkadoù e kornbroioù 'zo) eget hini Provañs ha broioù tomm all ; abegoù a ouenn a zo d'an dreistelezh-se, moarvat, kentoc'h eget abegoù a demz-aer. Dour-strilhañ lavend a vez implijet ivez en un nebeut louzoù a-enep kleñvedoù ar forziou-analat. Kalz a dud a laka Lavend e-kreiz o lienaj, a-wechoù gwriet e-barzh seierigoù moñselin ; bez' e c'heller neuze meskañ Marjol, Avron pe Varlen (s. pelloc'h) gant al Lavend, pezh a zo gwelloc'h c'hoazh marteze.

Hyssopus officinalis. Sikadez. Hysope. 4. Broioù kreizdouarek. Ar blantenn a zo dezhi delioù hirik gwer-teñval, a chom bev e-pad ar goañv peurliesañ (daoust n'int ket kalet ha "koadek" evel delioù al Lavend pe ar Roumarin), ha bleunioù glasruz kaer a-walc'h (ruz-roz pe wenn e gouennoù 'zo). N'eo ket anavezet kalz e Breizh, hogen talvoudus eo, dreist-holl evit ober un dour-louzoù ha n'eus ket par dezhañ a-enep ar paz "druz", pa vez ret tanavaat ar stervennoù d'ar c'hlañavour da dufañ aesoc'h. C'hwerv ha displijus a-walc'h eo e vlaz ; gwelloc'h eo (hag efedusoc'h ivez) mesket gant delioù Roumarin ha bleunioù Kaol-garv (s. pelloc'h), kement-ha-kement a bep hini. Implijout a reer ar bleunioù gant an delioù tostañ outo ("sommités fleuries", evel ma lavar al louzaouerien), hag ar bleunioù a gresk adarre ur wech pe ziv goude bezañ bet kutuilhet. Ar Sikadez a zedenn, n'eo ket hepken ar gwenan, hogen balafenned a bep seurt, re rouez a-wechoù. (Ar blantenn anvet "hyssopus" e troidigezhioù latin ar Vibl n'eo ket houmañ, na gaver ket diouti en Douar-Santel).

Satureia hortensis. 1. Satureia montana. 3. Santurig, Savouri. Sarriette. Broioù kreizdouarek. Bez' ez eus daou seurt Santurig, unan bloaziek (gal. Sarriette d'été) gant delioù dilufr ha bleunioù bihan-bihan, hag unan padus (Sarriette d'hiver) gant delioù lufurus ha bleunioù brasoc'h. Gounezet e vezont o-daou (S.hortensis dreist-holl e Breizh) evel temz-boued evit ar fav ; gwelloc'h blaz a zo gant S.hortensis, hogen aesoc'h eo egile da ziorren. Plant-gwenan mat ivez ; hag an hini bloaziek a ro ul louzoù a-enep al lenkern.

Majorana hortensis. Marjol. Marjolaine (vraie). 1 (e Breizh). Arabia hag Egipt. An anv-se, "marjol", a vez roet alies d'ur blantenn all eus an hevelep kerentiad, ar Marjol-ki (Origanum vulgare), a gresk stank er gwerimier en Europa a-bezh (rouez eo e Breizh, o vezañ na gresk nemet en douaroù razek). Ar Marjol gwirion, pe Marjol saoz, peuz-disoñjet bremañ en hor bro, a zo bet degaset en Henamzer eus broioù ar Reter-Nesañ, ha rividik eo ; hadet e vez e miz Ebrel (en un douar skañv a-walc'h, ma'z eus tu, hag en heol) ; bleuniañ a ra en Eost pe Wengolo, ha mervel buan goude, hogen e Kreisteiz Bro-C'hall e c'hell bevañ daou vloaz, hag en e vro c'henidik ez eo padus. N'anavezan louzaouenn ebet bamousoc'h he frond eget ar Marjol ; strilhet e vez, e-fed, evit bezañ implijet er porfumerezh. Mat eo ivez da lakaat el lienaj e-giz al Lavend. A-hend-all, daoust m'eo souezhus an dra-se marteze, ez eo un temz-boued



111 hag a ya mat gant kalz meuzioù, - gant na vefec'h ket re vrokus, rak  
 111 ken buan all e vefe gant ho keusteurenn ur blaz re bar da hini an dour-  
 111 -Kologn ! Mat eo dreist-holl er piz bihan. En diwezh, dour-louzoù  
 111 Marjol a c'hell bezañ evet evit ar blijadur kerkoulz hag evit e berzhioù-  
 111 -mat (enepgliziennus ; an dour-strilhañ a zo kouskedus) ; hen ober a  
 111 reer diwar ar bleunioù hag an delioù.

111 Ocimum basilicum. Bazilig. Basilic. l. Bro-Indez. Rividikoc'h  
 111 c'hoazh eo hemañ ; n'em eus ket kredet c'hoazh hadañ anezhañ er-maez,  
 111 hogen posupl e vefe moarvat e lec'hioù 'zo e Breizh, dreist-holl en  
 111 arvor ; ne c'houzañv ket an disterañ rev. Forzh penaos, aes-tre e kresk  
 111 en ur pod e-barzh an ti. Ne gredan ket ez eo anavezet kalz e Breizh  
 111 bremañ, hogen e Kreisteiz Bro-C'hall hag en Italia ez eo ken boutin el  
 111 liorzhoù hag ar Perisilh pe an Tin. Bras a-walc'h eo an delioù, ha ma  
 111 kutuilher ar re uhelañ e teu ar blantenn da vleñchaouiñ muioc'h-mui.  
 111 Implijet kalz e vez ar bazilig er c'heginerezh "kreizdouarek", ha mat  
 111 eo dreist-holl en tomatez. Perzhioù ar Bazilig evel louzoù a zo heñvel  
 111 a-walc'h ouzh re ar Marjol.

111 Penaos ober dourennoù-strilhañ. Aes a-walc'h eo strilhañ plantenn-  
 111 où kerentiad ar Vent (n'eo ket ken aes evit ar c'herentiadoù all). Ul  
 111 lambig a c'hell bezañ graet gant ur voull-wer war ur "Bunsen" ; un  
 111 toull a zo graet er stouv da lakaat ur gorzenn hir ha moan, gwer pe  
 111 blastik, a dremen goude dre ul lestr ma red ennañ dour yen ; dastumet  
 111 eo an dourenn en un amprouetez pe ur voutailh uhel ha moan. Lakaat a  
 111 reer ar plant da virviñ en dour e-barzh ar voull-wer, hag en amprouetez  
 111 e tastumer dour frondusaet gant dourenn-strilhañ pur war-c'horre. An  
 111 daou a c'hell bezañ implijet d'ober c'hwez-vat, h.a., hogen gwelloc'h  
 111 eo chom hep klask implijout an dourennoù-strilhañ evel louzoù, hep  
 111 bezañ studiet aketus o ferzhioù hag o bindederezh ; dañjerus e  
 111 c'hellont bezañ.



111 Enklask bras ABK diwar-benn stad ar brezhoneg en amzer-mañ (sellout  
 111 ABK Genver, p.7) a zo deraouet. Ne c'hortozomp ket kaout an holl respont-  
 111 où (627 anezho da vihanañ) evit embann ar pezh hon eus desket. A-feur  
 111 ma teuint e vint embannet, e stumm ur FICHENN evit pep kumun. Pep  
 111 fichenn a c'hell bezañ klokaet pe reizhet tamm-ha-tamm.  
 111 Ar respontoù kentañ a zo deuet eus Kernev-Izel, ha kaset int bet  
 111 dimp gant an Itron Kemere, bennozh Doue dezhi.  
 111 Notenn a bouez. Digarez a c'houlennomp digant an dud meneget er  
 111 fichennoù ma'z eus faziou. Prest omp da reizhañ pep fazi graet ganimp  
 111 pe gant hor c'henskriverien hep gouzout dimp pe dezho.

<u>GWENGAD</u> , kanton Douarnenez, P.a.B.	111
<u>E 1928</u> . Brezhoneg hepken en iliz.	111
<u>Da vare Nedeleg 1960</u> . En oferenn ar Pellgent, ne oa ket pep tra e brezhoneg. An ao.person en deus desket brezhoneg, hag a seblant bezañ a-du gant ar Yezh.	111
-----	
<u>KEMPER</u> , kanton Kemper, P.a.B.	111
<u>E 1928</u> . Galleg hepken en iliz.	111
<u>Da vare Nedeleg 1960</u> . Nac'het e voe gant an ao.person aotre da ober oferenn ar Pellgent gant kantikoù brezhonek er chapel nevez.	111
E chapel al Likez e vez kanet kantikoù brezhonek gant ar Frered abaoe un nebeut bloavezhioù.	111
-----	
<u>KERFEUNTEUN</u> , kanton Kemper, P.a.B.	111
<u>E 1928</u> . Prezegerezh e brezhoneg. Katekiz e brezhoneg hag e galleg.	111
<u>Da vare Nedeleg 1960</u> . Nac'het e voe gant an ao.person aotre da ober oferenn ar Pellgent gant kantikoù brezhonek e chapel Ti Mamm Doue.	111
-----	
<u>LANDUDEG</u> , kanton Plogastell-Sant-Jermen, P.a.B.	111
<u>E 1928</u> . Brezhoneg hepken en iliz.	111
<u>Da vare Nedeleg 1960</u> . Kantikoù gallek en oferenn ar Pellgent. Koulskoude e vez graet alies pep tra e brezhoneg en iliz.	111
-----	
<u>PLOVEILH</u> , kanton Kemper, P.a.B.	111
<u>E 1928</u> . Brezhoneg hepken en iliz.	111
<u>Da vare Nedeleg 1960</u> . Hervez an ao.person, n'eo ket e Ploveilh e tleer dont da gaout brezhoneg en iliz. An ao.person a seblant kaout menozioù warlerc'hiet a-zivout ar Yezh.	111
-----	
<u>POULDRUZIG</u> , kanton Plogastell-Sant-Jermen, P.a.B.	111
<u>E 1928</u> . Brezhoneg hepken en iliz.	111
<u>Da vare Nedeleg 1960</u> . Kantikoù gallek en oferenn ar Pellgent. An ao.person a vefe laouen da ober pep tra e brezhoneg en oferenn ar Pellgent 1961, gant ma ve kaset soñj dezhañ abred a-walc'h.	111
E chapel Penharz e vez lavaret oferenoù da geñver gouelioù ar Werc'hez, hag eno e vez atav pep tra e brezhoneg.	111
-----	
Kavet e vo ar c'hendalc'h en <u>ABK</u> miz Meurzh. Kenlabourit d'hon <u>ENKLASK MEUR</u> , a dle dont da vezañ un daolenn eus <u>buhez ar Brezhoneg</u> .	111



111 -----  
 111 -----  
 111 -----  
 111 -----  
 111 -----  
 111 -----  
 111 -----

111 PREDER, kaier 17-18, Kerzu 1960. EN UR LENN "BARZHAZ BREIZH" (Eil  
 111 levrenn), gant Fañch Elies-Abeozen. Koumanant 8 niverenn, 24 LN. ;  
 111 4 niverenn, 12 LN. ; CCP.Paris 16.093-13, Dr.Stienne, Châteaulin.  
 111 (Priz ar c'haier-mañ, 7,50 LN.)

111 Neb a fello dezhañ studiañ "Barzhaz Breizh" hiviziken ne c'hello  
 111 ket tremen hep labour F.Elies-Abeozen, ul labour graet a-zevri gant un  
 111 den a oar brezhoneg hag en deus kemeret ar boan da sellout pizh ouzh  
 111 skrid Kervarker (pezh n'o deus ket graet an darn vuiañ eus ar re o deus  
 111 skrivet diwar e benn).

111 Amañ e kaver diskleriadurioù war 18 eus ar gwerzioù. Un dudi e vefe  
 111 din ober evezhiadennoù dre ar munud, gant harp ar skouerioù am eus  
 111 dastumet da aozañ va Geriadur ha va Yezhadur Istorel. Ne rafent holl  
 111 avat nemet kadarnaat pezh a lavar Abeozen.

111 Kervarker ne oa ket aketus. Er mizioù-mañ, ha me o prientiñ ur  
 111 mouladur nevez eus teir barzhoneg e brezhoneg-krenn embannet gantañ, em  
 111 eus bet tro da verzout e oa un tammig "farser". N'eo ket kement ha  
 111 lavarout e oa "falser". Tennet en deus warnañ kasoni ur bern tudigoù  
 111 o vezañ ma oa brogarour. Un abeg muic'h d'an holl vrogarourien da  
 111 studiañ "Barzhaz Breizh".

111 Ur c'heloù mat : PREDER a vo miziek diwar bremañ.

111 HOR YEZH, niv.13 (rummad nevez), Pevare Trimiziad 1960. Koumanant-bloaz,  
 111 10 LN. CCP.Rennes 1240-22, Mlle J.Queillé,47, rue Notre-Dame, Guingamp.

111 Pennadoù mat, disheñvel-kenañ, gant Arzel Even, P.Even, T.Jeusset,  
 111 h.a., o tiskouez ur wech muic'h e fell d'ar gelaouenn prientiñ amzer  
 111 da zont ar yezh koulz ha studiañ hec'h amzer dremenet.

111 Ur c'heloù mat all : dindan an anv GWERIN, e vo embannet ur stag-  
 111 adenn d'HOR YEZH. Renet e vo gant Abeozen ha M.Glanndour. Embann a ray  
 111 dielloù a bep seurt diwar-benn lennegezh-pobl Breizh-Izel. Priz an div  
 111 niverenn a zeuy er-maez bep bloaz eo 10 LN. (da gas d'an Dim.Queillé).

111 BARR-HEOL, niv.25, Kerzu 1960. Trimiziek. Koumanant-bloaz, 6 LN.  
 111 CCP.Rennes 91-764, Abbé Le Clerc, rect. Buhulien, C.d.N.

111 Amañ e vez roet d'an dud evit o arc'hant : 40 pajennad leun-kouch a  
 111 skridoù leun a boell, gant an AoAo.Klerg, M.Glanndour, A.Ar C'halvez,  
 111 J.Konan, E.Konan, E.Troal. Tro am bo da zistreiñ hep mar war darn eus  
 111 ar c'hudennoù meneget pe embreget en niverenn, ar re a denn d'al  
 111 lennegezh ha da gelennerzh ar yezh.

111

AL LIAMM, niv.83, Du-Kerzu 1960. Daouviziek. Koumanant-bloaz, 12 LN. 111  
 (war baper kaer, 15 LN., koumanant-skoazell, 20 LN.). CCP.5349-06 Paris, 111  
 P.Le Bihan, 6, Domaine des Hocquettes, Suresnes (Seine). 111

Ur pezh-c'hoari nevez gant J.Priel a vez atav deuet-mat. En dro- 111  
 -mañ emañ e Spagn, en amzer Fulub II, ha gortoz a c'hellomp eta 111  
 klevout adarre istor Don Carlos, graet, a lavarfed, evel hini Mary 111  
 Stuart hag Inez de Castro, evit ar c'hoariva. "Gouel Sant Jakez" ne 111  
 c'hell ket kevezañ dre ar vent gant dramaoù hollvrudet Alfieri ha 111  
 Schiller. Hogen ur pezh-c'hoari stummet-kaer eo, hag a vo efedus pa vo 111  
 displeget, - Doue oar peur, - gant c'hoarierien ampart. En e gontadenn 111  
 "Skrapet", e tres F.Elies ur poltred c'hoazh da istribilhañ en e viridi 111  
 poltredoù oristaled. "Skol-Louarn Veig Trebern" a zo deuet da vezañ 111  
 unan eus pennañ skridoù Y.Drezen, hag e c'heller lavarout, unan eus 111  
 taolioù-micher hol lennegezh. Ezhomm hon eus da gaout dielloù diwar- 111  
 -benn hon istor, ha setu perak e lenner gant dudi ar pennad "F.Vallee 111  
 en Istor hor Bro", gant B... . Ne ouzon ket piv a savas "An Tour Plomb", 111  
 tennet eus an Dastumad Pennwern. Hogen talvezout a ra kement ha gwellañ 111  
 gwerzioù Barzhaz Breizh. (Peur e vo, a-benn ar fin, embannet an Dastumad 111  
 Pennwern en e bezh ?). Barzhonegoù M.Glanndour a zo dreist d'ar veuleud 111  
 a c'hellfen ober. Evit ar wech kentañ, a gredan, ez eus sonerezh er 111  
 gelaouenn : unan eus kaerañ barzhonegoù R.Huon, lakaet warni gant 111  
 P.Y.Moign un ton dudius. 111

Notenn. - Evel kement tra a dalvoudegezh a embanner en hor yezh, 111  
 n'eo ket harpet AL LIAMM gant arc'hant kest "Devezh ar Brezhoneg". 111  
 Danvez da brederiañ d'ar re a foran arc'hant hag amzer o souten ar 111  
 gest-se. 111

STURIER-YAOUANKIZ, niv.16, Kerzu 1960. Trimiziek. Koumanant-bloaz, 6 LN. 111  
 CCP.Rennes 137403, Y.Bouëssel du Bourg,4,Av.Cruchet, Gagny, S.& O. 111

Pennadoù mat, brezhonek ha gallek. E-touez ar pennadoù brezhonek, 111  
 menegomp re Per G.Keraod, E.Evenou, Gw.Maze, Gw.Ar Menn. 111

TOPONYMIE NAUTIQUE DE LA COTE SUD DU FINISTERE, enklask gant Alain Le 111  
 Berre. Rann I. Tennet eus "Annales Hydrographiques", Imp.Nationale, Paris 111

Setu amañ an dekvet levrig embannet en enklask diwar-benn anvioù- 111  
 -lec'hioù aod Breizh-Izel, en dro-mañ eus Kemperle betek Beg-Meilh. Al 111  
 labour, graet gant Alan Ar Berr, a zo ken aketus ha ken klok hag al 111  
 labourioù embannet a-raok. Ar rakskrid a zo kentelius, daoust ma kavfe 111  
 ur yezhoniour ennañ traoùigoù da rebech. Er roll-anvioù ez eus kalz da 111  
 damall e-keñver ar yezhoniezh. Evel ar re all o deus kenlabouret d'an 111  
 enklask, A.Ar Berr en deus graet eus e wellañ da reiñ un doare-skrivañ 111  
 reizh d'an anvioù dastumet gantañ ha da dreiñ anezho e galleg pa 111  
 c'helle ; un taol-arnod risklus war unan eus risklusañ tachenoù ar 111  
 yezhoniezh, an anvadurezh-lec'hioù. Diot e vefe avat pismigañ re. Ra vo 111  
 meulet A.Ar Berr, hag ivez embanner ar rummad. ROPARZ HEMON 111



P E N A O S    E    V E Z    G R A E T    K E L T E L E Z H

gant F.TERS

E niverenn ABK miz Du 1960, e roe Y.OLIER  
e ali a-zivout "Pouez an Darempredoù Etrekeltiek".  
Setu amañ un ali all.

Kentañ tra a zo da ober evit araokaat an darempredoù etrekeltiek eo lakaat re yaouank ar broioù pennañ dre niver o sujidi (da lavarout eo Breizh ha Bro-Gembre) a-gevret ar muiañ ma vezo gallet.

E Bro-Gembre ez eus, evit ar Vreizhiz yaouank, meur a dra da selaou ha da sellout pizh : da gentañ al labour pouezus graet gant ministred an Azeulerezh, kement war dachenn ar relijion ha war dachenn an danvez sevenadurel ; d'an eil, labour pouezus holl ar re a gemer perzh er vuhez pemdeziek, gant ar c'hembraeg evel yezh komzet, kanet, moulet ha kelennet er skolioù. Ne deus e Kembre kudenn ebet ha na ve pleustret warni e kembraeg.

Divyezhek eo ar vro koulskoude. Nemet ur spered nemetken ez eus dre-holl, hag ar spered-se a zo bet sanket-don gant meur a hini abaoe kantvedoù. En desped da bemp pe c'hwec'h rannrelijion hogozik e pep kêriadenn, n'eus nemet un dra hag a lak an holl da genlabourat dorn-ouzh-dorn a-enep menozioù ar Saozon, hag an dra-se a zo dreist-holl kenvreuriezh ha labour a-gevret penn-da-benn d'ar bloaz, penn-da-benn d'ar vuhez. Mont a ra pep hini diouzh e du en iliz-mañ pe er chapel-hont, met spered don ar relijion a zo kejet ha digejet eno penn-da-benn gant ar c'hembraeg. Pep ezel er barrez a c'hell lavarout e c'her er sarmon, pe goude ar sarmon. Kudenn ar vuhez pemdeziek a zo ivez ar gudenn a vez pleustret ha tabutet warni en iliz hag er chapelig ; rak danvez Aviel ar Sul pe Lizhiri an Ebestel a zo dalc'het bev e buhez pep hini, n'eo ket en iliz nemetken, met ivez en-dro d'an oaled, pe en-dro d'ur chopinad te. Kudenn ar spered, kudenn ar relijion n'eo ket ur gudenn ne ra ganti nemet ar person er gador-brezeg. Ur gudenn a veve ganti eo, hag ur gudenn a zo tra pep den, skiantek pe get. Ar gudenn-se a zo bet sanket-don er bobl, hag ar bobl a gemer perzh enni bemdez. Gwir eo e vev ar pastor hag e wreg evel n'eus forzh pehini en-dro dezho, nemet e kemer-eñ ur perzh kalz brasoc'h eget na vez kemeret e Breizh gant hon tud a iliz er vuhez sevenadurel a-bezh. Ret eo gouzout e vez unanet ministred an Azeulerezh dreist-holl dre ma vez ar Saozon a-bezh Anglikaned ; da lavarout eo, ez eo yezh ar Saozon yezh ar "Bapisted" pe tud damdost d'ar "Bapisted". Paeet int holl, gwir eo, ha paeet d'ereat a-walc'h evit bezañ dieub a-walc'h er vuhez.

Setu pep hini o kemer perzh dalc'hmat en darempredoù savet war dachenn ar sevenadurezh evit reiñ lufr ha lorc'h d'ar barrez en arnodennoù poblek hag en holl genstrivadegoù a gas bep bloaz ar re

wellañ betek telt an Eisteddfod, ma vez roet, dirak moradoù tud, 111  
 prizioù ha meuleudi d'ar re varrekañ er vro a-bezh. Bezañ helavar, 111  
 gouzout sevel gwerzioù, gouzout kanañ e-unan-penn dirak an holl, pe a- 111  
 -gevret, sevel ur pezh-c'hoari ha c'hoari ar jeu er c'hoariva, setu al 111  
 labour talvoudus savet e Bro-Gembre evit neb en deus c'hoant da sailhañ 111  
 er-maez eus ar fank hag ar vuhez lous. 111

Gwir eo n'eus ket kalz a ostalerioù e Kembre ; gwir eo n'ever na 111  
 sistr, na gwin na gwin-ardant ; gwir eo n'eus ket kement a cholori nag a 111  
 reuz etre mistri ar skolioù ; skol ar gouarnamant saoz a zo kalz dieup- 111  
 oc'h eget skol ar gouarnamant gall. E pep kontelezh ez eus skolioù 111  
 disheñvel an eil diouzh eben, nemet dre-holl e lakaer ar relijion war ar 111  
 memes renk, evel danvez all er roll-labour. Hag e Kembre e c'heller 111  
 dibab skolioù ma vez skoliataet ar vugale enno kement war yezh ar vro ha 111  
 gant yezh ar vro evel gant ar saozneg. 111

E Kembre ez eus kelaouennoù e kembraeg penn-da-benn. Selaou a 111  
 c'heller skingomz kembraek. Levrioù a gaver, ken evit ar vugale, ken 111  
 evit ar re all. Moulet e vezont. Prenet e vezont. Amprestañ anezho a 111  
 c'heller el lenndioù-kêrioù, a zo kalz anezho dre-holl. 111

Setu perak ez eus e Kembre ur vuhez sevenadurel. Setu perak ez eus 111  
 ivez tud yaouank o kemer perzh mui-ouzh-mui bep bloaz e buhez politikel 111  
 ar vro. Setu perak o deus c'hoant da reiñ frankoc'h-frankañ d'ar 111  
 menozioù broadel kembraek-rik al lec'h kentañ en o buhez. Setu perak ez 111  
 eus kannaded o kas ar menozioù-se war-raok. C'hoant o deus da gaout 111  
 muioc'h a frankiz c'hoazh evit ar stumm-buhez a vennont tizhout, dis- 111  
 heñvel-rik diouzh stumm-buhez ar Saozon. 111

Kudenn an danvez, kudenn an arc'hant a zo dreist-holl kudenn ar 111  
 Saozon e Bro-Gembre evel el lec'hioù all. Kudenn ar spered, kudenn o 111  
 yezh, kudenn o menozioù relijiel a zo kudennoù dreist ar Gembreiz. Setu 111  
 perak e talc'hont da startaat al liammoù a ra diouto tud disheñvel 111  
 diouzh ar Saozon, tud hag o deus c'hoant da gavout ur stumm-buhez 111  
 keltiek-rik penn-da-benn. 111

Met ret eo lavarout n'int ket ken sot ha mont d'esaeañ lakaat holl 111  
 ar vro da heuliañ o menozioù. Gouzout a reont chom pep hini en e lec'h. 111  
 Gouzout a reont en em lakaat a-gevret, hag a-dolpadoù e kasont da benn, 111  
 nebeut-ha-nebeut, ar pezh nec'hell den e Breizh kas da benn, dre m'en 111  
 deus pep hini e venoz, ha dreist-holl ur menoz kontrol da hini e nesañ 111  
 mignon. 111

E Republik Breizh, neb a venn a gav diouzhtu daouzek abostol a-enep 111  
 dezhañ, hag e kouezh en e boull an holl labour a c'hallje bezañ graet. 111  
 Unvaniezh da gentañ ! Uvelded da gentañ. Klaskomp hor c'hwen ha lazomp 111  
 anezho ! Goude e vezo kalz c'hwekoc'h an darempredoù etrezomp. Goude e 111  
 vo tu, marteze, da glask kenober gant ar re a oar kenlabourat. 111

Kentañ tra d'ober : kas ar Vreizhiz yaouank da Gembre e-pad mizioù 111  
 ha mizioù, evit deskiñ ar yezh, evit deskiñ ar c'hembraeg hag ar saozneg, 111  
 evit deskiñ dreist-holl petra a zo bet graet e Kembre gant ar yezh hag 111  
 evit ar yezh. 111

Setu aze pal kentañ an darempredoù etrekeltiek : eskemm tud, ha tud 111  
 yaouank da gentañ, ha pa ne vijent d'an eur-mañ nemet biniaouerien 111



111 ampart. Mat e vefe, kement da Vreizh ha da Gembre, kacout darempredoù  
111 etrezo dre ar brezhoneg ha dre ar c'hembraeg nemetken. Pal ar yezh etre-  
111 keltiek, pal an dazont.

111 -----  
111 0000  
111 0000 U L L I Z H E R E U S S K O L S A N T E R W A N 0000  
111 0000  
111 0000  
111 -----

111 -----  
111 En ul lizher eus ar 26 a viz Du e ro an It. GALBRUN  
111 keloù dudius eus Skol Sant Erwan, Ploueg-ar-Mor.  
111 -----

111 Aotrou ker,

111 Bez' am boa da skrivañ deoc'h un tammig 'zo, d'ho trugarekaat evit  
111 ho lizher miz Gwengolo, ha da reiñ deoc'h un nebeut keleier eus Skol  
111 Sant Erwan, en he fevare bloavezh bremañ.

111 Fellout a ra din ivez lavarout deoc'h pegement a blijadur am eus  
111 kavet e niverennoù diwezhañ ABK, en abeg dreist-holl d'ar sonerezh a zo  
111 e-barzh. Aes a-walc'h e kavan ober gant an doare skrivañ an notennoù  
111 hoc'h eus kempennet ken resis. Soñj am eus, pa oan o tastum tonioù e  
111 Breizh gwechall, em boa klasket ober gant lizherennoù evel-se evit an  
111 notennoù, hag e lakaen ur varrenn dindan pe ur varrenn a-us evit ar  
111 skeulioù. Nemet diglok ha diresis e oa kement-se. Gant ho toare eo dis-  
111 heñvel. Ha me diampart, e teuan a-benn da adkavout bravik an tonioù  
111 kaer-se, - Wagner, Schubert, - dibabet ganeoc'h ha lakaet da vont gant  
111 gerioù brezhonek. War ur c'hozh armolud a zo amañ e klaskan ober. Hag  
111 evit ar vugale, ez an da zeskiñ dezho bremañ "Ar chase", "Filo", hag all,  
111 traoù nevez evito hag aes. Desket o deus evel just "Malbroug" kerkent.

111 Evit va c'helennadurezh amañ eo bet ret kemm doare tamm pe damm  
111 evit meur a abeg. Ar vugale hon eus bremañ, pe o deus dija goude 3 bloaz  
111 desket pezh o doa da zeskiñ hervez o oad, pe er c'hontrol ne ouzont tra  
111 (o tont eus tiegezhioù nannvrezhonegerien). A-hend-all, gant al lezenn-  
111 -skoazell a dle Bro-C'hall reiñ d'ar skolioù dieub, e rankomp heuliañ  
111 strizh an implij-amzer hag an danvezioù da vezañ kelennet e-pad keit-  
111 -mañ-keit, e koulz-mañ-koulz ... , ken ne c'heller ober, evit ar mare,  
111 nemet ar baour kaezh eurvezh bep sizhun aotreet evit ar c'hoarioù pe  
111 diduoù eveshaet. Evit hor pañsionidi. avat, e ran dezho ouzhpenn un  
111 hantereurvezh bemdez, goude ar skol. Da gentañ e oan un tammig kerseet,  
111 nemet ret eo lavarout en em laka ar vugale madik a-walc'h d'an doare-se.

111 Deskiñ a ran dezho komz dreist-holl. Graet em eus gant ur seurt  
111 ger-stur evit se : "Sellomp ha soñjomp penaos e vevomp" ha "sellomp en-  
111 -dro deomp". Neuze, dre frazennoù berr, e tezreveller pep tra eus ar  
111 vuhez adalek ma saver. Evit ar re ampartañ, e ran dezho adstummañ o-  
111 -unan ar frazennoù ha spisaat reolenn-mañ-reolenn a c'hramadeg. Un  
111 doare-kelenn "skañv" hag a dalvezo pezh a dalvezo. Kentelioù douaroniezh,  
111 istor Breizh, jedoniezh a lakaan ur wech bep sizhun da vont e-pad an  
111 div hantereurvezh-se am bez bep abardaez : kanañ ha deskiñ displegadenn-  
111 où a lakaan ivez ar vugale da ober, bepred e-pad an hevelep amzer.  
111 Bez' e vez ouzhpenn, evel boaz, ar "beilhadegoù" : ar pennad-se etre

goude-koan ha mont da gousket, hag ivez e-pad ar pred-noz e vez goulenn-111  
 ataet ar baotred war dra pe dra emaint o paouez deskiñ. An Ao.Kalvez a 111  
 zo krog da gontañ deomp ouzh taol ur pennadig bemnoz eus istorioù "Pipi 111  
 Gonto", selaouet gant plijadur gant an holl. Evit ar 5 bennak ha na 111  
 ouzont ket a-walc'h a vrezhoneg evit kompren, e vez goulennet digant 111  
 unan all, ur wech bennak treiñ e galleg. Ur souezh eo gwelout penaos 111  
 hor re "gozh" (3 pe 2 vloaz skol gante) a dro ger evit ger ! Setu holl 111  
 ar pezh a c'hellomp ober. Prientet hon eus "Malbroug" damjestraouet 111  
 evit ur "Veilhadeg Vras" bennak, nemet n'eo ket aes mont gant 20 kan- 111  
 fard d'an noz, e-pad ar goañv, el lec'hioù ma vezont aozet. 111

-----  
 EVIT AR VUGALIGOÙ :

AN DEK KAZHIG GWENN

(Hervez ar son saoz, Ten Little Nigger Boys)

4/4

Re-/Sol-Fd-la- - /Sol'Fd'Sol'si're-

do-/la-si-Sol- - /la'la'Re'Re'Sol-

1.

Dek kazhig gwenn, 'vont dindan ar glav.

Unan a veuz. N'eus mui nemet nav !

2.

Nav c'hazhig gwenn, 'vont da glask un neizh.

Ar brank a dorr. N'eus mui nemet eizh !

3.

Eizh kazhig gwenn, 'tebriñ yod e-leizh.

Unan a voug. N'eus mui nemet seizh !

4.

Seizh kazhig gwenn, 'tebriñ krampouezh sec'h.

Unan a dag. N'eus mui nemet c'hwec'h !

5.

C'hwec'h kazhig gwenn, gant ur falzig lemm.

Ar falz a riskl. N'eus mui nemet pemp !

6.

Pemp kazhig gwenn, 'c'hoari gant ar c'harr.

Ar c'harr a ruilh. N'eus mui nemet pevar !

7.

Pevar c'hazhig gwenn, bet oc'h isañ 'r c'hi.

Ar c'hi a lamm. N'eus mui nemet tri !

8.

Tri c'hazhig gwenn, 'tal ar skeul er c'hraou.

Ar skeul a gouezh. N'eus mui nemet daou !

9.

Daou gazhig gwenn, 'tommañ 'tal an tan.

Unan a zev. N'eus mui nemet unan !

10.

Ur c'hazhig gwenn, chomet 'barzh an ti,

'Varv gant ar c'heuz. Bremañ ne'z eus mui !



EVIT ECHUIÑ :

111 O paour keizh kizhier ! Re-/Sol-Sol-Fd-la'  
 111 O paour keizh kizhier ! Sol'/si-si-ls-do-/  
 111 Paour keizh kizhier gwenn ! /si-Sol-la-Re-/Sol:.

EN DEVEZH ALL, O VONT D'AR FOAR

(hervez ar ganaouenn-bobl saoz, Strawberry Fair)

111 1. 2/4  
 111 En devezh all, o vont d'ar foar, Re'/Sol'Sol'la'Re'/Sol'Sol'la-/  
 111 lira lira /la're'la're'/  
 111 lira lira lira /si"do"si"la"Sol'Re"  
 111 'M eus gwelet ur plac'h hep he far. Re"/Sol'Sol'la'Re'/Sol'Sol'la'  
 111 lira li si"do"/re-.  
 111 He blev 'vel aour ha gwenn he dent, si'/do'si'la'si'/do'si'la'  
 111 O werzhañ bleunioù 'tal an hent. si'/do'si'la'Sol'/Fd'Mi'Re-^/

DISKAN

111 lira lira /Sol'Sol'la're'/  
 111 lira lira lira /si"do"si"la"Sol'Re'/  
 111 lira lira /Sol'Sol'la're'/  
 111 lira lira la /si"Sol"la"Fd"Sol-//


111 2. 4.  
 111 - Deboñjour deoc'h, - emezi din. Me 'glask ur galon leun a feiz,  
 111 lira lira lira lira lira  
 111 lira lira lira lira lira  
 111 - Ha prenañ 'rafec'h diganin ? Un imor vat, ur spered reizh.  
 111 lira li lira li  
 111 Me am eus roz ha lili koant, Ur varc'hadourezh a zo ral !  
 111 Ha c'hoazh jenoflez, m'hoc'h eus Ha kavet e vez en ho stal ?  
 111 c'hoant. 5.

111 3. M'hoc'h eus seurt traoù da werzhañ  
 111 - Ho lili, plac'hig, hag ho roz lira lira din,  
 111 lira lira lira lira lira  
 111 A vezo gweñvet-holl fenozh. Dimezell yaouank, deut ganin.  
 111 lira li lira li  
 111 Eus bleunioù kaer na badont ket, Ha me zo kontant reiñ ar priz :  
 111 Dimezell, n'em eus c'hoant ebet. Ur walenn-eured war ho piz.

Da rakprenañ e ti AL LIAMM :

Ur romant nevez gant ROPARZ HEMON

"A N T R I B O U L O M I G K A L O N A O U R"



AN AVEL YEN A YUD

		111
		111
	(War un ton a Gembre)	111
1.	2/4	111
An avel yen a yud	Do'/Do'Fa'Fa'Sol'/lb-	111
War ar run hag ar roz.	sb'lb'/Sol-lb'Fa'/Mi-	111
Digenvez eo an hent,	Do'/Do'Fa'Fa'Sol'/lb-	111
Teñval an noz.	sb'lb"sb"/do-	111
O, c'hwezhit, avel greñv,	do'/do'.lb"lb'do'/sb-	111
Ne doc'h na fall na foll.	sb'/lb'.Fa"Fa'lb'/Sol-	111
Em skouarn, kanañ 'rit	do'/fa'do'sb'lb'/sb'	111
A frankiz aet da goll.	rb'do'sb'/lb-Sol-/Fa-^	111
		111
2.	3.	111
An tonnoù bras a ruilh	Ar glav a strink a-bil	111
A-zindan goumoul du,	War va zal biroù lemm.	111
Oc'h ober, 'hed an traezh,	Padal, ne zeu ganin	111
Nijal ar fru.	Tamall na klemm.	111
O tonnoù, skoit start	Ha me er barrad kriz,	111
En aodoù tro-ha-tro.	O kerzhout paour ha dall,	111
Digabestr oc'h bepred,	E sked dirak va sell	111
O tonnoù gouez va bro !	Ar frankiz a wechall.	111

-----  
PEP GWIR MIRET-STRIZH : Skrid brezhonek ar sonioù-mañ, savet gant  
 Roparz Hemon, ne c'hell bezañ moulet, liesskrivet, lakaet war bladennoù  
 nag embannet e doare ebet hep aotre. Evit kaout aotre, skrivañ d'ar  
 gelaouenn pe da Roparz Hemon, 1-A, Leeson Park, Ath Cliath 6. (Eire).  
 -----

-----  
 B U H E Z    A . B . K .  
 -----

- 1) Eus ar 15 Gwengolo d'ar 15 Here :  
 4 skod pe goumanant paeet (2 evit 1960, 2 evit 1961).  
 Prof : An Ao.Prunenveg, 1 LN.
- 2) Eus ar 15 Here d'ar 15 Du :  
 9 skod pe goumanant paeet (1 evit 1960, 8 evit 1961).  
 Profoù : An Ao.Ar C'halvez, 3 LN. - An Dim.Chevillotte, 5 LN.  
 - en holl : 8 LN.
- 3) Eus ar 15 Du d'ar 15 Kerzu 1960 :  
 16 skod pe goumanant paeet (8 evit 1960, 8 evit 1961).  
 Profoù : An Tad Rolland, 6 LN. - An Ao.H.Maze, 3 LN. -  
 An It.Galbrun, 3 LN. - An Ao.P.Penneg, 3 LN. -  
 An It.Rohan, 43 LN. - An It.Noury, 8 LN. -  
 An Ao.M.Aodig, 3 LN. - An Ao.A.Allain, 3 LN. -  
 An Tad Chapel, 3 LN. - An Dim.Martin, 3 LN. -  
 en holl : 78 LN.  
 Bennozh Doue d'ar brofourien !



mm m m m m / m m m m m m m m m m m  
 m m m m m m m m m m m m m m m m m  
 mm m m m m m m m m m m m m m m m  
 o

A R C' H A R R - N E Z A Ñ

Niv.48

Azezet dirak dor he zi, edo  
 Jani gozh o nezañ (1). Edo Yann, he

111 gwaz, e korf e roched, oc'h aozañ dor gizellet ur gwele-kloz, a oa bet  
 111 tennet er-maez hag harpet ouzh moger an ti bihan. An amzer a oa kaer.  
 111 Miz Mae a oa deuet. Heol ar mintin a splanne laouen war bep tra en  
 111 draoniennig koant, war ar stêrig sioul, war ar gwez gant o delioù nevez,  
 111 war doenn c'hlas an ti, war ar bleunioù el liorz, war vlev gwenn an  
 111 daou gozh o labourat. Ha trouz ebet nemet kan al laboused ha fraoñv  
 111 rodig ar c'harr-nezañ (2).

111 A-greiz-holl e voe klevet un trouz all. Trouz ur c'harr e oa ivez,  
 111 met ur c'harr-tan en dro-mañ, o tont gant an hent bras.

111 Jani a hejas he fenn : e-pad mizioù e teuje seurt kirri, kantadoù,  
 111 miliadoù anezho, da derrañ peoc'h maezioù Breizh-Izel. Nann, ne vije  
 111 mui peoc'h ebet en draoniennig ! Ar vaouez kozh a daolas ur sell ouzh he  
 111 gwaz. Ne lavarjont ger. Pep unan a ouie petra a dremene e spered egile.  
 111 Ar vuhez e oa, o kemmañ atav dremm ar bed ! Ne oa ket evel-se gwechall,  
 111 en amzer o yaouankiz !

111 Ar c'harr-tan a chomas a-sav e-kichen an ti. Un aotrou ha div  
 111 itron a ziskennas. Amerikaned oant, da varn diouzh o dilhad. Yann ha  
 111 Jani a zalc'he da labourat. Gant korn o lagad koulskoude e weljont an  
 111 tri estren o tostaat.

111 Unan eus an itronezed a lavaras un dra bennak e galleg iskis.

111 - Petra lavar ? - eme Jani.

111 - Goulenn a ra, - eme Yann o sevel a-zirak dor ar gwele-kloz, -  
 111 hag-eñ ez eus c'hoazh kalz nezerezed er vro-mañ.

111 - Lavar dezhi, - eme Jani, - n'eus mui nemedon er barrez.

111 - Goulenn a ra, - eme Yann, - hag-eñ ez eus er parrezioù tro-war-  
 111 -dro.

111 - Ne gredan ket, - eme Jani.

111 - Goulenn a ra, - eme Yann, - hag-eñ e plijfe dit gwerzhañ dezhi  
 111 da garr-nezañ.

111 - Gwerzhañ va c'harr-nezañ ! - eme Jani, o lezel ar rod da chom  
 111 a-sav, ken souezhet e oa. Lavar dezhi n'emañ ket va c'harr da werzhañ.  
 111 Karr va mamm-gozh ! Ha penaos e c'hounezin-me va bara pa vo gwerzhet ?  
 111 Biskoazh kemend-all !

111 - Lavarout a ra, - eme Yann, - e roio dit ar priz a c'houlenni.

111 - Nann, ne werzhan karr-nezañ va mamm-gozh, Doue d'he fardono !

111 na ne rin !

111 An tabut a badas ur pennad. An aotrou en doa tennet un doug-

111 -bilhedoù tev eus e c'hodell.

111 - Klev 'ta, Jani ! - eme Yann.

111 Jani, hep selaou he fried, a oa krog adarre da nezañ.


111 -----

111 (1) nezañ = ober neud.

111 (2) karr-nezañ = benveg a c'hiz kozh d'ober neud.







Revue mensuelle-No.27-Mars 1961

Kelaouenn vizek-Niv.27-Meurzh 1961

Abonnement annuel : 7 NF.


Koumanant-bloaz : 7 LN.

CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, St.Marc, BREST.

PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON

T A O L E N N

111  
111  
111 Ar miz ..... p.33  
111 Emvod Kemper (diwar danevellskrid Per Denez) ..... p.35  
111 Stourm an iwerzhoneg (Alan Heussaff) ..... p.37  
111 Ar Beilhadegoù (Per Even) ..... p.39  
111 Al louzoù-kegin, III (Arzel Even) ..... p.41  
111 Stad ar brezhoneg ..... p.43  
111 Kanomp : Ar merc'hed dibreder. - N'eus tan a ve ken loskus p.44  
111 - : En noz tremenet ..... p.45  
111 - : An tabouliner bihan ..... p.46  
111 DALC'HOMP : Penaos eo bet savet roll-gerioù  
111 "Diazezh ar Brezhoneg" (Roparz Hemon) ..... p.47



DRE AN DOUAR

111 REUSTL E BRO-GONGO : Ar Republik Arabek Unanet ha Maroko a zivizas e  
111 miz Genver lemel o soudarded, a oa darn eus bagadoù ar Broadoù Unanet,  
111 diouzh Bro-Gongo.  
111 D'an 3 C'hwevrer e tarzhas ur c'hrogad e rannvro g-Kivou etre  
111 heulierien Loumoumba ha soudarded nigeriat eus ar Broadoù Unanet.  
111 D'an 9 a voe aozet e Kerleopold ur gouarnamant nevez renet gant  
111 J.Ileo. Se, a lavarer, a oa da virout ouzh ar Broadoù Unanet da astenn  
111 o galloud er vro.  
111 D'an 10 e voe roet da c'houzout gant gouarnamant Katanga e oa deuet  
111 Loumoumba ha daou eus e geneiled a-benn da dec'hout diouzh un ti-feurm,  
111 ma oant toullbac'het ennañ, ur c'hant kilometrad diouzh harzoù Angola.  
111 D'an 13 e voe roet da c'houzout e oa bet lazhet an tri den gant tud ur  
111 gêriadenn na voe ket diskuliet hec'h anv.  
111 D'ar 14 e tisklerias Rusia ne anaveze mui an Ao.Hammarskjöld evel  
111 Sekretour-Meur ar Broadoù Unanet. Goulenn a reas ouzhpenn ma vije lamet  
111 nerzhioù ar Broadoù Unanet diouzh Bro-Gongo a-benn ur miz, barnet  
111 Tchombe, Prezidant Katanga, hag ar Jeneral Moboutou, penn an arme  
111 gongoat, ha kondaonet Belgia evit ar perzh kemeret ganti en darvoudoù.  
111 Displegadegoù a-enep Belgia a voe aozet e Moskov, Kaero ha meur a gêr  
111 all dre ar bed.

AR "SANTA MARIA" : Ar mordreizher portugalat "Santa Maria", a 20.906 tonellad, a voe paket d'an 23 Genver gant darn eus ar veajourien a oa e bourzh, e Mor an Antilhez. Un ofiser a voe lazhet. An ensaverien, en o fenn ar C'habiten Galvão, a oa enebourien da c'houarnamant Salazar. Labourat a raent a-du gant ar Jeneral Delgado, a zo bremañ en harlu e Brazil. Listri-brezel saoz hag amerikan a voe kaset war-lerc'h ar "breizherien-vor". Ar veaj a echuas d'an 2 C'hwevrer e porzh-mor Recife, Brazil. Ar 600 a veajourien a oa er mordreizher a zilestras en deiz-se. Kalz trubuilhoù o doa bet da c'houzañv. Antronoz, Galvão hag 28 eus e heulierien a zaskoras al lestr d'un amiral braziliat. Herberc'h a voe roet dezho e Brazil evel "repuidi bolitikel" gant gouarnamant ar Prezidant Quadros, a oa o paouez kemer e garg.

DIZURZHIOU EN ANGOLA : Stag moarvat ouzh abadenn ar "Santa Maria" e voe taoliou-dispac'h a darzhas e Luanda, kêrbenn Angola, d'ar 5 C'hwevrer. Ar skinlec'h, ar prizonioù hag ur c'hazarn-polised a voe taget. 16 den da vihanañ a voe lazhet en deiz-se, ha 4 all antronoz e-pad douaridigezh ar re lazhet en derc'hent.

DAEL ETRE RUSIA HA BRO-C'HALL : Rusia a savas klemm, d'an 9 C'hwevrer, ouzh Bro-C'hall, o lavarout e oa bet taget en deiz-se, er Mor Kreiz, ouzhpenn 100 Km. en hanternoz da Aljer, gant ur c'harr-nij gall, ar c'harr-nij a gase Prezidant Republik ar Soviedoù, Leonid Brejnev, da Varoko.

#### EN EC'HONDER

UR CHIMPANZE EN EC'HONDER : Ur chimpanze 4 bloaz, anvet Ham, a reas un droig en ec'honder d'an 31 Genver. Al loen, a bouez 40 livr, a voe lakaet en ur glozenn heñvel ouzh an hini a vo implijet da lakaat un den, hogen bihanoc'h. Liammet e voe war ur gwele. E-pad mizioù e oa bet desket dezhañ petra en dije da ober : sachañ gwech an anzer war loc'hoù, da ziskouez e oa gantañ e anaoudegezh. Pep hini eus e fiñvadennoù a c'helle bezañ studiet dre skin eus an Douar. Ar glozenn, taolet eus ar C'hab Canaveral, a reas ur veaj 250 Km. diouzh an Douar, ha na badas nemet 16 munutenn. Harzlammet e voe er Mor Atlantek, ha kavet war vordo gant ul lestr un nebeut eurvezhioù goude, hag Ham bev-mat e-barzh.

ADPLANEDENN NEVEZ : D'an 31 Genver ivez, e voe taolet gant an Amerikaned, eus Kalifornia, un adplanedenn graet evit luc'hskeudenniñ an Douar. "Samos II" a ra he zro e 95 munutenn, etre 500 ha 550 Km. a uhelder.

SPOUTNIK POUNNER : D'ar 4 C'hwevrer e voe tro ar Rusianed da deurel ur sputnik nevez, 6 tonenn 1/2, ar pounnera bet taolet betek-hen.

ETREZEK AR WERELAOUEN : Ar fromusañ-holl, avat, a voe taolidigezh gant ar Rusianed, d'an 11 C'hwevrer, eus ur vannadell pe "savlec'h etreplanedennel", a dle degouezhout e-kichen ar Werelaouen e diwezhañ hanterenn miz Mae. Ar vannadell a bouez war-dro 500 Kg, hag a voe distaget diouzh un adplanedenn, ar wech kentañ na'z eo bet graet an dra-se. Spi a zo da gaout keloù resis diwar-benn ar Werelaouen, an nebeutañ anavezet eus planedennoù an Heol.



111  
 111  
 111 EMVOD KEMPER  
 111 diwar danevellskrid P.DENEZ  
 111  
 111

111 Bodadeg SKOURR BREIZH AR C'HENDALC'H KELTIEK a zo bet dalc'het  
 111 d'an 29 a viz Kerzu 1960 e Kemper. Un devezh plijus a vignoniezh eo bet.  
 111 Ouzhpenn 30 den a zo deuet d'ar vodadeg, a zo bet aozet-mat gant hor  
 111 mignoned eus Kemper, an Itron Kemere ha Yann Ar Beg. A drugarez dezho eo  
 111 ez eus deuet kement a dud d'an devezh brezhonek-se. Lizheroù o doa  
 111 kaset, ha renket pep tra eus ar gwellañ. Trugarez dezho.

111  
 111 LIZHEROU  
 111 Lizheroù a zo bet lennet diouzh ar mintin. Unan gant Per Even,  
 111 diwar-benn astenn ar Beilhadegoù giz Treger. Studiet eo bet ar gudenn.  
 111 Divizet ez eus bet goulenn gant un nebeut tud harpañ. Diskleriañ a ra  
 111 tud ar Skourr pegen plijet int gant al labour graet gant Per Even hag e  
 111 vignoned, hag e kasont dezhañ o gourc'hemennoù mat.

111 Ul lizher all digant an Ao.Troal, diwar-benn e skol vrezhonek :  
 111 levrioù a vo kaset d'e harpañ.

111 Ul lizher gourc'hemennoù a zo bet degemeret a-berzh Skourr Manav,  
 111 kaset gant an Dimezell Mary E.Cannell. Respontet e vo gant Skourr  
 111 Breizh.

111  
 111 ALMANAK AR BOBL  
 111 An Itron Kemere a lak dirak an holl kudenn un Almanak evit ar bobl.  
 111 An diaester bras eo atav an hevelep hini : gwerzhañ kalz. Hag an  
 111 almanak a rank, anat eo, bezañ gwerzhet dindan vloaz. Rener AL LIAMM a  
 111 lavar e c'hello embann ul levr aes, skeudennaouet ha plijus evit ar  
 111 bobl, - doare un almanak, met nannbloaziek.

111  
 111 KENDALC'H KELTIEK 1962  
 111 Kudenn Kendalc'h 1962 a zo studiet goude. Divizoù a zo bet boulc'het  
 111 gant ur maerdi. A-benn bremañ, avat, ez eo ret soñjal e kudenn an  
 111 arc'hant ha dastum a-benn bezañ gouest da zegemer kannaded tramor. Ur  
 111 c'hef a zlefe bezañ digoret diouzhtu evit se.

111  
 111 KENDALC'H KELTIEK 1961  
 111 Kendalc'h 1961 a vo dalc'het en Iwerzhon, e derou miz Eost hep mar.

111  
 111 AN EMVOD DA ZONT  
 111 Ur vodadeg all a vo graet, d'ar 6 a viz Ebrel, e Karaez. Pedet eo  
 111 an izili da zont niverus.(1)

111 -----  
 111 (1) Munudoù diwar-benn Emvod Karaez a vo embannet war ABK miz  
 111 Ebrel.

BREURIEZH VEUR AR BREZHONEG

Goulenn a ra ar Vodadeg digant Roparz Hemon kas da benn vat sav-  
idigezh ar Vreuriezh Veur, - dreist-holl ar gevrenn anezhi a vo en he  
c'harg ober war-dro ar gerioù nevez. 111

"AL LIAMM"

R.Huon a ro keloù eus AL LIAMM. Mat a-walc'h eo stad ar gelaouenn.  
Trec'het he deus war gement a zo bet graet d'he distroadañ. Muioc'h a  
goumananterien he deus bremañ eget bloaz 'zo, pe zaou vloaz 'zo. 111  
Muioc'h a levrioù a zo bet gwerzhet hevlene eget biskoazh. Ar staliou-  
-levrioù, dreist-holl, a bren muioc'h-mui. Dleoù a zo da baeañ, avat,  
hag hevlene ne vo, hep mar, embannet ken nemet ul levr, An Tri Boulomig  
Kalon Aour, gant Roparz Hemon. Diouzh ar werzh e vo gwelet. 111

KUZUL AR BREZHONEG

An Ao.Klerg a ro keleier eus Kuzul ar Brezhoneg. War-dro 300.000  
lur a zo bet degemeret abaoe an derou. Chom a ra 24.000 er c'hef.  
Koumananterien nevez a zeu da VARR-HEOL. 111

"SKOL"

An Ao.Ar C'halvez a ro keleier eus SKOL. Koumananterien nevez a  
zeu atav. Arc'hant a zo ezhomm avat, rak levrioù a zo war ar stern :  
da skouer un Istor al lennegezh dre bennadoù, gant Abeozen. An niverenn  
e galleg a zo bet degemeret-mat : 130 skouerenn a zo bet kaset d'ar  
skolioù kristen en eskopti Sant-Brieg. 111

"WANIG HA WENIG"

WANIG HA WENIG a ya mat ivez : 10 pajenn en deus bremañ, bravoc'h  
gant ar steniloù elektronek ha skeudennoù prestet gant Kembreiz. 600  
niverenn a vez kaset bep taol. 111

Evit Skol Sant Erwan, an Ao.Ar C'halvez a garfe kaout muioc'h a  
vugale brogarourien. 111

SKOL DRE LIZHER "OBER"

An Dimezell M.Gourlaouen a ro keleier eus Skol OBER : muioc'h eget  
100 diskibl he deus bet er bloaz-mañ (1960). Mat ez a ar skol. Skol an  
Trec'h Kentañ a zo graet gant an Ao.Yann Thomas. 111

"HOR YEZH"

P.Denez a gomz eus HOR YEZH : 4 niverenn a vo embannet e 1961,  
ouzhpenn se 2 niverenn gouestlet d'ar studioù keltiek (kembraeg hag  
iwerzhoneg), ha c'hoazh 2 niverenn dindan an talbenn GWERIN, gouestlet  
da skridoù-pobl a bouez ; a-hend-all, eil levrenn Istor ar Yezhoù  
Keltiek a vo embannet ez distag. Pezh a raio, evit HOR YEZH, 8 niverenn  
hag ul levr e 1961. 111

"AR VRO"

P.Denez a lavar ivez un nebeut gerioù diwar-benn AR VRO. 111



111 "PREDER"

111 Abanna a ro keleier eus PREDER. Kalzik labour a zo bet graet, gant  
 111 kaieroù a bouez evel Geriadur Istorel Roparz Hemon, studiadennoù abeozen  
 111 war Barzhaz Breizh, studiadenn Youenn Olier war darvoudoù en Emsay, h.a.  
 111 Ur bern danvez a zo gant PREDER da embann. Miziek e vo ar c'haieroù e  
 111 1961.

111 KEVREDIGEZH KERENT

111 Yann Ar Beg a lavar e vo savet hep dale e Kemper ur gevredigezh,  
 111 enni ar gerent a fell dezho e vefe desket brezhoneg d'o bugale er skol.

111 -----  
 111 Echuet eo bet ar vodadeg war-dro 6 eur noz. Trugarez d'an holl a zo  
 111 deuet, ha d'ar re o deus labouret evit ober eus an devezh-se un devezh  
 111 eus ar plijusañ.

111 =====  
 111 STOURM AN IWERZHONEG

111 gant ALAN HEUSSAFF

111 =====  
 111 AR C'HOARIVA

111 Goude m'en doa tamallet an dramaour John Keane d'an iwerzhoneg  
 111 mirout ouzh brogarantez rik d'en em zisplegañ er vro-mañ, ez eo aet ur  
 111 c'helaouaer a-berzh an "Irish Times" da gaout kadoriad Gael-Linn,  
 111 Donall O Moráin, evit kaout e venoz. Meneget en doa Keane levezon fall  
 111 ar yezh-se war ar c'hoariva dreist-holl.

111 Aes eo bet da D.O Moráin reiñ anvioù anavezetoc'h eget hini ar  
 111 pismiger evit diskouez n'en doa ket prederet-mat. Dramaourien ha  
 111 c'hoarierien evel Seán O Casey, Siobhán MacKenna, M.Mac Liammóir, ha re  
 111 all, a zo brudet en estrenvro. An dud-se a oar mat iwerzhoneg hag a  
 111 gred ez eo talvoudus dezho. Kalz anezho a gomz iwerzhoneg d'o bugale  
 111 ivez. Seán O Casey a harp strolladoù a stourm evit ar yezh : n'eus ket  
 111 pell e lavare ne oa nemet Gael-Linn a gement a dalveze ar boan en  
 111 Iwerzhon. Skouer Brendan Beacháin (Behan) a zo splann ivez. Gounit a  
 111 reas brud gant "An Giall" (Ar Gouestlad, embannet bremañ e saozneg) hag  
 111 a voe skrivet ha diskouezet en iwerzhoneg.

111 E miz Gwengolo tremenet e oa ur gouel c'hoariva e Dulenn. Ar pezh-  
 111 -c'hoari-sonerezh "Spailpín a Rún", savet gant ar sonaozour Seán O  
 111 Riada (anevezet gant ar re a gemeras perzh er C'hendalc'h Keltiek war-  
 111 lene) diwar-benn buhez direol ar barzh Eoghan O Suilleabháin, a voe  
 111 kavet dreist da gement tra saoznek gant buruteller al "London Times".  
 111 Skrivagnerien evel Liam O Flaherty, Frank O Connor ha Robert  
 111 Farren, dezho brud etrevroadel, o deus skrivet en iwerzhoneg ivez. Ha  
 111 fellout a ra dezho chom tost d'an andon-se. Lod anezho, na ouient ket

ar yezh a-vihanik, a zo deuet da vilhed warni. Int eo gwellañ kannaded 111  
ar vro. Prizañ a reont o yezh. 111

Lavaret e vo e vev lod anezho er-maez eus ar vro. Evel-se e c'hoar-111  
vez alies er broioù bihan. Atizet e vez ar re zonezonet da skrivañ evit 111  
ar "marc'had" etrevroadel, hag e rankont mont d'ar c'hêrioù bras. Ar 111  
pezh en deus roet tro, avat, d'ar skrivagnerien-se da vout ken brudet 111  
o deus tennet eus Iwerzhon. 111

### IWERZHONEG ER PARLAMANT

Abegiñ a ra enebourien an iwerzhoneg er pilpouserezh a zo, sañset, 111  
en-dro da emsav ar yezh. "Rediañ a reer ar vugale da zeskiñ ur yezh di- 111  
dalvez, hag an darn vrasañ eus ar gannaded en Dáil n'int ket gouest da 111  
vreutaat kudenn ebet er yezh-se." 111

D'an dra-se e respont O Moráin e lezennont ivez, da skouer, diwar- 111  
-benn Servij ar Yec'hed hep gouzout tra eus ar vezegiezh. 111

### TALVOUDEGEZH UR YEZH VROADEL

Petra o deus an dud da c'hounit o komz iwerzhoneg, pa c'hellont 111  
divizout mat-tre e saozneg ? 111

D'an hinienn eo respont. Ur pal o doa ar re a glaske sevel ur Stad 111  
amañ : diwall ar vroadelezh. Pa zeujont a-benn da sevel ur Stad evit 111  
darn eus ar vro, e chome nebeut-tre eus doareennoù ur vroad : ul 111  
lennegezh dindan eñvor er Gouezelva, sonerezh-pobl, hag anaoudegezh eus 111  
an iwerzhoneg gant un niver bihan a dud. Netra a-hend-all. 111

N'eus arouez a vroadelezh ebet a vije pouezusoc'h eget ar yezh. Ar 111  
re a ra gant an iwerzhoneg a zo stag gant un ere speredel ouzh ar 111  
gumuniezh iwerzhonat. "An iwerzhoneg eo tachenn-herzel diwezhañ ar re a 111  
glask degas yec'hed en-dro da Iwerzhon. Ma ne gendalc'homp ket gant hon 111  
hengoun, hep dale e vo sellet ouzhimp evel ur rannvroad, ur rann eus ur 111  
gevredigezh all, brasoc'h. Neuze e vo tonket deomp chom war-lerc'h er 111  
gevredigezh-se. Ma vefemp daou vil lev diouzh Bro-Saoz c'hoazh ! Ken 111  
stank eo an embannadurioù saoznek en-dro deomp ma vefemp liñvet ha 111  
levezonet-mik ganto ma ne chomfe ket ur yezh dibar ganeomp. Hon abegoù 111  
a zo estreget danvezel, ha ne c'hellont ket bezañ diskleriet e saozneg." 111

----- 111  
----- 111  
Da rakprenañ diouzhtu : 111

Ur romant nevez 111

gant ROPARZ HEMON 111

A N T R I B O U L O M I G K A L O N A O U R 111

Priz : 9,00 LN. - war baper "Alfa" : 18,00 LN. - war "Rives" : 22,00 LN. 111

Kas an arc'hant da R.HUON, 132, rue de Verdun, Brest. 111

CCP.Rennes 1629-14 111











glouar. Diwar hadoù an Talbod e strilher un dourenn implijet er porfum- 111  
 erezh hag el louzaouerezh (a-enep ar c'halonask hag an diilboued). Graet 111  
 e vez ivez dour-louzoù mat d'ar stomok diwar an delioù hag ar gwrizioù. 111

Feniculum vulgare. Fanouilh. Fenouil. 2 (peurliesañ) pe 3. Broioù 111  
 kreizdouarek hag aodoù ar Mor Atlantek. Ar blantenn gaer-se a weler 111  
 alies en arvor, ken el liorzhoù, ken war reier an aod. Kreskiñ a ra uhel 111  
 ha kreñv, hag aloubiñ a ra al liorzha ma ne daoler ket evezh. Implijet e 111  
 vez an delioù evel temz-boued er saladenn, gant ar pesked, h.a. (erbediñ 111  
 a ra ar geginourien grilhañ ar brizhili war un tan korzennoù Fanouilh 111  
 sec'h). Evel louzoù ez eo troazhus-kenañ (dour-louzoù diwar an delioù). 111  
 Diwar an hadoù e vez strilhet un dourenn implijet er porfumerezh. 111

Pimpinella anisum. Aniz. Anis (vert) (1). 1. Azia-Vihanañ. Ar 111  
 blantenn-se ne vez ket gounezet kalz hiziv an deiz, ha diaes eo zoken 111  
 kavout an had anezhi. Hadet e vez en nevez-amzer, ha kreskiñ a ra buan- 111  
 -suezhus. Mat eo dour-louzoù an hadoù d'ar stomok ha d'ar bouzelloù, da 111  
 skoazellañ goiñ ar boued ha da gas kuit ar gwentl. Implijet e vez an 111  
 dourenn-strilhañ evit ober madigoù, evajoù, h.a. 111

Anethum graveolens. Annuz. Aneth. 1. Broioù kreizdouarek ha Kornog 111  
 Azia. Hadet e vez en nevez-amzer, ha n'eus ket ezhomm d'e dreuzplantañ 111  
 (dre vras, n'eo na ret nag aes treuzplantañ izili ar c'herentiad-mañ). 111  
 Heñvel a-walc'h eo e c'hwez ouzh hini an Aniz, hogen freskoc'h, nebeut- 111  
 oc'h evel madigoù. Implijet e vez an delioù er "c'hourbouilhoñs", 111  
 a-gevret gant louzaouennoù all, hag an hadoù er gwinegr ma lakaer 111  
 kokombrez bihan d'o mirout. Dour-louzoù an hadoù a harz an hik hag ar 111  
 c'hwedenn. 111

Carum carvi. Pastounadez melen. Carvi. 2. Kreiz Europa (betek Reter 111  
 ha Kreiz Bro-C'hall, dianav e Breizh). Hadet e vez en nevez-amzer, hag 111  
 an hadoù (int hepken a zo talvoudus) a vo arvestet en eil hañv ; a- 111  
 -wechoù koulskoude ne vleugn ar blantenn nemet en trede bloavezh. 111  
 Anavezetoc'h eo ar Pastounadez melen e broioù Kreiz hag Hanternoz Europa 111  
 eget en hor bro-ni, hogen an dud a gav mat o blaz a implij an hadennoù- 111  
 -se e pep seurt meuzioù : keusteurenn-vaout, goulach (keusteurenn-vevin 111  
 giz Hungaria), kaol-go, tartz avaloù, h.a. E broioù 'zo e vezont lakaet 111  
 ivez er bara-segal, e gwestell ha formajoù 'zo. Dour-louzoù diwarno a zo 111  
 mat a-enep ar gwentl hag e "kleñved al lonkañ-aer". 111

(Alies e reer Koumin, galleg Cumin, eus ar blantenn-se. Ur ouennad 111  
 all eo ar C'houmin gwirion (Cuminum cyminum), a gresk gouez e stepennoù 111  
 Kreiz Azia ; e hadennoù, hiroc'h ha moanoc'h eget re ar Pastounadez 111  
 melen, o deus an hevelep blaz hag ar re-se hag a vez implijet en hevelep 111  
 doare. Al likur anvet Kümmel er broioù baltek a vez graet gant ar 111  
 Pastounadez melen). 111

(1) An "Anis étoilé" gwerzhet gant al louzaouerien a zo frouezh ur 111  
 wezenn eus Bro-Sina, n'he deus mann d'ober gant an Aniz gwirion.









111 m  
 111 mmm mm mmm mmm mmmmm mmm  
 111 m m m m m m m m m m m m m m m m  
 111 m m m m m m m m m m m m m m m m  
 111 m

EN NOZ TREMENET

(war un ton kozh a Vreizh)

6/8

la're'dd'/re-.mi'sol'fa'/mi-.

la're'dd'/re-.mi'sol'fa'/mi-

re'mi-mi'/mi're'mi'fa're're'/re'dd'

re'mi-mi'/mi're'mi'fa're'dd'/re-.

1.

/: En noz tremenet, dre va c'houk, :/

Em eus huñvreet e oa maro va dousig,

Em eus huñvreet e oa maro va dous.

2.

/: Ha me raktal war va marc'h rous, :/

Ha mont d'ar c'haloup da welout va dousig,

Ha mont d'ar c'haloup da welout va dous.

3.

/: Pa oan o tremen 'tal ar poull, :/

E hope kaouenn ar c'hoad en he zoullig,

E hope kaouenn ar c'hoad en he zoull.

4.

/: Pa oan o tremen dre al lann, :/

E lein ar menez e koage ar vranig,

E lein ar menez e koage ar vran.

5.

/: Pa oan o tremen 'tal an oulm, :/

Dirak ar porched e klemme ar goulmig,

Dirak ar porched e klemme ar goulm.

6.

/: Pa oan o tont 'kichen an ti, :/

E-tal e lochenn e keine ar c'hiig,

E-tal e lochenn e keine ar c'hi.

7.

/: Ha me er gambr, hep ober trouz. :/

E-barzh he gwele oa ledet va dousig,

E-barzh he gwele oa ledet va dous.

8.

/: Me gant va doan tost da vont sot, :/

Lakaat ur pokig a gañv war he jodig,

Lakaat ur pokig a gañv war he jod.

9.

/: Met a-greiz-holl, o burzhud brav ! :/

Va dous o c'hoarzhin a sav en he savig,

Va dous o c'hoarzhin a sav en he sav.

10.

/: - O, va dihuniñ hoc'h eus graet ! :/

Va mignon ker, na c'hwi zo deut abredik !

Va mignon ker, na c'hwi zo deut abred !

111





mm m m m / m m m mmm mm m  
m m m m m m m m m m m m m m m  
m m m m m m m m m m m m m m m  
mm m m mm m m m m m m m m m m

En ur miz

e c'hell ho mignoned  
deskiñ DIAZEZ AR BREZHONEG  
ha lenn DALC'HOMP !

Niv.49

lll -----  
lll ----- PENAOS EO BET SAVET ROLL-GERIOU "DIAZEZ AR BREZHONEG" -----  
lll -----  
lll -----

lll Ur goulenn hag a zo bet graet alies eo hemañ : pet ger a zo ret  
lll evit lavarout kement a rank bezañ lavaret ?

lll Darn a zo tuet da respont diouzhtu : ar muiañ, ar gwellañ. Hag hep  
lll arvar ebet e vo kavet re all da respont : an nebeutañ, ar gwellañ.

lll Met an daou respont-se, drezo o-unan, ne dalvezont netra, ken  
lll disheñvel ha ma'z eo ezhommoù an dud.

lll Ar skrivagner a fell dezhañ liveañ kement pleg a zo en ene a ranko  
lll peurliesañ ober gant gerioù niverus. An naturour a ranko kaout ur bern  
lll anvioù da reiñ d'ar plant ha d'al loened. An tad, er c'hontrol, da  
lll gomz gant e vugale vihan, a c'hell tremen gant un nebeut gerioù boutin;  
lll pe an ofiser da gomz ouzh e soudarded.

lll Ret eta ober ar goulenn en un doare strishoc'h : pet ger a zo a-  
lll -walc'h d'un den, n'eus forzh pehini, da lavarout ar pep brasañ eus ar  
lll pezh a rank lavarout bemdez ?

lll Ar respont amañ ne c'hell ket bezañ roet diouzhtu. Ne c'hell bezañ  
lll diazezet nemet war ar studi hag ar skiant.

lll 1) Ar studi :

lll Ar menoz kentañ a sav d'ar spered eo klask gouzout pere e-mesk  
lll holl c'herioù ur yezh a vez graet ganto an aliesañ. Penaos gouzout ?  
lll N'eus nemet un doare : kemer skridoù, ar muiañ ma c'heller, ha kontañ.  
lll Ul labour hir ha diblijus, evit gwir, a zo bet kavet tud evit e ober  
lll koulskoude.

lll Graet eo bet evit ar saozneg, ar galleg, ha yezhoù all c'hoazh.  
lll N'eo ket bet graet evit ar brezhoneg, e anzav a rankan. Perak ? Ne oa  
lll ket ezhomm. Ar c'hontoù graet o deus diskouezet e oa tostik-tost ar  
lll gerioù o tiskouez an hevelep traoù a zeu da gentañ en holl yezhoù.

lll (A dra sur ez eus disheñvelderioù, aes da gompren, hervez kustumoù  
lll ar pobloù a gomz ar yezhoù-se. Da grediñ eo, da skouer, e tle ar ger  
lll "kañval", loen-samm ar broioù tomm ha sec'h, dont alies-tre en arabeg,  
lll met nebeutoc'h alies e yezh an Eskimoed. Lavaret ez eo bet e GWALARN,  
lll niverenn 81, p.52, ez eus e brezhoneg gerioù boutin-tre, evel "koef",  
lll "krampouezh", hag a zo divoutin a-walc'h ur wech troet e yezhoù all.)


lll Berr-ha-berr, da anaout peseurt gerioù a gaver an aliesañ en hor  
lll yezh, n'eus bet nemet en em harpañ war labourioù graet evit ar yezhoù  
lll estren.

lll 2) Ar skiant :

lll Met piv a oar hag ez eo ar gerioù o tont an aliesañ a zo ivez ar re  
lll dalvoudusañ ?

Kontañ pegen alies e teu ur ger en ur yezh a zo mat da renkañ ar gerioù dre vras. N'eo ket a-walc'h da ziskouez dres talvoudegezh pep ger er yezh-se.	111
Da skouer, sklaer eo e tle anv ur miz bezañ ken talvoudus hag anv ur miz all. Ar roll graet evit ar saozneg a ziskouez daoust da se ez eus anvioù mizioù a reer ganto aliesoc'h eget anvioù mizioù all.	111
A-wechoù, ur ger n'eo ket koulz e renk ha ma tlefe bezañ, peogwir ez eus ur ger all, dezhañ an hevelep ster. E galleg, da skouer, "espérance" a ra gaou ouzh "espoir". E brezhoneg, "goueled" a rafe gaou ouzh "strad".	111
Ret eta lakaat un tammig ar skiant-vat da vont en-dro pa glasker sevel roll ar gerioù talvoudusañ. Kement-se a zo bet graet. Hag amañ c'hoazh n'hon eus graet evit ar brezhoneg nemet hervez skouer ar pezh a oa bet graet evit ar yezhoù all.	111
3) <u>Met n'eo ket echu.</u>	111
Ur wech renket ar gerioù hervez o zalvoudegezh, e ranker gouzout pet kemer. Aet emeur un tammig war-raok. Met n'eo ket bet kavet c'hoazh ar respont d'ar goulenn.	111
Un dra hepken a roio ar respont : ar skiant-prenet. War-bouez ober hag ober gant ar gerioù talvoudusañ da sevel labourioù a bep seurt, e teuer da c'houzout n'eus nemet un 2.000 anezho a zo ret e gwirionez. Ha war an 2.000-se, ez eus an hanter o tont eus an hanter all, en doare ma'z eo a-walc'h anaout ur 1.000 ger bennak da lavarout tost kement tra a c'hell bezañ lavaret, sklaer ha difazi.	111
Eus ar gerioù diniver (rak diniver int e pep yezh) d'ar gerioù boutin ; eus ar gerioù boutin d'ar gerioù talvoudus ; eus ar gerioù talvoudus d'ar gerioù ret ; setu penaos, war-bouez silañ, e kaver roll-gerioù "diazeez ur yezh". Ha setu penaos, goude hir amzer, e voe dastumet danvez al labour embannet evit ar wech kentañ e niverenn Here 1935 GWALARN, "Alc'houez ar Brezhoneg Eeun", stur ha diazeze un araokadenn nevez er stourm evit astennidigezh yezh hor bro.	111
ROPARZ HEMON	111
(tennet diouzh GWALARN, niv.118, Gwengolo 1938)	111
<u>Notenn.</u> - Arabat disoñjal un dra na lavarere ket er pennad-mañ : gerioù "Diazeez ar Brezhoneg" a zo bet dibabet dreist-holl e-mesk ar gerioù komprenet e pep korn eus Breizh-Izel.	111
( <u>Pep gwir miret-strizh</u> )	111
-----	111
C.C.P.P. No.36.242.	111
Le Gérant : Mlle Y.Martin, 21, rue de Dixmude, St.Marc, Brest	111
Ronéotypé par Rincazaux, 1, rue Alain Fournier, Brest.	111





Revue mensuelle-No.28-Avril 1961

Kelaouenn vizeiek-Niv.28-Ebrel 1961.

Abonnement annuel : 7 NF.

Koumanant-bloaz : 7 LN.

CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, St.Marc, BREST.

PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON

111

T A O L E N N

111

111

Ar miz ..... p.49

111

Ar Beilhadegoù ..... p.52

111

Bleuñv en diheol (Alan Heussaff) ..... p.53

111

Ar C'herneveg ..... p.55

111

Amañ hag ahont ..... p.57

111

Stad ar Brezhoneg ..... p.60

111

Kanomp : An ti kozh 'kreiz al lann ..... p.61

111

- : An daboulin vleunieks ..... p.61

111


- : An Nevez-amzer hag ar Goañv ..... p.62

111

DALC'HOMP : Un tamm lien du (Roparz Hemon) ..... p.63

111

111



111

111

111

DRE AN DOUAR

111

SUAFRIKA O VONT DIOUZH KUMUNIEZH BREIZH-VEUR : D'an 8 Meurzh e tigoras

111 e Londrez ur vodadeg eus Kentañ Ministred Kumuniezh Breizh-Veur.

111 Kiprenez ha Sierra-Leone a voe degemeret da izili ar Gumuniezh.

111 An diaesañ kudenn da ziluziañ, avat, oa kudenn Suafrika, a dle

111 bezañ republik d'an 31 Mae, hag a c'houlenne evelato chom ezel ar

111 Gumuniezh. Goude emzivizoù hir, e teuas ar c'heloù bras d'ar 15 : an

111 Dr.Verwoerd, Kentañ Ministr Suafrika, a zisklerias ne c'helle ken e vro

111 chom er Gumuniezh, e sell eus an tamalloù graet d'he folitikerezh

111 "apartheid" gant an izili all. En aner en doa klasket Macmillan kavout

111 ur stumm emglev degemeradus d'an holl.

111

111 DIAZEZLEC'H LISTRI-SPLUJ AMERIKAN E SKOS : D'an 3 Meurzh e tegouezhe en

111 Holy Loch, Bro-Skos, al lestr amerikan "Proteus", karget da bourvezañ

111 al listri-spluj aozet da deurel bannadelloù "Polaris". Dre emglev etre

111 Breizh-Veur hag ar Stadoù-Unanet, e vo Holy Loch troet da ziazezlec'h

111 amerikan. Bez' e vo eneberezh a-berzh tud a-du gant an dizarmañ, na

111 fell ket dezho e ve graet pe implijet armoù nukleel e Breizh-Veur.

111 Dizale e tegouezhas ul lestr-spluj ivez.

111

PEOC'H EN ALJERIA ? : Bez' e voe divizoù etre Habib Bourgiba, Prezidant Tunizia, ha Prezidant Frañs d'ar 27 C'hwevrer, e kastell Rambouillet, evit klask dirouestlañ da vat kudenn Aljeria. D'ar 1-añ Meurzh, Bourgiba a welas e Rabat Ferhat Abbas, rener ar vroadelerien aljeriat, ha roue Maroko. 111

D'ar 15 Meurzh, strollad-ministred Frañs, o vezañ dalc'het kuzul dindan renerezh ar Prezidant, a zisklerias e oa prest o bro da zigeriñ emzivizoù peoc'h gant tud FLN ; pezh a voe degemeret gant ar re-mañ d'ar 17. 111

HARZ-LABOUR E BRO-C'HALL : Harz-labour a voe graet e Bro-C'hall d'ar 14 Meurzh gant ur milion a gargidi, evit goulenn ur govr miziek a 500 lur nevez ar miz da vihanañ, hag adaozadur an doare-paeañ. 111

TORR-MINISTREREZH E BELGIA : Ar vinistred liberal a roas o dilez e Belgia f'ar 17 C'hwevrer, da heul dienglev gant ar vinistred all (katolik) a-zivout kudenn al lezenn-strishadurioù. Gouarnamant ken-gevredad G.Eyskens a oa o ren abaoe daou vloaz. An dilez, avat, a voe nac'het gant ar roue Baldoen, a zivodas ar Parlamant d'an 20, oc'h embann e vije graet votadeg d'ar 26 Meurzh evit envel ur Parlamant nevez. 111

MARV ROUE MAROKO : Roue Maroko, Mihammed V, a varvas e Rabat d'ar 26 C'hwevrer, da heul un oberatadenn, d'an oad a 51 bloaz. Sidi Mohammed Ben Youssef, trede mab Moulay Youssef, a voe dibabet da sultan e 1927, war-lerc'h marv e dad. Da gentañ e seblantas labourat a-du gant ar C'hallaoued. Hogen e 1940 e teuas anat e felle dezhañ gounit an emrenerezh leun evit e vro. Harluet e voe gant ar C'hallaoued e 1953 e Korsika hag e Madagaskar. E 1955, avat, e tistroas. Pevar miz goude e voe tizhet an emrenerezh. E 1957 e kemeras an anv a roue. 111

E vab henañ a zo bet embannet da roue dindan an anv a Hasan II. 111

EMGLEV E BRO-GONGO ? : An Ao.Hammarskjöld a roas da c'houzout e-doug bodadeg Kuzul-Surentez ar Broadoù-Unanet e New York, d'an 20 C'hwevrer, e oa o paouez kaout keloù euzhus eus Bro-Gongo : 6 eus ar renerien a-dull gant Loumoumba a oa bet kaset eus Kerleopold da greisteiz Kasai, hag eno lakaet d'ar marv gant o enebourien. Ar C'huzul a aotreas arme ar Broadoù Unanet e Bro-Gongo da implij an nerzh diouzh ret evit mirout na darzhje brezel-diabarzh, pezh a zisplijas d'ar C'hentañ Ministr Ileo. Soudarded ar Broadoù Unanet a oa difennet dezho mont dre nerzh betek neuze, nemet evit en em zifenn ma vijent taget. 111

E deizioù diwezhañ miz C'hwevrer, e voe komzet eus un "arread" eus dalc'hidi Loumoumba o kerzhout dre ar vro. Kemeret o dije Lulua-bourg hep leuskel un tenn-fuzuilh. An "arread"-se avat en em dennas hep trouz evel ma oa deuet. 111

D'an 28 C'hwevrer e voe sinet englev e Kerelesbed etre Tchombe, Prezidant Katanga, Ileo, Kentañ Ministr gouarnamant Kerleopold, ha Kalonji, Prezidant Kreisteiz Kasai, a-enep dalc'hidi Loumoumba. 111



- 111 D.Hammarskjöld diouzh e du a c'houlennas en deiz-se digant Stadoù  
 111 Afrika kas 5.000 soudard evit kreskiñ nerzhioù ar Broadoù Unanet e  
 111 Bro-Gongo.
- 111 44 den a voe lazhet e Luluabourg d'an 2 Meurzh gant soudarded  
 111 kongoat aet e gouez goude muntr 3 eus o c'henseurtes. D'an 3, e voe  
 111 kann e prozh-mor Banana etre soudarded soudanat eus ar Broadoù Unanet  
 111 ha soudarded kongoat, hag unan eus ar re-mañ lazhet.
- 111 En deiz-se e prometas Bro-Indez kas 3.000 soudard da greskiñ  
 111 nerzhioù ar Broadoù Unanet.
- 111 Krogadoù a voe da c'houde tro-dro porzh-mor Matadi, ma tremen  
 111 drezañ un darn vat eus pourvezioù nerzhioù ar B.U. 135 a Soudaniz a  
 111 rankas dilezel ar porzh d'ar 6 C'hwevrer, goude bezañ taget gant ur  
 111 1.000 bennak a Gongoiz. Bro-Soudan a zivizas war se lemel he soudarded  
 111 diouzh Bro-Gongo.
- 111 Etretant en em vode renerien gongoat e Tananarive, Madagaskar, evit  
 111 klask skoulmañ un emglev-peoc'h etrezo. Divizout a rejont treiñ Bro-  
 111 -Gongo d'ur gevredelezh-Stadoù, gant Kasavoubou da brezidant. Ar rener  
 111 e Kerstanley, avat, Gizenga, unan eus dale'hidi Loumoumba, ne oa ket  
 111 aet da Dananarive.
- 111
- 111 KUDENN RODEZIA : Diemglev a savas e miz C'hwevrer etre Sir Roy Welensky,  
 111 Kentañ Ministr Norzrodezia, ha gouarnamant Breizh-Veur. Ar raktres  
 111 kinniget gant Breizh)veur evit reiñ ur parlamant nevez d'ar vro-se a  
 111 zisplij kement d'ar re wenn ha d'ar re zu.
- 111
- 111 VOTADEG E KAMEROUN : Votadeg a voe e miz C'hwevrer en darn eus Kameroun  
 111 bet gwechall dindan warez Breizh-Veur evit divizout diwar-benn dazont  
 111 ar vro. An hanternoz a c'houlennas bezañ staget ouzh Nigeria, ar  
 111 c'hreisteiz ouzh Republik Kameroun.
- 111
- 111 VOTADEG E KENIA : "Unaniezh Vroadel Afrikat Kenia", renet gant Tom  
 111 Mboya, a reas berzh er votadeg graet e dibenn miz C'hwevrer da envel ur  
 111 parlamant. Evit ar wech kentañ, Afrikiz o devo an niver muiañ a  
 111 vouezhioù. D'ar 1-añ Meurzh, ar gouarnour saoz, Sir Patrick Renison, a  
 111 lavaras ne vije ket roet e frankiz da rener ar Maou-Maou, Jomo  
 111 Kenyatta, a zo toullbac'het abaoe meur a vloaz.
- 111
- 111 EN EC'HONDER
- 111 BANNADELL AR WERELAOUEN "KOLLET" : Ar vannadell bet taolet gant ar  
 111 Rusianed d'an 11 C'hwevrer etrezek ar Werelaouen, a voe "kollet" e  
 111 dibenn ar miz ; da lavarout eo, ne voe mui tapet skinarouezioù diouti.
- 111
- 111 UR GIEZ EN EC'HONDER : Ur giez ha traoù bev all a voe taolet en ec'hon-  
 111 der gant ar Rusianed d'an 9 Meurzh, e-barzh un adplanedenn, a ziskennas  
 111 en-dro d'an Douar. Ar giez a seblante bout yac'h goude he beaj.
- 111
- 111 -----
- 111 EMVOD SKOURR BREIZH AR C'HENDALC'H KELTIEK. N'eus ket bet tu da aozañ  
 111 an emvod a dlee bezañ dalc'het e Karaez e miz Ebrel. Keloù a vo roet  
 111 pa vo aozet un emvod all.







em eus bet troc'hennoù kastilhez-kinkl ruz-roz, hag o deus kendalc'het da zeliacouñ ha da vleuniañ amañ koulz ha pa ne vije c'hoarvezet netra ganto : mignon eo ar vuhez d'ar seurt-se. 111

Un ode a chom da stankañ. Aze e lakain ar veronig, - speciosa Gauntletti, - am eus desavet diwar un droc'henn hag he deus douget dija, en he bloavezh kentañ c'hwec'h pe seizh barr mouk-klouar. Hogen en ul lec'h heoliek e oa. Me n'ouzon dare ha ne vouzho ket pa vo degaset en diheol. Gortoz a rin betek derou Mae evit hen ober. Ar mare eo evit ad-plantañ brougwez o delioù padus. 111

Un devezh, e dibenn miz C'hwevrer, e taolis evezh en ur vrousgwez-enn goloet-holl a vleuñv limestra, dirak un ti, troet ouzh an hanternoz. Ne c'hellis ket mirout a vont da c'houlenn petra e oa : 111

- Un daphne, - a respontas din an den. 111

- Ur frond plijus-tre en deus, evel al lireu. E oan e soñj kaout ar seurt-se. 111

- Me a roy deoc'h un nebeut troc'hennoù, sellit ! 111

Daphne a vez gounezet diwar had, - ha dre vras n'eo ket ar mare da lakaat troc'hennoù koad kalet. Memes tra em eus kemeret an troc'hennoù, kement hag arnodifñ ! O sanket em eus, lod en ur podad douar skañv, traezhak ha taouarc'hek, a virin e disheol an ti, lod all en un takad skeudek el liorz, goloet gant ur sac'hig politen, evit reiñ tro dezho da ober gwrizioù a-rack ma tisec'hfent. N'em eus ket mell goanag. 111

-----  
 SKRIDOÙ NEVEZ  
 -----

PRÉDER, kaier 19, Genver 1961. "DOUAROURIEZH", gant Per Denez ha G.B. Kerverzioù. (Kelaouenn vizek, koumanant-bloaz 36 LN. : CCP.PARIS 16.093-13, Dr.Btienne, Châteaulin. 111

Ul levr evit ar skolioù ! Ha dont a rafe da wir ar mennad hor boa bet kent ar brezel da embann ur rummad levrioù bihan o reiñ d'ar vugale, ha d'ar re all, un alberz eus ar ouiziegezh war veur a dachenn ? 111

Amañ ez eus un daolenn verr eus an douarouriezh, un tammig re verr da'm soñj, skrivet sklaer ha reizh, ha liesskrivet-brav. Daou rebech a rin hepken : 1) daoust pegen skort eo va anaoudegezh eus an douarouriezh, e kredan e vefe bet ret ober un adsell ouzh an dornskrid, savet 15 vloaz 'zo, evit e lakaat da glotañ gant ar c'havadennoù graet abaoe ; 2) mat e vefe bet embann tresadennoù ha kartennoù. 111

Tud all a lavaro ivez marteze e ranker stagañ ouzh seurt skridoù ur roll-gerioù brezhonek-gallek. Me ne gavan ket. Kompren a ran ervat talvoudegezh seurt rolloù-gerioù. Hogen a bouez eo boazañ ar Vretoned da brederiañ e stern o yezh, hep emell ar galleg. 111

Ha vezo meulet PRÉDER evit ar striv-mañ, unan nevez c'hoazh e-mesk e strivoù niverus all. 111

ROPARZ HEMON



A R C' H E R N E V E G

Setu amañ troidigezh ur pennad savet e  
kerneveg hag e saozneg gant hor c'heneiled a  
Gernev-Veur, ha roet ganto d'an dileuridi eus  
ar broioù keltiek e Kendalc'h Aberystwyth warlene.

- 111 Ar c'herneveg a veze komzet gwechall dre-holl e Mervent Breizh-Veur.  
111 Hogen war-dro ar bloaz 900 n'hen kaved mui nemet er vro anvet Kernev-  
111 -Veur hiziv, - da lavarout eo, er c'huzh-heol d'ar stêr Damar. War-dro  
111 ar bloaz 925 e voemp argaset gant ar Saoz Athelstan diouzh Bro-Saoz.  
111 Ar stêr Damar a voe lakaet war e urzh da harzoù etre an div vro, hag  
111 e-giz-se emañ c'hoazh an traoù en hon deizioù.  
111 Dirak galloud ar saozneg e kilas hor yezh-ni tamm-ha-tamm. War-dro  
111 1400 e oa souzet en hanternoz betek ar stêr Gamel, hag er c'hresiteiz  
111 betek pleg-mor Sant-Aoustell. Met en desped da steuziadenn ar yezh e tu  
111 ar sav-heol, an darn vrasañ eus an anvioù-lec'hioù a chomas kernevek eus  
111 ar stêr Damar betek Pen an Wlas (Penn ar Vro).  
111 War-dro 1550 e kilas ar yezh betek en tu kornok eus Truro, ha diwar  
111 neuze ne baouezas ket da goazhañ, ken na voe mui klevet nemet e-tal ar  
111 mor tro-dro Penwyth ha Kerrier.  
111 "Oadvezh Aour" al lennegezh kernevek a zeuas, e gwirionez, goude  
111 d'ar yezh bezañ kilet betek penn ar vro. Neoazh, zoken ar re a c'helle  
111 komz kerneveg a ouie hep mar e oa talvoudusoc'h dezho komz saozneg hag  
111 ankounac'haat yezh o c'havell. Tud an noblañs a zilezas prim ar  
111 c'herneveg, ha tud ar bobl en em lakaas d'ober evelto. Neuze e teuas al  
111 "Levr Pedennoù" e saozneg, ar remziad Tudor galloudek, o klask saoznek-  
111 aat pep tra. Kernevveuriz a yeas mui-ouzh-mui da Vro-Saoz ha d'ar broioù  
111 tramor da heul ar Saozon. Ret e oa atav mont e saozneg da ober aferioù,  
111 pezh a ziskoueze pegen dreist e oa yezh ar Saoz da hini ar C'hernevad,  
111 hervez doare.  
111 A-benn diwezh an 18-vet kantved, e c'heller lavarout e oa marv ar  
111 c'herneveg. Ha marv e oa koulskoude ? Ne oa ket. A-hed an 19-vet kantved  
111 e oa c'hoazh glaou-bev dindan al ludu, hag e dibenn ar c'hantved-se, tud  
111 a zastumas an tammoù glaou-se hag a c'hwezhas kalonek warnezh, ken na  
111 deuas ar yezh, e-kreiz an 20-vet kantved, da vezañ anavezet gwelloc'h  
111 eget da ne vern pe vare abaoe an "Oadvezh Aour".  
111 Hiziv, dister eo hon niver, hogen n'hon eus ket a vezh. Ouzhpenn  
111 500 a dud o deus prenet, koulz pe goulz, ul levr kernevek, pe o deus  
111 kavet dud i en hor yezh. Bez' ez eus 100 marteze a c'hell lenn ha skrivañ  
111 ar yezh e giz pe c'hiz. 40 anezho a zo ampart warnezh, hag e-mesk ar  
111 re-se, 20 a c'hellfe skrivañ hep harp geriadur pe levr-dorn. N'eus ket  
111 muioc'h eget 10 a c'hellfe komz etrezo e kerneveg, ha c'hoazh ne rafent  
111 ket aes-tre.  
111 Bez' ez eus e Kernev-Veur 6 pe 7 klas kerneveg, enno 35 a

studierien marteze, kalz anezho paotred ha merc'hed yaouank, - hag e Londrez ez eus tost 20 o teskiñ ar yezh.

Levrioù a zo bet moulet e kerneveg nevez 'zo ; sonioù a vez kanet ha pezhioù-c'hoari displeget. Ar skoilh bras eo an olargant. Ezhomm a vefe arc'hant dreist-holl evit advoulañ an testennoù kozh a ranker kaout da studiañ ar yezh a-zevri.

Ur skoilh all a zo ; emañ skignet ar re a gar hor yezh, pell an eil re diouzh o hentez. Darn a vev e Bro-Saoz, re all pelloc'h c'hoazh. Ha gwall ziaes eo ouzhpenn beajiñ e Kernev-Veur hep karr-tan.

Hogen GOANAG eo hor ger-stur, pe anez hor bije dilezet ar stourm. Hep gortoz dasorc'hidigezh klok ar c'herneveg er vro, ar re a gar o yezh a rank labourat habask evit ma vo gwelloc'h anavezet ha karet eget kent. Bez' ez eus ur ganaouenn eus Penwyth hag a lavar :

"A, pyth yu henna war dha ben	A, pezh eo se war da benn
Mar varthus ha mar wyn,	Ken marzhus ha ken gwenn,
Ha pyth yu henna dhe'th dywvron	Ha pezh eo se war da vrusk
Ow colowy bryntyn ?	O c'houlaoüñ brintin ?
A, GWAYTYANS splan dhe'm pen yma	A, GOANAG splann 'zo war va fenn,
Ha scos dhe'm dywvron lel,	Ha skoed da'm bruskl leal,
Ha gans ow cledha my a wra	Ha gant va c'hleze e trec'hin
Trygh pan vyf y'n gwel."	Pa vezin en dachenn.

#### KELEIER BUS KERNEV-VEUR :

oooo Hervez ar gelaouenn NEW CORNWALL, niverenn C'hwevrer-Meurzh, ez eus bet digoret e Skolaj ar Micheroù, Falmouth, ur rummad kentelioù kerneveg, ar wech kentañ ma saver hevelep kentelioù dre harp un aozadur ofisiel. Un 20 bennak a studierien o deus lakaet o anv : o oad etre 17 vloaz ha 70 !

oooo Emañ Goursez Kernev-Veur o paouez sevel un arnodenn dam-heñvel ouzh hon "Trec'h". Tri derez a vo, izel, etre, hag uhel.

oooo AN LEF KERNEWK, kelaouenn drimiziek e kerneveg. Koumanant-bloaz 6 s. (pe war-dro 4 LN.) : An Lef Kernewk, 16 Trevu Road, CAMBORNE (Cornwall).

oooo NEW CORNWALL, kelaouenn daouviziek e saozneg diwar-benn Kernev-Veur. Koumanant-bloaz 6 s. (war-dro 4 LN.) : embannet gant Richard & Ann Jenkin, "An Gernyk", Leedstown, HAYLE (Cornwall).

EVIT DESKIÑ BREZHONEG : S K O L D R E L I Z H E R "O B E R"  
renet gant an Dimezell M.Gourlaouen, 30, rue V.Hugo, DOUARNENEZ.





Da skouer, deskiñ a ra dimp e vez ganet, e pep eurvezh, pemp mil pemp kant bugel, endra ma'z a pevar mil seizh kant den gant an Ankou. 111  
 En hevelep pred-amzer e vez euredet mil koublad tud yaouank ; hag e 111  
 torr kant koublad all o dimeziñ. 111

En ur ober un eurvezh bepred, ez ever pemp milion a dasadoù kafe, 111  
 hag e tebrer hanter-kant milion a livradoù avaloù-douar. Lenn a reer 111  
 tri-ugent milion a gelaouennoù ha trizek milion a levrioù, a zastumad- 111  
 ennoù pe a gelc'hgelaouennoù a bep doare. 111

### UL LABOUR DIVENT\*

Ur raktres ramzel a zo bet savet gant gouizieien amerikan ha rusian 111  
 (a-unan evit ur wech) da dommañ strizh-mor Behring ! 111

Ur froud-vor domm, heñvel ouzh ar Gulf Stream, a sav a-hed aodoù 111  
 Kornog Amerika war-du an hanternoz. D'he lakaat da vonet pelloc'h gant 111  
 he hent e vefe savet a-hed an aodoù melloù tommerezed atomek, a ziskornfe 111  
 dour ar strizh-mor. Er stumm-se ne yenafe ket ar froud ken buan, hag e 111  
 chomfe an dour anezhi war-c'horre. Dre se e vefe klouaret-bras ec'hon- 111  
 derioù goloet bremañ gant ar skornegi, koulz en Alaska hag e Siberia, ha 111  
 donet a rafent evel-se da vezañ douarou-annez nevez. 111

### A-BENN AN AMZER DA ZONT\*

Daou ouizieg alaman, ar c'helenner Martin Strell hag an doktor 111  
 Anton Kolojanoff, izili eus Ensavadur-Strilhouriezh organek München, a 111  
 zo deuet a-benn, goude ugent bloavezhiaad labour, da genaozañ an danvezenn 111  
 c'hlas a ro o liv d'ar plant : ar glasvezadur (klorofil). 111

Dre ar gavadenn-se, ez eus spi da zirouestlañ kudenn ar boued en 111  
 amzer da zont, mar bez re vras poblañs er bed, rak sikour a ray oberiañ 111  
 behinnennoù ha bevaennoù diwar an drenkenn c'hlaouek. 111

### AL LEUKEMIEZH E BRO-SUOMI HAG ER BED

Da sevel ur feurdaolenn eus al leukemiezh, daou vezeg finnat o deus 111  
 dishiliet marilhoù ar marvoù etre 1936 ha 1956 e Bro-Suomi a-bezh. 111  
 Hervez o disoc'hoù eo aet e-korf an ugent vloaz-se feur ar c'hleñved da 111  
 dric'hement gant an dud en ooad, da bevarc'hement gant ar vugale ; 111  
 sevel a ra ivez gant rez ar vividigezh ; hag e-touez ar vedisined, emañ 111  
 c'hwec'hkementet gant ar re a ra war-dro ar skinoù X. A-hend-all, gouez 111  
 d'un danevell embannet gant Ofis-Bed ar Yec'hed, emañ war gresk 111  
 kleñvedoù marvus ar gwad en holl vroioù, er c'hentañ penn er Stadoù- 111  
 -Unanet, Sveden, Danmark ha Suafrika. - aA. 111

### AR WREZ E MEKKA

Ar pennañ kudenn a yec'hed a zo e Mekka eo ar wrez. War ar 681 marv 111  
 bet evezhiet e-kerz tri devezh kentañ pirc'hirinded 1960, a oa ouzhpenn 111  
 500.000 a dud ouzh hec'h ober, 405 a zo da damall d'an taol-heol. - aA. 111



111 DIWALL DA GONTAMMAÑ AL LOAR !

111  
 111 Emeur o paouez sevel en Amerika ur poellgor etrevroadel, ar CETEX,  
 111 a daolo evezh na ve kontammet an oabl gant an ergerzherezh sterennel.  
 111 E bal kentañ, skiantel-rik, a zo reiñ tu d'an imbourc'hiñ war orin ar  
 111 vuhez : daoust ma tegemerer bremañ e c'hellas an traoù bev diwanañ war  
 111 an douar diouzh an danvez amvev, n'emañ ket diskaret evit kelou-se  
 111 martezeadur kozh Arrhenius war skignidigezh hadennoù ar vuhez eus ur  
 111 blanedenn d'un all ; e wiriañ avat a ranker ober gant ardivinkoù di-  
 111 vevekaet-krenn. Ur preder all a zo ivez war spered izili ar CETEX ;  
 111 dizarbenn alouberezh an douar gant beveganned nanndouarel, ar pezh a  
 111 c'hellfe bezañ ur gwir walenn, pa soñjer ne vefe ket douariz, loened ha  
 111 tud, disgwallet razo. - aA.

111 SONEREZH A BLIJ D'AR PLANT !

111  
 111 Diouzh arnodennoù graet en Europa hag er Reter-Pellañ, o lakaat un  
 111 uhelgomzer da c'hoari sonerezh e-kreiz ur park, e reer d'ar plant  
 111 kreskiñ buanoc'h. Forzh peseurt sonerezh a zo mat : jaz pe simfonienn  
 111 glasek ; n'int ket figus. Kavet ez eus bet ivez e ra ar sonerezh mil  
 111 vad d'ar chatal. Siwazh, da belec'h ez ay "sioulder ar maeziou" ?

111 SKINWEL E LIV

111  
 111 Emañ ar skinwel e liv o c'hounit tachenn er Stadoù-Unanet. Gwerzhet  
 111 e vez nebeutoc'h a skinwelerezed du-ha-gwenn, ha kalz muioc'h a skin-  
 111 welerezed dre liv. Ar priz, avat, a zo gwall uhel : war-dro 2.500 LN.  
 111 ur skinwelerez dre liv, e-skoaz 500 LN. ur skinwelerez du-ha-gwenn.

111 UR C'HIZ NEVEZ : KILTOU EVIT KELTED !

111  
 111 ar "c'hilt", da lavarout eo ar vrozh verr douget gant Skosiz 'zo,  
 111 a dlefe, hervez tud 'zo, bezañ gwiskamant ar wazed en holl vroioù  
 111 keltiek. Degemeret eo bet ar c'hiz pellik 'zo dija gant dañserien ha  
 111 sonerien-viniou en Iwerzhon. Emañ oc'h en em astenn betek Enez-Vanav ha  
 111 Kembre. Hervez NEW CORNWALL, emañ o kinnig aloubiñ Kernev-Veur ivez :  
 111 war gizelladurioù eus ar Grennamzer er vro-se, e weler paotred o tougen  
 111 un dra bennak heñvel ouzh ur c'hilt, o tiskouez anat e oa ar c'hilt  
 111 gwiskamant broadel Kerneviz ! Ha gounezet e vo Breizh d'he zro ? O  
 111 sellout pizh ouzh delwennoù hon ilizoù hag hor c'halvarioù kozh, e vo  
 111 sur-mat dizoloet ur c'hilt e korn pe gorn.

111 -----  
 111 DA RAKPRENAÑ DIOUZHTU : XXXXXX  
 111 "A N T R I B O U L O M I G K A L O N A O U R"  
 111 romant nevez gant ROPARZ HEMON (200 pajenn) XXXXXX  
 111 9,00 LN. war baper boutin, 18,00 LN. war "Alfa", XXXXXX  
 111 22,00 LN. war "Rives" - Kas an arc'hant diouzhtu da XXXXXX  
 111 a.Huon,132,rue de Verdun,Brest, CCP.RENNES 1629-14. XXXXXX





lll m  
lll mmm mm mmm mmm mmmmm mmm  
lll m m mmm m m mmm m m m mmm  
lll m

AN TI KOZH 'KREIZ AL LANN

(hervez ton Old Folks at Home,  
gant S.C.Foster, 1826-1864)

1.

C

lll	Soñj am eus eus an ti ma veven,	/Fd:Mi'Re'Fd'Mi'/Re-re-si're-./
lll	Pell amzer 'zo,	/la:Fd-Re-/Mi:. - /
lll	Un tiig kozh e tor un dorgenn,	/Fd:Mi'Re'Fd'Mi'/Re-re-si're-./
lll	Lanneier noazh tro-war-dro.	/la-Fd'.Re"Mi-Fd'.Mi"/Re:.. - /
lll	Ha padal, nag a levenez !	/dd-.re'mi-la-/la-.si'la-re-/
lll	Nag a euriou splann !	/re-si-Sol-si-/la:.. - /
lll	Me 'zalc'ho koun a-hed va buhez	/Fd:Mi'Re'Fd'Mi'/Re-re-si-re-^/
lll	Eus an ti kozh 'kreiz al lann.	/la-Fd'.Re"Mi-Fd'.Mi"/Re:.. - /

2.

3.

lll	O, ne oa tamm ebet ur c'hastell;	Ne oa na porched na touribell,
lll	Ne oa ket brav :	Na liorz vras.
lll	Mogerioù krignet gant an avel,	Netra nemet un doenn izel,
lll	Ha duet-holl gant ar glav.	E-mesk geot ha raden glas.
lll	Eus an nor e veze gwelet	Eno n'oa ket a dud gwisket
lll	An oabl bras hepken,	Gant voulouz ha seiz,
lll	War zouar paour ha reier louet,	Aotrounez veur nag itronezed.
lll	Beuzet en ul latar yen.	Bez' e oa maner ar geizh.

4.

lll Eno ne oa na lid na pompad,  
lll Dister an dud,  
lll O poaniañ kalet, o labourat,  
lll Hep klask nag enor na brud.  
lll Ha padal, nag a levenez !  
lll Nag a euriou splann !  
lll Me 'zalc'ho koun a-hed va buhez  
lll Eus an ti kozh war al lann.

AN DABOULIN VLEUNIEK

(Kanaouenn-bobl a Vro-Sina)

C

lll	Amzer 'zo bet, un amzer 'zo bet,	/si-si'la'Fd-la'/si-si'la'Fd- - /
lll	Ma oaeürus ha mat ha kaer ar bed.	/Fd-.la'si-re're'/si'la'Fd'Re'Mi- - /
lll	O na kaer, na mat oa ar bed !	/Re-.Mi'Fd-la-/Fd-Mi'Re'Mi- - /
lll	Kousket a raen en noz 'n ur	/si-si'la'Fd'la'si're'/
lll	gwele flour.	la-Fd-Mi- - /
lll	Hag em boa kalz arc'hant hag aour.	/si-.la'si-re-/mi-re'si'la- - /
lll	O nag a arc'hant em boa,	/si-si'la'Fd-re-/la'si'
lll	nag a aour !	la'Fd'Mi- - /
lll	Me 'zo bremañ hep ti nag aoz.	/Re-.Mi'Fd-la-/Fd-Mi'Re'Mi- - /
lll	Yen eo ar goañv, ha kriz,	/si-si'la'Fd'la'/si'
lll	ha me 'zo kozh.	re'/la-Fd-Mi- - /

m  
m  
mmm mm mmm mmm mmmmm mmm  
mm m m m m m m m m m m  
m m mm m m mmm m m m mmm  
m

## EVIT AR VUGALIGOÙ :

AN NEVEZ-AMZER HAG AR GOAÑV

(war don ar ganaouenn-bobl alaman,  
Horch, was kommt von draussen rein)

- |                                     |                                     |     |
|-------------------------------------|-------------------------------------|-----|
| 1. AN NEVEZ-AMZER :                 | 2/4                                 | 111 |
| - Goañvig kozh, kit en ho hent.     | /Do'Re'Mi'Fa'/Sol'la'Sol-/          | 111 |
| Ho la hi, ho la ho !                | /Fa'Re'si-/Sol'Mi'do-/              | 111 |
| Me 'gav din eo tremen poent.        | /Do'Re'Mi'Fa'/Sol'la'Sol-/          | 111 |
| Ho la hi a ho !                     | /Fa'Re'si're'/do- -/                | 111 |
| Grit ho pakad ha skampit prim,      | /la-la-/do-si'la'/Sol-Mi-/Sol:/     | 111 |
| Ho la hi, ho la ho !                | /Fa-Re-/si:/Sol-Mi-/do:/            | 111 |
| Gant ho riell ha gant ho frim !     | /la-la-/do-si'la'/Sol-Mi-/Sol:/     | 111 |
| Ho la hi a ho !                     | /Fa-Re-/si-re-/do:/do- -/           | 111 |
| 2. AR GOAÑV :                       | 6. AR GOAÑV :                       | 111 |
| - Nevez-amzer, me 'm eus c'hoant(1) | - Nann, ar frouezh a ray o c'hresk. | 111 |
| Chom ganeoc'h, o plac'hig koant !   | Met m'o miro yac'h ha fresk.        | 111 |
| Me 'vo fur, ne rin ket a drouz.     | Morse tra mui ne vezo brein,        | 111 |
| Ho pet truez ouzhin, va dous.       | 'Vel a c'hoarvez pa droan kein.     | 111 |
| 3. AN NEVEZ-AMZER :                 | 7. AN NEVEZ-AMZER :                 | 111 |
| - Hola ! me n'on ket ho tous !      | - Me 'zo tomm ha c'hwi 'zo yen.     | 111 |
| C'hwi 'zo kabac'h, treut ha lous !  | Tavit 'ta, o paour kaezh den !      | 111 |
| Gant an anken ha gant ar riv,       | Chom asambles ne c'hellomp ket.     | 111 |
| 'Varvfe va holl laboused gwiv !     | Ha se 'zo lezenn gozh ar bed.       | 111 |
| 4. AR GOAÑV :                       | 8. AR GOAÑV :                       | 111 |
| - Ho laboused 'varvint ket.         | - Me 'zo yen ha c'hwi 'zo tomm.     | 111 |
| Dezho ne rin droug ebet.            | Met asambles 'c'hellomp chom.       | 111 |
| Met me 'lazho ar c'helien fall,     | Ha dimezet pa vimp hon-daou,        | 111 |
| Hag an holl amprevaned all.         | War zaouhanter e vo an traoù.       | 111 |
| 5. AN NEVEZ-AMZER :                 | 9. AN NEVEZ-AMZER :                 | 111 |
| - Ne vo ket a vleuñv er prad,       | - Kan daouhanter hon eus graet.     | 111 |
| Na zoken a zeil er c'hoad.          | Hag a-walc'h eo, me a gred.         | 111 |
| 'Lec'h ar c'herez e vezo drein.     | Kit e kuit, kozh randoner kozh !    | 111 |
| 'Lec'h ar sivi e vezo mein.         | 'Mañ ho treid dija 'barzh ar foz !  | 111 |
| 10. AR GOAÑV :                      |                                     | 111 |
| - Kanit laouen, plac'hig gae !      |                                     | 111 |
| 'Bado ket atav miz Mae.             |                                     | 111 |
| Pa n'ho po mui na blev na dent,     |                                     | 111 |
| 'Vo ho tro da vont en ho hent !     |                                     | 111 |


(1) War-lerc'h pep gwerzenn, kanañ ho la hi, h.a., evel merket er  
c'hentañ poz.  
PEP GWIR MIRET-STRIZH : Skrid brezhonek ar sonioù-man, savet gant Roparz  
Hemon, ne c'hell bezañ moulet, liesskrivet, lakaet war bladennoù nag  
embannet e doare ebet hep aotre. Evit kaout aotre, skrivañ d'ar gelaouenn  
pe da Roparz Hemon, 1-A, Leeson Park, DUBLIN 6. (Eire)





- Gwelloc'h e vo, Yann, - eme an archer.	111
An den gwisket-fall n'en doa lavaret netra. Chom a rae sioul, o sellout a bep eil ouzh an daou all. An archer a reas tro ar sal.	111
- Me 'gred n'en deus laeret netra, - emezañ o seblantout kaout keuz.	111
- N'en deus ket bet amzer, - eme Santeg.	111
An archer a lennas war ar c'haierig e-kichen ar pellgomzer ar pezh a oa bet skrivet gant Veronika.	111
- Sellit, Yann ! - emezañ. - Ar medisin hag e vatezh a zo bet galvet o-daou !	111
---	111
Ne oa ket hir an hent etre ti ar medisin ha ti an archerien.	111
Un archer kozh a zegemeras an tri.	111
- A, Yann ! - emezañ, oc'h astenn e zorn da Santeg, - me a rank kas deoc'h va marc'h-houarn da aozañ.	111
Yann Santeg a oa anavezet-mat er vourc'h. E vicher oa aozañ kirri-tan, marc'hoù-tan, marc'hoù-houarn. Ur paotr hegarat, atav laouen, atav prest da rentañ servij, ha karet dre se gant an holl.	111
- Met petra eo se ? - eme c'hoazh an archer, o tiskouez "se" gant e viz, da lavarout eo, al laer. Jozeb a gontas an afer e berr gomzoù.	111
- N'on ket aet da laerezh, ha n'em eus laeret netra, - eme an den, o vezañ roet e anv hag e baperoù. - Me zo marc'hadour-red, o c'hounit onest va bara. Edon o klask ur medisin en ur dremen er vourc'h-mañ, rak va gouli a ra poan din.	111
Hag o sevel gar gleiz e vragoù, e tiskouezas ur gouli ruz.	111
- Ya ya, - eme an archer. - Seurt laboused a gav atav digareziou. Ha sur out, Jozeb, n'en deus ket laeret ?	111
- Ma'z eus bet laeret un dra bennak, - eme Jozeb, - e vo kavet e godell Yann.	111
- Heñ ? - eme an archer kozh ha Yann war un dro.	111
Jozeb a dennas eus e c'hodell-eñ un tamm lien du.	111
- Kentañ tra am eus kavet e ti ar medisin, - emezañ, - va lampig war elum em dorn, eo an tamm lien-mañ e-kichen dor ar gegin. Pri gleb a zo warnañ. Pri a oa ivez war al leur etre ar gegin hag ar sal, lakaet gant botoù lous an den-mañ. Botoù an Aotrou Yann Santeg, avat, a oa sec'h, ha n'o doa lezet merk ebet. Amzer en doa bet eta da sec'hañ e votoù gant an tamm lien o vont en ti, pezh a zo souezhus evit un den o redek buan da bakañ ul laer.	111
- Met ..., - eme Yann.	111
- Va lezit da echuiñ. C'hwi, Yann Santeg, a oa en ti a-raok an den-mañ. Ho kwelet em bije, forzh penaos, o vont e-barzh, rak edon tost war e seulioù. Ho kodelloù, Yann, a zo leun. En tu kleiz, ma ne fazian ket, ez eus ur bern alc'houezioù. Unan anezho, hep arvar, a zibrenn an nor a-dreñv. En tu dehou, ma ne fazian ket atav, ez eus arc'hant laeret ganeoc'h eus armel ar medisin, a oa digor. Souezhet e vijen ma n'eo ket ganeoc'h eo bet galvet ar medisin hag e vatezh. Pedit a c'hellomp ar marc'hadour-red da dremen an noz amañ, evit bezañ suroc'h. Ha pedit a c'hellomp an Aotrou Yann da chom ivez.	111
Hag evel ma voe kavet diwezhatoc'h, E-GIZ-SE E OA.	111
Le Gérant : Mlle.Y.Martin, 21, rue de Dixmude, Brest. - C.C.P.P.No.36.242	111
Ronéotypé par Rincazaux, 1, rue Alain Fournier, Brest.	111





Revue mensuelle-No.29-Mai 1961

Kelaouenn vizek-Niv.29-Mae 1961

Abonnement annuel : 7 NF.

Koumanant-bloaz : 7 LN.

CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, St.Marc, BREST.

PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON

111

111

111

T A O L E N N


111	<u>Ar miz</u> .....	p.65
111	<u>Ar Beilhadegoù</u> (Roparz Hemon) .....	p.68
111	<u>Skridoù nevez</u> .....	p.70
111	<u>Al louzoù-kegin</u> , pevare ha diwezhañ pennad (Arzel Even) .....	p.71
111	<u>Stad ar Brezhoneg</u> .....	p.74
111	<u>Kanomp</u> : <u>Pelec'h emañ Maried ?</u> .....	p.77
111	- : <u>Ar c'hreunadourien - Luskellerezh</u> .....	p.78
111	<u>DALC'HOMP</u> : <u>Ur gentel da vamm-gozh</u> (Roparz Hemon) .....	p.79

111

111

111

111



111

111

111

DRE AN DOUAR

111 EMSAVADEG E KUBA : D'ar 15 Ebrel, beure-mat, e voe bombezet teir  
 111 zachenn-nij e Kuba, div e-kichen La Habana hag unan e-kichen Santiago,  
 111 gant kirri-nij, enno enebourien gouarnamant Fidel Castro. Engalvadeg a  
 111 voe embannet diouzhtu gant ar gouarnamant, ha klemm douget a-enep ar  
 111 Stadoù-Unanet, tamallet da vezañ aozet an taol, dirak ar Broadoù Unanet.  
 111 Daou vombezer a zouaras e Florida goude an argad, unan anezho gwall  
 111 dizhet gant boledoù. Da heul ar vombezadeg e voe dilestret hag harz-  
 111 lammet soudarded en enezenn, hag e tarzhas krogadoù, derou ur brezel a  
 111 ginnig en em astenn.

111 EMZIVIZOU ALJERIA : Divizet oa bet digeriñ emzivizoù etre Bro-C'hall ha  
 111 broadelerien Aljeria en Evian d'ar 7 Ebrel. D'an 31 Meurzh, avat,  
 111 renerien FLN a embannas ne c'hellent ket kemer perzh en emzivizoù-se,  
 111 ma klaskje ar C'hallaoued en em glevout ivez gant o c'hevezerien, tud  
 111 MNA. Se a oa goude diskleriadurioù graet en Aljeria gant ar ministr  
 111 gall Joxe.

111 En deiz-se e voe lazhet maer Evian, C.Blanc. Div vombezenn a oa bet  
 111 lakaet da darzhañ dirak e di, war a greder gant Gallaoued eus an Dehou  
 111 Pellañ. Gwalldaolioù niverus a voe e Bro-C'hall hag en Aljeria gant

Gallaoued eus an Tu Dehou ha broadelerien aljeriat. 111

VOTADEG E BELGIA : Votadeg a voe graet e Belgia d'ar 26 Meurzh da envel 111  
ur Parlamant nevez. 6 milion a dud a rankas votiñ (dindan boan a gastiz 111  
ma ne reont). Setu amañ an disoc'h : 111

	<u>Kambr ar Gannaded</u>	<u>Sened</u>	
Kristenien Sokial	96 kador (-8)	47 kador (-6)	111
Sokialourien	84 (hep kemm)	45 (+5)	111
Liberaled	20 (-1)	11 (-1)	111
Kostezenn Flandrezat	5 (+4)	2 (+2)	111
Komunourien	5 (+3)	1 (hep kemm)	111
Dizalc'h	2 (+2)	0 (hep kemm)	111

Koll eta evit kostezennoù ar gouarnamant kozh, Kristenien Sokial 111  
ha Liberaled. Gounid evit kostezennoù ar Pal Pellañ. Ar C'hentañ 111  
Ministr Eyskens a roas e zilez d'ar 27 Meurzh. Theo Lefèvre, prezidant 111  
ar Gostezenn Gristen Sokial, a voe karget d'ar 6 Ebrel da furmiñ ar 111  
ministrerezh nevez. 111

E BRO-GONGO : Ur bagad soudarded kongoat ha Maleziz eus ar Broadoù 111  
Unanet a voe kaset e dibenn miz Meurzh da enebiñ ouzh sponterien, izili 111  
ur ranncredenn anvet Kiluawa. Debrerien-dud int, a ra sorserezh iskis. 111  
Tammoù kroc'hen loupard a zougont war o fennoù. Touet o deus lazhañ an 111  
holl dud wenn. 111

D'ar 4 Ebrel e voe taget aerborzh Kerelesbed gant un engroez 111  
Afrikiz armet gant kontilli hag akebutoù, da heul ur brezegenn graet 111  
gant Tchombe, Prezidant Katanga, a-enep ar Broadoù Unanet. Ar peoc'h a 111  
graet buan. 111

Emglev, a lavarer, a voe skoulmet e kreiz ar miz etre Prezidant 111  
gouarnamant Kerleopold hag ar Broadoù Unanet. 111

TRUBUILHOU ANGOLA : Kalz tud wenn a vije bet lazhet en hanternoz Angola 111  
gant sponterien afrikat. Hervez Portugaliz, e teue an darn vuiañ eus 111  
ar re-mañ eus Bro-Gongo. An dizurzhioù hag al lazhadegoù o deus ken- 111  
dalc'het hep ehan e miz Ebrel. D'an 13, Ministr an Emzifenn e Lisbon a 111  
voe kaset kuit gant Salazar, a gemeras e garg e-unan. Soudarded niverus 111  
a zo bet kaset eus Portugal da Angola evit klask mougañ emsav ar 111  
vorianed. 111

EMRENEREZH EVIT TANGANIKA : MacLeod, Sekretour an Trevadennoù e gouarn- 111  
amant Breizh-Veur, a zisklerias e Dar-es-Salaam, Tanganika, e vije roet 111  
d'ar vro hec'h emrenerezh leun d'an 28 Kerzu hevlene. Chom a ray, sur- 111  
-mat, ezel eus ar Gumuniezh Vreizhveurek. Tanganika, darn eus un 111  
drevadenn alaman gwechall, a voe lakaet dindan warez Breizh-Veur goude 111  
brezel 1914. 111

MORDREIZHER D'AR STRAD : Ar mordreizher-karg saoz DARA, a 5030 tonellad, 111  
a grogas an tan ennañ e pleg-mor Persia d'an 8 Ebrel. Ouzhpenn 600 den 111  
a oa e bourzh, an darn vuiañ anezho Indeziz, Pakistaniz hag Arabed. 111



111 212, a greder, a gollas o buhez.

111

111 PROSEZ EICHMANN : D'an 11 Ebrel e tigoras e Jeruzalem prosez an Alaman  
111 Adolf Eichmann, bet skrapet en Arc'hantina gant Yuzevien ha kaset da  
111 Israel. Dezhañ e tamaller lazhadeg ar Yuzevien gant an Alamaned e-pad  
111 ar brezel diwezhañ.

111

111 GWALLSKOUER EN ISRAEL : Unan eus brudetañ tud Israel, al letanant-  
111 -koronal Baer, bremañ war e leve, a voe harzet d'ar 16 Ebrel e Tel-Aviv.  
111 Spiet en dije e-pad meur a vloaz evit ur Stad estren (komunour, a  
111 lavarer).

111

111 KUDENN AR YEZHOU E SELAN : Trouz a sav en Enez-Selan adarre. Ar gouarn-  
111 amant en deus divizet lakaat ar selaneg da yezh-Stad nemeti. Tamiled an  
111 hanternoz a fell dezho ma ve roet gwirioù d'o yezh, an tamileg. Stad-  
111 -diwall a voe embannet gant ar gouarnamant d'an 18 Ebrel, da enebañ  
111 ouzh ur stourm-disentidigezh deraouet gant an Damiled.

111

111 KUDENN LAOS : Endra glaske gouarnamant ar Stadoù-Unanet aozañ kudenn  
111 Laos dre emzivizoù etre ar galloudoù meur, e kase listri-brezel ha  
111 kirri-nij da c'hevred Azia, prest da virout start. na vije aloubet  
111 traonienn ar stêr v-Mekong gant ar gomunourien.

111

111 D'ar 26 Meurzh, Macmillan, e beaj en Antilhez, a voe pedet gant  
111 Kennedy da zont prim d'e welout e Key West, Florida. war un dro e voe  
111 dalc'het e Bangkok; Siam, bodadeg Aozadur Emglev Gevred Azia.

111

111 Daoust d'ar brudoù a vrezel, e seblant Rusia prest d'en em glevout  
111 gant Breizh-Veur hag ar Stadoù-Unanet a-zivout Laos.

111

EN EC'HONDER

111

111

111 AN DEN KENTAÑ EN EC'HONDER : D'an 12 Ebrel 1961 e voe graet gant un den  
111 ar gentañ beaj en ec'honder. Ar Major Youri Gagarin, 27 vloaz, eus an  
111 arme rusian, a reas ur wech tro an Douar, ur 150 Km. bennak diouzh ar  
111 gorre, en un eur hag 48 cilenn. Edo en un oabllestr 4 zonell 3/4 anvet  
111 VOSTOK (Reter). N'en deus ket bet, emezañ, da c'houzañv diouzh an  
111 dibouezder ; er c'hontrol en em gave aesoc'h, pa na sante mui pouez e  
111 gorf nag e izili. Gouest oa da zebriñ, da evañ, koulz ha da skrivañ ha  
111 da labourat. Dindanañ e wele splann an Douar : aodoù, stêrioù, kêrioù,  
111 h.a. An oabl a oa du, steredennek. Heol ha stered a oa kalz skedusoc'h.  
111 An Douar, o tiskouez anat e stumm boullheñvel, a oa etrezañ hag an  
111 oabl ur vevenn voan liv glas. Lidoù bras a voe graet e Moskov en enor  
111 d'an astraer kentañ.

111

111 ooo

111

111 AR BEILHADEGOU : KELETER DIWEZHAÑ  
111 En tu all d'ar Beilhadegoù meneget amañ p.68, e ranker lakaat :

111

Servel 17 Meurzh.

111

Flouared 22 Meurzh.











A L LOUZOU - KEGIN

gant ARZEL EVEN

(pevare pennad)

Kerentiad an Uvelenn

(Compositae)

Artemisia dracunculus. Tragon. Estragon. 3. Rusia, Siberia ha Norzamerika (gounezet en Europa abaoe ar Grennamzer). Ret eo plantañ an Tragon, rak en hor broioù ne vleugn ket, pe ma ra ez eo difrouezh. Ul lec'h heoliek a blij dezhañ. Hã dezhañ bezañ genidik eus broioù yen-skorn, e c'hell mervel er goañv en hor bro-ni, rak n'eo ket boas ouzh ar glebor hag ar glav. Hogen ma vez miret en ur stern-gwer ne goll ket e zelioù e-pad ar goañv, pezh a zo talvoudus, rak an Tragon disec'het n'eo mat da netra. Anavezet e vez madik a-walc'h e Breizh, daoust n'eo ket gounezet kement eno hag en Hanternoz ha Reter Bro-C'hall ha broioù Kreiz ha Reter Europa. Implijet e vez dreist-holl evit reiñ blaz d'ar gwinegr ha d'ar sezo. An dourenn-strilhañ diwarnañ a vez implijet er porfumerezh.

(An Tragon gounezet en hor broioù a zo an eilouenn anvet "gall" pe "alaman"; bez' ez eus un eilouenn "rusian" strishoc'h he delioù; aesoc'h eo da ziorren, met n'eo ket kenkoulz he blaz. Diaes eo da gavout, a-hend-all).

Artemisia absinthium. Uvelenn-c'hwery. Absinthe. 3. Reter ha Gevred Europa (gounezet a-viskoazh). Hadet e c'hell bezañ kenkoulz ha plantet, ha gwell eo ganti bezañ un tammig en disheol. Anavezet-mat eo c'hwez ha blaz an Uvelenn-c'hwery, - ken c'hwery m'eo bet a-hed ar wech arouez ar glac'har (hervez ur vojenn, e kellidas war roudoù ar sarpant kaset kuit eus Baradoz an Douar). Evel kalz plant c'hwery, avat, ez eo nerzhekaus, hogen dañjerus e c'hell bezañ, - ken ez eo bet difennet e kalz broioù ober ha gwerzhañ al likur "absinthe" ken brudet gwechall, hag a veze evet kalz re dioutañ. Tud 'zo avat a laka c'hoazh delioù Uvelenn-c'hwery da c'hlec'hiañ er gwin d'ober un evaj nerzhekaus. Ur perzh mat all a zo d'an Uvelenn-c'hwery : lazhañ a ra al lenkern.

Artemisia abrotonum. Avron. Aurone. 3. Broioù kreizdouarek. Ar blantenn gaer-se, nebeut anavezet bremañ, a rank bezañ plantet evel an Tragon, hag evit an hevelep abegoù. Ret eo he diskoultrañ didruez en nevez-amzer. He c'hwez a denn da hini ar C'hramamailh hag hini ar Begar war un dro. Prizet e veze kalz gwechall evel louzoù da lakaat ar blev hag ar barv da greskiñ. Arvarus-kenañ eo ar perzh-mat-se, hogen mat eo bepred an Avron d'ober dour-louzoù mat d'ar stomok, hag ivez da lakaat el lienaj e-giz al lavend; a-wechoù zoken e vez lakaet lienaj da

sec'hañ war ur bod Avron da reiñ dezhañ c'hwez-vat.	111
<u>Tanacetum vulgare</u> . Arwad. Tanaisie. 3. Europa a-bezh. Ar blantenn-	111
-se a gresk gouez war lez an hentoù hag en-dro d'an tiez, daoust n'eo	111
ket stank-tre e Breizh. Gounezet e vez ivez, - plantet peurliesañ,	111
daoust ma teu mat-tre ivez diwar had. Kreskiñ a ra fonnus ne vern pe-	111
lec'h, betek aloubiñ al liorz. E-giz an Uvelenn ha kalz plant eus ar	111
c'herentiad-se, ez eo frondus ha c'hwerv, nerzhekaus ha mat a-enep al	111
lenkern. Anavezet em eus e Roazon ur vaouez kozh hag a rae likur gant	111
delioù ha bleunioù Arwad o trempañ e-pad pemzektez en odivi sukret. E	111
Bro-Saoz gwechall e veze debret "tansy pudding", - un doare "soufflé"	111
graet gant Arwad, - da vare Pask, moarvat e koun "louzeier c'hwerv" an	111
Hebreed, - ha feiz, c'hwerv a-walc'h eo !	111
<u>Calendula officinalis</u> . Rozinil. Souci. 1. (a-wechoù 2). Kreisteiz	111
Europa. Anavezet-mat eo ar vleunienn-se, a gresk kalz re aes e pep	111
liorz (ul lastez eus ar gwashañ eo e gwirionez en he bro c'henidik) ;	111
hogen rouez eo bremañ an dud a implij bleunioù ar Rozinil er saladennoù	111
hag er c'heusteukennoù, da reiñ blaz ha liv war un dro, evel ma oa ar	111
boaz gwechall. Materiet e vezent ivez. Bremañ ez eo talvoudus c'hoazh	111
alkooladur Rozinil en apotikerezh evel louzoù dic'houlis.	111
<u>Anthemis nobilis</u> . Maron. Camomille romaine. 3. Kornog Europa.	111
<u>Matricaria chamomilla</u> . Kramamailh, Louzaouenn ar mammoù. Camomille	111
allemande. 1. Europa a-bezh. <u>Pyrethrum parthenium</u> . Kramamailh bras (?).	111
Grande camomille. 3. Kaokaz (gounezet a bell 'zo ha kavet damouez e	111
Breizh, nepell diouzh an tiez). Perzhioù heñvel a zo d'an teir	111
gouennad-se (ar bleunioù eo a implijer), hogen gwelloc'h blaz a zo	111
gant an hini gentañ. Ha daoust ma kreder peurliesañ, ur fazi eo evañ	111
dour-louzoù tomm Kramamailh war-lerc'h ar predoù evit "kas ar boued	111
d'an traoñ" ; ul louzoù digor-kalon eo e gwirionez, hag a rank bezañ	111
kemeret yen etre ar predoù. Dour-louzoù kreñvoc'h (ul loaiad-soubenn	111
evit 1 dekilitr dour berv, lezel da soubañ un eurvezh, silañ en ur	111
waskañ ar bleunioù) a zo mat a-enep an droug-penn hag an droug-	111
-nervennoù, hogen blaz spontus a zo gantañ ! Ar Maron a veze implijet	111
kalzik gwechall d'ober leton c'hwez-vat (da c'hoari kilhoù dreist-	111
-holl).	111
	111
	111
<u>Kerentiadoù all</u>	111
	111
<u>Laurus nobilis</u> . Lore. Laurier. 4. Broioù kreizdouarek. Ker. <u>Laura-</u>	111
<u>ceae</u> . Anavezet-mat e Breizh, rak rividik eo, hogen ne c'houlenn ket	111
kalz tommder en hañv, ha dre-se e tere outañ temz-aer hor bro. N'eo	111
mui bremañ nemet ul louzoù-kegin (nemet da Sul ar Bleunioù e ve),	111
hogen gwechall e veze kehelet evel arouez an awen varzhoniell hag hini	111
an trec'h, - er brezel, er c'hoarioù pe ar c'henstrivadegoù lennegel.	111
(Un toullad bodoù all e reer anezho "laurier" e galleg : Laurier-	111
-cerise, Laurier-tin, Laurier-rose, h.a. ; n'o deus mann da welout	111



lll gant al Lore gwirion (anvet a-wechoù "Laurier-sauce" pe "Laurier d'Apol-  
lll lon"). Delioù al "Laurier-cerise" a vez graet ganto a-wechoù da reiñ  
lll blaz an alamandez c'hwerv d'al laezhaj, hogen dañjerus eo implijout re  
lll anezho.

lll Allium schoenoprasum. Kraksivolez. Ciboulette, Fines herbes. 3.  
lll Menezioù Europa. Ker.al Lili (Liliaceae). Anavezet-mat gant an holl.  
lll (Daoust hag ur blantenn eus ar menezioù, e vez kavet gouez amañ hag  
lll ahont er c'hompezennoù, da skouer e Saint-Thurial e-kichen Roazon).

lll Borrigo officinalis. Kaol-garv. Bourrache. 1. Europa a-bezh.  
lll Ker.Borraginaceae. Kavet e vez ar blantenn-se o kreskiñ war an atredoù  
lll hag en-dro d'an tiez (e-lec'h ma'z eus hili-moger en douar) ; aes eo da  
lll anavezout diouzh he delioù goloet a vlevennoù reut ha lemm hag he  
lll bleunioù heñvel ouzh steredennoù glas-glizin. El liorzhoù e vez tuet da  
lll gemer muioc'h a lec'h eget ma véfe dereat. An delioù a zo ganto c'hwez  
lll ar C'hokombrez fresk, hag abalamour da se e vezent gwechall en evajoù  
lll evit an hañv. E broioù 'zo e vezont debret evel Pinochez (an delioù  
lll yaouank hepken, a-raok dezho bezañ re c'harv). E Breizh hiziv n'implijer  
lll mui nemet ar bleunioù (pe gentoc'h ar c'hurunennoù, tennet diwarno ar  
lll c'halir blevek) ; fresk pe disec'het, e roont un dour-louzoù ralvoudus-  
lll -kenañ er c'hleñvedoù ma vez ret d'ar c'hlañvour c'hweziñ ar muiañ ar  
lll gwellañ.

lll Ruta graveolens. Ruz. Rue. 3. Broioù kreizdouarek. Ker.Rutaceae (1).  
lll Aes eo da hadañ kenkoulz ha da blantañ. Gounezet gwechall e pep lec'h,  
lll ez eo bremañ peuzankounac'haet. Iskis-meurbet eo e c'hwez ; plijout a ra  
lll da dud 'zo, hag heugañ tud all. Daoust d'ar c'hwez-se, daoust dezhañ  
lll bezañ un tamm dañjerus, e oa ar Ruz un temz-boued prizet kalz en Hen-  
lll amzer ; er Grennamzer e veze sellet outañ evel ul louzoù da ziarbenn ar  
lll vosenn, - ar pezh a c'hell bezañ gwir en un doare, rak pellaat a ra ar  
lll c'helien, ar c'hwen hag amprevaned all (hag an naered, war a lavarar).

lll Acorus calamus. Korz c'hwez-vaat. Acore, Roseau aromatique. 3.  
lll Ker.an Troad-leue (Araceae). Ar blantenn-se a zo Kornog Azia hag Indez  
lll he broioù genidik, hogen "broadet" eo abaoe pell e kalz lec'hioù en  
lll Europa, da skouer er pardoù geuniek a-hed ar Wilun, e-lec'h m'eo stank  
lll a-walc'h. He delioù a denn da re an Elestr gouez, hogen melenoc'h eo o  
lll liv, hag ar blantenn a-bezh a zo ganti ur frond hep e bar. Ne ro ket a  
lll hadoù en Europa, hogen un tamm eus ar wrizienn (e gwirionez ur gorzenn  
lll dindan-douar) a gresk mat en ul liorz, gant ma vo gleb a-walc'h an  
lll douar (pe war vord ur feunteun pe ur wazhig-dour, ma'z eus unan el  
lll liorz). Ar "wrizienn"-se eo al lodenn a implijer da reiñ blaz da  
lll evajoù 'zo (evel gwin-ardant brudet Danzig ; e Bro-Bologn e lakaer  
lll alies un delienn Acorus e pep boutailhad vodka), da vezañ materiet e-giz  
lll an Talbod, hag ivez da louzoù treizhus ha nerzhekaus. Ur blantenn gaer

lll -----  
lll (1) Er c'herentiad-se emañ ar gwez-Orañjez, Sitroñs, h.a.





111 daoust m'eo gwell e Gwaien evit tra pe dra, met evit an ereadurezh eo  
111 mat ; ar gerioù siwazh ! Unan eus ar mitizhion amañ a lavare din (eus  
111 Sant-Pabu eo) : "Amañ eo mat ar brezhoneg ; ne velañjer ket" ! ...

111 "Evit stad ar brezhoneg. Ne ouzon ket ha talvezout a ra ar boan ober  
111 un enklask bras diazezet war brezeg ha kateliz. Nemet e Treger ne gav  
111 ket din e komzer brezhoneg ouzh ar vugale e neblec'h e Breizh. Ar re-mañ  
111 a dap ar yezh a-c'houdevezh ; gouest int da gomz anazhi. Hogen ar vugale  
111 ne gomzont mui kenetrezo, setu va merzad e Gwened koulz hag amañ. Gwall  
111 ziasur eo dazont ar rannyezhoù brezhonek. E-kichen Gwened eo bet kreñv  
111 ar yezh betek 1925 (8 Km. diouzh Kistreberzh e teske ar vugale ar  
111 brezhoneg e porzh-c'hoari ar skol e 1910-14). Amañ ez eus bet ur giladenn  
111 vras etre 1948 ha 1950. Un tu aes-tre a vefe da c'houzout hag-eñ e vez  
111 kelennet ar c'hateliz e brezhoneg e KLT : niver al levrioù katekiz  
111 brezhoneg gwerzhet etre 1950 ha 1960. Gwall zu e vefe disoc'h an en-  
111 klask. Moarvat ne vez ket mui graet katekiz brezhonek e neblec'h koulz  
111 lavaret, pe mar greer n'eo mui nemet un dreistvevañs.

111 "Klask saveteiñ ar yezh poblek en degouezhennoù bremañ a zo ur  
111 c'holl amzer, ha gwell hon eus d'ober. Zoken mar bez savet un tamm Stad  
111 vreizhat a-benn 10, 15 pe 20 vloaz, e vo ret ober e-giz pa ne vije mui  
111 brezhoneg ebet gant ar vugale o tont d'ar skol...

111 "Evit ar peurrest, gwelet e vo pezh a vo d'ober gant ar skolioù-  
111 -mamm (e kêr lakaomp) ha doareoù-kelenn nevez evit addeskiñ o yezh d'ar  
111 Vretoned. Gwell e vefe kaout evel just un tamm brezhoneg bennak, ma'z  
111 eus tu, hogen ne gredan ket eo ret-holl an dra-se da adsav ar yezh. Ar  
111 pezh a vefe a bouez er mare-mañ e vefe enskrivañ war bladennoù pe  
111 vandennoù testenioù komzet eus ar yezh evel ma komzed anezhi e 1960-  
111 -1970 (gwall zivalav meur a wech)...

111 "Me va-unan am eus graet un doare enklask etre 1950 ha 1955 diwar-  
111 -benn ar yezh e Ruiz hag e Reter Gwened, e-lec'h emañ war he zremenvan  
111 en un doare anatoc'h eget e lec'h all.

111 "A-hend-all, diwezhatoc'h e klaskin kas pelloc'h an enklask-se. Ar  
111 gwellañ e vefe kaout ur strolladig-tud a rafe un enklask diwar-benn  
111 stad ar yezh hag a enskrivfe testennoù ar rannyezhoù a vremañ. Ne vo ket  
111 graet an dra-se gant ar C'hallaoued, ha poent e vefe stagañ gant al  
111 labour a-barzh ma vo re ziwezhat."

111 ---  
111 Ul lizher all, eus Bro-Dreger, a ro respont d'an enklask evit  
111 Pleuveur-Bodou (a vo embannet war niverenn a zeu ABK).

111 Hervez al lizher-se, e Bro-Dreger a-bezh, ne vez mui implijet al  
111 levr katekiz brezhonek nemet e Plougraz. Marv e vije ar c'hatekiz brezh-  
111 onek e Treger abaoe 1946-47.

111 Stad ar yezh, a lavar hor c'henskriver, a zo fall-kenañ. "Kement ha  
111 ken bihan," emezañ, "ma c'heller kemerout da wir ar pezh a skrivit war  
111 niverenn Ebrel 61 ABK a-zivout ar C'herneveg (= Kerneveg Breizh-Veur).  
111 Nemet ez eo bev atav ar yezh ha komzet gant an dud, tra ma'z eo marv ar  
111 C'herneveg."

111 Ar veleien a zo bet lezet d'ober pep hini diouzh e benn, hag e-giz-  
111 -se e vez dilezet ar brezhoneg mui-ouzh-mui e prezegerezh ha katekiz.

111 ---

Pezh a vir ouzh hol lennerien na gasont ket buanoc'h o respont  
 d'hon enklask eo (ouzhpenn leziregezh ar Vretoned da skrivañ lizhiri)  
 an aon da reiñ keloù fall, a gredan. Hogen ret eo gouzout ar wirionez,  
 ret eo embann ar wirionez, pegen displijus bennak e ve. Ret eo dimp  
 heuliañ pizh an darvoudoù, bourrus pe divourrus. Ne c'hounezer an  
 trec'h e stourm ebet hep ur rouedad kelaouerien, gouzaouerien, skleri-  
 Jennerien, ha zoken spierien, skignet dre bep lec'h.- ROPARZ HEMON.

-----  
AR C'HORAIZ E SANT-MARK

Hevlene adarre e voe graet ar c'horaiz e brezhoneg e Sant-Mark.  
 Tri ofis a zo bet : d'ar 1-añ Meurzh (war-dro 150 den), d'an 8 (war-dro  
 200 den), ha d'ar 15 (ouzhpenn 400 den). Ar prezegenner oa person ar  
 Piler Ruz, Brest. Kantikoù a voe kanet ha pennadoù eus ar Skritur Sakr  
 lennet (troidigezh nevez an Aviel a zo bet implijet). An Aotrou'n eskob  
 Fave a gomzas d'ar 15. Anat eo e tride gant ar joa. Prometet en deus  
 dont bep bloaz hiviziken, mar gell.

Pezh a ra ur strolladig-tud pennek hag a youl vat e Brest a c'hell  
 sur-mat bezañ graet e kêrioù all. Petra c'hortoz Bretoned emskiantek  
 pep kêr da heuliañ skouer Vrestiz ?

-----  
BRESTIZ WAR AR STUDI

Echu debriñ koan, chom a raemp da varbilhat en-dro d'an daol.  
 - Va digarezit, - eme vestrez an ti, ur goantenn yaouank ha laouen,  
 - met, ret 'vo din distaliata : Skol Vrezhonek a zo fenozh.

Ha d'an daou vihan blev-acour, kroget da c'hoari hep dale :

- Ha c'hwi, Gaela hag Even, deuit d'ho kwele !

Ar mab henañ, Ronan, 9 bloaz, a oa aet dija en ur c'horn da beur-  
 studiañ da vat ar gentel ; poent oa !

Abaoe miz Here eo evel-se bep meurzh. Tud yaouank, dimezet, o deus  
 divizet sevel ur skol evito ; ha, dre chañs, kavet o deus ur c'hellenner  
 dispar : an Aotrou Boucher.

Hiziv, kentel 8 e levr R.H., ha studiet e vo ar c'hemmadurioù  
 goude an niveroù. Morse n'em bije kredet e c'helle bezañ dudius seurt  
 studi. Ma ! bez' e oa : an Aotrou Boucher a dle bezañ achantour ! Met  
 ret eo klevout ar skouerioù hag an istorioù en em sil etre ar c'hemm-  
 adurioù-se.

Klevout a reer trouz en trepas. Ur penn e toull an nor :

- Ne c'hellomp dont : ar vugale o deus ar ruzell ...

A unvouezh an holl :

- Hep ! Chom er-maez gant da vikroboù, ha yec'hed mat !

Pep hini a lenn d'e dro 'vel just ; ha, evit bezañ reizh, ar maout  
 a ya gant an daou yaouank : Ronan vihan hag an Itronig Chapalain.

Ne c'hellan lavarout pegen plijus e oa santout ar fervder-se en  
 aergelc'h laouen an ti sioul.

D'ar c'heloù diwezhañ, kresket eo c'hoazh an dud er skol, ha div  
 blac'h yaouank a zo bet degemeret ivez. Chañs o deus, rak eurvezhioù  
 c'hwek a zo dirazo.


















Revue mensuelle-No.30-Juin 1961

Kelaouenn vizek-Niv.30-Mezheven 1961

Abonnement annuel : 7 NF.

Koumanant-bloaz : 7 LN.

CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, St.Marc, BREST.

PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON

111

111

111

T A O L E N N

111 Ar miz ..... p.81

111 Amañ hag ahont ..... p.84

111 Ar Werelaouen ..... p.85

111 Iwerzhoneg er Mererezh (Alan Heussaff) ..... p.86

111 Stad ar Brezhoneg ..... p.87

111 Bodadeg KUZUL AR BREZHONEG ..... p.89

111 Diskar Kornog Europa (Alan Heussaff) ..... p.90

111 Skridoù nevez (Roparz Hemon) ..... p.91

111 Kanomp : Ar pabor ..... p.93

111 - : Kan an hentoù - O tregas fall ! ..... p.94

111 DALC'HOMP : An Ankou madelezhus (hervez G.Morvan) .... p.95

111 - : An den a gave mat formaj ( - ) ..... p.96

111

111

A L I

111 An niverenn-mañ eo an niverenn diwezhañ a vo kaset d'ar re n'o  
111 deus ket c'hoazh paeet o skod pe o c'houmanant evit 1961.

111

111

111


111

111

111

111

111



DRE AN DOUAR

111 TAOL-DISPAC'H EN ALJERIA : D'an 22 Ebrel, a-raok gouloù-deiz, e voe  
111 kemeret kêr Aljer gant harzlammerien dindan urzhioù pevar jeneral :  
111 Challe, Zeller, Jouhaud ha Salan. Ar jeneral e penn arme Aljeria,  
111 Gambiez, Dileuriad Meur gouarnamant Bro-C'hall, Morin, ha Ministr an  
111 Dezougen, Buron, a voe prizoniet.  
111 An emsaverien, tud an Tu Dehou Pellañ, a felle dezho enebañ ouzh  
111 politikerezh gouarnamant Bro-C'hall : ober ar peoc'h gant ar vroadel-  
111 erien aljeriat. Bagadoù eus an arme c'hall en em unanas ganto, hag  
111 a-benn nemeur e seblantent bezañ mistri war un darn vras eus ar vro.  
111 E-keit-se, e Pariz e voe embannet stad-difrae. D'an 23 da noz,

en ur skinbrezegenn, e tisklerias De Gaulle e lakae da dalvezout pennad 111  
16 ar C'henreizhadur, a ro galloud leun da Brezidant ar Republik pa vez 111  
riskl bras evit ar vro. 111

D'ar 24 e voe lakaet kaeladur war Aljeria gant ar gouarnamant gall. 111  
Difennet e voe kas listri da Aljeria, hag harzet pep darempred moneizel 111  
ha bankel etre an div vro. Adarmeidi a voe engalvet, dreist-holl 111  
archerien. Ar jeneraled emsavet hag un nebeut koronaled a voe torret 111  
diouzh o c'harg, ha re all e Bro-C'hall lakaet en arestoù. En deiz-se 111  
ivez, da ziskouez e oa pobl Bro-C'hall a-enep emzispac'herien Aljeria, 111  
e voe graet harz-labour hollek etre 17 ha 18 eur er vro a-bezh. 111

D'ar 25 e kouezhas an emsavadeg ken trumm ha ma oa deraouet. Goude 111  
klask kemer diazezlec'h Mers-el-Kebir, e voe diarbennet an emsaverien, 111  
ha da heul e kuitajont kêr Oran. En noz etre ar 25 hag ar 26 e rankjont 111  
dilezel Aljer, bet adkemeret gant bagadoù archerien-red kaset gant 111  
gouarnamant Pariz. 111

Rejimant harzlammerien al Legion Estren, en doa kemeret perzh da 111  
gentañ e kemeridigezh Aljer, a lakaas e gampe Zeralda da darzhañ a-raok 111  
kuitaat. 111

Unan eus renerien an emzispac'h, Challe, en em zaskoras hag a voe 111  
toulbac'het e Pariz, da vezañ barnet gant ul lez-varn ispisial. Zeller 111  
en em zaskoras un devezhioù bennak da c'houde. Kalz tud, armeidi ha 111  
nannarmeidi, a voe harzet, en Aljeria koulz hag e Bro-C'hall. 111

D'an 20 Mae e tlee digeriañ an emzivizoù-peoc'h etre ar gouarna- 111  
mant gall hag ar vroadelerien aljeriat en Evian, war lenn Jenev. 111

EMSAVADEG KUBA : An emsavadeg deraouet d'ar 15 Ebrel gant harp ar 111  
Stadoù-Unanet a-enep gouarnamant Fidel Castro a c'hwitas a-grenn. 111  
Castro a chom, war a hañval, ken kreñv ha biskoazh. Ur gwall daol eo 111  
bet evit politikerezh ar prezidant nevez Kennedy. 111

TCHOMBE BAC'HET E BRO-GONGO : Prezidant Katanga, Tchombe, a voe harzet 111  
d'ar 26 Ebrel gant soudarded Kasavoubou, e Coquillatville, hag a chomas 111  
prizoniet. Barnet e tle bezañ gant ar gouarnamant-kreiz evel treitour, 111  
tamallet : 1) da vezañ muntret prizonidi bolitikel ha lazhadeget 111  
Baloubaed en hanternoz Katanga, 2) da vezañ en em savet a-enep ar 111  
gouarnamant-kreiz gant harp estrenien, 3) da vezañ laeret kirri-nij, 111  
pourveziou-brezel hag arc'hant, 4) da vezañ lakaet moulañ bilhedoù-bank 111  
faos. 111

DIZURZHIOU ANGOLA : Nebeut a geleier resis a zeu eus Angola. Gouzout a 111  
reer hepken e kendalc'h an dizurzhioù, hag e seblantont en em astenn 111  
dre ar vro a-bezh (betek-hen n'eus bet trouz nemet en hanternoz). 111  
Kalz tud a zo bet muntret gant an emsaverien. Hogen muioc'h c'hoazh, a 111  
greder, a zo bet lazhed gant ar soudarded kaset eus Portugal da vougañ 111  
an emsav. 111

KUDENN LAOS : Ur vodadeg etrevroadel evit renkañ kudenn Laos a zigoras 111  
e Jenev d'ar 16 Mae. 111



111 TAOL-REVEULZI E KOREA : Seoul, Kêrbenn Korea ar C'hreisteiz, a voe  
 111 kemeret d'a 16 Mae gant bagadoù soudarded dindan ur rener-arme, al  
 111 letanant-jeneral Do Young Tchang. Ar gouarnamant a voe diskaret hag ar  
 111 Parlamant divodet.

111  
 111 EN EC'HONDER

111 UN AMERIKAN EN EC'HONDER : D'ar 5 Mae e voe strinket gant an Amerikaned,  
 111 evit ar wech kentañ, un den en ec'honder : Alan Shepard, komandant er  
 111 verdeadurezh, oadet a 37 vloaz. Taolet e voe e-barzh ur glozenn un  
 111 donell betek 180 Km. a-us d'an Douar, dre harp ur fuzeenn "Redstone"  
 111 eus Kab Canaveral, Florida. 15 munutenn goude e kouezhe er Mor Atlantek.  
 111 Kaset e voe gant ur viñsaskell d'an douger-nijerezed "Lake Champlain".  
 111 Herr ar glozenn a zo aet betek 8.000 Km./eur. An astraer a labouras en  
 111 ur skingomz d'an Douar an holl anzer. E-pad ur pennad e sturias e  
 111 glozenn e-unan. E-pad 4 munutenn e voe dibouez. Unnekkementet e voe e  
 111 bouez d'ur poent all.

111 TELESKOP EN EC'HONDER : Un adplanedenn, "Explorer XI", a voe taolet  
 111 gant an Amerikaned d'ar 27 Ebrel, enni un teleskop. An adplanedenn a zo  
 111 leun a ardivinkoù munut evit studiañ ar skinoù kosmek ha traoù all.  
 111 Kelc'hdreif a ra etre 480 ha 1.200 Km. diouzh an Douar. An teleskop a  
 111 dro-distro buan-tre en doare da dapout holl dachennoù an oabl. Ar  
 111 c'hentañ "arvestlec'h en ec'honder" eo. Talvoudus e vo dreist-holl da  
 111 imbourechiñ bevennoù pellañ hor galaksienn hag ar galaksiennoù all.

111 =====  
 111 ooo  
 111 =====

111 Kement hini

111 a fell dezhañ skrivañ brezhoneg a dle gouzout penaos eo  
 111 bet implijet gerioù ar yezh a-hed ar c'hantvedoù. Netra gwelloc'h eget  
 111 ar studi-se evit dispenn sorc'henoù a bep seurt maget e spered ar  
 111 vrezhonegerien a-vihanik koulz hag e spered ar re all.

111 Ur benveg-labour na c'heller ket dioueriñ eo GERIADUR ISTOREL  
 111 AR BREZHONEG, gant Roparz Hemon, a vo embannet an trede kaier lies-  
 111 skrivet anezhañ dizale. Reiñ a ra diwezh al lizherenn CH, al lizherenn  
 111 C'H ha derou al lizherenn D. Priz ur c'haier 100 pajenn, 7,50 LN. -  
 111 2 gaiet, 12 LN. - 5 kaier, 30 LN. Talvezout a ra ar boan rakprenañ.  
 111 kas an arc'hant d'an Dr.Etienne, Châteaulin, CCP.PARIS 16 093-13.

111 Dornskrid ar GERIADUR ISTOREL a zo echu, anezhañ 67 kaier dorn-  
 111 skrivet. Klokaet e vez bemdez koulskoude, gant gerioù o vont eus ar  
 111 brezhoneg-krenn betek gerioù implijet er c'helaouennoù a hiziv.

111 =====  
 111 SKOL AR STUDIOU KELTIEK, Dulenn, a zo o paouez reiñ d'ar mouler  
 111 dornskrid un advouladur eus Tremenvan an Itron Varia, Pemzek Levenez  
 111 Varia ha Buhez Mab-Den, aozet diwar mikrofilmoù gant Roparz Hemon.

VVVVVVVVVVVV				m						VVVVVV	111
VVVVVVVVVVVV	mm	mmmmmm	mm	mmmm	mm	mm	mm	mm	mm	VVVVVV	111
VVVVVVVVVVVV	m	m	m	m	m	m	m	m	m	VVVVVV	111
VVVVVVVVVVVV	mm	m	m	m	mm	m	m	m	m	VVVVVV	111
VVVVVVVVVVVV	mm	m	m	m	mm	m	m	m	m	VVVVVV	111
VVVVVVVVVVVV	mm	m	m	m	mm	m	m	m	m	VVVVVV	111
VVVVVVVVVVVV	mm	m	m	m	mm	m	m	m	m	VVVVVV	111
VVVVVVVVVVVV	mm	m	m	m	mm	m	m	m	m	VVVVVV	111

KELOU DIWEZHAÑ EUS AR WERELAOUEN

War ar bajenn da heul e vo kavet ur pennad diwar-benn ar Were-  
 laouen. Ar pennad-se a oa skrivet pa zeuas ar c'heloù-mañ :dre deurel  
 skinwagennoù ouzh ar Werelaouen, skiantourien soviedek o dije kavet e  
 laka 10 devezh-Douar da dreiñ warni hec'h-unan. Kavet o deus ivez ne  
 vez ket distaolet heñvel ar skinwagennoù gant holl rannoù ar gorre.

TOULLAÑ AN DOUAR

Ul lestr amerikan a zo bremañ e-kichen Enez-Wadeloup en Antilhez,  
 prest da ober un toull 4 Km. dindan ar mor. Mar deu an taol-arnod-se da  
 vat, e klaskor toullañ donoc'h c'hoazh e pleg-mor Meksik, betek treuziñ  
 ar "greunenn", ha tizhout ar "vantell" a zo dindan. Ar Rusianed o defe  
 c'hoant d'ober gwelloc'h c'hoazh : meneg a zo ganto da gas ur vanadell  
 a-dreuz an Douar !

KINKAILHEREZH EN EC'HONDER

E miz Meurzh diwezhañ e oa 28 adplanedenn pe war-dro o treiñ en-  
 dro d'an Douar. Hag e oa ouzhpenn ur bern traoù all : goloennoù  
 bannadelloù ha tammoù distaget diouto. An holl draoù-se a c'hell bezañ  
 dañjerus evit astraerien an amzer da zont. Bremañ zoken n'int ket  
 diriskl. Ur c'holoenn distaget diouzh ur vannadell a voe dizoloet  
 nevez 'zo dre radar, ha kemeret da gentañ evit ur vannadell rusian !

BUHEZ EN EC'HONDER ?

Tri skiantour amerikan o deus prouet, emezo, ez eus buhez tu  
 bennak en ec'honder. An Doktored B.Nagy, D.Hennessy ha W.Meinschein o  
 deus displeget dirak Akademiezh ar Skiantoù, New York, disoc'h o labour  
 war ur veteoritenn kouezhet e-kichen Orgueil, Bro-C'hall, e 1864.  
 Implijet o doa doareoù-imbourc'h nevez, gant harp spektroskopoù infra-  
 ruz hag ultralimestra, difraktadur skinoù X ha spektroskopiezh  
 volekulel. Dizoloet o deus lieselfennoù organek : hidrokarburennoù  
 heñvel ouzh ar re a gaver en danvez bev war an Douar. "A belec'h bennak"  
 eme an Dr.Meinschein, "eo deuet ar veteoritenn, el lec'h-se ez eus un  
 dra bennak o vevañ."

////////////////////////////////////

Ha paeet hoc'h eus  
ho koumanant d'AR BED KELTIEK evit 1961 ?



A R W E R E L A O U E N

111 \*\*\*\*\*  
 111 \*\*\*\*\*  
 111 \*\*\*\*\*  
 111 \*\*\*\*\*  
 111 \*\*\*\*\*  
 111 \*\*\*\*\*  
 111 \*\*\*\*\*

111 E koskoriad planedennoù an Heol (hep kontañ an Douar), n'eus  
 111 nemet ar Werelaouen o kaout un anv kozh. Er geriadur anvet Catholicon,  
 111 savet e dibenn ar 15-vet kantved, e kaver hec'h anv skrivet  
 111 Guerelouenn ha Guelelouenn.

111 N'eo ket souezh he dije bet un anv. N'eus netra en oabl, nemet an  
 111 Heol hag al Loar, a ve aesoc'h da verzout. Gwelet e vez diouzh ar  
 111 pardaez pe diouzh ar beure. Skediñ a ra a-wechoù pa vez deiz anezhi.  
 111 An Henc'hresianed a grede e oa astr ar pardaez diforc'h diouzh astr  
 111 ar beure. Hemañ a anvent Phosphoros hag egile Hesperos. Pitagoras,  
 111 avat, war-dro 500 vloaz kent J.K., a zizoloas ar fazi.

111 Pa voe buket gant Galilei e bellsellerez ouzh ar Werelaouen e  
 111 derou ar 17-vet kantved, e tizoloas un dra all : ar blanedenn a gemme  
 111 stumm evel al Loar, da lavarout eo, e kreske hag e tigreske, o vont  
 111 eus ar prim d'ar c'hann, ha neuze d'an diskar. Un dra aes da ziskleriañ:  
 111 hag hi tostoc'h d'an Heol eget an Douar, ne welomp nemet an tu heoliet,  
 111 o strishaat pe o ledanaat hervez ma tro en oabl.

111 Tamm-ha-tamm e voe kavet traoù all : ar Werelaouen a zo un  
 111 tammig hepken bihanoc'h eget an Douar. Un den o vale warni n'en em  
 111 gavfe ket kalz skañvoc'h eget o vale amañ. N'eus planedenn ebet a zeu  
 111 tostoc'h d'an Douar : 40 milion Km. (Hogen pellaat a ra betek 250  
 111 milion Km. a-wechoù). N'emañ nemet 107 milion Km. diouzh an Heol, hag  
 111 he c'helc'hdro a zo hogos kelc'hiek. (Emañ an Douar well-wazh 148  
 111 milion Km. diouzh an Heol, hag e gelc'hdro a zo hirgelc'hiek).  
 111 Plaenenn-gelc'hdreiñ ar Werelaouen a ra ur c'hogn nebeut bihanoc'h  
 111 eget 3<sup>o</sup>1/2 gant hini an Douar. Keit ha 225 deiz-Douar e pad bloaz  
 111 ar Werelaouen.

111 Bez' ez eus avat traoù a bouez ha n'eur ket deuet a-benn c'hoazh  
 111 da c'houzout. Ha setu amañ perak : tro-war-dro ar Werelaouen ez eus  
 111 dalc'hmat ur gwiskad-koumoul ken stank ma n'eus ket tu da welout ar  
 111 vol. Ur steredoniour italian, Bianchini, en 18-vet kantved, hag ur  
 111 steredoniour amerikan, Percival Lowell, en 19-vet, a lavaras o doa  
 111 spurmantet merkoù resis warnañ. Hogen se oa sorc'henoù, war a greder.  
 111 Ne weler e gwirionez nemet tachenoù splann pe deñval, bepred kemm-  
 111 digemm, re luziet da dresañ. A zo muioc'h : pa vez luc'hskeudennet  
 111 ar blanedenn, ne ziskouez al luc'hskeudenn netra pe dost eus an  
 111 tachenoù-se.

111 Dre se, ne ouzer ket pegeit amzer a laka ar Werelaouen da dreiñ  
 111 warni hec'h-unan. Darn o deus kredet e oa keit ha "devezh" an Douar,  
 111 pe dost. Darn o deus kredet e pade war-dro ur miz. Darn all o deus  
 111 kredet e troe atav an hevelep tu etrezek an Heol, evel ma ra Merc'her.  
 111 Ne ouzer ket kennebeut ha stouiñ a ra ar blanedenn war he flaenenn-  
 111 -gelc'hdreiñ.

Ar gwiskad-koumoul tev a c'holo ar Werelaouen, dielfennet dre spektroskopiezh, a zo bioksidenn garbon. N'eus bet kavet roud eus oksigen nag aezhenn-dour. An div zanvezenn-se a c'hell bezañ kavet dindan. Ne ouzomp ket. E miz Meurzh 1961 e voe merzet nitrogen gant ur skiantour rusian. 111

Klasket ez eus bet muzuliañ ar rez-tomnder. Niveroù ken disheñvel a zo bet jedet, avat, na dalv ket ar boan o menegiñ. 111

Dreist-holl, klasket ez eus bet divinout petra a zo dindan ar c'houmoul. Amañ ivez ez eus teoriennoù disheñvel-kenañ. Setu amañ ar re bennañ : 111

1) Ar Werelaouen a vefe evel ma edo an Douar milionoù a vloavezh-ioù 'zo, en Oadvezh ar Glaou : gleb, geuniek, goloet a blantennoù stank, poblet gant loened dielfennel ramzel ! 111

2) Ar Werelaouen a vefe ur gouelec'h sec'h-korn, netra warni nemet poultr ha reier. 111

3) Ar Werelaouen a vefe goloet-holl a zour. E gwirionez, ne ouzomp ket. Ar Werelaouen, betek-hen, a zo an hini gevrinusañ eus ar planedennoù. 111

Ar vannadell kaset gant ar Rusianed nevez 'zo da gichen ar Werelaouen, a zo aet mut, siwazh, e berr amzer. Evit deskiñ muioc'h, e vo ret gortoz ma vo taolet ur vannadell all. Pe ez aio astraerien gant un oabllestr d'ober un droig-veaj betek enni. 111

WWWW  
WWWW  
WWWW  
WWWW  
WWWW  
WWWW  
WWWW  
WWWW

I W E R Z H O N E G E R M E R E R E Z H  
gant ALAN HEUSSAFF

WWWW  
WWWW  
WWWW  
WWWW  
WWWW  
WWWW  
WWWW


Adsevel ur yezh hag a zo bet war he diskar e-pad kantvedoù a vez un emgann pemdeziek. An tech a zo bet kemeret gant an dud d'he dilezel ne vez ket trec'het warnañ dindan dek na dindan ugent vloaz. Ar pep diaesañ n'eo ket lakaat ur vroad da zegemer lezennoù lañsus d'ar yezh, met lakaat al lezennoù-se da dalvout daoust d'an diegi ha d'an droukrañs. 111

Hervez al lezenn ez eo an iwerzhoneg yezh kentañ ar vro. Ar gwir en deus an neb a gar da gaout servijoù ar Stad en ur ober ganti. E gwirionez e rank an hini a zo youlet d'hen ober trec'hiñ war leziregezh ha war enebiezh didrouz un darn vat eus paotred ar burevioù. 111

Teir skouer nevez a roin. E-lec'h ma veze ur skrid war ar postoù-heñchañ, e oa en div yezh betek-hen. Nevez 'zo ez eus bet lakaet postoù e Dulenn gant saozneg hepken warno, "STOP" da skouer. Un den a anavezan hag a zo bet harzet meur a wech evit bezañ tremenet hep ober diouto, n'eo ket bet goulennet digantañ paeañ tell-gastiz ebet, betek-hen: mererezh an hentoù a zo er gacu. Koulskoude, pa n'eus nemet un den pe zaou dre bemp kant mil o 111



111 taerif, ne gav ket dezho ez eo dav en em chalañ.  
 111 Emeur o prientiñ un niveradur-poblañs, ha kaset ez eus bet  
 111 follennoù da bep "tieg" da leuniañ. E karterioù 'zo e oa reoù saoznek  
 111 ha reoù iwerzhonek gant paotr al lizheroù : pep hini a c'helle goulenn  
 111 ar seurt a gare. E karterioù all ne oa nemet follennoù e saozneg gant  
 111 ar paotr. Pet den dre gant a-douez mignoned an iwerzhoneg a zo aet da  
 111 dregasiñ anezhañ en ur c'houlenn ma teuje en-dro gant ar seurt all ?  
 111 Evel-se e c'hoarvez ivez evit ar follennoù da leuniañ a-zivout an  
 111 tailhoù war al leve : kaset e vez deoc'h ar re saoznek, gant un notennig  
 111 da lavarout e c'hellit goulenn reoù iwerzhonek. An dud n'o devez ket  
 111 amzer da gemer kement a drubuilh. Perak ne ginniger ket sevel ur roll  
 111 eus an dud a fell dezho kaout pep tra en iwerzhoneg ?  
 111 Kuzul-kêr Dulenn en deus savet klemm n'eus ket pell ouzh un den a  
 111 nac'he paeañ e dailhoù, peogwir ne gased dezhañ nemet follennoù-goulenn  
 111 saoznek. Nouspet gwech en doa distroet ar re-se, ha prometet e oa bet  
 111 dezhañ e resevje reoù iwerzhonek. Barnet eo bet da baeañ an tailhoù evel  
 111 just. Met d'ar c'houlz ma skrivan n'eo ket bet divizet c'hoazh piv a  
 111 baeo dispignoù ar prosez. Moarvat e vint lakaet war gont ar c'huzul,  
 111 peogwir e lavare ar barner ne vije ket bet dleet sevel klemm ouzh an den.  
 111 Ma ne vije ket bet prometet follennoù iwerzhonek dezhañ en dije kollet  
 111 er prosez hogozik sur.



111 Trugarez d'ar re o deus kaset respontoù.  
 111 Spi hon eus e teuo buan respontoù all. Anat e tle bezañ d'an holl  
 111 bremañ talvoudegezh istorel ha kevredigezhel hon enklask. Seurt testi-  
 111où a vo a bouez bras en amzer da zont, hag a zo a bouez bras evit  
 111 sturiant hor stourm en amzer hiziv.

111 Setu amañ, c'hoazh ur wech, ar goulennoù :

111 ENKLASK DIWAR-BENN AR YEZHOU IMPLIJET E KUMUN ..... E 1961.

- 111 1) E pe yezh e vez graet ar prezegerezh en iliz ?
- 111 2) E pe yezh e vez graet katekiz d'ar vugale ?
- 111 3) Ha kenteliet e vez brezhoneg e skol pe skol ?
- 111 4) Pe yezh a vez implijet gant an dud er vuhez pemdeziek (hervez  
 111 an oad, ar vicher, ar chomlec'h) ?
- 111 5) Hag implijet e vez brezhoneg en displegadegoù boutin (gouelioù,  
 111 emvodoù, c'hoariva, h.a.) ?
- 111 6) Emzalc'h an dud e-keñver ar brezhoneg (tud a-du, diseblant pe  
 111 a-enep).

111 Kas ar respontoù d'AR BED KELTIK, 21, rue Dixmude, St.Marc, Brest,  
 111 pe c'hoazh da Roparz Hemon, 1-A, Leeson Park, Ath Cliath 6 (Eire).

GROÑVEL, kanton Rostrenen, A.a.H.

E 1928. Brezhoneg hepken en iliz. 111

E 1961. 1) Prezeget e galleg abaoe 2 vloaz, nemet ar  
bedenn a-raok ar sarmon a vez graet e brezhoneg. En oferenn e vez kanet  
peurliesañ ur c'hantik e brezhoneg hag ur c'hantik e galleg. 111

2) Katekiz e galleg. 111

3) Er skolioù kristen e tesker kanaouennoù brezhonek. E skol ar  
merc'hed e komzer brezhoneg alies en ur c'hlas. Er skolioù laik e vez  
kelennet un tammig brezhoneg. 111

4) Ar brezhoneg eo ar yezh implijetañ gant an dud, nemet er  
vourc'h. An darn vrasañ eus ar vugale a gomz galleg etrezo ha gant o  
c'herent. 111

5) Pezhioù-c'hoari berr e brezhoneg a vez displeget alies hag a  
blij kalz d'an dud. Kanaouennoù brezhonek a vez kanet ivez gant an dud  
yaouank. 111

6) An dud dre vras a zo diseblant e-keñver ar brezhoneg, hag a  
vefe kentoc'h a-enep kelennerzh ar yezh vroadel. 111

LOKMELAR, kanton Sizun, P.a.B.

E 1928. Brezhoneg hepken en iliz. 111

E 1961. 1,2) Galleg hepken en iliz, nemet un nebeut  
kantikoù hag an Añjeluz e brezhoneg. Ar person n'eo ket barrek da gomz  
brezhoneg. 111

3) Ne vez kenteliet ar brezhoneg e skol ebet. 111

4) Brezhoneg a vez implijet e pep lec'h gant an holl, kozh ha  
yaouank. Un nebeut tud er vourc'h a gomz galleg, hogen eno zoken ar  
genwerzhourien hag an dud yaouank a ra aliesoc'h gant ar brezhoneg. 111

5) Ne vez ket graet gant ar brezhoneg en displegadegoù boutin. 111

6) An dud a gomz brezhoneg hep soñjal e kudenn ar brezhoneg, evel  
ma komz tud Pontoise galleg hep soñjal e kudenn ar galleg. Hogen ar  
boblañs a zo diskennet eus 800 da 400 den. 111

HENVIG, kanton Taole, P.a.B.

E 1928. Brezhoneg hepken en iliz. 111

E 1961. 1,2) Galleg hepken en iliz, nemet un nebeut  
kantikoù hag an Añjeluz e brezhoneg. E-doug 4 bloaz, n'eus bet prezeget  
e brezhoneg nemet 3 gwech, gant beleien a-ziavaez. 111

3) Galleg hepken er skol. 111

4) Un nebeut tud kozh a gomz brezhoneg. Ar re yaouank dindan 30  
vloaz a gomz galleg, ha ne fell ket dezho komz brezhoneg, daoust ma oar  
mat ul lodenn vras anezho ar yezh vroadel (levezon Garanteg). 111


5) En abadennoù-c'hoari er patronaj, e vez 2 pe 3 c'hanaouenn e  
brezhoneg. 111

6) Ar pep brasañ a zo diseblant-kaer e-keñver ar brezhoneg, hag  
ar re yaouank a ra fae warnañ. 111





- da zeiz Kest ar Brezhoneg a dlefe bezañ ingalet gwelloc'h. 111
- 2) Diskouezadeg levrioù. Da vare ar gest e vo aozet, gant aotre ar C'huzul, un diskouezadeg levrioù brezhonek gant an Dr.Grall e Roazhon. 111
- 3) Skol Sant Erwan. Da heul al lezennoù nevez, ne c'heller mui ren ar skol evel a-raok. An Ao.Ar C'halvez a voe trugarekaet gant ar C'huzul evit ar skouer dispar en deus roet. Diaes e vefe lavarout ar boan en deus kemeret, eñ hag e genlabourerien, e-pad pevar bloaz : unan eus ar stourmoù kalonekañ graet biskoazh en istor Emsav Breizh. 111
- 4) Labour e-touez an dud yaouank. An Ao.Bourdelle a zisplegas ez eo ret labourat e-touez an dud yaouank : aozañ baleadennoù, skolioù-hañv, ha pourchas dezho danvez studi ha dudi. 111
- 5) Retred e Keresperz. Un devezh retred e brezhoneg a vo aozet hevlene evit beleien ha kloareged. 111
- 6) Kamp ar Vrezhonegerien. Ar C'hamp a vo dalc'het sur-mat e Logivi-Plougraz e-pad an hañv. 111
- 7) Kendalc'h Keltiek. Landreger a voe meneget evel lec'h Kendalc'h 1962. Hogen n'eus netra divizet-resis evit c'hoazh. Poent e vefe envel dileuridi Skourr Breizh e Kendalc'h 1961, a vo dalc'het en Iwerzhon, hogen n'eus bet kaset keloù ebet anezhañ d'ar Vretoned betek-hen. 111
- 8) Strollad-ren nevez. An Ao.Y.Ar Beg a voe anvet da rener Kuzul ar Brezhoneg, an Ao.Klerg da sekretour, an Ao.Morvezen o chom teñzorier. 111



-----

D I S K A R   K O R N O G   E U R O P A

gant ALAN HEUSSAFF



Bremañ ma'z eo kroget Rusiz hag Amerikaned da gas tud d'an heligentañ en ec'honder, e teuer da brederiañ en Europa ar C'hornog gant heuliadoù ar genstrivadeg-se evit buhez ar pobloù. 111

Ar C'hallaoued, ar Saozon hag an Alamaned a glask kevezañ un tammig. Pobloù bihanoc'h a chom da sell. Daoust hag ez eo ur gudenn a glod broadel ? Pe un tu da zegas gounid ha brud da vrientinien ar marevezh nevez, teknikourien ha gouizieien ? Pe daoust hag e vo pinvidigezh pe baourentez, berzh pe wallverzh ar pobloù diouzh a sevenint en ec'honder ? Hag e kouezho an arvesterien e dalc'h ar genstriverien ? 111

Imbroudus eo ar pezh a lavar rener sellva Jodrell Bank, an Ao. Lovell, er c'heñver-se. Dindan e veli emañ ar skinbellseller galloudusañ eus ar bed, ha gallet en deus arvestiñ pizh ouzh kurioù ar Soviedoù hag ar Stadoù-Unanet. Gouzaouiñ a ra e genvroiz : ma ne zeuont ket a-benn da gemer perzh en aloubidigezh an ec'honder, e kollint muioc'h-mui o renk war an Douar. D'e soñj, e troio ar pobloù hep ijinerezh war-du an drec'hourien, p'o devo ezhom da brenañ mekanikoù hag ardivinkoù, pe da amprestañ teknikourien. Atav e vior tuet da grediñ ez eo gwelloc'h marc'hadourezh hag anaoudegezh ar re-se. 111

Dija e ro ar genstrivadeg lañs e kalz tachenoù enklask hag ijin- 111





- gant kement a urzh, - ur gammed muioc'h e kroudigezh ar brezhoneg a 111  
vremañ. Gwelloc'h eo sevel e-giz-se, pa c'heller, geriadurioù bras 111  
eged rolloù-gerioù skignet e kelaouennoù, troc'het e tammoù ha mesket 111  
gant pennadoù all. Ur wech c'hoazh, PREDER a ziskouez an hent. 111  
111
- HOR YEZH, niv 14 (rummad nevez), kentañ trimiziad 1961, Ebrel 1961. 111  
Trimiziek. Koumanant-bloaz 10 LN. CCP.RENNES 1240-22, Mlle J. Queillé, 111  
47, rue Notre-Dame, Guingamp. 111  
111
- E-touez ar pennadoù disheñvel a gaver en niverenn-mañ, an hini en 111  
deus tennet muiañ va evezh eo teirvet rann ar "Paperoù pennadurel e 111  
brezhoneg" gant Per Even. E-kichen geriaoueg ar ouiziegezh, e tleomp 111  
prientiñ geriaoueg al lezennouriezh hag ar velestradurezh. Pezh a zo 111  
bet graet en Iwerzhon gant ur Burev a-berzh Stad ne c'hell bezañ graet 111  
e Breizh nemet dre striv hiniennoù, tud a youl vat. Hogen graet e 111  
c'hell bezañ. 111  
111
- WANIG HA WENIG, niv.10, Meurzh 1961. Trimiziek. Koumanant-bloaz 2 LN. 111-  
(distaol pa c'houlenner meur a niverenn war un dro). CCP.RENNES 111  
1705-95, Journal WANIG HA WENIG, Plouézec, C.d.N. 111  
111
- Gant harp Kembreiz ez eo deuet rener hor c'helaouenn-vugale a-benn 111  
da gaout skeudennoù plijus. Petra ne rafe ket gant muioc'h a harp 111  
digant ar Vretoned o-unan ? 111  
111
- STURIER-YAOUANKIZ, niv.17, Meurzh 1961. Trimiziek. Koumanant-bloaz 111  
6 LN. CCP.RENNES 137403, Yann Bouessel du Bourg, 4, Avenue Cruchet, 111  
Gagny. S.& O. 111  
111
- Ar gelaouenn-mañ, liesskrivet ha skeudennaouet-kaer, a embann 111  
pennadoù brezhonek e-kichen pennadoù gallek. An darn vrasañ eus ar 111  
pennadoù brezhonek a zo a-berzh KAVY (renet gant Erwan Evenou) : 111  
pennadoù liesseurt, oc'h anataat youl an dud yaouank-se da lakaat hor 111  
yezh da glotañ ouzh buhez ar bed a vremañ. 111  
111
- AR VRO, niv.9, Meurzh 1961. Trimiziek. Koumanant-bloaz 10 LN. 111  
CCP.NANTES 1493-79, J.Desbordes, 14, rue Colbert, Concarneau. 111  
111
- Ur pennad a bouez e galleg diwar-benn buhez Frañsez Vallee. D'ar 111  
mare ma'z eus tud o klask lakaat Vallee e renk ar rannvroelerien, ez 111  
eo ret embann ar wirionez : Vallee a zo bet broadeler penn-kil-ha- 111  
troad. N'em eus ket lennet studiadenn an Ao. Corbes meneget amañ. Un 111  
dra a c'hellan lavarout evelato : Vallee a zo chomet bepred va mignon 111  
start, o skrivañ din hegarat hogozik betek deiz e varv. 111
- Mat e vo prederiañ war bennad Per Denez : "Ar yezhoù keltiek er 111  
skingomz". 111  
ROPARZ HEMON 111  
111
-



AR PABOR

(Tirolianenn. Kanaouenn gozh a Vro-Stiria)

3/4  
 Re'Sol'la'/si'.si"si'si'si'do'/la'.la"la'  
 Re'Fd'la'/do'.do"do-mi-/re-do-si'.re"/re-  
 Re'Sol'la'/si'.si"si'si'si'do'/la'.la"la'  
 Re'Fd'la'/do'.do"do-mi-~/re-^do-^si-~/

/re:si-/Sol-si-mi-/re:do-/Fd:./  
 /fd:re-/do-re-fd-/sol:re-/si:./  
 /sol:re-/si-re-sol-/fd:re-/do:./  
 /fd:re-/do-re-fd-/sol:./sol-

1.

Me zo ur paotrig sart. Triwec'h vloaz n'em eus ken.  
 Me a zo yac'h ha kreñv. Ne spontan dirak den.  
 Va lagad a zo drant. Me a zo sonn va gar.  
 En ebat hag en dañs, n'eus ket va far.

YODEL

ria, riadi, tidio,  
 ria, riadi, tidio,  
 ria, riadi, tidio,  
 ria, riadio.

2.

Zoken e-pad ar goañv, 'kreiz ar skorn hag an erc'h,  
 E nij ar merc'hed brav 'vel kelien war va lerc'h.  
 E kêr ha war ar maez, a-walc'h e vefe din,  
 Evit o fakañ holl, ober ur sin.

YODEL

ria, riadi, h.a.

3.

Met koll a reont o foan. Va dibab am eus graet.  
 Me 'gar Anaig koant. N'em bo plac'h all ebet.  
 O tridal gant ar joa, ne vern pelec'h emamp,  
 Raktal e krog em brec'h, hag e kanomp :

YODEL

ria, riadi, h.a.

O tont eus ar wask dizale :

"A N T R I B O U L O M I G K A L O N A O U R"

romant nevez gant ROPARZ HEMON  
 embannet gant ti AL LIAMM. - priz : 9,00 LN.














Revue mensuelle-No.31-Juillet 1961 Kelaouenn vizek-Niv.31-Gouere 1961  
Abonnement annuel : 7 NF. Koumanant-bloaz : 7 LN.  
CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, St-Marc, BREST.


=====  
PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON  
=====

=====  
T A O L E N N  
=====

111	<u>Ar miz</u> .....	p. 97
111	<u>Skridoù nevez (Roparz Hemon)</u> .....	p.100
111	<u>Donoc'h e rin ar vuhez (Alan Heussaff)</u> .....	p.101
111	<u>Ar blanedenn Veurzh</u> .....	p.103
111	<u>Doareoù ar merc'hed kant vloaz 'zo (G.Morvan)</u> .....	p.105
111	<u>Stad ar brezhoneg</u> .....	p.107
111	<u>Kanomp : Al liorz e-tal ar mor. - Ma ve din roet</u> .....	p.109
111	- : <u>Ar miliner drant. - Bleunioù-kerez</u> .....	p.110
111	<u>DALC'HOMP : Al lizher (Roparz Hemon)</u> .....	p.111

=====  
K A M P A R V R E Z H O N E G E R I E N  
=====

Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien a vo graet  
e Logivi-Plougraz  
eus ar 14 d'an 30 a viz Gouere.  
Skrivañ d'an Itron V.de Bellaing,  
28, rue des Trois Frères Le Goff, St-Brieuc.



DRE AN DOUAR

111 EMSAV LABOURERIE N-DOUAR BREIZH : N'eus ket a soñj e vije bet biskoazh  
111 en istor Breizh, - nag en istor ar broioù all kennebeut, - kemeret ha  
111 dalc'het kêrioù gant bagadoù kouerien. Setu avat ar pezh a zo  
111 c'hoarvezet er sizhunioù tremenet.  
111 Labourerien-douar Breizh, displejet gant digresk prizioù o  
111 marc'hadourezh, a venn diskouez o displejadur.  
111 Da zeiz ar votadeg kantonel (4 Mezheven) e voe devet boestoù

paperennoù-votiñ e kanton Pont-'n-Abad (Sant-Yann-Drolimon, Ploer ha Tremeog), hag unnak den a voe harzet, da vezañ barnet gant lez-varn Gemper.	111
D'an 8 Mezheven, diouzh ar beure, e oa stanket ruioù Montroulez gant kirri labourerien-douar. E-pad un hantereur e voe dalc'het an is-prefeddi gant ar gendiskulierien. Bagadoù archerien a voe galvet prim-ha-prim da Vontroulez gant ar gouarnamant, ha prefed Penn-ar-Bed a zeredas da gaozeal gant ar goueriaded. Kemenn-harz a voe kaset a-enep tri den (Gourvenneg, Leon, L. ar Born). An daou gentañ a voe paket krog enno ha bac'het e voent e Brest.	111
Peulioù-tredan a voe troc'het e Kernev, ha da heul e voe mesk war an hent-houarn etre Kemper ha Kemperle.	111
D'an 12 e voe barnet e Kemper loskerien ar boestoù-votiñ. Unan a voe kondaonet da 15 devezh toull-bac'h, ar re all da 8, gant pe hep dale-kastiz. E-keit-se edo al labourerien-douar oc'h trouz dirak al lez-varn.	111
En deiz-se e voe kendiskuliadegoù ivez e Sant-Malo hag e Bro-Naoned.	111
D'ar 14 diouzh ar mintin, e voe harzet an trenioù etre Kemper ha Redon gant labourerien-douar tolpet en Henbont.	111
En endervezh e tarzhas an abadenn e Bro-Dreger. Kêrioù Landreger ha Pempoull a voe dalc'het gant ar goueriaded, pont Lezardrev stanket. Dael a voe ivez er Roc'h-Derrien. D'ar 15 e voe tro Lanuon.	111
D'ar 16 e troas an emsav da Bondivi. Eno e voe tommoc'h c'hoazh an traoù. Bardelloù a voe savet, dibunadeg graet dre gêr. En endervezh en em gannjod e-kichen an isprefeddi, hag an archerien a daolas greunadennoù-daeraouiñ. Divac'hañ Gourvenneg ha Leon a c'houlenne an emsaverien.	111
D'ar 17, mintin abred, a voe gronnet ul laezhdi e Malastreg gant ar gouerien. Trouz a voe ivez er Faoued. Hogen ar gendiskuliadeg vras a voe graet e Gwengamp, goude troc'hañ an holl hentoù tro-war-dro. Ne voe ket a emgann koulskoude.	111
Ar vinistred c'hall, bodet e Pariz, en deiz-se, a c'hrataas un nebeut traoù da wellaat stad al labour-douar e Breizh.	111
<u>KRUCHTCHEV HA KENNEDY</u> : Goude tremen e Pariz, ar Prezidant Kennedy a zo bet e-pad daou zevezh (3 ha 4 Mezheven) o kaozeal gant Kruchtchev e Vienna. Ar c'homunike embannet war-lerc'h an emzivizoù-se a lavar nebeut a dra. Gwirheñvel eo o deus an daou stadour diskleriet an eil d'egile o savboent a-zivout kudennoù bras an deiz : Berlin, Laos, Afrika, an dizarmañ, an arnoù nukleel, h.a. A-raok distreiñ d'e vro ez eas Kennedy da welout Macmillan e Londrez. Gwellaenn ebet, da heul, er Brezel Yen.	111
<u>TIROLIZ AR C'HREISTEIZ HAG ITALIA</u> : War greñvaat ez eo aet nevez 'zo emsav Tiroliz ar C'hreisteiz a-enep an italianekaat. An doare-enebiñ dibabet gant Tiroliz eo lakaat da darzhañ ar peulioù, an tiez hag al linennoù a gas tredan d'ar rannvroioù italian. Kaout dre nerzh a fell dezho ar pezh ne c'hellont ket kaout dre gaer.	111



- 111 EMZIVIZOU EVIAN : An emzivizoù digoret en Evian, Savoia, etre  
 111 broadelerien Aljeria ha gouarnamant Bro-C'hall d'an 20 Mae, a voe ehanet  
 111 d'an 12 Mezheven. Ne oa tu ebet d'en em glevout, peurgetket diwar-benn  
 111 kudenn ar Sahara. Ar C'hallaoued a fell dezho mirout ar vro-se gant he  
 111 finvidigezhioù eoul-maen. An Aljeriz a lavar ez eo darn eus o bro.  
 111
- 111 JENERALED BARNET : Goude ur prosez a badas 3 devezh, ar jeneraled, -  
 111 dijeneraled kentoc'h, peogwir oant bet torret diouzh o c'harg, - Challe  
 111 ha Zeller a voe barnet da 15 vloaz prizon gant labour evit ar perzh o  
 111 abaoe keneret en emsavadeg Aljeria e miz Ebrel. Ofiserien all a zo bet  
 111 kondaonet ivez abaoe.  
 111
- 111 PEOC'H E BRO-GONGO ? : An Ao. Hammarskjöld, sekretour Meur ar Broadoù  
 111 Unanet, a lavaras (12 Mezheven) e oa echu afer Bro-Gongo ... nemet e  
 111 savje trubuilh adarre. Englevioù a zo bet skoulmet etre ar Broadoù  
 111 Unanet hag ar Prezidant Kasavoubou. Ouzhpenn se, spi a zo da gomezañ  
 111 an traoù etre gouarnamant Kerleopold ha gouarnamant Kerstanley (hemañ  
 111 a-du gant politikerezh Loumoumba), ha da zirouestlañ ivez kudenn  
 111 Tchombe (atav en toull-bac'h) ha gouarnamant Katanga.  
 111 war-dro kreiz ar miz koulskoude, Kasavoubou a lavaras e oa bet  
 111 irienn d'e lazhañ, hag e tamallas ar Broadoù Unanet da vezañ en taol.  
 111
- 111 KUDENN LAOS : Ar vodadeg etrevroadel graet e Jenev evit reizhañ kudenn  
 111 Laos ne seblant ket mont kalz war-raok. Bez' ez eus c'hoazh krogadoù er  
 111 vro-se etre ar re a-du gant ar gumunourien hag ar re all.  
 111
- 111 DIKTATOUR MUNTRET : Rafael Trujillo, a oa bet e-pad 30 vloaz diktatour  
 111 ar Republik Dominikan, a voe muntret d'an 30 Mae. A garr-tan a voe taget  
 111 gant tud dianav. A-raok mervel e klaskas en em zifenn o tennañ gant e  
 111 revolver war e dagerien.  
 111 Abaoe 1930 e oa Trujillo mestr diharz war ar Republik. Pep tra a oa  
 111 dindan e c'halloud, ha frankiz ebet ne veze lezet gant den. Skoazellet  
 111 oa gant tud e diegezh, perc'henned war ul lodenn vras eus douaroù ha  
 111 madoù ar vro. Gwarezet e veze gant poliserien niverus. Dre-holl e weled  
 111 poltredoù ha delwenoù anezhañ, ha bemdez-c'houlou e veze kanet e  
 111 veuleudioù gant kazetennoù ha radio. Oadet oa a 69 bloaz.  
 111
- 111 SUAFRIKA DISHUAL : Ur sizhun a-raok an deiz ma tlee bezañ distaget  
 111 Suafrika diouzh ar Gumuniezh Vreizhveurek, e voe bac'het un niver a dud  
 111 war urzh ar gouarnamant. Harzoù-labour a oa bet aozet gant an dud a liv,  
 111 ha tud wenn ivez, evit enebañ ouzh ar Republik nevez hag ar politikerezh  
 111 Apartheid.  
 111 An enebensav-se, avat, ne hañval ket bezañ graet berzh. D'an 30 Mae  
 111 e voe ganet ar Republik, saludet gant trouz kleier ha tennoù kanol.  
 111 Stad ekonomek ar vro a zo fall. Net eo bet d'ar gouarnamant difenn ouzh  
 111 an estrenien o doa fiziet arc'hant e Suafrika kas o arc'hant er-maez,  
 111 pezh na roy ket kalon da fiziourien all mar deus ezhomm eus arc'hant  
 111 estren adarre.











AR BLANEDENN VEURZH

- 111  
 111  
 111  
 111  
 111  
 111  
 111 Eviti da vezañ lugernus en noz, a-wechoù lugernusañ tra en oabl  
 111 goude al Loar hag ar werelaouen, ar blanedenn Veurzh ne seblant kaout  
 111 anv ebet e yezh ar werin. Anv Meurzh, doue ar brezel, a zo bet roet  
 111 dezhi en Henamzer, abalamour, a lavarer, d'he liv ruz.  
 111 Treiñ a ra pelloc'h diouzh an Heol eget an Douar : well-wazh  
 111 225 milion Km., e-lec'h 150 milion. "Bloaz" Meurzh a bad keit ha 687  
 111 deiz-Douar. Treiñ a ra avat ar blanedenn warni hec'h-unan tostik tra  
 111 evel an Douar : e 24 eur 37 munutenn 22,6 eilenn.  
 111 E keñverioù all ivez ez eo heñvel ouzh an Douar. Hec'h ahel a ra  
 111 ur c'hognad 25 derez war he flaenenn-gelc'hdreiñ (Douar : 23 derez 1/2),  
 111 ha war Veurzh ez eus eta rannamzerioù evel war an Douar : nevez-amzer,  
 111 hañv, diskar-amzer ha goañv. An temz-hin a zo yenoc'h eget hon hini, o  
 111 sevel betek war-dro 20 derez en hañv, o tiskenn er goañv avat kalz  
 111 izeloc'h eget war hor planedenn-ni.  
 111 Bihanoc'h eo Meurzh eget an Douar : tost 7 gwech buhanoc'h (da  
 111 lavarout eo, e dreuskizenn a zo war-dro an hanter eus hini an Douar).  
 111 E duzunder a zo bihan ivez : 4 (Douar : 5,5). An herregezh-achap n'eo  
 111 nemet 4 Km.9 an eilenn (Douar : 11 Km.2). Un den war Veurzh a bouezfe  
 111 5/14 hepken eus e bouez war an Douar.  
 111 Meurzh a red en-dro d'an Heol un tammig gorrekoc'h eget an Douar.  
 111 E gelc'hdroad a zo elipsek-tre. A-wechoù e c'hell bezañ 56 milion Km.  
 111 diouzhimp, a-wechoù 96 Km. Setu perak ez eo a-wechoù aes, a-wechoù  
 111 diaes da welout.  
 111 Da vihanañ, e c'hell bezañ gwelet. Ne vez ket kuzhet, evel ar  
 111 Werelaouen, gant gwiskadoù koumoul. Tu a zo eta da dresañ kartennoù,  
 111 dre harp un teleskop mat, ha kartennoù a zo bet savet adalek ar 17-vet  
 111 kantved.  
 111 Petra weler ?  
 111 Ur gorread arruz, warnañ tachennoù glas-gwer. An tachennoù glas-  
 111 -gwer-se a voe kammgereret da gentañ evit morioù. Soñjal a reer bremañ  
 111 n'int ket. Abegoù a zo da grediñ ez eo rouez an dour war Veurzh. Douget  
 111 e vezer kentoc'h da lakaat e verk ar glas-gwer doareoù plant, disheñvel  
 111 avat diouzh plant an Douar (nemet al liken hag ar man), dre na gav  
 111 ar spektroskop enno roud ebet a glorofil.  
 111 Ar gorread arruz a hañval bezañ gouelec'hioù. Neblec'h ne weler  
 111 ardamez a venezioù bras.  
 111 Un dra a verzer ouzhpenn o sellout ouzh Meurzh eo tachennoù  
 111 gwenn-kann, unan war benn-ahel an hanternoz, unan war benn-ahel ar  
 111 c'hreisteiz. E-pad ar goañv e kreskont, ha digreskiñ a reont buan pa  
 111 deu an nevez-amzer. Tachenn ar c'hreisteiz, an hini vrasañ e-pad ar  
 111 goañv, a goazh a-grenn a-wechoù e-pad an hañv. Tachenn an hanternoz,  
 111 hag hi bihanoc'h e-pad ar goañv eget hini ar c'hreisteiz, ne da morse  
 111 da get evelato e-pad an hañv. Peurliesañ e kreder ez eo an tachennoù





DOAREOU AR MERC'HED KANT VLOAZ 'ZO

gant Goulven Morvan

Studi lennegezh Vreizh a zo bet re lezet a-gostez. Er bloavezhioù-mañ, avat, e teuer da veizañ gwelloc'h n'eo ket a-walc'h lenn an oberoù hag ar c'helaouennoù nevez. Pep Breizhad a gar e yezh hag e vro a dle anavezout, ken pizh ha ma c'hell, skridoù an amzer dremenet.

Ur skoilh bras a zo koulekoude : ar skridoù kozh a zo diaes da gavout, hag ur wech kavet, daoust m'int aes da gompren peurliesañ, e ranker kaout goar evit o lenn aketus ha war o hed. Ret eo mont dre gantadoù ha kantadoù a bajennoù enoeüs ha didalvoud a-raok kouezhañ war ur pennad dudius ha talvoudek.

An dra-se, merkit ervat, a zo gwir a-zivout holl lennegezhioù ar bed. Ret eo ober un dibab. N'eus diforc'h etre lennegezh Vreizh hag al lennegezhioù all nemet war ur poent : er broioù all, enno skolioù da genteliañ ar yezh, enno tud a zo o micher studiañ al lennegezh ha kelenn anezhi, an dibab a zo bet graet abaoe pell. E Breizh e chom da ober.

Adembann pennadoù gwellañ hol lennegezh kozh n'eo ket kefridi ABK. Evelato e fell dimp, gwech an amzer, lakaat dirak hol lennerien pennadoù berr tennet diouzh oberoù hor skrivagnerien a werso.

E renk kentañ ar skrivagnerien a c'hellomp tennañ hor mad eus o skridoù, emañ Goulven Morvan, "an Tad Goulven", evel ma veze anvet war fin e vuhez, kentañ rener FEIZ HA BREIZH (1819-1891) (1). Skrivañ a rae kalz, skrivañ a rae buan, ha skrivañ a rae mat: ur c'helaouenner ganet ! Ar pennad da heul a gaver en e levr "Kentelioù hag Istorioù a Skouer Vat". - ROPARZ HEMON.

---

- Asa, tad-kozh, gwall lopañ a rit, evelkent, war gein ar wazed hag ar vugale. Hag ar merc'hed, n'hoc'h eus-hu netra da lavarout diwar o fenn ?

- N'em eus nemet bete re.

- Livirit deomp 'ta ur ger bennak.

- Ar merc'hed o deus un dra bennak muioc'h a furnezh, muioc'h a skiant vat, muioc'h a vouedenn-benn evidomp-ni.

- Neuze 'ta e tlefemp kemerout o ali, e tlefemp zoken o lezel d'hon ren ?

- Hañ, ya ! ne ve ken nemet o lezel d'hon ren ! Ne ve ken nemet o lakaat da vont war a-raok ivez evel ar wazed ! Neuze ez afe an traoù en-dro ! Neuze e ve graet lezennoù ! Bremañ e trabellont a-walc'h hep

(1) Diwar-benn Goulven Morvan, gwelit "Istor lennegezh vrezhonek an Amzer-vremañ", gant Abeozen, p.78, pennad 107.

- an dra-se. Neuze hep mar e vent gwelet o prezeg war an holl dachennoù marc'had. 111
- Ha perak ne rafent-i ket a lezennoù ivez mar o deus skiant a-walc'h ? 111
- Neuze e kollfent ar pezh o deus. C'hoant a-walc'h o deus, hep kement-se, da vale war roudoù ar wazed. Gwelout a reer hiniennoù, brageier ganto, togoù gwazed war o fenn, ur gorzenn en o dorn hag ur segalenn en o genou. Ar re-se, hep mar, ne c'houlennfent ket gwell eget bezañ karget da ren ar bed. 111
- Ha petra livirit eus ar pikol brozh-se a zougont hag a zo dindani, evit reiñ tro dezhi, ur pezh manikin pe ur c'hloc'h kement ha kloc'h bras Brasparz, hag a c'halver, a gredan, krinolin ? 111
- Arinañ lin ? Krizañ lin ? Lin kriz a-walc'h eo sur, rak meur a hini eus ar re a zoug ar paneroù bras-se o deus a-vec'h un hiviz lien-stoub da lakaat dindano. A drugarez Doue, ar c'hiz divalav-se n'eo ket deuet c'hoazh war ar maez, hag ar merc'hed a stag d'al labour n'he c'hemerint ket buan. Mar gell avat ur strinkell pemzek pe c'hwezek vloaz kaout fred da vont e kêr, ha pa ve da blac'h-krot pe da blac'h-ar-yer e ve, a-barzh ur miz goude e vezo gwelet ivez kelc'hiet evel ur varrikenn, taolet ganti dreist ar c'hilhoù-se ur stlabez braveri bennak da c'holeiñ he zruilhoù. 111
- Ar merc'hed diwar ar maez a gavit fur 'ta, tad Ivon ? 111
- Furoc'h e vijent da vihanañ ma ne lakajent morse o zreid e tavarn ebet, ma o divije skiant a-walc'h evit chom hep mont da heul gwazed, pactred daoubennek, d'an tiez-se e-lec'h ne zeskont ket a dra sur bezañ furoc'h. A ! me garje ho pije klevet Lan an Dall, ur mignon am eus du-se e Bro-Leon, o komz diwar-benn ar merc'hed distrantell-se, o tistagañ war gein ar strinkelled, ar pennoù skañv-se a zarempred an tavarnioù, hag a ya ac'hano roget o c'hoef pa n'o deus ket e gollet, hag a weler a-wechoù ur votez ganto eus a bep parrez. Rak eno e vez kollet, troket meur a dra. 111
- Aon am eus, tad Ivon, na rafec'h ivez evel kalz a re gozh, a zo dalc'hmat o fougeal an amzer dremenet, hag a gav abeg e kement a welont bremañ, ha dreist-holl er re yaouank. 111
- N'em eus c'hoant ebet da fougeal an amzer gozh diwar goust an amzer bremañ. Koulskoude e ve ret bezañ dall ma na welfed ket ez eus hiziv dizurzhioù ha ne glevet anv ebet anezho gwechall. Ha n'eo ket gwir ez eus teir gwech muioc'h a davarnioù hiziv evit a oa bremañ ez eus hanter-kant vloaz ? Dek gwech muioc'h zoken a c'hellfen da lavarout, ha ne lavarfen ket re. Pelec'h ho pije kavet neuze ur plac'h yaouank divezh a-walc'h evit mont d'an davarn e-touez bandennoù gwazed ? E pelec'h ho pije kavet zoken ur plac'h yaouank hag he divije kredet mont en hent hec'h-unan skoaz-ouzh-skoaz gant un den yaouank ? Kuziañ he divije graet bete gwenn he daoulagad ma vije lavaret anv eus a un dra evel-se dezhi. Ha koulskoude hiziv e weler an dra-se hag en deiz hag en noz. Mar gweled eta un dizurzh bennak en amzer gozh, hag e weled, setu aze da vihanañ unan ha ne weled ket. 111

111  
 111  
 111





Krennarded ha tud yaouank. Kenetrezo, evit ne vern pe gaoz, e reont gant ar galleg. Pa vezont o kaozeal gant tud koshoc'h e reont gant ar brezhoneg. 111

5) Ur strollad-c'hoari a zo, renet gant ar c'hure. Ne vez netra vrezhonek ganto, war a seblant (ne veze ket kennebeut e 1933 !) 111

Betek 1935-40 e veze festoù ar peurzorn, ha da Foar ar Rouaned (6 Genver) e veze banvez er mereurioù bras. Neuze e veze kanet sonioù brezhonek. Heñvel oa evit ar festoù-eured. 111

Ne vez ket mui a festoù-peurzorn abaoe ma reer gant mederezed-dornerezed. (Ar c'henskriver-mañ ne lavar netra diwar-benn ar festoù all, nemet da vanvez ar "c'hatorzjuie" ! ma vez paeet ur banvez er vourc'h da re gozh ar barrez, e kan ar re-mañ o sonioù brezhonek). 111

6) Tud ha n'anavezet ket a gomzer galleg outo. - an darn vrasañ a lez ar brezhoneg da gouezhañ. - alies ez eo ar merc'hed yaouank hag a stag da c'hallegañ, o kredif bezañ diluoc'h. - Ar gerent ne redont ket ar vugale da chom hep komz brezhoneg. - an hini a gomz brezhoneg ne sell ket dirak piv e vez o komz (= n'en devez ket a vezh). - ar mereurioù, pa vez an dud ouzh taol, e komzer atav brezhoneg, nemet ar re ha ne ouzont ket ar yezh evel just. 111

(Ar c'henskriver-mañ a oa dinoc'h o reiñ an diskleriadurioù. Kredif a ra e ranker tremen un destenn vrezhonek er "bacho" hevlene. D'e soñj, e klevet muioc'h a vrezhoneg e kostez Pont-'n-Abad eget er c'horn-bro en-dro da Nosporden-Konk-Kemper). 111

-----  
DISKLERIADUR GRAET GANT UR VAOUEZ 35 BLOAZ O CHOM EN ERGE-VIHAN : 111

(Genidik eus Sant-Tevi, dimezet gant un den eus ar barrez e-kichen, Sant-Evarzeg, - diseblant a-walc'h ouzh kudenn ar brezhoneg). 111

"Amañ en-dro din, ne gomz den brezhoneg ouzh e vugale. Me ha va gwaz a gomz atav brezhoneg kenetrezo. An dud tro-war-dro a gompren mat-tre brezhoneg. 111

"Pa vez Mamm amañ, e komz ouzh ar vugale e brezhoneg, hag int a respont e galleg. Va div verc'h henañ, 14 ha 15 vloaz, a oar un tammig brezhoneg. Nevez 'zo he deus jubennet unan anezho en ur stal e kêr evit ur gozhiadez na ouie ket galleg. Hervez Mamm, am dud vras war ar maez a gomz brezhoneg etrezo, met ne reont ket ouzh o bugale. 111

"Anavezout a ran tud hag o deus komzet brezhoneg a-raok komz galleg. Hogen ur wech deuet e kêr da chom, e reont van da vezañ ankounac'haet yezh o c'havell. 111

"Evidon n'em bez ket mezh o komz brezhoneg e ruiou Kemper ken kreñv ha galleg." 111

-----  
 Kalzig a respontoù a zo deuet dimp, hag hon enklask diwar-benn stad ar Brezhoneg a seblant ober berzh. Hogen ezhomm hon eus da gaout kalz, kalz muioc'h a respontoù c'hoazh. Pedit a reomp dreist-holl ar re yaouank a veajo dre ar maezioù en hañv-mañ da gas dimp respontoù. - ABK. 111



111 m  
 111 mmm inm mmm mmmm mmmmm mmm  
 111 m m mmm m m mmm m m m mmm  
 111 m

AL LIORZH E-TAL AR MOR

(war an ton a Iwerzhon :  
 'Tis the last rose of summer..).

3/4

Mb'.fa"/Sol-mb-re'.do"/sb'Sol-  
 Mb'.fa"/Sol-lb'.sol"fa'.Mb"/Mb- -  
 Mb'.fa"/Sol-mb-re'.do"/sb'Sol-  
 Mb'.fa"/Sol-lb'.sol"fa'.Mb"/Mb- -  
 sb'.Sol"/mb-mb'.re"do'.sb"/sb-Sol-  
 sb'.Sol"/mb-mb'.re"do'.si"/do-6redosi"do're"6+mb-  
 Mb'.fa"/Sol-mb-re'.do"/sb'Sol-  
 Mb'.fa"/Sol-lb'.sol"fa'.Mb"/Mb:.

1.

2.

111 Bez' e welan dre va spered	mo n'eus doan na levenez,
111 Ul liorzbig e-tal ar mor,	N'eus nepred c'hoarzh na morse kañv,
111 Dindan goumoul melezouret	Na goañv kriz nag amzer-nevez :
111 Gant an dour atav sioul ha lor.	Atav douster an dibenn-hañv.
111 Gwech ebet ne deus heol o parañ	Gwech ebet ne deu den da gantren
111 War ar bleunioù dislivet ha blin.	War ar geot steredennet a roz.
111 Gwech ebet ne deus evn o kanañ	Met en anheol gwan e tremen
111 'Kreiz an deil gweñvet-holl ha krin.	Spesoù karet an amzer gozh.

MA VE DIN ROET ...

(war don ur ganaouenn a Gembre : Pe cawn i non)

3/4 hep mont re vuan.

FaSol'/la'la'la-solFa'/Mi'sol'Sol-  
 Fabol'/la're'do-.sb'/sb'la' -  
 FaSol'/la'la'la-solFa'/mi'sol'Sol-  
 Fabol'/la're'do-.sb'/la'Fa' -  
 lasb'/do'do'do-mb-/re'dosb"la-  
 FaSol'/la're'do-.sb'/sb'la' -  
 FaSol'/la'la'la-solra'/Re'sol'Sol-  
 FaSol'/la're'do-.sb'/la'ra' -

1.

2.

111 - Ma ve din roet ar bed bras,	- Petra 'ra din an eon, ar glizh,
111 An heol, al loar, ar stered,	An oabl, ar ganevedenn ?
111 Ez afen prim d'o dastum holl	Pa vefent deoc'h, c'hwil 'our ervat
111 Evidoc'h, muiañ-karet.	Ne dafen ket d'o goulen.
111 Me 'rafe ur sae gant ar glizh,	Un draig a fell din hepken,
111 Gant an oabl glas ur vantell,	Mar don ho muiañ-karet :
111 Ur gouriz gant ar wareg-c'hlav,	M'ho ped, va mignon, war va biz,
111 Gant eon ar mor ur c'habell.	Lakait ur walenn-eured.

111 PEP GWIR MIRET-STRIZH : Skrid brezhonek ar sonioù-mañ, savet gant Roparz  
 111 Hemon, ne c'hell bezañ moulet, liesskrivet, lakaet war bladennoù nag  
 111 embannet e doare ebet hep aotre. Svit kaout aotre, skrivañ d'ar  
 111 gelaouenn, pe da Roparz Hemon, 1-A, Leeson Park, DUBLIN 6. (sire).

m  
m  
mmm mm mmm mmm mmmmm mmm  
mm m mm m m m m m m m m  
m m mm m m mmm m m m mmm  
m

## EVIT AR VUGALE

AR MILINER DRANT

(Kanaouenn-bobl a Vro-Saoz)

6/8

Re'/Sol-Sol'Fd-Re'/sb-sb'la-  
do'/sb-Sol'la-Fd'/Sol-.Sol-  
Re'/Sol-Sol'Fd-Re'/sb-sb'la-  
do'/sb-Sol'la-Fd'/Sol-.Sol-  
sbdo"/re-re're-sb'/do-do'do-  
la'/sb-Sol'do-sb'/sb-.la-  
Re'/Sol-Sol'Fd'.Mi"Re'/sb-sb'la-  
do'/sb'.la"Sol'la-Fd'/Sol-.Sol-

1.

Ur mestr-miliner 'tal ar stank  
A veve gwechall-gozh.  
Ha klevet 'veze gant an dud  
O kanañ deiz ha noz.  
Ne vern petra e oa e son,  
Un diskan ne oa ken :  
"Da zen ebet ne dlean tra,  
Ha ne ran forzh a zen."

2.

"Va milin goant a zo va gwreg.  
N'em eus na merc'h na mab.  
E-barzh va zi ez on ar mestr,  
An dug, ar priñs, ar pab.  
Pe'm c'haver fur, pe'm c'haver sot,  
Ne ra din tomm na yen.  
Da zen ebet ne dlean tra,  
Ha ne ran forzh a zen."

BLEUNIOU-KEREZ

(Ton-pobl a Vro-Japan)

4/4

/si-si-dd:/si-si-dd:/  
/si-dd-re-dd-/si-dd'si'Sol:/  
/Fd-Re-Fd-Sol-/Fd-Fd'Re'Dd:/  
/si-dd-re-dd-/si-dd'si'Sol:/  
/Fd-Re-Fd-Sol-/Fd-Fd'Re'Dd:/  
/si-si-dd:/si-si-dd:/  
/ - Fd-Sol:/dd'si'Sol-Fd:/

Bleuniou-kaer ! Bleuniou-kaer !  
Bleuniou-kerez kaer, hag a-forzh !  
Dre al liorzh ha dre ar porzh,  
'Hed an hent dre-holl, 'hed ar stêr,  
O c'hwez-vat o vont dre an aer.  
Deut-hu 'ta ! Deut-hu 'ta !  
Deut-hu d'ober ur sell !


(Pep giwr miret-strizh).





dre-holl. En diwezh e voe kavet e-barzh ul levr ur golo kozh, melenet gant an amzer.	111
- Ret ober gantañ ! - eme an Aotrou Korfmat. - Ha soñj ac'h eus eus chomlec'h an den-se ?	111
- Me a gave din ez poa merket anezhañ tu bennak. Gortoz : an Aotrou Ar Gall ... e-kichen Kemper emañ o chom.	111
- Ha te a fell dit e skrivfen : "An Aotrou Ar Gall, e-kichen Kemper" ?	111
- Mat ! ne ouzon ket ... Ur barrez vihan eo ... Peseurt parrezioù a zo e-kichen Kemper ? ... Gortoz.	111
An It.Korfmat a yeas er gegin. Distreiñ a reas gant almanak ar Post. Kaer a voe klask, ne voe kavet netra. Neuze e voe lennet roll kumunioù an departamant.	111
- Henvig ! - eme an Itron Korfmat. - Henvig an hini eo. Ha bremañ em eus soñj : an ti a zo "Villa Tereza" e anv.	111
- Henvig a zo e-kichen Montroulez.	111
- N'eus forzh ! Skriv buan, ha kae da bostañ al lizher.	111
- Ro din un timbr, - eme an Ao.Korfmat o wiskañ e votoù.	111
Ne oa timbr ebet en ti. Nav eur hanter e oa. Ar staliou-butun a oa serret.	111
- Ha ma'z afes da c'houlenn gant re Bennamen ?	111
Re Bennamen a oa amezeien. N'o doa ket a dimbroù. Met ali a rojont d'an Aotrou Korfmat da vont da brenañ un timbr e tavarn ar Ru Vras, a oa stal-vutun war un dro.	111
Pezh a reas. An timbr a voe prenet, peget war c'holo al lizher. An Aotrou Korfmat a gemeras ur werennad gwin gwenn, gounezet-mat goude kement a boan.	111
- Graet eo ? - eme e wreg, a oa dija en he gwele, pa zistroas d'ar gêr.	111
- Graet eo, - emezañ.	111
- Doue ra vo meulet ! Poent e oa, - emezi.	111
Hag e troas he fenn d'en em reiñ da gousket, da huñvreal marteze en ti koant e-kichen ar mor.	111
An Aotrou Korfmat ne gouske ket koulz. Klevout a reas an horolaj o seniñ an hanternoz. Ur menoz iskis a dreuzas e benn. Astenn e zorn a reas en deñvalijenn betek e borpant, a oa lakaet war gein ur gador. Er c'hodell-vruched, en tu dehou, e santas e zoug-paperioù, hag un dra voan e-kichen : al lizher, en doa disoñjet postañ, hag eñ o tont eus an davarn, savet e fri, laouenaet-holl e spered gant e vanne gwin gwenn.	111
(Pep gwir miret-strizh).	111
-----	
C.C.P.P. No.36.242.	111
Le Gérant : Mlle Y.Martin, 21, rue Dixmude, St-Marc, Brest.	111
Ronéotypé par Rinciaux, 1, rue Alain Fournier, Brest.	111





Revue mensuelle-No.32-Août 1961

Kelaouenn vizeiek-Niv.32-Eost 1961

Abonnement annuel : 7 NF.


Koumanant-bloaz : 7 LN.

CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, St-Marc, BRIST.

PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON

T a o l e n n

111		
111		
111		
111	<u>Ar miz</u> .....	p.113
111	<u>Ar blanedenn Verc'her</u> .....	p.116
111	<u>E Gouezelva Conamara</u> (A.Heussaff) .....	p.117
111	<u>Va rastellad</u> (Benead).....	p.118
111	<u>Muioc'h a aon eget a c'hloaz</u> (G.Morvan) .....	p.119
111	<u>Stad ar Brezhoneg</u> .....	p.122
111	<u>Skridoù nevez</u> (Roparz Hemon) .....	p.124
111	<u>Kanomp : Izold a Vreizh - Dit hepken</u> .....	p.125
111	- : <u>Soazig hag he mamm</u> .....	p.126
111	<u>DALC'HOMP : Ar gitar</u> .....	p.127



D r e a n D o u a r

111 Emsav ar gouerien e Breizh : D'an 18 Mezheven, e voe dalc'het Karaez  
111 gant ar gouerien. En em dolpañ a rejont ivez e kostrenen hag e Loudieg.  
111 En endervezh e voe stanket an hent-houarn Roazhon-Redon e-kichen Mesag,  
111 hag eno e savas kann gant an archerien. Trouz a voe ivez e Pont-ar-  
111 C'hastell. e-kichen Sant-Nazer.  
111 D'an 19 e savjod bardelloù e Ploue, na voent lamet nemet goude  
111 emzivizoù hir gant an archerien kaset eus An Oriant.  
111 Rostrenen a voe adarre lec'h-envod ar gouerien d'an 20. En deiz-se,  
111 kendisplegadeg ar merc'hed e Gwened. E Sant-Nazer, en abardaez, kouerien  
111 ha micherourien en em unanas evit enebañ ouzh doareoù-ober gouarnamant  
111 Pariz.  
111 D'an 21, diouzh ar nintin, e voe bodadeg e Kallag.  
111 D'an 22 ez eas an archerien gant gaz-daeraouiñ ouzh ar goueriaded  
111 e Lambal. En deiz-se e oa dalc'het Montroulez gant bagadoù stank a  
111 archerien, o c'hortoz ar miliadoù a gouerien a zeuas di en endervezh da  
111 geñver prosez an Aotrounez Leon ha Gourvenneg, bet bac'het d'an 8  
111 Mezheven. An daou zen a voe didamallet gant ar varnerien.

Emsav ar gouerien en tu all da Vreizh : Emsav ar gouerien a zo en em astennet er-maez eus Breizh. D'an 19 Mezheven e voe tolpadeg e Vande dirak prefeddi La Roche-sur-Yon, ha maered ar rannvro a zivizas ober harz-labour e-pad 5 devezh. D'an 20 e voe darbet da brefeddi Poitiers bezañ kemeret gant ar gouerien. En devezhioù goude e voe tolpadegoù e Flandrez hag e kreiz-kornog Okitania (Toloza, Montauban, Cahors, Pau, Agen, Aurillac). D'ar 26 e voe trouz e Grenoble, Niort, Roc'hell, Enez-Oleron, h.a. D'ar 27 e oa trubuilh en un ugent bennak a zepartamantou, ha dreist-holl e Beziers, a voe dalc'het un devezh a-bezh ha c'hoazh un darn vat eus an noz gant ar winiennerien. An emsav a gendalc'has d'an 28 e departamant an Herault hag e Flandrez (Béthune, Calais). D'an 29, en deiz end-eeun ma tigoras emzivizoù etre dileuridi ar gouerien ha gouarnamant Pariz e voe diskuliadegoù all, ha kann zoken e Nimes etre gwiniennerien hag archerien. En devezhioù war-lerc'h e voe c'hoazh hentoù bardellet. D'an 3 Gouere e voe tro Caen ha Bayeux. D'ar 4 e voe trouz adarre e Beziers, ha 38 a dud harzet.

Da heul an emzivizoù etre gouarnamant Pariz hag ar gouerien e voe grataet lod eus goulennoù ar re-mañ, ha strolladoù-studi anvet da embreger goulennoù all. Ar gouerien o deus lavaret gortoz betek an 2 a viz Eost a-raok ober diskuliadegoù all mar deo ret.

Tiroliz ar C'hreisteiz hag Italia : D'an 11 Gouere e voe troc'het al linennoù hent-houarn etre Italia ha Bro-Suis, koulz hag etre Italia hag Aostria. Peulioù-tredan a oa bet lakaet da darzhañ gant Tiroliz ar C'hreisteiz, a c'houlenn o emrenerezh, pe da vihanañ muioc'h a frankiz evit o bro. Tenn eo an darempredoù etre Italia hag Aostria, gouarnamant Roma o tamall da c'houarnamant Vienna reiñ harp da emsaverien Tirol ar C'hreisteiz. Kälzik eus ar re-mañ a zo bet bac'het gant Italiz.

An dispac'h en Aljeria : War-dro 80 den a voe lazhet ha war-dro 300 gloazet d'ar 5 Gouere en Aljeria, e-doug un devezh harz-labour aozet gant FLN evit enebañ ouzh rannidigezh ar vro, kinniget gant gouarnamant Pariz. Ar c'hêrioù bras a oa dalc'het-start gant an archerien hag ar soudarded c'hall. An displegadegoù a c'hoarvezas dreist-holl e Konstantin hag e kêriadenoù war ribl ar mor er c'hornog da Aljer.

Ar gwalldaolioù a gendalc'h hogozik noz-deiz : greunadennoù ha tennoù a-berzh ar vroadelerien, tarzhadenoù plastik a-berzh arme guzh an Europiz.

Tunizia ha Bro-C'hall : E miz Gouere e roas ar Prezidant Bourgiba da c'houzout e tleje ar C'hallaoued kuitaat Bizerta. Goulenn groñs a reas ivez un tamm eus ar Sahara e tu kreisteiz Tunizia. Ul lizher kaset gantañ da Brezidant Frañs o vezañ chomet direspont, e c'hourc'hemennas bardellañ an hentoù en-dro da gazarnioù hag annezlec'hioù ar soudarded c'hall e Bizerta d'an 19 Gouere. Gouere hemenna a reas ivez d'e soudarded mont war-raok er Sahara.

War-du un emglev e Bro-Gongo ? : Tchombe, a oa dalc'het en toull-bac'h



111 e Kerleopold, a voe dibrizoniet d'an 22 Mezheven, hag a brometas  
 111 kenlabourat hiviziken gant ar gouarnamant-kreiz. War e zistro e Ker-  
 111 elesbed, e tisklerias avat e virje Katanga hec'h emrenerezh. Parlamant  
 111 Bro-Gongo a dlee en em vodañ e skol-veur Lovanium, e-kichen Kerleopold,  
 111 e dibenn miz Gouere, ha kannaded a-du gant Gizenga, diskibl Loumoumba,  
 111 a zegouehas eno d'ar 16.

111  
 111 Kelc'hlizher-meur ar Pab : Emañ ar Pab Yann XXIII o paouez lakaat  
 111 embann e gelc'hlizher-meur gortozet abaoe ur mare. Ken pouezus e vo hep  
 111 mar ha kelc'hlizher-meur brudet Leon XIII, "Rerum Novarum", embannet  
 111 70 vloaz 'zo. Anv ar c'helc'hlizher-meur nevez eo "Mater et Magistra"  
 111 (Mamm ha Kelenner). An hirañ-holl eo en istor an Iliz. Daou boent a  
 111 venegimp hepken : ar pennad a-zivout gwirioù ar gouerien, hag ar pennad  
 111 a-enep an drevadennidigezh a c'hiz nevez, kuzhet dindan an anv a  
 111 skoazell ekonomek d'ar pobloù isdiorroet.

### E n E c' h o n d e r

111 Teir war un dro : Teir adplanedenn a voe taolet a-gevret diwar ur  
 111 fuzeenn hepken eus ar C'hab Canaveral d'an 29 Mezheven. Unan, anvet  
 111 "Injun", a zo graet da studiañ ar gourizad skinoù en-dro d'an Douar. An  
 111 eil, "Greb", a dle muzuliañ ar skinoù X kaset gant an Heol. An trede,  
 111 "Transit 4-A", a zo graet evit merkañ d'al listri ha d'ar c'hirri-nij o  
 111 lec'hiadur resis. Enni ez eus ur vaterienn nukleel maget gant an Heol,  
 111 ar wech kentañ ma strinker seurt ardivink en ec'honder. An teir ad-  
 111 planedenn a dro war-hed ur mil Km. bennak diouzh an Douar, hag a chomo  
 111 er vann 50 vloaz, a greder.

111 Ur fuzeenn taolet gant Israel : Ur fuzeenn a voe taolet gant Israel d'ar  
 111 5 Gouere eus un diazezlec'h kuzh, tu bennak war ribl ar Mor Kreiz. Graet  
 111 eo, sañset, evit "studiañ gwiskadoù uhelañ an aergelc'h". Lusket eo bet  
 111 gant un danvez-leskiñ kalet dianav d'ar broioù all. C'hoant bras a zo  
 111 savet raktal gant an Arabed da "studiañ gwiskadoù uhelañ an aergelc'h"  
 111 ivez, hag ar renerien e Kaero o deus goulennet digant an Amerikaned  
 111 gwerzhañ fuzeennoù dezho.

111 Spierezed an oabl : "Midas III", un adplanedenn-spiañ, a zo bet taolet  
 111 gant an Amerikaned d'an 12 Gouere. Ober a ra he zro e 2 eur 40 munutenn,  
 111 3.000 Km. diouzh an Douar, o tremen dre an daou benn-ahel : da lavarout  
 111 eo, e tremeno a-us an holl vroioù, Rusia hag all. Kefridi "Midas" eo  
 111 ditourañ gant ul lagad infraruz kement bannadell pe fuzeenn a strinker  
 111 en oabl. Ur rouedad 12 "Midas" a dle bezañ aozet, a-walc'h da spiañ an  
 111 Douar a-bezh da bep koulz ha da bep momed. E-giz-se, ma tro e penn ar  
 111 Rusianed argadiñ gant fuzeennoù, o devo an Amerikaned un hantereur da  
 111 ober o diarbennoù.

111 En hevelep deiz e taolas an Amerikaned un adplanedenn-oablouriezh,  
 111 "Tiros III", 640 Km. diouzh an Douar, karget da luc'hskeudennañ ar  
 111 c'houmoul evit diouganañ ar reklomoù.

AR BLANEDENN VERC'HER

- Ar blanedenn Verc'her a zo an hini vihanañ eus ar planedennoù "bras". N'eo ket kalz brasoc'h eget al Loar (treuskizenn Verc'her, 4960 Km. - treuskizenn al Loar, 3456 Km.). An hini tostañ ouzh an Heol eo (well-wazh 57.600.000 Km. dioutañ. - Douar, 148.848.000 Km.)
- Pa vez gwelet, emañ izel er c'hornog raktal goude kuzh-heol, pe er reter nebeut a-raok sav-heol. A-wechoù eo ken skedus hag ar steredenn Arkturus. Hogen gwelet e vez dibaot a wech.
- N'eo bet studiet a-zevri nemet abaoe dibenn an 18-vet kantved, ha c'hoazh n'eo ket anavezet-mat. Tachennoù teñval a vez spurmantet war ar gorre da ruzik, hag an tachennoù-se a vir atav o neuz, pezh a ziskouez ez int traoù padus. Kartennoù a zo bet treset zoken. Hogen n'int ket gwall resis.
- Merc'her a laka war-dro 88 devezh-Douar da dreiñ en-dro d'an Heol, hag e laka ivez 88 devezh-Douar da dreiñ warnañ e-unan. Da lavarout eo, ez eo atav an hevelep tu a sell ouzh an Heol. Er c'heñver-se e ra evel al Loar, a sell an hevelep tu anezhi atav ouzh an Douar.
- Ar gelc'hdroad a zo elipsek-kenañ, hag ar blanedenn a ya kalz buanoc'h pa vez tost ouzh an Heol eget pa vez pell dioutañ.
- Dre un teleskop e weler Merc'her peurliesañ e stumm ur greskenn pe un hantergelc'h. Diaes-tre eo gwelout anezhañ e stumm ur c'helc'h, o vezañ ma vez neuze en tu all d'an Heol. Dre studiañ bevenn-diabarzh ar greskenn, e kaver ez eo kammigellek-tre, pezh a rofe da grediñ ez eus menezioù uhel.
- Ma'z eus un aergelc'h en-dro da Verc'her, ez eo tanav-tanav. Ne vez ket merzet pa dremen ar blanedenn dirak an Heol (pezh na c'hoarvez ket alies, rak he flaenenn-gelc'hdreiñ a ra ur c'hognad a 7 derez gant hini an Douar).
- Tenn eo muzuliañ rez-tomnder Merc'her. Tomm-spontus e tle bezañ an tu a vez sklerijennet, yen-spontus an tu a vez bepred teñval. Mont a ra marteze eus war-dro  $+350^{\circ}$  betek tost ar zero klok ( $-273^{\circ}$ ). N'eus ket kalz spi eta da gavout buhez warnañ.
- "VULKAN", AR "BLANEDENN-DASMANT"
- E-pad ur pennad en 19-vet kantved ez eus bet kredet e oa ur blanedenn etre Merc'her hag an Heol. Se a zeuas da heul jedadennoù graet gant ar steredoniour Le Verrier. Hemañ, en doa kavet dre ar jediñ ar blanedenn Neptun e 1846 (ar jedadennoù a oa bet graet a-raok gant Adams, e 1843), a jedas e 1860 e tlee bezañ ur blanedenn o tireizhañ hent-red Merc'her, dres evel ma veze direizhet hent-red Uranus gant Neptun. Ar blanedenn nevez a voe badezet Vulkan. Siwazh, ne voe gwelet biskoazh. An direizhennoù en hent-red Merc'her a vez diskleriet hiziv dre deoriennoù Einstein, o c'hortoz gwelloc'h marteze.









MUIOC'H A AON EGET A C'HLOAZ

gant G.Morvan

Setu amañ c'hoazh ur pennad tennet diouzh skridoù Goulven Morvan, darn eus ur gontadenn anvet "Kolibri". Ar gontadenn-se (n'eus ket da grediñ eo bet ijinet gant G.Morvan e-unan ; adaozet moarvat diwar ur skrid gallek bennak) a zalc'h 24 a bajennoù el levr "Kentelioù hag Istorioù a Skouer Vat". Hir ha ma'z eo, n'eo ket klok. An diwezh a zo bet dastumet e 12 linenn, dre ma oa aet skuizh G.Morvan, pe dre ma kave dezhañ ne oa ket avanturioù mamm Golibri, "ur Spagnolez taolet eno ivez gant ur peñse", kement-se a skouer vat, - ne ouzon ket.

Pezh a ouzon, hag hol lennerien hen gwelo diouzhtu, eo n'eus ket kalz a dud hiziv e Breizh gouest da skrivañ brezhoneg par da hini G.Morvan. Hol lennerien a verzo ivez, ar re a gred eo bet ijinet an holl "c'herioù nevez" gant ABK pe gant an Aotrou Vallee, e veze lod eus ar "gerioù nevez"-se implijet e kreiz an 19-vet kantved. - Roparz Hemon.

Edo ar c'habiten Mistral o vont adarre d'e istor, hag an itron saoz a c'houlenne evit an trede gwech peur e klevjent pelec'h oa bet kavet Kolibri, pa voe klevet ar gedour eus a veg ar wern o krial :

- Kabiten, ul lestr dirazomp en dremmwel !
  - Pe du ?
  - Er gevred izel.
  - Peseurt lestr eo ?
  - Ul lestr forbanned a gredan eo.
  - Ul lestr armet ?
  - Ur renkad kanolioù a-us ar mor.
  - Dre dan pe dre ouelioù ?
  - Dre ouelioù. Emañ oc'h en em lakaat en hon avel evit stankañ an hent ouzhimp, hag hor plaouiañ pa dremenimp.
  - Tron-de-ler, ar C'hallez (1) ne lezo ket he lonkañ evel ur gelienenn gant ur pesk. Ma soñj d'ar morhoc'hed-se ez eont d'hol lonkañ en ur genaouad, e pakint ur souezhenn.
- Ar c'habiten a savas trumm war e skaoñ-c'hed, e lunedìenn-hirwelout gantañ en e zorn. Ne voe ket pell na welas ervat e oa gwir ar pezh a lavare ar gedour. Ul lestr forbanned pe laeron-vor, Arabed pe Vedouined eus an Afrik, a oa ouzh o gortoz hag o tennañ e daol-nij evit dilammat warnezho evel ur sparfell war ul labous.

Eno neuze e savas freuz ha tousmac'h. Ar c'habiten a grie : "Bec'h d'ar stur, bec'h d'an tan, bec'h d'an armoù ! ar vartoloded pep hini

(1) anv al lestr.

d'e labour ha bec'h war al lestr !" ar veajourien a grene evito o-unan hag evit o danvez, o arc'hant. Ar merc'hed a ouele, a gunude, a grie forzh. 111

- Ar merc'hed d'an traoñ, er c'hambrou, - eme ar c'habiten, - ha chom ken na deer d'o zennañ ac'hano. Ar veajourien o deus aon. a ray evel ar merc'hed, ha ger ebet ken. Ar wazed n'o deus ket a aon a gemero armoù da sikour ar vartoloded, ha buan, rak ar vorikoted-hont o deus naon, a gredan, hag o deus mall e rofemp o merenn dezho. Alo ! paotred, un abadenn dañs a vezo, ha ret eo lakaat he holl rubanoù d'ar C'hallez evit diskouez d'ar pennoù-maout-se ez eus ul lestr amañ hag a oar en em gempenn a-zoare p'en deus da vont e-touez an dud. 111

Hep dale ar vartoloded o doa degaset war ar pont armoù a bep seurt, fuzuilhoù, sabrinier, bouc'hili. ar veajourien a oa chomet un hanter-kant bennak anezho da sikour ar vartoloded, hag a oa ganto holl pistolennoù-tro. 111

War ar C'hallez n'oa nemet ur pezh-kanol, a servije muioc'h da c'houlenn sikour pa veze ezhomm eget da vrezelekaat. Hogen ar mestr-kanolier a oa en em lakaet war gorf e roched. Dastumet en doa, evel a lavare, prun da gas d'ar "Vakached", ha poultr ne vanke ket evit o c'has. Martoloded ha beajourien, holl o doa taolet o chupennoù, hag edont e doare da reifñ un degemer birvidik d'ar forbanned, ma klaskjent teurel o c'hraban war ar C'hallez. 111

Lestr ar forbanned, diouzh ar gobari anezhañ, en doa c'hwec'h pezh-kanol, tri a bep tu. Hogen evel n'en doa nemet gouelioù, ne c'helle ket bale na treiñ ha distreiñ ken buan hag al lestr-tan. Rak hemañ, pa oa tommet-mat e gaoterioù ha lakaet sonn war e aheloù, a valee war ar mor evel ur c'harr-tan (2) war un hent-houarn. A-hend-all ar forbanned, a weled war o lestr (3) o sevel o minoù du evel drouksperedoù, o doa gwelet, kredapl, gant o lunedeier, e oa sikour mat war al lestr-beajer, ha ne ziskouezent mui kaout mall da dostaat. Edont evel pa vijent war var o klask gouzout petra a rajent. 111

- Emaint deomp, - eme ar c'habiten Mistral. - Aon o deus. 111

- Kabiten, - eme ar c'hanolier, - emomp war-hed tenn. Ma lavarfen daou c'her d'ar baotred jentil-se e yezh o bro ? 111

- Ya, ya, peogwir ne lavaront ger, eo ret deomp diskouez dezho ne domp ket mut. 111

- Sturier, evezh ! Diskouez atav d'ar baotred du-se penn pe lost al lestr, ha na laka anezhañ morse a-dreuz dezho. Kosteziou al lestr zo giwridik. 111

- Bezit dinec'h, kabiten ! Ne hilligint ket kostezioù ar C'hallez. 111

Stre daou ar c'hanolier en doa laosket un tann kanol, mes al lestr forbanned ne reas van. Hastañ a reas kargañ ha leuskel un eil tenn, ha kerkent ar gedour a grias : 111

(2) Ar ger karr-tan a voe implijet da gentañ gant skrivagnerien an 19-vet kantved evit lavarout "marc'h-du, stlejerez". 111

(3) G.Morvan en deus skrivet : "ar forbanned, pere a weled war o lestr ... " 111



lll - Burzhudus ! burzhudus ! kanolier ; deuet eo ganez avat en dro-  
 lll -añ ! Da brunenn zo aet d'en en lojañ e korf ur lakak bras a oa du-se,  
 lll ar c'habiten noarvat, ur wiadenn lien gwenn a-bezh gantañ troidellet  
 lll en-dro d'e benn da ober boned. Ne all eus e welet oc'h en en deurel war  
 lll e fri hag o hajañ e c'har. Evit hennezh en deus prun a-walc'h.

lll Tousmac'h a savas neuze koulskoude war lestr ar forbanned. Leuskel  
 lll a rejont ur bordead tennoù kanol. Ne glaskent ket avat dont war-raok ;  
 lll tec'hout eo a felle dezho, hag en ur bellaat e tiskargent o c'hanoliou.  
 lll O bolodi koulskoude a reas droug d'al lestr-tan. Ar sininal a voe  
 lll toullet hag eilkostezet, ha ma vijent chomet da stourm, douetus o divije  
 lll gwall lakaet al lestr, ha marteze e gaset d'ar goueled. Hogen kredapl,  
 lll evel ma lavare ar gedour eo ar c'habiten a oa bet lazhet, ha neuze ne  
 lll oa mui a urzh ha ne glaskent mui nemet en en denañ a zañjer.

lll An abadenn, evel a weler, ne voe nag hir na tenn. Muic'h kalz a  
 lll aon eget a c'hloaz.....


lll Mes ar veajourien hag ar beajourezed a oa en en dennet er  
 lll c'hambrou o devoa bet enkreiz eno e-pad an amzer-se. Pa glevjont an  
 lll tennoù kanol, ha dreist-holl pa voe tizhet ar sininal, e soñje dezho e  
 lll oa deuet o eur diwezhañ. Lod a grene, lod a ouele ; lod all ivez a  
 lll bede. Bez' ez oa itronezed hag a oa aet er-aez anezho o-unan gant ar  
 lll strafuilh.

lll Arc'houezet o doa dorioù ar c'hambrou warnezho, hag harpet ouzh an  
 lll nor an nebeudig arrebeuri a oa er c'hambrou-se. Hiniennou a oa en en  
 lll guzhet dindan an dilhad-gwele, evit na vijent ket kavet ken buan gant  
 lll ar forbanned pa deujent warnezho. Rak krediñ nat a raent ez ae al  
 lll laeron-vor d'o lazhañ.

lll Kerkent ha ma oa echu an abadenn, ar c'habiten a red da zi-  
 lll strafuilhañ e veajourien aonik. Hogen poan a voe o reiñ dezho da grediñ  
 lll e oa aet ar forbanned en o zro. Ne felle ket dezho digeriñ o c'hambrou  
 lll na dont ac'hano. Ret e voe d'ar veajourien o doa kemeret perzh er  
 lll stourmad dont da gonz outo ha d'o asuriñ ne oa mui dañjer ebet.

lll Neuze koulskoude o klevout konzoù laouen ar re-mañ, o klevout ivez  
 lll ar vartoloded oc'h en em lakaat adarre pep hini gant e labour en ur  
 lll ganañ hag en ur sotal, ec'h asantjont dont eus an toullou e-lec'h ma  
 lll oant en em guzhet, ha sevel war ar pont. Lestr ar forbanned a oa neuze  
 lll pell diouto, hag a-vec'h hen gweled en dremwel.

lll Neuze, evel ma tegouezh peurliesañ pa vez traoù evel-se, ar re o  
 lll doa bet mui aon eo a ziskoueze muiañ laouenidigezh, hag a grie muiañ o  
 lll c'houlenn penaos oa tremenet an abadenn, ha ret e voe lavarout da bep  
 lll hini anezho ger evit ger penaos oa tremenet pep tra.



KENDALC'H KELTIEK 1961

lll Kendalc'h Keltiek 1961 a vo graet e Gaillinh, Iwerzhon, eus ar  
 lll 14 d'an 19 a viz Eost.





- 111 GWINEVEZ-LOKRIST, kanton Ploueskad, P.a.B.  
 111 E 1928. Pep tra e brezhoneg en iliz.  
 111 E 1961. 1) Ar sarmonioù a vez graet e brezhoneg d'ar  
 111 Sul en oferenn gentañ hag en oferenn-bred ; e galleg en eil oferenn.  
 111 2) Ar c'hatekiz a vez graet e galleg hepken abaoe un nebeut  
 111 bloavezhioù.  
 111 3) Ne vez mui graet a gentelioù brezhonek er skolioù.  
 111 4) Ar brezhoneg a vez implijet dre-holl : e-pad al labour (bepred  
 111 gant ar wazed) ; er gêr (dreist-holl etre tud en tu all da 30 pe 40  
 111 vloaz) ; tud ar vourc'h koulskoude a vez douget d'e zilezel. Ar re  
 111 yaouank a oar brezhoneg, a glevont gant o c'herent. Priedoù yaouank  
 111 'zo (n'int ket niverus) a zesk brezhoneg d'o bugale (dreist-holl ar re  
 111 a zo bet stummet gant kelc'hioù YKAM, ar C'helc'h Keltiek, al lazouù-  
 111 -kanañ).  
 111 5) Ar brezhoneg a vez implijet nebeutoc'h-nebeutañ er bodadegoù.  
 111 Hogen reoù 'zo, evel "Kib ar Joa", ar bodadegoù-karter, a glask ad-  
 111 lakaat hor yezh en enor (kanaouennoù, barzhonegoù).  
 111 6) Ar brezhoneg a ya war goazhañ, en desped da strivoù un nebeut  
 111 tud evit e zerc'hel en e blomm.

-----  
 111  
 111 Pardon Sant Erwan e Sant-Mark

- 111 Un 300 den bennak a oa deuet, da Lun ar Pantekost, 22 a viz Mae, e  
 111 parrez Sant-Mark, Brest, e chapel ar vourc'h kozh, evit lidañ pardon  
 111 Sant Erwan.  
 111 Sarmonet e voe e brezhoneg gant an Ao.Beleg Troal (e sarmon a zo  
 111 bet embannet e diwezhañ niverenn BARR-HEOL). E gonzoù a yeas don e  
 111 kalon an holl.  
 111 Setu amañ ar pezh a lennomp war gannadig ar barrez (Mezheven) :  
 111 "An heol a skede dre an nor digor war c'hlazenn ar chapel, ha  
 111 bannoù ruz ha glas a dreuze ar werenn vras, o lakaat livioù splann war  
 111 an aoter.  
 111 "An holl a gane hor c'hantikoù kozh hag a responte d'an oferenn  
 111 gant kement a galon ma en em santed e gwirionez evel ur familh.  
 111 "Bez' e oa gwechall ur stâtu eus Sant Erwan er chapel. Distrujet  
 111 eo bet. Ur gest a zo bet graet e-doug an oferenn evit sevel unan nevez.  
 111 Marteze e vo tu, da Lun ar Pantekost, er bloaz a zeu, da bediñ dirak  
 111 skeudenn ar sant."  
 111  
 111 -----  
 111 Profoù da ABK (15 C'hwevrer - 15 Mezheven) : An Aotrounez L.Bothorel,  
 111 P.Denez, R.Bothorel, A.Gwilhou, Y.Gwegen, Dr.Etienne, Y.Ar Beg, R.Huon,  
 111 Le Chapelier, 3 LN. pep hini ; An It.de Bellaing, 3 LN. ; An Ao.Chauvel,  
 111 1 LN. ; An Ao.Abad Ar Bars, 2 LN. ; An Dim.Marot, 15 LN. ; en holl, 48 LN.  
 111 Trugarez d'ar re a gas profoù d'hor c'helaouenn, ezhomm bras hon  
 111 eus da vezañ skoazellet.





lll m  
 lll mmm mm mmm ammm mmmmm mmm  
 lll m m mmm m m mmm m m m mmm  
 lll m

IZOLD A VREIZH

(hervez un ton-pobl a Vro-Ganada)

lll 1.  
 lll Ar briñsez en he frenestr,  
 lll A-hed an deiz o wriat,  
 lll O wriat hag o c'hedal,  
 lll O sellout ouzh ar mor.  
 lll "Me a garfe 'ven an avel,  
 lll A ya da Gernev-Veur."

4/4  
 La-/Re-Mi-Fa-Re-/la:Sol-  
 Fa-/Sol-Sol-la-Fa-/Re:Re-  
 la-/la-re-re-do-/la:Sol-  
 Mi-/Fa-Fa-Sol-Sol-/la:.. -/  
 /Re-.Mi'Fa-la-/Sol-.la'Fa-Mi-/Re: -/  
 Fa-/la-.Re'Re-Do-/Re:..

lll 2.  
 lll An tonnoù gren o tañsal  
 lll A lamm, a red, a lugern,  
 lll A dec'h davet an dremwel,  
 lll Davet ar gwalarn yud.  
 lll "Me a garfe 'ven an tonnoù,  
 lll A safliek ouzh e vag."

3.  
 Ha skeud an tour a hira,  
 A hira war an tevenn,  
 A ziskenn war an tonnoù,  
 A veuz e-kreiz ar mor.  
 "Me a garfe 've va c'halon,  
 A veuzfe 'barzh an noz."

DIT HEPKEN

(war un ton alaman eus ar 15-vet kantved)

lll 4/4  
 lll Re-/Re-Re-la-la-/si-si-la-la-/Fd:Mi:/Re: -  
 lll Re-/Re-Re-la-la-/si-si-la-la-/Fd:Mi:/Re:.. -/  
 lll /Dd:Re-.Re'/Fd-Fd-Mi-Mi-/Si:La:/  
 lll /Fd-Mi-Fd-Sol-/la-si-la-Sol-/Fd-Re-Dd-Si-/Fd:Mi:/Re: -

lll 1.  
 lll Va c'halon ha va spered-holl zo dit hepken.  
 lll Pep kened hepdout ha pep joa zo trist ha yen.  
 lll O te, ma soñjfes un tamm ennon,  
 lll 'Ve ar bed ur baradoz a zudi glan evidon.  
 lll 2.  
 lll Da zremm a zeu da'm heul, ne vern pelec'h ez an.  
 lll Un derzhienn eo a zev va gwad evel an tan.  
 lll O nann, ne dec'hi ket adarre.  
 lll Gouez ervat, mar domp rannet, ez talc'han c'hoazh em ene.

Nevez embannet e ti AL LIAMM :

AN TRI BOULOMIG KALON AOUR  
 romant gant Roparz Hemon

Priz : 9 LN.

(18 LN. pe 22 LN. war baper kaer) ; goulenn digant :

R.HUCON, 2, Venelle Poulbriquen, Brest, CCP. RENNES 1629-14.

m  
 mmm mm mmm mmm mmmmm mm  
 m m m m m m m m m m m  
 m m m m m m m m m m m  
 m

SOAZIG HAG HE MAMM

(hervez ur ganaouenn-bobl a Vro-Frankonia)

6/8

/Re-Re'Fd-Fd'/la-la'Fd-Re'/  
 /Mi-Mi'Sol-Dd'/Mi-Re'Re-./  
 /Re-Re'Fd-Fd'/la-la'Fd-Re'/  
 /Mi-Mi'Sol-Dd'/Mi-Re'Re-./  
 /si-si're-dd'/si-la'la-./  
 /Sol-Sol'si-la'/Sol-Fd'Fd-./  
 /Mi-Mi'Sol-Mi'/Re-Fd'la-  
 Fd'/Mi-Mi'Sol-Dd'/Mi-Re'Re-./

1.  
 'Tal he liorz, goude merenn,  
 Kuzhet 'drek ur vodenn lann,  
 Soazig vihan ar verjerenn  
 A zo aet da c'hedal Yann.  
 Met he mignon ne deu ket.  
 Siwazh, ne wel den ebet.  
 Skuizh o c'hedal, Soazig paour  
 'Van kousket war al leton flour.

2.  
 Mamm ar plac'hig zo sortiet  
 D'ober un dro 'tal an ti.  
 Ha pa gav he merc'hig kousket,  
 'Lak ur pokig war he fri.  
 "O va Yannig, te erfin !  
 Na pebezh joa zo ganin !"  
 Eme Soazig, hag e lamm  
 Da bokat c'hwek da veg ... he mamm.

3.  
 'Dreuz he fenn e stlak ur palvad,  
 'Stlak ur palvad 'dreuz he fenn.  
 Digoc'hennet he daoulagad,  
 Soazig zo dihunet-krenn.  
 "A, dimezell, se zo brav !  
 Bremañ, savit en ho sav.  
 'Barzh ar gouent," eme'r vamm,  
 "C'hwi yelo, hag hep dale tamm."

4.  
 "Mont d'ar gouent," eme Soazig,  
 "Ne ran biken, klevit mat.  
 Heñvel hoc'h eus graet, va mammig,  
 Pa oac'h yaouank, gant va zad.  
 'Vit kaout mignon, ma ve ret  
 Mont d'ar gouent, me a gred  
 E ve kloastret meur a verc'h,  
 E chomfe nebeut diwar-lerc'h."

-----  
 PEP GWIR MIRET-STRIZH : Skrid brezhonek ar sonioù-mañ, savet gant Roparz Hemon, ne c'hell bezañ moulet, liesskrivet, lakaet war bladennoù nag embannet e doare ebet hep aotre. Evit kaout aotre, skrivañ d'ar gelaouenn, pe da Roparz Hemon, 1-A, Leeson Park, DUBLIN 6. (Eire)  
 -----  
 -----

GERIADUR ISTOREL AR BREZHONEG, gant Roparz Hemon, a zo embannet an trede kaier liesskrivet anezhañ (CHIPOTAL-DEROU). Priz ur c'haier 100 pajenn, 7,50 LN. - 2 gaeier, 12 LN. - 5 kaier, 30 LN. Talvezout a ra ar boan rakpreañ. Kas an arc'hant d'an Dr. Etienne, Châteaulin,  
 -----

CCP.PARIS 16 093-13.





avat nemet peder c'hordenn, hag e fust a zo kalz hiroc'h eget hini ar gitar. An ukelele a zo aesoc'h da c'hoari eget ar gitar, met e dalvoud-egezh evel benveg-sonerezh a zo dister. 111

Ar gitar, er c'hontrol, etre daouarn ur c'hoarier mat, a zo unan eus ar c'haerañ ha klokañ binvioù biskoazh ijinet. C'hwec'h kordenn a zo warni, teir graet gant bouzellennoù, ha teir graet gant metal goloet a seiz : mi, la, re, sol, si, mi. (Gwechall e veze lakaet daouzek kordenn div-ha-div). En ur c'hoari e piñser ar c'herdin gant biz-meud ha tri biz kentañ an dorn dehou. (Hiziv ez implijer mui-ouzh-mui ur skoer koad, metal, olifant pe zanvez all, a zalc'her etre ar biz-meud ha beg ar biz-yod). Gant bizied an dorn kleiz e starder ar c'herdin evit ober an notennoù. 111

Ar c'hitaroù anvet kitaroù-tredan a vez c'hoariet evel ar re all, nemet ar son, e-lec'h bezañ kresket gant korf kleuz ar benveg, a vez kaset dre dredan d'un uhelgomzer. 111

===== 111

AR BARZH HAG AL LAERON  
(Sina, 9-vet kantved) 111

Ur beajour, o vale e brumenn an abardaez gant un hent distro, a voe paket gant laeron. Mestr al laeron, o kavout e oa e brizoniad ar barzh bras Li Che, a c'houlennas digantañ sevel ur varzhoneg. 111

Li Che a reas ar varzhoneg-mañ : 111

Daeroù ar vrumenn a vrall, 111

A-hed an hent, ouzh ar spern. 111

Eus deil stank ar c'hoad teñval, 111

Kontell al laer a lugern. 111

Met perak ober gwad fall ? 111

Perak tec'hout, pa ouzon, 111

Mar don e kêr, e pep stal, 111

E kavin gwashoc'h laeron ? 111

Raktal e voe roet dezhañ e frankiz. 111

KEVRIN AR BED 111

Ur filozofer brudet en doa kavet, a lavared, Kevrin ar Bed. 111

Ur studier yaouank a voe diaviz a-walc'h evit goulenn outañ petra oa ar c'hevrin-se. 111

Hag ar filozofer da respont : 111


- An hini na oar ket a lavar. An hini a oar ne lavar ket. 111

===== 111  
C.C.P.P. No.36.242. 111

Le Gérant : Mlle Y.Martin, 21, rue Dixmude, St-Marc, Brest. 111

Ronéotypé par Rincazaux, 1, rue Alain Fournier, Brest. 111





Revue mensuelle-No.33-Septembre 1961 Kelaouenn vizeiek-Niv.33-Gwengolo 1961  
Abonnement annuel : 7 NF. Koumanant-bloaz : 7 LN.  
CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, St-Marc, BREST.

PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON

T a o l e n n

111		
111		
111	<u>Bodadeg Veur 1961</u> .....	p.129
111	<u>Ar miz</u> .....	p.130
111	<u>Ha klevet hoc'h eus ?</u> .....	p.132
111	<u>An delenn</u> .....	p.135
111	<u>Stad ar brezhoneg</u> .....	p.137
111	<u>Kamp Logivi</u> (Vefa de Bellaing) .....	p.138
111	<u>Hebraeg hag iwerzhoneg</u> (Alan Heussaff) .....	p.139
111	<u>Kanomp : Boudig al lann</u> .....	p.141
111	- : <u>Manmiz ar c'hizhier</u> .....	p.142
111	<u>DALC'HOMP : Perig ha Gwignolig</u> (Roparz Hemon) .....	p.143

B o d a d e g V e u r 1 9 6 1

Bodadeg Veur Skourr Breizh ar C'hendalc'h Keltiek a vo graet  
e Kemper, d'ar Yaou 28 a viz Gwengolo.  
Emgav da 9 eur 30 en "Hôtel de l'Odéon", 41, ru Jean Jaurès.

Roll-labour

- 1) Envel Kadoriad ha Sekretour ar Vodadeg Veur.
- 2) Lenn danevellskrid Bodadeg Veur 1960.
- 3) Danevellskrid Teñzorierrez ar Skourr.
- 4) Danevellskrid Kadoriad ar Skourr.
- 5) Ragaozñ labour ar Skourr e 1961-62 ha Kendalc'h Keltiek 1962.
- 6) Kudennoù all.

Notenn 1. Un ezel na c'hell ket mont d'ar Vodadeg Veur a c'hell  
kargañ un ezel all da votiñ en e anv. Kas kemenn, a-raok ar 14 Gwengolo,  
da Roparz Hemon, 1-A, Leeson Park, Ath Cliath 6. (Eire).

Notenn 2. Pred a-gevret a vo da greisteiz en ostaleri. Ar re a  
fell dezho kemer ar pred a zo pedet da gas kemenn, ar c'hentañ gwellañ,  
d'an Itron Kemere, 26, ru Elie Fréron, Kemper. - Pellgomz 4-03.

mm	mm	mmmmmm	O	mm	111
m	m	m	m	m	111
mm	m	m	m	m	111
mm	m	m	m	mm	111

Dre an Douar

Troc'h e Berlin : En noz etre an 12 hag an 13 Eost, e voe sparlet Berlin ar Reter gant ar gomunourien. Er sizhuniou kent, milieroù a repuidi eus Reter Alamagn a oa degouezhet e Berlin ar C'hornog evit tec'hout diouzh mac'homerezh ar Re Ruz. Neud-orjal dreinek ha skoilhoù all a voe lakaet gant poliserien ha soudarded ruz hed-ha-hed an harzoù etre an div rann eus kêr, ha miret-strizh e voe ouzh Alamaned ar rann e dalc'h Rusia da dremen hep aotre ispisial er rann e dalc'h ar Stadoù-Unanet, Breizh-Veur ha Frañs.

Bizerta : D'an 19 Gouere, war urzh ar Prezidant Bourgiba, e voe kaeliet Bizerta. Bardellet e voe an hentoù ouzh ar C'hallaoued. En endervezh e voe harzlammet soudarded evit kreñvaat ar gwarnizon gall. Tuniziz a dennas warno. Antronoz vintin e voe kanoliet lec'hioù-difenn ar C'hallaoued.

Keloù a zeuas ivez eus New York e c'houlenne gouarnamant Tunizia bodañ Kuzul Surentez ar Broadoù Unanet.

Krogadoù a voe d'an 20 etre Tuniziz ha Gallaoued, ar re-mañ o klask distardañ ar c'helc'h savet en-dro dezho.

War un dro e oa bet kaset ur bagad Tuniziz er Sahara, da blantañ banniel Tunizia en darn eus ar gouelec'h a fell dezhi kaout. Eno ivez e voe kann etre Tuniziz ha Gallaoued.

A-benn an 21, gwarnizon gall Bizerta, kresket dre vor ha dre'n aer, a zeuas a-benn da startaat e zalc'h war ar porzh, en desped da strivoù kalonek Tuniziz. Kalz anezho a gollas o buhez en emgannoù.

En deiz-se en em vode e New York ar C'huzul Surentez da zivizout diwar ar c'hlemm savet gant Tunizia a-enep Bro-C'hall. Antronoz e c'houlennas digant an div vro paouez diouzhtu d'en em gannañ, ha tennañ o soudarded war-dreñv betek an tachennoù dalc'het ganto a-raok derou an emgann.

Roue Bro-Jordan a roas da c'houzout edo o kas ur bagad soudarded da Dunizia. Kuzul ar C'hevren Arabek, bodet d'ar 24 Gouere, a brometas ivez kas nerzhioù-brezel da skoazellañ Tunizia. Hammarskjöld, Sekretour Meur ar Broadoù Unanet, galvet da Duniz gant Bourgiba, a gomzas gantañ en deiz-se. Ur weladenn a reas da Vizerta goude se. Rener an nerzhioù gall a nac'has degemer anezhañ. Ne voe ket tu dezhañ kennebeut da vont da Bariz da gaozeal gant ar gouarnamant gall.

D'an 28 e teuas ar gudenn adarre dirak ar C'huzul Surentez. Nebeut a-raok, e oa bet embannet gant ar gouarnamant gall un notenn o tiarbenn emellerezh ar Broadoù Unanet. Pep tra, eme ar C'hallaoued, a dle bezañ diazezet etre Frañs ha Tunizia hepken. Pennzileuriad Frañs er C'huzul ne gemeras ket perzh en divizoù e New York.

War c'houlenn Stadoù afrikat, aziat hag un nebeut re all, e tle ar Broadoù Unanet en em vodañ d'an 21 Eost evit studiañ kudenn Vizerta.



- 111 Aljeriz ha Gallaoued : An emzivizoù etre broadelerien Aljeria ha  
 111 gouarnamant Pariz a addigoras d'an 20 Gouere, e-kichen Evian. Torret e  
 111 voent d'an 28. Aljeriz a nac'has krenn plegañ diwar-benn kudenn ar  
 111 Sahara.
- 111  
 111 Ar C'henvarc'had europat : D'an 31 Gouere, Macmillan a zisklerias e ti  
 111 ar Gumun e Londrez e oa Breizh-Veur o vont da c'houlenn bezañ ezel eus  
 111 ar Gumuniezh Ekonomiekeuropat, anvet evit berraat ar C'henvarc'had,  
 111 ennañ Alamagn ar C'hornog, an Izelvroù, Belgia, Luksembourg, Frañs hag  
 111 Italia. Danmark hag Iwerzhon a c'houlenn mont er C'henvarc'had ivez.
- 111  
 111 Strishadurioù e Breizh-Veur : Ministr an Arc'hant, Selwyn Lloyd, a  
 111 zisklerias e Ti ar Gumun (25 Gouere) e vije strishadurioù evit stabil-  
 111 aat al lur sterling, kreskiñ an ermaeziañ-marc'hadourezh ha digreskiñ  
 111 an dispign er vro. Ar feur-bank a ya eus 5 da 7%. Skoilhoù all a zo  
 111 lakaet ouzh ar prestadennoù. An taos war ar gwerzhadennoù a zo uhelaet  
 111 a 10%. Kresk 10% a zo lakaet ivez war ar gwirioù maltouterezh.  
 111 Breizhveuriz a gousto keroc'h dezho eta ar c'hirri-tan, an ardivinkoù-  
 111 -radio, ar yenerazed, h.a., koulz hag an esañs, an evajoù, ar butun.
- 111  
 111 An eil Amerikan en ec'honder : En ec'honder Virgil Grissom, 35 bloaz, a reas d'an 21  
 111 Gouere un dro-vale en ec'honder, gant ar glozenn he doa servijet d'ar  
 111 5 Mae da Alan Shepard. Mont a reas eus ar C'hab Canaveral betek 188 Km.  
 111 er vann, evit kouezhañ 16 munutenn goude, 485 Km. diouzh tu ar gevred  
 111 er Mor Atlantek. An herr a oa 8.600 Km/eur (pelloc'h ha buanoc'h eget  
 111 Shepard.) Ur gwallzarvoud a c'hoarvezas d'ar poent ma stokas ar  
 111 glozenn ouzh ar mor : ur skoutilh a darzhas trumm, ne ouzer ket perak.  
 111 An dour a yeas e-barzh ar glozenn, a sankas hogozik raktal. Grissom,  
 111 dre eurvad, en doa bet amzer da vont er-maez. Goude neuial ur pennadig,  
 111 e voe saveteet gant ur viñsaskell. Ar glozenn, siwazh, a voe kollet  
 111 gant an holl ardivinkoù a oa enni hag ur film-liv eus ar veaj.
- 111  
 111 An eil Rusian en ec'honder : D'ar 6 Eost e voe taolet un oabllestr  
 111 4 zovellad 1/2, anvet "Vostok II", gant ar Rusianed. E bourzh e oa un  
 111 den 26 vloaz, ar Major Gherman Titov. 17 gwech e reas an oabllestr tro  
 111 an Douar, etre 180 ha 250 Km. er vann. Goude 25 eur 18 munutenn e  
 111 touaras e-kichen Saratov, er gevred da Voskov. Titov en doa labouret,  
 111 debret, kousket hep bezañ diaezet gant an dibouezder. E-pad ur mare, e  
 111 sturias e oabllestr e-unan. Kas ha resev a rae kemennadurioù dre skin,  
 111 ha skinwelet e veze en e gambrig eus an Douar.
- 111  
 111 "Milin-Avel" en ec'honder : "Explorer XII" a voe taolet gant an  
 111 Amerikaned d'ar 16 Eost (en abeg d'e stumm eo bet lesanvet "Milin-  
 111 -Avel). 32 eurvezh a laka da ober e dro. Mont a ra betek 80.000 Km.  
 111 diouzh an Douar.
- 111 Spi a zo da studiañ gantañ ar gourizad skinoù a c'hellfe bezañ  
 111 un harz ouzh beajoù mab-den en ec'honder.
- 111  
 111 -----  
 111 -----

-----  
 !!!!!!!!!!!!!!!  
 !!!!!!!!!!!!!!!  
 !!!!!!!!!!!!!!!  
 !!!!!!!!!!!!!!!  
 !!!!!!!!!!!!!!!  
 !!!!!!!!!!!!!!!  
 !!!!!!!!!!!!!!!  
 !!!!!!!!!!!!!!!  
 !!!!!!!!!!!!!!!  
 !!!!!!!!!!!!!!!  
 !!!!!!!!!!!!!!!

Ha klevet hoc'h eus ?  
 -----

ooooooooo Finland he deus bet hec'h emrenerezh abaoe 43 bloaz. E 43 bloaz' he deus bet 46 strollad-ministred.

ooooooooo E-pad an hañv, dreist-holl pa serrer an uzinoù evit reiñ ehan-labour d'ar vicherourien, e vez devet kalz nebeutoc'h a c'haz eget er mareoù all eus ar bloaz. Koulskoude e talc'h an uzinoù-gaz da vont en-dro. Emeur e sell e Breizh-Veur da lakaat lod eus ar gaz graet e-pad an hañv e mirlec'hioù dindan an douar, da implijout e-pad ar goañv, pa'z eus ar muiañ ezhomm.

ooooooooo Un den a zo aet a-dreuz lammdour an Niagara (15 Gouere) e-barzh ur voullenn goloet gant gom-gwevn, didreuzus d'an dour. Loc'het e oa eus tu ar Stadoù-Unanet. O tegouezhout en tu all, e voe harzet gant ar polis evit bezañ lakaet e droad e Kanada hep aotre.

ooooooooo Ur budjerigar (krakperoked Aostralia. - Melopsittacus undulatus evit an dud desket) a zo bet dianket digant e berc'hennez, ur vaouez o chom en Inverness, Bro-Skos. Ne oar ket ur ger saoznek. Hogen komz a ra gouezeleg. E anv zo Jorj (distaget "Choras" e skoseg).

ooooooooo Hervez ur gelaouenn saoz, ar ger saoznek anavezetañ dre ar bed a zo "yes". Ar frazenn saoznek anavezetañ a zo "Guinness is good for you".

ooooooooo Ul lizherenneg 43 lizherenn a zo bet ijinet e Bro-Saoz evit deskiñ lenn buan d'ar vugaligoù.

24 eus lizherennoù al lizherenneg voutin a zo bet miret (q ha x a zo bet lezet a-gostez). 19 lizherenn nevez a zo bet treset. Ijiner al lizherenneg eo Sir James Pitman (mab-bihan Sir Isaac Pitman, ijiner un doare berrskrivadur brudet). Ali en deus kemeret digant ur strollad monotipourien.

Aozet eo bet al lizherenneg nevez e seurt doare ma chom stumm ar gerioù peurliesañ tost a-walc'h d'ar stumm o devez pa implijer an doare-skrivañ boutin. (Da skouer, al lizherenn ijinet evit kemer lec'h th n'eo nemet un t peget ouzh un h). Daoust ma skeudenn an distagadur kalz gwelloc'h eget al lizherenneg voutin, ne ra ket ur skritur fonetikel-rik.

Ne vez graet nemet gant lizherennoù bihan : al lizherennoù bras ne vezont ket implijet.

200 levr disheñvel a zo bet moulet en doare nevez-se. Lakaet e vint e miz Gwengolo (ar miz-mañ) e 24 skol, e Lancashire, Middlesex ha



- 111 Staffordshire. 80 skolaer a heuilh kentelioù evit boarnañ ouzh ar c'hemm.  
 111 Ar vugale, a lavarer, a c'hello deskiñ lenn e 15 devezh gant ar  
 111 skritur nevez. Diwezhatoc'h e vo desket dezho an doare-skrivan boutin.  
 111 An dra-mañ, eme an dud a-du gant al lizherenneg nevez, a vo graet  
 111 hep poan. Pep skolaer, avat, en deus an disterañ skiant-prenet, a  
 111 c'hell diouganañ hep aon da faziañ e vo reustl ha mesk spontus e spered  
 111 ar vugale geizh dibabet da zanvez-arnod.  
 111  
 111 oooooooooo Un doare penikillin nevez a zo bet kavet e Breizh-Veur. Ur  
 111 wir -araokadenn eo, a greder. "Penbritin" eo bet anvet. Dont a ra eus  
 111 al Labouradeg-Imbourc'h Beecham. Efedus eo evit stourm ouzh muioc'h a  
 111 gleñvedoù eget ar penikillin ordinal.  
 111  
 111 oooooooooo Arnodoù skinobererezh graet war ur c'hlopenn kavet daou vloaz  
 111 'zo e reter Afrika a ziskouez e veve perc'henn ar c'hlopenn-se, un den  
 111 pe da vihanañ ur boud denheñvel a ouie ober binvioù, 1.750.000 vloaz 'zo.  
 111 Hervez an denoniour saoz L.S.B.Leakey, en deus kavet ar c'hlopenn, n'en  
 111 doa nemet 600.000 vloaz. An arnodoù a zo bet graet gant daou Amerikan  
 111 yaouank, dre un hentenn nevez, a zo kalz resisoc'h eget an hentenoù  
 111 heuliet betek-hen. E-lec'h karbon-14 e kemerer un izotopenn skinoberius  
 111 potasium, a zispenn kalz gorrekoc'h eget ar c'harbon-14, hag a c'hell  
 111 eta muzuliañ kalz hiroc'h en amzer dremenet.  
 111  
 111 oooooooooo Ur c'harr-gournij a zo bet ijinet e Breizh-Veur un nebeut  
 111 bloazioù 'zo, a ya war-raok a-us d'an douar, douget gant ur gwiskad-aer.  
 111 Bremañ, atav e Breizh-Veur, ez eus bet ijinet ur c'harr a beg ouzh an  
 111 douar, dre sunañ an aer etrezek ennañ. Implijet e tle bezañ evit krapañ  
 111 gant torgennoù serzh, zoken pantennoù a-sonn. Gouest e ve zo-mui-ken da  
 111 vale penn d'an traoñ, e-giz ma ra ur gelienenn war sel ur gambr. An  
 111 hevelep karr a c'hellfe bezañ war un dro karr-gournij ha karr-peg. Ne ve  
 111 d'ober nemet kemmñ tu d'ar c'hwezheres-aer.  
 111  
 111 oooooooooo War-dro mil a verc'hed eus 18 bro afrikat o deus kemeret  
 111 perzh e Konakri, Ginea, e miz Gouere, en ur c'hendalc'h graet da sevel  
 111 ur c'hevredad eus merc'hed kornog Afrika. Goulenn a reont ma ve berzet al  
 111 lieswregiezh, an endalc'h-dimeziñ, hag an torr-dimeziñ hep abeg.  
 111  
 111 oooooooooo Ha savet e vo ur c'hazino en Enez-Vanav diwar skouer hini  
 111 Monte Carlo ? Ur mennad-lezenn evit reiñ aotre a zo bremañ dirak  
 111 parlamant an enezenn. Kalz tud a zo krenn a-enep, en o zouez an eskob  
 111 anglikan. Enez-Vanav a vez darempredet dreist-holl gant gweladennerien  
 111 ha n'int ket eus ar re binvidikañ : da skouer, micherourien saoz o tont  
 111 da dremen o ehan-labour. E-kichen ar c'hazino e ve ret sevel ostalerioù  
 111 bras, kentañ klas pe dreistklas, n'eus ket a-walc'h anezho betek-hen.  
 111 Daoust hag an dud cheuc'h a zarempred ar Riviera a vo dedennet gant un  
 111 enezennig, - koant ha ma'z eo, - kollet e latar Mor Iwerzhon ?  
 111 Da c'houzout eo.  
 111

ooooooooo	<u>Re a naetadurezh</u> , a skriv an Doktorez Ann Mullins e "Medisin ar Familh", kelaouenn Kenstroll Mezegel Breizh-Veur, a c'hell ober droug. A dra sur, emezi, ar yec'hedouriezh he deus graet kalz er bloavezhioù tremen da wellaat stad an dud. Hogen re a zo re. Evit stourm ouzh an anouedadur, ar sifern, an heskedi hag an influenza, boazañ ar c'horf da vevañ bemdez-c'houlouù gant kellidoù-kleñved a zo gwell eget louzoù pe vaksin. "Bezañ naet a-walc'h da chom yac'h, ha lous a-walc'h da chom eürus."	111 111 111 111 111 111 111 111 111 111
-----		
ooooooooo	<u>D'ar Sul 26 a viz Gouere 1914</u> , al lestr-bale <u>Asgard</u> a zegouezhe e porzh-mor Binn Eadair, e-kichen Dulenn, Iwerzhon. Ouzh ar stur e oa ur vaouez, an It.Mari Childers. Er bourzh e oa 900 fuzuilh alaman ha 29.000 sac'had-tennoù. Emouestlidi eus armead kuzh Iwerzhon a oa o c'headal. An armoù hag ar pourveziou-brezel a voe buañ dilestret ha skignet dre ar vro dindan fri ar boliserien saoz. Implijet e tleent bezañ e-pad emsavadeg Lun Fask 1916.	111 111 111 111 111 111 111 111 111 111
	An <u>Asgard</u> a zo bet prenet nevez 'zo gant gouarnamant Iwerzhon, ha d'ar Sul 30 a viz Gouere 1961 e tegouezhas adarre e Binn Eadair, en dro-mañ saludet gant Prezidant ar Republik, an Ao.De Valera, gant bagadoù eus an arme hag un engroez tud. Lod eus ar fuzuilhoù kozh a oa bet lakaet er bourzh. Dilestret e voent el lec'h end-eeun ma oant bet dilestret e 1914, ha kemeret gant lod eus an emouestlidi end-eeun o doa o c'hemeret, neuze krennarded, hiziv gwazed kozh.	111 111 111 111 111 111 111 111 111 111
-----		
ooooooooo	Porzh-mor bihan Gillan, e <u>Kernev-Veur</u> , a voe aloubet (7 Eost) gant <u>ur bagad balumed</u> , un 40 bennak anezho. Tud ar vro ha gweladennerien a glaskas spontañ ar morviled ha mirout outo da beñseañ war gerreg an aod. Hogen kaer a oa ober, distreiñ a raent atav. En diwezh e voent kaset er-maez gant an tre. Antronoz avat e tistrojont.	111 111 111 111 111 111 111 111 111 111
-----		
ooooooooo	<u>46-vet Kendalc'h Hollvedel an Esperanteg</u> a zo bet graet e miz Eost hevlene en Harrogate, Bro-Saoz. 1.700 dileuriad a oa deuet eus 40 bro. Bez' e voe prezegennoù, c'hoariva, filmoù, kaniri, diskouezadegoù, ha bodadennoù a-ziforc'h evit skiantourien, kelennerien, tisaverien, tredanerien, skouted, h.a.	111 111 111 111 111 111 111 111 111 111
	War-dro ur milion a esperantegerien a zo bremañ, a greder. Niverus int dreist-holl e Danmark, en Izelvroioù, Polonia, Yougoslavia ha Brazil. Prezidant ar C'hendalc'h, Rektor Skol-Veur Okayama, Bro-Japan, a lavaras : "Dek vloaz a zo ret d'ur Japanad da zeskiñ saozneg, ur bloaz hepken da zeskiñ esperanteg."	111 111 111 111 111 111 111 111 111 111
	Brasañ enebourien an esperanteg a zo renerien ar Stadoù meur, aon dezho na ve distroadet ar "yezhoù a sevenadur", e-giz ma lavaront, (saozneg, alamaneg, galleg, h.a.) gant ur yezh etrevroadel.	111 111 111 111 111 111 111 111 111 111
	Ma ve ar Gelted ken dilu hag Izelvroiz ha Danmarkiz, e ve bremañ implijet esperanteg e-lec'h saozneg er C'hendalc'h Keltiek. Ha perak, pa vo kaset da c'houarnamant Pariz an (n + 1)-vet goulenn evit lakaat ar brezhoneg er skol, ne ve ket skrivet en esperanteg e-lec'h galleg ?	111 111 111 111 111 111 111 111 111 111
-----		
-----		





Kembre

Barzhed Kembre er Grennamzer a oa ivez telennerien, ar varzhed e gopr an uhelidi koulz hag ar varzhed kantreerien. Er vro-se, arz an telennañ a dizhas un derez uhel-tre. An delenn gembreat a zo warni teir rezad kerdin tu-ouzh-tu, an div rezad diavaez oc'h ober notennoù diatonek, an hini diabarzh oc'h ober notennoù kromatek. Ar c'herdin, a greder, a oa graet gwechall gant reun-marc'h. An telennañ, lakaet skoilh outañ gant ar Vetodourien en 18-vet kantved, a zo chomet en enor e Kembre betek hiziv.

Iwerzhon

En Iwerzhon e oa ken boutin an delenn hag e Kembre. Telennerien Iwerzhon a oa dispar, hag ar veuleudi graet dezho en 12-vet kantved gant Gerald Kembre a zo brudet. Telennoù a weler skeudennet war groazioù kozh ha skrinoù-relegoù. Un delenn gaer eus ar 14-vet kantved a virer e Dulenn, e Skolaj an Dreinded.

Telennoù Iwerzhon n'int ket bras. Peurvuiañ n'o deus nemet etre 70 ha 80 cm. a uhelder. Kerdin metal a oa warno gwechall. Daoust ma'z eus meneg eus un delenn 8 kordenn, niver ar c'herdin er 15-vet hag er 16-vet kantved oa 30, nemet mont a rae a-wechoù betek 60.

Daou anv a zo d'an delenn en iwerzhoneg : cláirseach, ha cruit (houmañ bihanoc'h).

Anvekañ telenner Iwerzhon eo marteze Carolan (1670-1738). An tonioù a voe dastumet, studiet hag embannet abred, gant tud evel Bunting (1773-1843), Petrie (1789-1866), h.a.

Evel ouzer, skeudenn un delenn a zo bet dibabet gant gouarnamant Iwerzhon da arouez vroadel, ha gwelet e vez alies war bep seurt dielloù a-berzh-Stad.

En hor c'hantved-ni e pleustrer kalz war ar g-cláirseach en Iwerzhon, hag ivez e Bro-Skos, rak ar benveg a veze implijet ivez er Grennamzer er vro-se. Adlakaet e voe e boaz eno dreist-holl gant an Itron Kennedy-Fraser (1857-1930).

Europa

Giz an telennañ a voe advevet en Italia e dibenn ar 14-vet kantved, hag ar c'hiz-se a zeuas eus Iwerzhon, a lavarere. Un dra a zo sur ; telennoù italiat an amzer-se a zo damheñvel ouzh re Iwerzhon.


Ur wellaenn vras a voe graet en 18-vet kantved : ijinete voe (e 1720, gant ur Bavariad anvet Hochbrucker, hervez ar brud) troadikelloù da verraat ar c'herdin diouzh ret, en doare ma sonjent un hanterzerez uheloc'h (da lavarout eo, fa, da skouer, a droe da fa lemm). Ur wellaenn vrasoc'h c'hoazh a voe graet gant Erard war-dro 1810 : lakaat a reas 7 troadikell "daou ober" pe "daou ask". Pa bouezer war un droadikell betek an ask kentañ, e vez uhelaet un notenn (hag an holl notennoù heñvel a eizhved da eizhved) a un hanterzerez ; pa bouezer warni betek an eil ask, e vez uhelaet a un hanterzerez c'hoazh (da lavarout eo, da skouer,



111 la blot a ya da la naturel, ha neuze da la lemm). aes eo kompren eta e  
 111 c'heller c'hoari ne vern pe notenn, ha strolladoù-notennoù niverus,  
 111 a-gevret (kendon) pe a-skign (arpejad).  
 111 Klasket e voe ivez ober telennoù, anvet "kromatek", enno kerdin  
 111 toniet rag-eeun war an notennoù kromatek, evel an delenn gembreat.  
 111 Hogen seurt telennoù ne rejont ket kalz a verzh, hag an telennoù  
 111 implijet hiziv peurliesañ dre ar bed a zo savet hervez doare re Erard.

111 Breizh

111 An delenn a dlee bezañ anavezet e Breizh er Grennamzer evel er  
 111 broioù keltiek all.  
 111 "An dug Hoel a Gernev," a skriv Abeozen e pennad kentañ e Yezhadur  
 111 ar Brezhoneg-Krenn, "en doa c'hoazh, pa veze e Kemper, ouzh e heul, ur  
 111 barzh telenner, Kariou e anv. Ren a eure Hoel etre 1066 ha 1084. Eñ  
 111 eo a zo bet, war a seblant, hon diwezhañ dug brezhoneger."  
 111 Breizhiz o deus bet tro da glevout, er gouelioù keltiek nevez 'zo,  
 111 an delenn iwerzhonat, c'hoariet gant Róisín Ní Shéaghdha, hag ur  
 111 strollad a zo bet savet evit implij ar benveg-se en hor bro.



111 PLANIEL, kanton Lezardrev, A.a.H.

111 E 1928. Pep tra e brezhoneg en iliz.

111 E 1961. 1,2) Pep tra e galleg en iliz.

111 3) Mistri ha mestrezed ar skolioù, kristen ha lix, ne ouzont  
 111 tamm brezhoneg.


111 4) Ar re gozh a zalc'h d'ar brezhoneg. Ar re yaouank n'o deus  
 111 desket koulz lavaret nemet galleg. Kalz eus ar baotrei yaouank, abaoe  
 111 diwezh ar brezel, a zo aet da vartoloded-kenwerzh, hag a zo distroet  
 111 d'ar vro gant gwragez ha bugale estren, gallegerien. An trifarzh eus  
 111 ar vugale ne ouzont nemet galleg. Zoken ar vugale o deus klevet  
 111 brezhoneg e-doug o bloavezhioù kentañ a ankounac'h buan an nebeut a  
 111 ouient.

111 5) Ne vez implijet brezhoneg e displegadeg voutin ebet.

111 6) N'eus eneberezh ebet ouzh ar brezhoneg, a vez komzet hardizh  
 111 etre mignoned.


111 (Kasit ho respontoù d'hon enklask d'ar gelaouenn, pe c'hoazh da  
 111 Roparz Hemon, 1-A, Leeson Park, Dublin 6 (Eire).)

PLERANEG, kanton Pempoull, A.a.H. 111  
E 1928. Prezegerezh e brezhoneg. 111  
 Katekiz e brezhoneg ha galleg, hanter-hanter. 111  
E 1961. 1,2) Prezegerezh ha katekiz e galleg. Ar galleg 111  
 a zo bet lakaet en iliz e 1942 gant daou veleg nevez kaset d'ar barrez. 111  
 An Aotrou person, a oa prizoniad-brezel, en deus klasket adkregiñ gant 111  
 ar prezegerezh brezhonek war e zistro. Hogen mont a ra e galleg bremañ, 111  
 o vezañ ne vez mui komprenet ar brezhoneg gant an dud yaouank. 111  
 E 1931, 32 a vugale a heuilhe ar c'hatekiz brezhonek, 201 ar 111  
 c'hatekiz gallek. E 1937, bugel ebet ne zeske mui ar c'hatekiz brezhonek 111  
 An Aotrou person en deus savet kantikoù brezhonek en enor da sent 111  
 ar c'horn-bro. Kanet e vezont atav en ofisoù ha da geñver ar pardonioù, 111  
 zoken gant tud ha na gomprenont ket ar c'homzoù. 111  
 3) Ne vez kelennet brezhoneg e skol ebet. 111  
 4) An dud tremen 50 vloaz a gomz brezhoneg peurliesañ. 111  
 5) Ne vez implijet ar brezhoneg e displegadeg voutin ebet. 111  
 6) An dud a zo diseblant e-keñver ar brezhoneg. 111



K a m p    L o g i v i

gant Vefa de Bellaing



Morse n'eus bet kement a dud yaouank deuet evit ar wech kentañ 111  
 hag e voe e Skol-Hañv Logivi. 111  
 War-dro 63 den o deus kemeret perzh er c'hamp, tost an hanter 111  
 anezho etre 15 ha 25 bloaz. An endro a renas a voe eus ar plijusañ a 111  
 drugarez dezho ! Ha ma'z eus bet trouz gant ar biniawoù, kanaouennoù ha 111  
 youc'hadegoù a bep seurt, n'eo ket ar W.K.B.D. (1) a glemo, laouen ma 111  
 oant o klevout en-dro dezho an aergelc'h joaus-se. 111  
 O vezañ ma oa bet dalc'het kalz eus hor re yaouank gant o studioù 111  
 pe gant beajoù pell, e c'helled soñjal e vije deuet ouzhpenn 50 paotr 111  
 ha plac'h yaouank ar bloaz-mañ ma vijent bet dieub da vare ar c'hamp. 111  
 Bemdez e tegouezhe lizher pe gartenn digant unan bennak, o lavarout en 111  
 doa keuz bras da vezañ miret da zont. Peget e voe evel-se war an 111  
 daolenn-geleier kartennoù kaset eus Bro-Rusia, eus Keubenhaven, eus 111  
 Kembre, h.a., hep kontañ lizheroù all, deuet digant mignoned koshoc'h 111  
 ha n'o doa ket gallet kennebeut seveniñ o c'hoant dont betek ennomp. 111  
 Evel boaz e veze gouestlet ar mintinvezhioù d'ar c'hentelioù ha 111  
 d'ar prezennoù. An daou zevvezh kentañ, an Ao. Bourdelles hol lakaas da 111  
 studiañ pennadoù eus levr Abeozen, "Al Lennegezh dre an Testennoù". 111  
Abanna, o tistreiñ eus ur veaj e Bro-Flandrez, a gontas deomp e droiad. 111  
An Ao. Dubourg, o tanevelliñ ur veaj graet gantañ e Bro-Holland, a 111

(1) W.K.B.D. : 'Welo Ket Breizh Dieub (ar re a-us da 30 vloaz), gouez 111  
 d'ar re yaouank.





- eo ar fedoù istorel hag ar reiz a-enep deoc'h, a-daol-trumm e kemm ar plegennoù ha youl an dud, hag e tro pep tra disheñvel diouzh an diouganoù. Evel-se eo c'hoarvezet gant an hebraeg.
- Evit ma teuy emsav ur yezh da vat, e ranker kelenn danvezioù all dre hanterouriezh ar yezh-se. N'eo ket a-walc'h komz ar yezh er gêr. Ar yezh a ya ganti ar maout eo an hini a zesker drezi er skol. Mar deo disheñvel yezh ho studi diouzh yezh ho kavell, an hini a vo trec'h en ho spered eo yezh ho studi. Setu perak ez eo ar reol ganeomp en Israel kelenn an holl zanvezioù-studi, war bep derez adalek ar skol gentañ betek ar Skol) Veur penn-da-benn dre an hebraeg, ur yezh ha n'he doa ket a c'heriadur evit ar vuhez arnevez 80 vloaz 'zo.
- Pa oan o kelenn hebraeg da enbroerien nevez e Jeruzalem, e c'houlenned alies ouzhin :
- "Perak degas an hebraeg en-dro da vev ? Perak ne zibabit ket ur yezh vedel evel ar saozneg ?"
- Evel just, ma rafed diouzh ar reiz hepken, e rankfed anzav e vefe gwelloc'h ober gant ur yezh vras. Met ma vern deomp mirout ar bersonelezh vroadel yuzev, - n'eo ket hepken he mirout, met he diorren, - ma tle dremm hor bro bezañ anavezet a-douez re ar broioù all, neuze ez eo he yezh-hi unan eus arouezioù pouezusañ he broadelezh. Kredit ac'hanon, me n'on ket ur "chaovinist" ... met er vuhez dre vras hag e buhez ur vro peurgetket ez eus traoù ha na c'hellont ket bout muzuliet gant hor reiz hepken. Bez' ez eus trivliadoù, - traoù hag a vez anavezet dre ar skiantoù, traoù hag a denn da huñvreoù en ene ar vro, - ha daoust ma c'hellomp bevañ goude ma vezont kollet, e vezomp kalz pinvidikoc'h ma c'hellomp o mirout bev ...
- An hebraeg a zo mamyezh ar Yuzevien, - daoust na vez ket komzet gant an holl anezho, - abalamour ma oa yezh ar spered yuzev, ar yezh ma voe stummet ar spered yuzev drezi e-pad milvedoù.
- Me a gred start-kenañ e teu spered ur bugel da vezañ lemmoc'h pa zesk ur yezh nevez, hag eñ yaouank-flamm, hag an arnodadur-se ne ra droug ebet dezhañ.
- Evel just, an emsav hebraek a gavas skoilhoù e meur a du, dreist-holl e stumm arguzennoù dampsikologek. E giwrionez, da ziazez an eneberezh e oa fougeerezh, da skouer a-berzh tud o klask dreveziñ an dudjentil saoz hag o gizioù.
- 
- E oa Gouelioù Kernev o vont da echuiñ e Kemper, d'ar Sul 23 a viz Gouere en abardaez, pa voe gwelet en un taol ar sonerien oc'h en em advodañ hag o kerzhout a-vagadoù etrezek kreiz kêr en ur seniñ Kan-Bale Kadoudal. Bandennoù-lien a voe displeget, merket warno "Brezhoneg er Skol", "Naoned e Breizh", "Ul lezenn-roll evit Breizh", h.a.
- An dibunadeg a yeas betek ar pefeddi. Ar renerien a voe degemeret eno gant un den bet pefed, anvet Andrieu.
- Parlantadeg a voe, hag ar sonerien en em dennas en diwezh, en ur ganañ "Bro gozh va Zadoù".
-


















Revue mensuelle-No.34-October 1961 Kelaouenn vizek-Niv.34-Here 1961  
 Abonnement annuel : 7 NF. Koumanant-bloaz : 7 LN.  
 CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, St-Marc, BREST.

PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON

111

T a o l e n n

111 Ar miz ..... p.145  
 111 Kontoù "Ar Bed Keltiek" ..... p.148  
 111 An arz hag ar butun ..... p.149  
 111 Piv a vo da gentañ war al Loar ? (A.Heussaff) ..... p.153  
 111 Stad ar Brezhoneg ..... p.155  
 111 Kanomp : An dluzhenn ..... p.157  
 111 - : Derc'hel soñj a ran, Itron. - An durzhunell .... p.158  
 111 DALC'HOMP : Kambr ar ridezioù ruz (Roparz Hemon) ..... p.159

111

111

111

111


111

111

111

111

111



D r e a n D o u a r

111 Bodadeg Pondivi : Ur 1.500 bennak a dud a gemeras perzh d'an 19 Eost en  
 111 ur vodadeg dalc'het e Pondivi, da bleidiñ gant kudennoù arboellerezhel  
 111 ha kevredigezhel Breizh. Da zibenn ar vodadeg e voe savet ar mennad-  
 111 -mañ :

111 "1.500 a barlanantidi, kuzulierien-veur, maered ha tud e karg  
 111 aozadurioù micherel, sindikadel ha sevenadurel eus 5 departamant Breizh,  
 111 bodet d'an 19 Eost e Pondivi, war c'halv Komite Studi ha Kenliamm  
 111 Gounidoù Breizh, hag ar 5 kevredad-departamant eus sindikadoù ar  
 111 c'hounideien-douar e 5 departamant Breizh,  
 111 O tezvarn eo berzh-mat al labour-douar a ra berzh-mat holl  
 111 renkadoù micherel ha kevredigezhel ar rannvro,  
 111 - A ziskler bezañ krenn a-du gant labourerien-douar Vreizh er  
 111 stourm renet ganto da wellaat o stad a vuhez ;  
 111 - A verz n'eus ket bet c'hoazh sevenet e doare ebet an darbaroù  
 111 a-ziforc'h goulenet digant ar galloudoù-Stad gant labourerien-douar  
 111 Vreizh;  
 111 - A zegas da soñj eo ret echuiñ hep dale un divroadeg, he fennabeg  
 111 skortted anat ar skoazell-Stad war an tachennoù arboellerezhel,  
 111 kevredigezhel ha sevenadurel ;  
 111 - A c'houlenn start, dre se, embannidigezh ul lezenn-raktres evit

- diorren gant urzh holl obererezhioù Breizh ; 111
- A ziskler groñs bezañ mennet a-unvan, ma ne ra ar gouarnamant 111
- netra a-raok ar 15 Gwengolo evit gwellaat stad al labour-douar e Breizh, 111
- da heuliañ kement hentenn a vo ret evit kaout o goulenn ; 111
- A ziviz krouiñ e framm CELIB ur c'homite-evezhiañs karget da 111
- virout kenliamm padus etre holl aozadurioù ha strollderioù Breizh." 111
- Katanga ha marv Hammarskjöld : E dibenn miz Eost e voe kaset soudarded 111
- (Iwerzhoniz, Svediz, Indeziz) gant ar Broadoù Unanet da Gerelesbed ha 111
- lec'hioù all e Katanga evit pakañ krog en ofiserien europat implijet 111
- c'hoazh en arme hag er polis. war-dro 500 a zo anezho, a lavarer. Se a 111
- oa graet gant aotre gouarnamant-kreiz Bro-Gongo. D'an 13 Gwengolo avat 111
- e teraouas kann a-zevri etre nerzhioù ar Broadoù Unanet ha Katangiz. 111
- Kentañ Ministr Katanga, Tchombe, a enebas ouzh dalc'hidigezh e rannvro 111
- gant ar gouarnamant-kreiz. Ur bagad soudarded iwerzhonat a voe gronnet 111
- e Kerjadot, hag a rankas en em zaskoriñ. 111
- D'an 18 Gwengolo, edo Dag Hammarskjöld, Sekretour Meur ar Broadoù 111
- Unanet, o vont da Rodezia an Hanternoz evit komz gant Tchombe a-zivout 111
- un arsav-brezel. E garr-tan a gouezhas e-kichen Ndola, ha Hammarskjöld 111
- a voe lazhet. 111
- Bodadeg ar broioù diberzh : 25 a vroioù a gasas dileuridi da Vodadeg ar 111
- broioù diberzh, a zigoras e Belgrad d'ar 1-añ Gwengolo. Stadourien 111
- vrudet a oa eno : Naser eus Egipt, Nehru eus Indez, Nkrumah eus Gana, 111
- Bourgiba eus Tunizia, an impalaer Haile Selassie eus Etiopia, h.a. 111
- Dileuridi eus gouarnamant broadelerien Aljeria a oa eno ivez. (Anavezet 111
- e voe gouarnamant broadelerien Aljeria evel gwir c'houarnamant Aljeria 111
- gant Yougoslavia, Gana, Kambodia ha Kiprenez e-doug ar vodadeg). Ur 111
- c'halvadenn a voe graet d'an "Daou Vras", Kennedy ha Kruchtchev, d'en 111
- em welout evit diazezañ ar peoc'h er bed. 111
- Berlin : War washaat eo aet kudenn Verlin e miz Eost. Sparlet-startoc'h 111
- e voe an harzoù etre an div rann eus kêr gant ar gomunourien. 111
- Votadeg en Alamagn-Gornog : Er votadeg da envel ur Parlamant nevez en 111
- Alamagn-Gornog d'ar 17 Gwengolo, e kollas kostezenn an Demokrated 111
- Kristen (hini Adenauer) an niver-muiañ he doa bet betek neuze. An 111
- Demokrated Sokial (renet gant maer Berlin-Gornog) a yeas war-raok, hag 111
- ivez an Demokrated Dieub (renet gant an Ao.Mende). 111
- An "Armead Kuzh" e Bro-C'hall : Gwalldaolioù niverus a vez graet abaoe 111
- un nebeut mizvezhioù e Bro-C'hall hag en Aljeria gant ur strollad les- 111
- anvet "Armead Kuzh", peurliesañ gant bombezennoù plastik. Kalz eus ar 111
- renerien, avat, a zo bet bac'het gant ar gouarnamant. D'an 8 Gwengolo e 111
- voe klasket lazhañ Prezidant ar Republik. An taol a c'hwitas. Tamallet 111
- eo bet, e gaou marteze, d'an Armead Kuzh. 111
- Gouarnamant Frañs hag ar Parlamant : War greñvaat eo aet an eneberezh 111



lll ouzh gouarnamant Frañs gant un darn vras eus ar parlamantidi e miz  
 lll Gwengolo. Ar Sened en em vodas e dalc'h dreist ar mare d'ar 5, hag ar  
 lll Vodadenn Vroadel d'an 12, evit embreger ur mennad-lezenn a-zivout al  
 lll labour-douar. Ar gouarnamant, avat, a gavas an tu da virout, pezh a  
 lll zisplijas kenañ d'an darn vuiañ eus ar c'hostezennoù politikel.  
 lll Ur mennad-tamall a-enep ar gouarnamant, kinniget gant Sokialourien  
 lll ar Vodadenn Vroadel, a voe diarbennet gant prezidant ar Vodadenn-se  
 lll (un den a-du gant ar gouarnamant).

lll Kemm e gouarnamant broadelerien Aljeria : d-doug ur vodadeg eus izili  
 lll gouarnamant broadelerien Aljeria e Tripoli, e dibenn miz Eost, e voe  
 lll graet kemmoù. Ben Youssef Ben Khedda a voe lakaet e penn e-lec'h Ferhat  
 lll Abbas. Ben Khedda, 37 vloaz, a zo bet unan eus pennañ aozerien ar  
 lll brezel ouzh ar C'hallaoued abaoe 1955.

lll Arnodoù nukleel adarre : D'an 31 Eost, Rusia a embannas edo o vont da  
 lll adkregiñ gant hec'h arnodoù nukleel, ha d'ar 1-añ Gwengolo e voe roet  
 lll da c'houzout gant ar Stadoù-Unanet e oa bet lakaet da darzhañ un ijin  
 lll nukleel a c'halloud-etre (brasoc'h eget bombezenn Hirochima) e Kreiz  
 lll Azia. Ditouret oa bet an darzhadenn gant ar skiantourien amerikan  
 lll karget da evezhiañ. 13 ijin nukleel a voe lakaet da darzhañ gant ar  
 lll Rusianed etre ar 1-añ hag an 19 Gwengolo, lod e Kreiz Azia, lod e  
 lll biojoù ar Mor Arktek. Darn eus ar re-mañ a oa galloudus-bras, meur a  
 lll vegatonenn.

lll D'ar 15 Gwengolo ez adkrogas ar Stadoù-Unanet gant o arnodoù  
 lll nukleel d'o zro. Un ijin nukleel a lakajont da darzhañ dindan douar e  
 lll Nevada.

#### E n e c ' h o n d e r

lll Ur robot en ec'honder : Ur glozenn "Mercury", enni un astraer-ardivink,  
 lll a vee bannet gant an Amerikaned eus ar C'hab Canaveral d'an 13 Gwengolo,  
 lll diouzh ur vannadell "Atlas". Ar veaj a badas 106 munutenn, hag ar  
 lll glozenn a reas ur wech tro an Douar, war-dro 230 Km. a-uhel, d'un herr  
 lll a 28.000 Km/eur. Kouezhañ a eure er Mor Atlantek er reter d'an Inizi  
 lll Bermudez. Ar robot ne oa ket ur jak e stumm-den. Bez' e oa anezhañ daou  
 lll enskriver war lietenn da skingelaouiñ, hag ur voest du a anale hag a  
 lll c'hweze evel un den. Ar robot a oa yac'h ha bagol goude e bourmenadenn.

lll Mikrometeoroidennoù : Un adplanedenn a voe taolet gant an Amerikaned  
 lll (25 Eost) evit studiañ pizh ar mikrometeoroidennoù, poultrennoù munut  
 lll a nij herrek dre an ec'honder, hag a c'hellfe toullañ pe da vihanañ  
 lll mekaat un oabllestr. An adplanedenn, dezhi ouzhpenn 20 m. a hed, enni  
 lll un 50 Kg. bennak a ardivinkoù, a droio etre 450 ha 1.000 Km. diouzh  
 lll an Douar.

lll KENDALC'H KELTIEK GAILLIMH - Spi hon eus da reiñ dizale danevell ar  
 lll C'hendalc'h-se. An Ao. Per Denez a voe anvet da Rener evit ar 6 bro.

<u>Kontoù "Ar Bed Keltiek"</u>		XXXXXX	111
(Gwengolo 1960-Gwengolo 1961)		XXXXXX	111
<u>I. Danevellskrid an Deñzorierez</u>		XXXXXX	111
	Dispign :	Enkef :	111
Arc'hant kozh abaoe warlene .....		58,63	111
1 skodenn evit 1959 .....		7,00	111
26 .. .. 1960 .....		182,00	111
73 .. .. 1961 .....		511,00	111
3 koumanant 1960 .....		21,00	111
47 .. .. 1961 .....		329,00	111
Profoù .....		241,26	111
Taos war ar gont-red .....	5,00		111
Fakturenn Mouler Gwengolo 1960 .....	68,85		111
.. .. Here .....	71,40		111
.. .. Du .....	68,85		111
.. .. Kerzu .....	89,25		111
.. .. Genver 1961 .....	89,25		111
.. .. C'hwevrer .....	92,82		111
.. .. Meurzh .....	92,82		111
.. .. Ebrel .....	92,82		111
.. .. Mae .....	92,82		111
.. .. Mezheven .....	96,39		111
.. .. Gouere .....	96,39		111
.. .. Eost .....	96,39		111
.. .. Gwengolo .....	96,39		111
Timbroù .....	83,52		111
Siell .....	2,60		111
Fakturenn evit ar goloioù .....	192,00		111
Kelc'hlizher .....	13,59		111
Kempouez .....		91,26	111
	<u>1441,15</u>	<u>1.441,15</u>	111
Mank er c'hef .....	91,26		111
Brest, 31/8/1961			111
An Deñzorierez			111

2. Kontoù en Iwerzhon

Stenkilou .....	93,00		111
Timbroù .....	42,00		111
Ur c'houmanant ha prof .....		14,00	111
Skod ha prof digant Roparz Hemon .....		121,00	111
	<u>135,00</u>	<u>135,00</u>	111
Dulenn, 31/8/1961			111
Ar C'hadoriad			111

Profoù (15 Mezheven-31 Eost 1961) : An Ao.A.Al Louarn, 8 LN. - 111  
 An Dim.A.Meliner, 3 LN. - An Dim.A.Duval, 3 LN. - En holl : 14 LN. 111  
 (Da lakaat ouzhpenn : Dizanv, 9,60 LN.) - Trugarez d'ar brofourien. 111





<u>Podoù, yilc'hier-butun, hag all</u>	111
	111
Da virout ar butun e ranked kaout ur pod, pe un endalc'her bennak.	111
Podoù a zo bet graet e metal, - houarn, arem, plom, staen, arc'hant,	111
h.a. - e pri-poazh, - feilhañs, porselen, krag (1), - hag e koad.	111
Kostezioù ar pod hag ar goulc'her a zo kinklet alies, kizellet pe livet.	111
Ar re e plom a seblant bezañ dreist-holl ar re a vez klask warno gant	111
an dastumerien bitrakoù kozh. Ha mar kaver enno ur follenn-blom implijet	111
evit gwaskañ ar butun, ez int talvoudusoc'h c'hoazh.	111
Da lakaat butun e reer ivez gant yilc'hier. Ar re a werzher bremañ,	111
e ler, e gom-gwevn pe e plastik, a zo dister o zalvoudegezh arzel.	111
Hogen ar re gent, e stumm boestoùigoù plat kelc'hiek, e kouevr pe arem,	111
engravet warno lizherennoù-kentañ pe skoed-ardamez ar perc'henn, pe	111
c'hoazh arabeskennoù pe dresadennoù all, a c'hell bezañ kaer-tre. Soñj	111
am eus bezañ lennet en ur romant kozh, - ar romantoù a zo ur vammenn-	111
-diellerezh pouezus da istorour an arzvicherioù,- e oa un itron o wriat	111
ur yalc'h-vutun d'he niz, a oa en arme. E petra oa graet ar yalc'h-se,	111
ne ouzon ket.	111
Graet e voe ivez rikoù-butuniñ, anezho ur bladenn, renket warni	111
podoù ha traoù all ret d'ar butuner, e koad pe e metal : engravet,	111
livet, lakennet, enskantet, h.a.	111
Amañ e tleer menegiñ ar c'harzelloù pe ar marc'hoù da harpañ pe da	111
ispilhañ ar pibennoù pa ne vezont ket implijet. Lod eus ar re-mañ, ar	111
re graet en houarn goveliet da skouer, a zo brav a-walc'h.	111
Hag arabat ankounac'haat an tannoù metal da gouchañ ar butun	111
e-barzh ar c'horn, pe c'hoazh da skarzhañ al ludu diouzh ar bodenn.	111
Istor an traoùigoù-se a zo hir, ken hir hag istor ar butun en Europa.	111
Ar re goantañ a zo graet e kouevr, en arem, pe zoken en aour, e stumm	111
ur vazhig, gant un aneval pe un ornadur all e penn. Er c'hantved	111
tremenet e vezent staget gant an aotrounez ouzh o chadenn-vontr, a yae	111
a-dreuz o jiletenn, a-gevret gant tilsamoù hag alc'houezioù o zaol-	111
-skrivañ hag o skrin-likorioù.	111
Mar fell deoc'h avat kaout traezoù-arz gwirion ha koustus, troit	111
hoc'h evezh ouzh ar boestoù-butun. En 18-vet kantved e voe dilezet un	111
tammig ar bibenn gant an dudjentil. Bez' e teuas ar c'hiz, gant an	111
itronezed koulz ha gant an aotrounez, da gemer butun-fri. Nag aotrou	111
nag itron ne c'hellas mui bevañ hep ur voest-vutun, pe gentoc'h, un	111
aridennad boestoù-butun.	111
Ken anavezet int ma n'eus ket ezhomm o diskrivañ, adalek ar re	111
graet e koad, askorn pe skant-baot betek ar re graet en arc'hant pe en	111
aour ha kinklet gant mein prizius. Peurvuañ ne weler bremañ nemet ar	111
re vunut, da zougen er chakod. Re all a oa, kalz brasoc'h, da virout en	111
ti. Lod a oa ramzel e gwirionez, evel ar re implijet e salioù-pred	111
ofiserien : pep ofiser er sal a gemere ur friad-butun diouzh ar voest-sell	111
ur wech an amzer !	111
-----	111
(1) "Krag", implijet amañ da envel un doare pri-poazh kalet,	111
diforc'h-krenn diouzh ar maen anvet "krag".	111



111 Segalennoù ha sigarettenoù

111  
 111 En hanterenn gentañ an 19-vet kantved e voe lezet tamm-ha-tamm ar  
 111 butun-fri a-gostez gant an dud a-zoare, hag ez eas ar voull gant ar  
 111 segalennoù. Aotrounez hag itronezed a fume segalennoù. (Un testeni a se  
 111 a gaver er pennad "Doareoù ar merc'hed kant vloaz 'zo", en ABK miz  
 111 Gouere 1961, p.106). Ar merc'hed a blije dezho dreist-holl ar re  
 111 troc'het serzh e stumm ur garrezenn en daou benn. Hag ar vravigourien,  
 111 ne voe ket pell, a ijinias binvioùigoù koant da droc'hañ ha da doullañ  
 111 segalennoù.

111 Neuze, dre ma'z ae ar c'hantved war e dalaroù, e voe skignet  
 111 nebeut-ha-nebeut ur boaz nevez, boaz ar sigarettennoù. Hervez tud 'zo  
 111 e tiwanas e Rusia, hag e voe degaset da gornog Europa gant soudarded war  
 111 o distro eus brezel Krimea. En hor c'hantved-ni hepken en em ledas dre  
 111 ar bed-holl, hag en deiz a hiziv ez eus muioc'h a vutunerien (hag a  
 111 vutunerezed) sigarettennoù eget a vutunerien segalennoù ha pibennoù.

111 War-dro ar sigaretenn e tiwanas arzijinerezhioù nevez. Evit ar  
 111 merc'hed dreist-holl, e voe graet dougoù-sigaretenn a bep hirder hag a  
 111 bep liv. Graet e voe ivez, diwar bloazioù diwezhañ an 19-vet kantved,  
 111 skrinnoù-sigarettennoù da lakaat e godell-chupenn ar wazed pe e sac'h-  
 111 -dorn ar merc'hed : en aour, en arc'hant evit an dud cheuc'h, e metal  
 111 gwenn, arc'hantet, aremet, alaouret, kromet, evit ar re all. Moarvat e  
 111 diskrap warno gant dastumerien an 21-vet kantved.

111 Boestoù segalennoù da lakaat war un daol a voe graet hag a vez  
 111 graet atav : e metal, e koad prizius enskantet, e kartoñs bervet, h.a.  
 111 Marteze hoc'h eus tu bennak en ho kalatrez unan e ler koagrennet graet  
 111 gant ho Tintin Sofi pe gant ho Tintin Ameli evit ho tad-kozh er bloaz  
 111 1900. Diboultrennit ha dilouedit anezhi ur wech an amzer : a-benn ar  
 111 bloaz 1980 e talvezo kalzik arc'hant marteze.

111 Boestoù-taol sigarettennoù a reer ivez. Darn a zo "emlusk", da  
 111 lavarout eo, o pouezañ war un nozeleenn e tigoront, hag ur sigaretenn a  
 111 lamm er-maez, pe a vez kinniget deoc'h gant ul labous, - un herlegon  
 111 pe ur c'hwibon, - en e veg. Darn zoken a c'hoari deoc'h un tonig-  
 111 -sonerezh en ur zigeriñ. Seurt bitrakoù, a gavit hep mar "heugus  
 111 d'ober droug", a vo kavet brav er bloaz 2000.

111  
 111 Binvioù-tennañ-tan

111  
 111 "Lakaat tan war ar butun" a zo chomet er yezh evel tro-lavar. Ne  
 111 weler mui gwall alies koulskoude ar wazed pe ar mammoù-kozh o lemel ur  
 111 c'hlaouenn-vev gant ar piñsetez diouzh an oaled pe ar fornigell evit  
 111 tanañ o c'horn.

111 En 19-vet kantved e kemeras ar chimikez lec'h an dirennoù, e tiez  
 111 ar vourc'hizien da vihanañ. War-lerc'h ar chimikez e teuas an alumetez  
 111 a anavezomp hiziv. E dibenn ar c'hantved hag e derou ar c'hantved-mañ  
 111 e voe graet skrinnoù da lakaat ur voest-alumetez, digor e tri zu da  
 111 denañ aes un alumetezenn er-maez ha da frotañ anezhi ouzh ur c'hostez.  
 111 Lod a oa e metal boutin, lod en aour pe arc'hant engravet.

An enaoueroù, ken paot hiziv, a zo diskennidi an dirennoù. Bez' ez eus enaoueroù-godell hag enaoueroù-taol. Hervez blizidigezh an hini a bren anezho ez int koant pe zivalav. Lod, - ar re en arc'hant da skouer, - a c'heller lakaat e-touez koantañ bitrakoù hon amzer.

Pladoùigoù-ludu

Ha pelec'h e veze lakaet al ludu diouzh ar pibennoù hag ar segalennoù gwechall ?


Furchet-difurchet em eus levrioù o tiskrivañ ar bitrakoù implijet etre ar 16-vet ha derou an 20-vet kantved, hep kavout an disterañ meneg eus ur pladig-ludu-butuner. Ar ger "pladig-ludu" n'emañ ket er geriadurioù brezhonek ha ne vez ket kalz e boaz (2). Ar ger saoznek "ash-tray" n'emañ ket e Geriadur ramzel Oxford.

En tavarnioù e veze taolet, hep mar, al ludu gant ar vutunerien war al leur. Hogen pe itron he dije lezet he c'houvidi da deurel ludu war he fallenn-leur Brusel, Wilton pe Aubusson ? Pe itron he dije hep krizañ he zal lezet tud d'ober merkoù rous war hec'h asiedoù hag he fladennoùigoù-tasoù porselen ? Betu amañ ar respont marteze : ne veze ket butunet er salioù-degemer ; er salioù hag er c'hambroù all e veze taolet al ludu en oaled pe dre ar prenestr (3).

Ar pladoùigoù-ludu, a gredfen, a zo diwanet da heul donedigezh ar sigarettennoù. Aloubet o deus en un taol kement lec'h-anez ha kement gwikefre-lusk a zo er bed : kafedioù, ostalerioù, burevioù, tiez prevez, trenioù, kirri-tan, listri-beajourien, kirri-nij, h.a. Un taolennadur anezho a rafe danvez meur a levr. Darn, - an darn vihanañ, anat eo, - a zo traezoù arz, hag a vo displeget e mirdioù an amzer da zont. Ha mar dichañs d'hor sevenadur mont da get gant an armoù nukleel, e vezo dizoloet marteze, a-benn dek mil vloaz, gant un "homo sapiens", mar chom, ur pladig-ludu, hag e lavaro ; "Da betra an diaoul e servije ar penefi iskis-mañ ?"

(2) Ar skouer gentañ a gavan a zo war "Ar Bed Keltiek", follenn 20, Mae 1952 : "gwerzhet e vo ivez traoù, evel pladoùigoù-ludu, krennlavarioù brezhonek warno".

(3) E-touez ar bitrakoù a wechall, ez eus re a zo heñvel pe zam-heñvel ouzh pladoùigoù-ludu. N'int ket avat : bez' ez int pladoùigoù da lakaat spilhoù, loaioù bihan, h.a.

















lll m  
lll mm mn mm mm mmmm mm  
lll m m mm m m mm m m mm  
lll m

An dluzhenn

(troet diwar Die Forelle,

sonerezh gant Schubert)

lll 1.  
lll Ur wazhig dre an draonienn  
lll A rede boull ha yen.  
lll E-barzh an dour un dluzhenn  
lll A neue sart ha gren.  
lll Ha me oa leun a zudi,  
lll O sellout ouzh ar pesk,  
lll O lammat hag o c'hoari,  
lll E skeud ar c'hlasvez fresk.  
lll O lammat hag o c'hoari,  
lll E skeud ar c'hlasvez fresk.

2/4  
lb'/rb'rb'fa'fa'/rb-lb'  
lb'/lb'.lb"mbrb"dosb"/lb- '  
lb'/rb'rb'fa'fa'/rb-lb'  
rb'/do'sbdo"rb'Sol'/lb- '  
lb'/do'do'rbdo"sbdo"/rb-lb'  
rb'/do'do'dosob"mbdo"/rb-  
rb'/sb'sb'sb'rb'/rb-lb'  
lb'/lb'.lb"mb'do'/rb-  
rb'/dosb"sb'sbrb"domb"/rb-lb'  
lb'/lb'.lb"mb'do'/rb- '

lll 2.  
lll Aezet war ar vrienn,  
lll E oa ul lazhettaer.  
lll Ha taolet oa e linenn  
lll E-kreiz ar wazhig sklaer  
lll Me 'soñje : "An diskiant  
lll Ne oar ket pezh a ra.  
lll En dour-se flamm 'vel arc'hant,  
lll Ne bako sur netra.  
lll En dour-se flamm 'vel arc'hant,  
lll Ne bako sur netra.

3.  
Se ivez 'ta a soñjen.  
An hailhon trumm avat  
A hejas gant e walenn  
Al lec'hid eus ar strad.  
E-barzh an dour kailharet,  
E tap ar peskig kaer.  
Ha me, va c'halon rannet,  
A rankas mont d'ar gêr.  
Ha me, va c'halon rannet,  
A rankas mont d'ar gêr.

lll Pa ganer a-stroll, pe hep eiladur, eo koulz marteze implij evit  
lll an trede poz ton hollanavezet an daou gentañ (un tammig gorrekoc'h  
lll hepken). Setu amañ avat an trede poz gant ar sonerezh evel ma voe  
lll aozet gant Schubert :

lll 3.  
lll Se ivez 'ta a soñjen.  
lll Al laer avat  
lll A hejas souden gant e walenn  
lll Al lec'hid eus ar strad.  
lll E-barzh an dour kailharet,  
lll E tapas ar pesk, ar peskig kaer.  
lll Ha me, va c'halon rannet,  
lll A rankas mont d'ar gêr.  
lll Ha me, va c'halon rannet,  
lll A rankas mont d'ar gêr.

Fa'/Fa'Fa'Fa'do'/rb-sb' '/'  
Fa'Fa'.do"/rb- -/'  
rb'rb'rb'/rb'rb'rb'rb'/rb-sb' "  
sb"/mb-mb"sb"Sol"Mb"/do- '  
lb'/rb'.rb"do'.do"/fa'sb' '  
sb'/mb-mb'mi'/fa'rb'do'mb'/rb- '  
rb'/sb'sb'sb'rb'/rb-lb'  
lb'/lb'.lb"mb'do'/rb-  
rb'/dosb"sb'sbrb"domb"/rb-lb'  
lb'/lb'.lb"mb'do'/rb- -//

lll =====  
lll Notenn : Evit ur wech e roomp er son-mañ komzoù a zo un droidigezh  
lll diwar ar c'homzoù alamanek. Komzoù hor c'hanaouennoù peurliesañ ne  
lll dennont nemet a bell da gomzoù ar ganaouenn-orin, hag alies zoken  
lll ez eo an tenor anezho disheñvel a-grenn.







Ar varkizez a grogas er voujienn hag a reas tro ar gambr, o lakaat 111  
 ar gouloù da barañ war ar mogerioù. Goloet oant a daolennoù bihan, 111  
 eoullivadurioù, dourlivadurioù, tresadennoù. Dirak unan e chomas a-sav. 111  
 Ur poltred e oa : dremm he mignonez, ar gontez Matilda K..., a selle 111  
 outi. 111

Hag en un taol e teuas soñj d'ar varkizez eus un darvoud c'hoarvezet 111  
 daou vloaz kent : maner ar c'hont hag ar gontez K... a oa bet al laeron 111  
 ennañ ; traoù prizius a bep seurt a oa aet ganto. Abaoe, keloù ebet. 111  
 Kaer a oa bet ober klask, netra ne oa bet kavet. 111

Skignet un tammig e pep lec'h dre ar gambr e oa malioù koad. Prennet 111  
 war alc'houez oant. 111

"Al loaioù, al listri, ar bravigoù," a soñjas ar varkizez. Ha neuze: 111  
 "Kouezhet on en un toull-laeron !" 111

Ar varkizez ne oa ket aonik. Stlejañ a reas koulskoude, hep ober 111  
 trouz, unan eus ar malioù dirak an nor. Ne ziwiskas ket he dilhad. A- 111  
 -hed an noz e chomas astennet war ar gwele, o kousket, evel ma lavarere, 111  
 gant ul lagad serr hag ul lagad digor. 111

Antronoz vintin, an heol a skede brav dre ar rideozioù ruz. 111  
 - Abred oc'h, itron ! - eme mestrez an ti, o welout ar varkizez o 111  
 tont er sal. - Kousket mat hoc'h eus ? Va mab a zo aet gant e varc'h- 111  
 -houarn da gemenn da baotred an ti-kirri dont da renkañ ho karr. Ne 111  
 zaleint ket, a gredan. Kafe gwenn pe gafe du a blij deoc'h ? 111

- O, Matilda, Matilda ! Me 'oar pelec'h emañ an traoù a zo bet 111  
 laeret diganit ! 111

Ar varkizez a oa aet war-eeun da vaner ar c'hont hag ar gontez, 111  
 e-kichen Gourin. 111


Matilda a lakaas he biz war he genou : 111  
 - Tav en anv Doue ! Na lavar netra dirak va fried. Deus em c'hambrig. 111  
 Pa voent azezet, ha serret an nor warno, e krogas ar varkizez : 111  
 - Tremenet em eus an noz en ur vereuri, e-kichen Brasparz ... 111  
 - Ar rideozioù ruz a zo atav war ar prenestr ? - a droc'has Matilda, 111  
 ur mousc'hoarzh hanter farsus, hanter drist war he dremm. 111

- Te 'oar ? 111  
 - Va fried, - eme Matilda, - a zispign kalz o c'hoari, e'hoari er 111  
 c'hazino, c'hoari war ar c'hezeg. Dispignet en deus hgozik va holl 111  
 fortun. An traoù-se ac'h eus gwelet a zo din, deuet din a-berzh va zad 111  
 ha va mamm. E sell eus an deiz ma vo gwerzhed ar maner-mañ da baeañ 111  
 dleoù va fried, em eus o lakaet e surentez e bro Arre, e mereuri va 111  
 magerez kozh. 111

XX 111  
 XX 111  
 ----- 111

Le Gérant : Mlle Y.Martin, 21, rue Dixmude, St-Marc, Brest. 111  
 C.C.P.P.No.36.242. 111  
 Ronéotypé par Rincazaux, 1, rue Alain Fournier, Brest. 111  
 ----- 111






Magazine mensuel  
No.35 - Novembre 1961


Dastumadenn vizek  
Niv.35 - Du 1961  
Koumanant-bloaz : 7 LN.

Abonnement annuel ; 7 NF.  
CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, St-Marc, BREST.


PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON



T a o l e n n



111 Etrezomp ..... p.161  
 111 Ar miz ..... p.162  
 111 ABK en deus Dek vloaz (Roparz Hemon) ..... p.165  
 111 Arboellerezh ha Yezh (Alan Heussaff) ..... p.167  
 111 Ha klevet hoc'h eus ? ..... p.170  
 111 Stad ar Brezhoneg ..... p.172  
 111 Kanomp : Bag an Anaon ..... p.173  
 111 - : Abardaez - Ha te 'oar-te ? ..... p.174  
 111 DALC'HOMP : Franken (Roparz Hemon) ..... p.175



111 Emsav ar Goueriaded e Breizh en deus diskouezet ez eus gwad dindan  
 111 ivinou ar Vretoned, - Bretoned 'zo, da vihanañ. E orin, evel orin an  
 111 holl emsavadegoù marteze, a zo c'hoant ur rumm tud da wellaat o stad  
 111 danvezel.  
 111 Diwar ar c'hentañ taol-lagad, n'eus darempred ebet etrezañ hag an  
 111 Emsav broadel. Koulskoude, ar re a gar Breizh ne c'hellont ket chom  
 111 diseblant ouzh darvoudoù a dremen e Breizh, hag ar vrogarourien a bep  
 111 seurt a zo bet fromet-don.  
 111 Ur menoz broadel a zo deuet sklaer a-wel e bodadeg Pondivi e miz  
 111 Eost, ha darn a zo aet betek soñjal e oa dasorc'het Breujoù Breizh).  
 111 Ne oa ket ken sklaer ar menoz broadel-se e bodadeg Wened e miz Gwengolo.  
 111 Ur fazi e vefe krediñ ez eo deuet ar goueriaded da vezañ holl  
 111 izili Emsav Breizh. Ur c'heñ evelkent a zo bet ledet ha sanket er  
 111 speredoù : hini pemp departamant Breizh.  
 111 ooo

"Hungaria n'eo ket bet, Hungaria a vezo", setu aze ger-stur ar vroadelerien a stourmas evit gounit gwirioù ar bobl hungariat en 19-vet kantved.

O lenn lod eus skridoù broadelerien Vreizh er bloavezhioù tremen, e c'hellfed krediñ ez eo o ger-stur : "Breizh n'eo ket bet, Breizh a vezo". Ha koulskoude, Breizh a zo bet. Breizh a zo bet adalek an deiz ma lakaas ar Brezhon kentañ e droad war zouar Arvorig. Hogen ar wirionez-se a chom dianav, hervez doare, d'ar Vrezhoned, na gavont en o levrioù istor er skol nemet ur frazenn diwar-benn Breizh : "Breizh a voe staget da vat ouzh Frañs e 1532".

Pep rummad broadelerien a rank "adkavout Breizh". Douget e vezont da soñjal n'eo ket bet "kavet" morse a-raok. A-zivout ar rummadoù o deus poaniet ha gouzañvet diagent e ouzont nebeut a dra, koulz lavaret netra.

Ur blijadur eo bet lenn e kelaouennoù broadel Breizh er mizioù-  
-mañ studiadennoù war istor an Emsav e-pad an daou-ugent vloaz diwezhañ.

ooo

Kudenn ar yezhoù en Indez a zo unan eus ar re bouezusañ e buhez ar Stad. Tud a zo prest da vervel evit o yezh. Gwelit stourm an tamileg e Selan, hag ar punjabeg en hanternoz.

E kornog Afrika, er c'hontrol, e welomp ar Stadoù, nevez c'houezet ganto o emrenerezh, o tismegañsiñ hag o tilezel o yezhoù broadel evit degemer gant lorc'h ha gant gred ar saozneg pe ar galleg.

Yezhoù Bro-Indez a zo yezhoù a hensevenadur, dezho ul lennegezh kozh, ur skritur a-ziforc'h, hag alies un dalvoudegezh relijiel. Yezhoù kornog Afrika n'o deus nemet ul lennegezh-werin peurvuiañ, ne vezont skrivet (pa vezont) nemet abaoe nebeut amzer, ha stag int ouzh kredennoù disprizet. Se a hanval diskouez anat perak e chom feal Indeziz ouzh o yezhoù, tra ma klask Afrikiz ar c'hornog en em zizober diouto.

Marteze n'eo ket an diskleriadur gwirion koulskoude. Perak en em lez pobloù 'zo da vezañ intret gant yezhoù ha sevenadurioù estren ? ha perak e harz re all outo evel ouzh ur c'hontamm ? Un niver bras a abegoù danvezel ha speredel a zo hep mar.

mm mm      mmmmm m mm  
m m      m m m m m m  
mm m      m m m m m m  
mm m      m m m m m m

Bodadeg ar goueriaded e Gwened : D'ar 27 Gwengolo, dileuridi eus strolladoù labour-douar ar pemp departamant a Vreizh en em vodas e Gwened. Ar gwellaennoù kinniget gant gouarnamant Pariz e-keñver stad ar goueriaded ne oant ket a-walc'h, emezo. War un dro e fell dezho e chomfe o emsav un emsav micherel-rik, hep emell politikerien a nep seurt.

Votadeg en Iwerzhon : Votadeg a voe graet d'ar 4 Here evit envel un "Dáil" nevez. Kostezenn ar gouarnamant, Fianna Fáil, a gollas ar



111 brasniver he doa bet goude votadeg 1957.

111 Setu amañ an niveroù :

	<u>Fianna Fáil</u>	<u>Fine Gael</u>	<u>Labour</u>	<u>Sinn Fein</u>	<u>Dizalc'h</u>	<u>Re all</u>
111 1957 :	78	40	12	4	9	4
111 1961 :	70	47	16	0	8	3

111 An Ao.Lemass, rener Fianna Fáil, a voe adanvet da Gentañ Ministr.

111 Ar Broadoù Unanet : Pa zigoras Bodadeg Veur ar Broadoù Unanet e New York d'an 20 Gwengolo, e voe anvet a-unvouezh (nemet unan neptu) da brezidant Mongi Slim eus Tunizia. Kudenn warlerc'hiad Hammarskjöld a zo diaës da zifuilhañ.

111 E Bro-C'hall : Ar Prezidant De Gaulle a zivizas (20 Gwengolo) dilezel e dibenn ar miz ar galloudoù a-ziforc'h en doa kemeret e miz Ebrel, hervez pennad 16 ar C'henreizhadur. Emañ ar c'hostezennoù kleiz o klask en em unaniñ da zistrodañ an Unaniezh evit ar Republik Nevez, da lavarout eo, gouarnamant Debré. N'eus ket bet a drubuilh bras, avat, betek-hen.

111 Seitek eus ar C'hallaoued repuët e Spagn da heul emsavadenn Aljer a voe harzet e derou miz Here gant gouarnamant Madrid.

111 Gouarnamant Pariz a harzas ar Jeneral Gonzales, lesanvet "El Campesino", unan eus renerien ar Re Ruz er brezel-diabarzh e Spagn e 1936-39. Betek neuze e oa bet o chom en Enez-Vriad dindan evezh ar polis.

111 En Aljeria : Kasadennoù ar skingomz c'hall en Aljeria a zo bet troc'het meur a wech gant an Armead Kuzh, ha kasadennoù-laer graet en o lec'h da boblañs Aljer pe Oran gant ar Jeneral Salan (bet digarget gant gouarnamant Pariz) ha re all. D'an 9 Here e lavarjont o dije engalvet 100.000 den a-raok diwezh ar bloaz. O skin, aser a voe dizoloet avat e-barzh un ti gant nerzhioù ar gouarnamant.

111 Dizurzhioù grevus a voe, dreist-holl en Oran, ha kann etre Aljeriz hag Europiz.

111 Emglev e Bizerta : Dre un emglev sinet etre gouarnamantoù Tuniz ha Pariz d'an 29 Gwengolo, ar C'hallaoued en em dennas evit derc'hel hep ken ar savlec'hioù a zalc'hent a-raok ar c'hrogad e miz Gouere. Hervez gouarnamant Tuniz, 1300 a Duniziz a voe lazhet en emgannoù.

111 Emsavadenn e Siria : Ofiserien a gemeras penn un emsavadenn, a darzhas e Damask d'an 28 Gwengolo. O fal, emezo, oa daskoriñ he frankiz da Siria, a voe unanet gant Egipt e miz C'hwevrer 1958. D'an 29, an emsaverien a oa mistri war ar vro a-bezh. Ur gouarnamant a voe furmet, ennañ nannarmeidi, bourc'hizien eus an Tu Dehou, renet gant an Dr.Kuzbari. Ar Prezidant Naser a gasas listri-brezel ha soudarded eus Egipt da vougañ an emsavadenn, hogen ne reas ket implij anezho. Ar gouarnamant nevez a voe anavezet gant kalz Stadoù eus ar bed.







Un dra avat a rankomp lavarout diouzhtu.

Betek-hen hon eus kaset ABK da izili "Skourr Breizh ar C'hendalc'h Keltiek". Ar follennoù embannet etre 1951 ha 1958 a oa graet evito hep-ken. Pa zeuas ABK da vezañ kelaouenn vizek evit an holl e 1959, hon eus kendalc'het.

"Skourr Breizh" koulskoude en devo mui-ouzh-mui ezhomm eus skodoù e izili, dreist-holl er bloaz 1962, ma vo graet ar C'hendalc'h Keltiek e Breizh.

ABK, diouzh e du, en devo mui-ouzh-mui ezhomm eus koumanantoù e lennerien.

Goude studiañ aketus ar goulenn, renerezh ABK a zo rediet da zivizout ne vo kaset ar gelaouenn, diwar ar 1-añ a viz Genver 1962, nemet d'ar re a baeo o c'houmanant, distag diouzh ar skodenn-vloaz paeet gant izili "Skourr Breizh".







---

Trugarez a greiz kalon d'ar vignoned o deus kaset dimp profoù hag o deus graet bruderezh evidomp. Trugarez d'ar c'helaouennoù o deus meneget ABK e-pad ar bloaz (1)

Hag ur ger ispisial a drugarez d'ar re a zo bet hon harperien hag c'henlabourerien feal adalek an amzer, miz Du 1951, ma krogas an Itron Galbrun da liesskrivañ en he zi follennoù ABK.

ROPARZ HEMON

(1) Fellout a ra dimp trugarekaat amañ "Lannion Républicain" evit ar pennad hir embannet d'ar 15 a viz Gouere, hag aozer ar pennad, an Aotrou Yann-Ber Piriou.



An darn vuiañ eus ar Vretoned a sell c'hoazh ouzh ar brezhoneg evel ouzh ur gariolenn a c'hiz kozh.


E sell ur rumm Bretoned all, ez eo kentoc'h ur c'harr<sup>Guver</sup>oñs, kaer-tre, hogen a c'hiz kozh ivez.

E sell ur rumm all, ez eo evel ur c'harr-tan, lakaomp eus an amzer a-raok 1950, diamzeret, hogen servijus atav.

Ur rumm all a sell outañ evel ouzh ur c'harr-tan nevez-flamm, pe zoken ouzh ur c'harr-nij, pe zoken ouzh un oabllestr etreplanedennel.

Gant piv emañ ar wirionez ?

Feiz ! un tammig gant an holl.







bet graet evit Kompagnunezhoù ar Sukr hag an Taouarc'h hag evit Aer 111  
Lingus. Padal, ma oa roet frankiz d'ar re-mañ da verañ o aferioù diouzh 111  
o gwellañ, da brenañ ardivinkoù, da bleustriñ hentenoù nevez, 111  
"Gaeltarra Eireann" a voe eveshaet pizh ouzh e zispignoù hag a chomas 111  
re hualet evit ober berzh. *yuu* 111

Ur genreizhad all, Ensavadur an Ijinerezh, a zo bet savet gant ar 111  
Stad evit skoazellañ labouradegoù ne vern pelec'h er 26 kontelezh (da 111  
lavarout eo, Republik Iwerzhon). Goude dezvarn ha dellezek eo ar 111  
mennadoù a zispleger dirazañ, e c'hell an Ensavadur reiñ arc'hant-kred 111  
evit klokaat ar penndanveziou rekis. War unan eus ar follennoù brud- 111  
erezh embannet gant Gael-Linn ez eo bet jedet, diwar sifroù un enklask 111  
graet gant an Ensavadur-se e vefe ezhomm da engouestlañ £1200 well-wazh 111  
dre vicherour evit diazezañ ijinerezh skañv a seurt gant an aozañ 111  
pallennoù, rikou pesketa, h.a. Aner komz eus ijinerezh pounner (dir, 111  
kefluskerioù, listri-kenwerzh), rak aze e vefe ezhomm £17.000 well-wazh 111  
dre vicherour. 111

Er Gouzelva e chom etre 3.000 ha 4.000 den dilabour bep bloaz : 111  
kemend-all a voued d'an divroañ. Ma vefe c'hoant da bourchas labour en 111  
ijinerezh skañv d'ar re-se en o c'horn-bro, e vefe ret sevel etre 111  
£4000 ha £6000 ar bloaz evit ar Gouzelva. Neuze e vefe dizarbennet an 111  
abeg a gaver gant ar ouezelegerien a-vihanik, e rankont deskiñ 111  
saozneg mat e sell d'an divroañ. 111

Padal, hervez follenn Gael-Linn, ar Stad n'he deus roet koulz 111  
lavaret netra betek-hen da sevel ijinerezh er Gouzelva. Ensavadur an 111  
Ijinerezh en deus roet £15.000 evit sikour Gael-Linn da ziazezañ 111  
labouradeg Karna (gwelout ABK, Eost 1961). Ur stammi e Kornog Kerri en 111  
deus bet un tammig skoazell c'hoazh. Setu hgozik holl. (Ne gonter ket 111  
an daou dredanlec'h meneget uheloc'h ; koulskoude Burev ar Pourvez- 111  
-Tredan a zo unan eus ar C'hompagnunezhoù-Stad ivez). 111

### Labour "Gael-Linn"

Evel ma oar kalz Bretoned a-benn bremañ, Gael-Linn en deus loc'het 111  
un niver a embregadennoù gant harp arc'hant ar glaoustréourien war ar 111  
c'hoarioù mell-droad : sevel bigi-pesketa, mereurioù-skouer, magañ- 111  
-konikled, skolioù-micher, skolioù eil derez, yalc'hadoù-studi er 111  
Gouzelva, h.a. Ne zastumer ket a-walc'h evit arc'hantaouiñ embreg- 111  
adennoù bras. Ar pezh a striv Gael-Linn da ober da vihanañ eo diskouez 111  
d'ar Stad penaos e c'hellfe ur genreizhad evel Gaeltarra Eireann dont 111  
da vezañ ur greizenn vras a ziorroadur, gant ma vefe tud youlek ha 111  
barrek en e benn, frankiz dezho da genwerzhañ ha da arnodiñ evel ar 111  
c'hevredigezhioù-Stad all. *evra* 111

### Skoazell d'ar Gouzelva

Evel just, war ur seurt tachenn e ranker bezañ prest da en- 111  
gouestlañ arc'hant hep bezañ prederiet gant ar c'hampi diwarno diouzhtu. 111  
E-touez ar strolladoù a glaske tapout mouezhioù evit dilennadeg vras 111  
*clutly* 111



111 ar 4 a viz Here, ne oa nemet Strollad al Labour a gement a ginnige  
 111 sevel labouradegoù er Gouezelva, ha pa vije kollet arc'hant ganto en  
 111 <sup>lowe</sup>deroù. Forzh petra a c'heller soñjal eus seurt abostolerezh a-berzh ur  
 111 strollad ha n'emañ ket engortoz da drec'hiñ war an holl, me 'gav din e  
 111 tlefe bezañ mennad kement gouarnamant hag a anzav ez eo miridigezh hag  
 111 astenn ar Gouezelva unan eus pennbaliou ar vroad.

111 Er gelc'hgelaouenn "Comhar" e oa nevez 'zo munudou eus ar vreut-  
 111 adeg a heuilhas danevell vloaziek ministr ar Gouezelva. £376.000 a vo  
 111 dispignet gantañ e-pad ar bloaz a zeu war vad an toleadoù iwerzhonek.  
 111 £41.000 eo muioc'h eget warlene. Met ar pep brasañ eus an dispignou-se  
 111 n'int ket mennet da greskiñ galloud arboellerezhel ar Gouezelva : eus  
 111 ar seurt diampledus int kentoc'h. Gwellaennoù a zegasint da rannvroioù  
 111 hag o deus moarvat muioc'h eget o lodenn a hentoù fall, a diez kozh, a  
 111 zouar treut. Ar yalc'hadoù-studi roet da vugale ha studierien evit  
 111 tremen skourradoù hir pe hiroc'h en tiegezhioù iwerzhonek a hento ivez  
 111 war o gounidigezh. Met e danevell ar ministr, n'eus gouestladenn ebet  
 111 e vije pourvezet muioc'h a labour da dud ar Gouezelva.

111 Peogwir e ranko strollad Fianna Fáil harpañ war strolladoù bihan  
 111 er gouarnamant nevez, e c'heller en em c'houlenn hag-eñ e kemero  
 111 kannaded strollad al labour o zu da bouezañ war renerien ar vro evit  
 111 ma vo savet labouradegoù d'an iwerzhonegerien.

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111


111

111

111

111

111



111 Bodadeg Veur Skourr Breizh ar C'hendalc'h Keltiek

111 Un 30 bennak a dud a gemeras perzh e Bodadeg Veur Skourr Breizh  
 111 ar C'hendalc'h Keltiek, graet e Loudieg d'an 28 a viz Gwengolo.

111 Ar Vodadeg a voe dalc'het, evel ma skriv dimp Maodez Glanndour,  
 111 "e-kreiz mignoniezh ha darempredoù digor".

111 Divizet e voe ober Kendalc'h Keltiek 1962 e Bro-Dreger, ma'z eus  
 111 tu.

111 Danevellskrid ar Vodadeg, savet gant Youenn Olier, a vo embannet  
 111 war ABK dizale.

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111


111

111

111

111

111



111 D'ho mignoned a fell dezho deskiñ brezhoneg, erbedit Skol dre Lizher  
 111 OBER, renet gant an Dimezell M.Gourlaouen, 30, rue V.Hugo, Douarnenez.

----- 111  
 ----- 111  
 ???????????? 111  
 ???????????? 111  
 ???????????? 111  
 ???????????? 111  
 ???????????? 111  
 Ha klevet hoc'h eus ? 111  
 ----- 111  
 ----- 111

----- 111  
 Ur skol gembraek a zo bet digoret e miz Gwengolo e Londrez. Pep 111  
 tra a vez kelennet enni e kembraeg, gant un nebeut kentelioù saoznek 111  
 (desket evel yezh estren), d'ar vugale betek an oad a unnek vloaz. 15 a 111  
 vugale a zo bet enskrivet betek bremañ, bugale tud-a-lezenn, kelenner- 111  
 ien, h.a. 111

----- 111  
 Pegoulz e vo savet gant Bretoned Pariz o skol e brezhoneg ? 111  
 ----- 111

----- 111  
 Ur poltred eus Wellington gant Goya, bet paeet £140,000, a voe 111  
 laeret diouzh an "National Gallery" e Londrez, e miz Eost. Ne ouzer ket 111  
 penaos eo bet graet al laeroñsi. An "National Gallery", e-touez mirdioù 111  
 bras ar bed, a zo unan eus ar re a vez gwarezet ar gwellañ a-enep al 111  
 laeron. Ne ouzer ket perak eo bet dibabet al livadur-se, pa 'z eus 111  
 livadurioù kalz talvoudusoc'h er mirdi. Hogen un dra da verkañ eo ez 111  
eus deuet muioc'h a dud da welout ar plas goullou eget na oa deuet da 111  
welout ar poltred. 111  
 ----- 111

----- 111  
 Ouzhpenn ur milion a Iwerzhoniz, ganet en Iwerzhon, a vev hiziv e 111  
 Breizh-Veur, hervez J.A.Jackson, adlennour war ar sokiologiezh e Skol- 111  
 -Veur Sheffield. E-pad an 10 vloaz diwezhañ, war-dro 60.000 a dud o 111  
 deus dilezet Iwerzhon bep bloaz evit mont da labourat e Breizh-Veur. 111  
 Entezet e vezont buan, eme an Ao.Jackson, e-touez Saozon, Skosiz ha 111  
 Kembreiz. 111  
 ----- 111

----- 111  
 Ur c'hoariva iwerrhonek a voe digoret e Gaath Dobhair, e gouezeleg- 111  
 va kornog Dun na nGall, 'e derou Gwengolo, gant ar c'hoarierez vrudet 111  
 Siobhán Ní Chionnaith. £20,000 (280.000 LN.) a zo bet dispignet evit e 111  
 sevel, £12,000 (168,000 LN.) anezho roet gant ar gouarnamant. Abaoe 20 111  
 vloaz e oa c'hoant sevel ur c'hoariva da zisplegañ pezhioù iwerrhonek 111  
 en ur c'horn-bro iwerrhonek. 111  
 ----- 111

----- 111  
 Emañ servij-post Breizh-Veur o studiañ un doare da zidoueziañ dre 111  
ardivink al lizhiri lakaet er post. E-lec'h ar chomlec'h ordinal e vefe 111  
 skrivet 6 lizherenn (pe 6 arouez) war ar golo-lizher. 111  
 ----- 111

----- 111  
 Perak e vez ar vugale hiziv brasoc'h ha pounneroc'h eget en amzer 111  
dremenet ? Diwar daou abeg, a voe lavaret e kendalc'h ar C'henstroll 111  
 Breizhveurek evit Araokaat ar Skiantoù, e Norwich : 1) maget gwelloc'h 111  
 e vezont ; 2) dre ma veajer muioc'h ez eus muioc'h a gemmesk-poblañs 111  
 eget gwechall. 111  
 ----- 111









lll m  
 lll mmm mm mmm mmm mmmmm mmm  
 lll m m m m m m m m m m m m m m m m  
 lll m m m m m m m m m m m m m m m m  
 lll m

Bag an Anaon

lll 1.  
 lll Se zo ur marvailh a wechall,  
 lll a gonter c'hoazh,  
 lll Pa strink ar c'houmoù bleunioù  
 lll er c'herreg noazh. (fru  
 lll Pe vez ar mor ouzh yud ar gwent  
 lll marellet,  
 lll Dindan al loar o sevel, gwan  
 lll ha ruz he sked.

4/4 gorrek  
 /Si-Mi'Fd'Sol-Fd-/si-Sol-Mi-  
 mi-/re-do-si:/  
 /Si-Mi'Fd'Sol-Fd-/si-Sol-Mi-  
 Do-/Si-Rd-Mi:/  
 /Mi-Fd'Sol'Fd-Mi-/mi-re-do-  
 rd'do'/do:si:/  
 /si-si'si'si-si-/si-Sol-Mi-  
 Do-/Si-Rd-Mi:/

lll 2.  
 lll Noz Kala-Goañv e tered stank,  
 lll en aodoù gouez,  
 lll Ilin-ouzh-ilin, skoaz' -ouzh-skoaz,  
 lll Anaon kaezh,  
 lll Troet o selloù ouzh ar mor,  
 lll o c'hortoz  
 lll Ur vag da zont davet ar ribl,  
 lll eus don an noz.

4.  
 Ha den ne oar pelec'h ez a,  
 a-dreuz an dour,  
 D'un enez varzhus, laouen-holl,  
 er c'hornog aour,  
 Pe c'hoazh d'un douar louet, bro  
 ar glac'har,  
 Skornet da viken, ma ne lINTR  
 nag heol na loar.

lll 3.  
 lll Ar vag a zibouk trumm ha skañv,  
 lll hep stur na roañv,  
 lll Evel o nijal dre ar c'hoabr,  
 lll e bolz an neñv.  
 lll Neuze he gweler, diouzh an aod  
 lll o pellaat,  
 lll Pounner, he staon o fregañ houl  
 lll a liv d'ar gwad.

5.  
 Goustad er mervent dre an noz,  
 e steuz ar vag.  
 Skleurig an heol, o ruzañ lent,  
 a flour ar gwag.  
 Ledet e eskell, un evn bras  
 a dremen,  
 Doaniet, e-kreiz ar gouelec'h gleb,  
 er beure yen.

-----  
 Pep gwir miret-strizh  
 -----

D'al lennerien :

lll Doare-notennañ hor c'hanaouennoù a zo bet diskleriet war ABK,  
 lll niverenn miz Eost 1960, p.91.  
 lll war c'houlenn koumananterien nevez, e vo diskleriet adarre war  
 lll an niverenn a zeu, niverenn miz Kerzu 1961.  
 lll Ken eeun ha ken sklaer eo avat ma n'eus ket ezhomm reiñ kalz a  
 lll ziskleriadurioù e gwirionez. Un den ampart war ar sonerezh a c'hell  
 lll deskiñ lenn an doare-notennañ-se en ur vunutenn. Un den ha n'eo ket  
 lll ampart-tre war ar sonerezh a genero hiroc'h amzer : lakaomp pemp  
 lll munutenn.

lll -----  
 lll -----  
 lll -----








Neuze e verzis e oa bet ar c'hazh o c'hortoz ivez. Dont a reas didrouz-	111
-kaer, n'eo ket eus e gorzenn, hogen a-zindan unan eus ar follennou	111
houarn merglet a oa skignet e-kreiz ar geot. Chom a-sav a reas ur wech	111
hepken. O vezañ na fiñven ket, ez eas da zebriñ e goan, - ur penn mor-	111
louan, soñj am eus, - o kemer e amzer, evel ur c'houviad seven. Ha me	111
sevel ha tostaat outañ goustadik. Ne dec'has ket. Schuiñ a bred a reas,	111
ha neuze teurel ouzhin ur sell, evel da c'houlenn : "N'eus mui ?"	111
Franken a anavezé ac'hanon. Lavaret e vez n'eo ket gouest ur c'hazh	111
da anavezout tud. Pebezh fazi ! Anavezout a ra e vignoned hag e eneb-	111
ourien evel ma ra ur c'hi.	111
Diwar an deiz-se, e-lec'h mont da lakaat e voued e-tal e gorzenn, e	111
c'halven anezhañ. Dont a rae da zebriñ diouzh va dorn. Ne generis mui ar	111
boan da sortial. E c'hervel a raen eus va frenestr. A-bell e terede	111
davedon, da vihanañ pa ne oa ket bet o c'hedal war voger vihan ar porzh.	111
E miz Gwengolo e oa deuet Franken en hor bro. war-dro dibenn miz	111
Here, e teuas yen an amzer. Elumet e veze ar fornigell bep abardaez em	111
c'hambr. Franken a lakaas e benn ur wech dre an nor damzigor. Neuze, hep	111
e bediñ, e teuas e-barzh, hag ez eas da buchañ dirak an tan, o sellout	111
ouzhin, - un tammig divergont, a gavis, - gant un aer da lavarout : "An	111
ti-mañ a zo din-me koulz ha deoc'h."	111
Ne voe ket kaset kuit. Franken, en un taol, a oa aet da "gazh an	111
ti". Pilhou a vergnis en ur baner d'ober dezhañ ur gwele en ur c'horn	111
eus ar gegin. Ne gouske ket alies ennañ. Dibabet en doa ur c'horn all :	111
un estajerenn ledan e-kichen ar siminal. Da bignat di e ranke lammat war	111
ar siminal, ha lammat adarre, oc'h en em silañ dre bodoù, kantoloriou,	111
un horolajig ha daou gi feilhañs. Morse ne zirenke na ne dorre tra.	111
Franken a oa lorc'hus. Ne zeue ket, evel kizhier all, da frotañ e	111
gorf ouzh va gar. Ne viaoue ket p'en deveze ezhom tra pe dra. Dont a	111
rae da'm c'hichen hepken, ha skrabañ va botez dibasiant gant e bav, pa	111
ne seblanten ket teurel pled. E-pad an deiz e vane pell amzer astennet	111
war rizenn ar prenestr, hep ober van ouzh an dud a dremene war ar c'hae,	111
nag ouzh ar bagoù, na zoken ouzh ar goueleni a riskle bep ar mare a-denn-	111
-askell a-rez ar voger.	111
Daoust da se e karen anezhañ.	111
Ur mintin, e miz Du, ur mintin sklaer hag heoliek, o tigeriñ dor	111
va zi, e welis banniel Bro-Holland o nijal en aros ul lestr ereet ouzh	111
ar c'hae. Raktal e lennis an anv ; "Franken, Rotterdam".	111
Franken ar c'hazh a oa deuet e toull an nor. Sevel a reas e benn,	111
sonnañ e zivskouarn. Ha trumm, hep termal, tenn evel ur saezh, hep ur	111
sell a-dreñv da lavarout "kenavo", e treuzas ar c'hae hag e pignas gant	111
ar planken a oa bet gouzizet eus al lestr.	111
Biskoazh n'em eus e welet ken.	111
-----	111
-----	111
C.C.P.P. No.36.242.	111
Le Gérant : Mlle Y.Martin, 21, rue Dixmude, St-Marc, Brest.	111
Ronéotypé par Rincazaux, 1, rue Alain Fournier, Brest.	111
-----	111





Magazine mensuel  
No.36 - Décembre 1961





Abonnement annuel : 10 NF.  
Abonnement de soutien : 20 NF.

Dastumadenn vizek  
Niv.36 - Kerzu 1961

Koumanant-bloaz : 10 LN.  
Koumanant-skoazell : 20 LN.

CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, St-Marc, BREST.

PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON



T a o l e n n

111	Etrezomp .....	p.178
111	Ar miz .....	p.178
111	Boued evit pet ? (Alan Heussaff) .....	p.181
111	Va bilhedig (Roparz Hemon) .....	p.182
111	Kembre 1961 .....	p.183
111	Novaya Zemlya .....	p.186
111	Bodadeg Veur Skourr Breizh ar C'hendalc'h Keltiek .....	p.187
111	Notennadur kanaouennoù ABK .....	p.189
111	Kanomp : Steredenn gaer .....	p.190
111	DALC'HOMP : Sac'h an Tad Nedeleg (Roparz Hemon) .....	p.191





111 Meur ar Broadoù Unanet, da gemer lec'h Hammarskjöld betek miz Ebrel 1963.  
 111 Ar c'hentañ Aziad hag ar c'hentañ boudaad eo da zerc'hel ar garg-se. En e  
 111 52 vloaz emañ. Kentañ tra en deus graet eo lakaat kuzulierien en e gichen,  
 111 en o zouez an Dr. Ralph J. Bunche, eus ar Stadoù-Unanet, ha Georgy P. Arkadev,  
 111 eus Unaniezh ar Soviedoù.

111

111 Evit ar flandrezeg : 100.000 a Flandreziz a reas un displegadeg e Brusel  
 111 d'ar Sul 22 Here, evit enebañ ouzh gallekadur ar c'humunioù en-dro d'ar  
 111 gêrbenn, hag ivez ouzh an dilabour e Flandrez. Brusel, ur gêr gwall  
 111 c'hallekaet, evel ma oar an holl a zo bet eno, a zo er vro flandrezek. An  
 111 harzoù etre flandrezeg ha walloneg a dremen pelloc'h er c'hreisteiz.  
 111 Koulskoude, gant kresk ar gêrbenn, ez eo bet aloubet ar c'humunioù a dro-  
 111 -war-dro gant gallegerien, a garfe e ve lakaet galleg e-lec'h flandrezeg  
 111 da yezh ofisiel. An displegadeg a voe sioul a-walc'h, nemet kann a savas  
 111 etre Flandreziz hag un nebeut studierien c'hallekaet. (Bez' ez eus  
 111 5.500.000 a flandrezegerien e Belgia, ha 4.000.000 a wallonegerien pe  
 111 c'hallegerien. Strolladoù flandrezat koulz ha strolladoù wallonat o deus  
 111 goulennet kreñvoc'h eget biskoazh nevez 'zo ma ve troet Belgia da Stad  
 111 kevredel : Flandreziz diouzh un tu ha Walloniz diouzh an tu all).

111

111 Gouarnamant nevez en Alamagn : Konrad Adenauer, en e 86 vloaz, a voe anvet  
 111 evit ar pedervet gwech Kañseller Alamagn-Gornog, d'ar 7 Du. 258 eus izili  
 111 ar Bundestag nevez a votas evitañ, ur brasniver a 8 hepken. Ar gouarnamant  
 111 nevez a zo ur c'hevredad etre an Demokrated Kristen (kostezen Adenauer)  
 111 hag an Demokrated Dieub.

111

111 Aljeriz ha Frañsizien : Renerien FLN a zivizas skeiñ ouzh Bro-C'hall el  
 111 lec'h kizidikañ : Pariz. D'ar 17 Here e tarzhas krogadoù e kreiz-kêr etre  
 111 Aljeriz ha nerzhioù ar c'herreizh. Edo Aljeriz oc'h enebañ ouzh an difenn  
 111 graet outo da vale er-maez e-pad an noz. Miliadoù a Aljeriz a voe harzet,  
 111 hag ar gouarnamant a reas e venoz kas 1.500 anezho en-dro e "chomadur  
 111 evezhiet" en Aljeria.

111 D'an 20 e voe tro merc'hed ha bugale an Aljeriz da zisplegadegañ.  
 111 Ne voent ket lezet, avat, d'ober trouz. Ur mil bennak a voe harzet.

111 An Aljeriz dalc'het prizonidi e Frañs a zivizas ober stourm an naon,  
 111 evit kaout, emezo, gwirioù prizonidi bolitikel. Ar rener Ben Bella,  
 111 toullbac'het e kastell Turquant, e traonienn al Liger, a reas stourm an  
 111 naon ivez. D'an 13 Du e voe kaset, dinerzhet gant an olboued, d'ur  
 111 c'hlañvdi e-kichen Pariz.

111 D'an 11 e oa bet aloubet kannaddi Frañs e Rabat, Maroko, gant un  
 111 engroez kendiskulierien a-du gant Ben Bella hag Aljeriz, ha lakaet en  
 111 arigrap.

111 Kalz a Vuzulmiz a voe lazhet ha gloazet gant ar soudarded c'hall  
 111 e-doug kendiskuliadegoù aozet en Aljeria gant ar vroadelerien evit merkañ  
 111 7-vet deiz-ha-bloaz derou an ensavadeg, d'ar 1-añ a viz Du.

111

111 Votadeg e Turkia : Da c'houzout e oa ha roet e vije o asant gant  
 111 an Durked da bolitikerezh ar gouarnamant armeidi a lakaas krougañ Menderes

















111 Levrioù kembraek

111 Kalz levrioù kembraek a voe embannet en hanterenn diwezhañ 1960.  
111 Gwerzhed-mat int bet, hervez doare. Kevredigezhioù al Levr Kembraek a ra  
111 labour eus an dibab e meur a gontelezh, oc'h aozañ kenstrivadegoù, oc'h  
111 embann hag o werzhañ levrioù kembraek.

111 Levrioù evit ar vugale

111 5 kontelezh a zo en em unanet evit embann levrioù kembraek evit ar  
111 vugale : kontelezhioù Caernarfon, Aberteifi, Meirionydd, ha kontelezhioù  
111 Môn ha Penfro d'o heul. 12 levr a voe embannet e 1960, ha 13 dornskrid  
111 a zo bet dibabet da embann a-raok miz Meurzh 1962.

111 Kazetennoù ha dastumadennoù

111 E Bro-Saoz ez a ar stal war fallaat gant meur a gelaouenn, ha darn  
111 o deus ranket paouez da zont er-maez. N'emañ ket kont evel-se e Kembre.  
111 15 kelaouenn viziek hag 11 kelaouenn sizhuniek a vez embannet e kembraeg.  
111 Unan eus ar c'helaouennoù sizhuniek a voul war-dro 30.000 a skouerennoù.

111 C'hoariva broadel


111 Goulennoù a zo bet graet e-pad bloavezhioù da grouiñ ur C'hoariva  
111 Broadel hag ur C'hoarigandi Broadel e Kembre. Bez' ez eus dija ur  
111 strollad-c'hoarigan mat kreizennet e Kerdiz. Tamm skoazell ebet avat  
111 a-berzh ar gouarnamant !

111 Saoznegerien Gembre

111 Lod eus saoznegerien Gembre, hag ur gazetenn saoznek pe ziv a ra o  
111 seizh gwellañ da stourm ouzh ar c'hembraeg. Goulennet o deus groñs, da  
111 skouer, implijout saozneg e-kichen kembraeg en Eisteddfod vroadel. Hogen,  
111 dre vras, ez a war gresk an harp roet gant ar saoznegerien da adsav ar  
111 c'hembraeg. Miliadoù anezho a zo en em lakaet war studi ar yezh, o  
111 taremprediñ klasoù, pe o heuliañ ar c'hentelioù roet dre skingómz pe  
111 skinwel. War-dro 1.500, a greder, a heuilh kentelioù ar BBC.

111 An Arzoù

111 Lennegezh ar c'hembraeg a zo kreñv, ha bras eo niver ar skrivagnerie  
111 yaouank. Daoust ma saver pezhioù-c'hoari a dalvoudegezh, ne seblant ket  
111 ar c'hoariva, avat, mont kalz war-raok. Gant an arz e vez dedennet mui-  
111 -ouzh-mui a dud. War dachenn ar sonerezh ez eo ur gwir zasorc'hidigezh.





















- Petra an diaoul ... ? - emezañ. - Ul lochenn din !	111
Met e lochenn ne oa ket goullou. Enni, azezet war ur gador-vrec'h,	111
e oa ... un Tad Nedeleg c'hoazh, hemañ gwisket gant ur c'hougoul hag ur	111
vantell wenn. Pakadoù a veze kaset dezhañ dre du a-dreñv al lochenn	111
gant implijidi ar stal, hag e roe ar pakadoù-se dre un dorikell en tu	111
a-raok da vugale deuet eno gant o c'herent.	111
- Touellerezh ! - a soñjas ar gwir Dad Nedeleg. - Ar gerent a bren	111
c'hoarielloù, hag e vez lezet ar vugale geizh da grediñ ez eo me a ro	111
dezho ...	111
N'en doe ket amzer da echuiñ e soñj. Un dorn pounner a gouezhas	111
war e vrec'h. Ur mell den, ul lifre glas en e gerc'henn hag ur gasketenn	111
c'haloñset war e benn, en doa kroget rust ennañ.	111
- Petra rez-te aze, paotr ar glaou ? Laerezh ! Deus amañ a-gostez	111
ma vo gwelet petra zo e-barzh da sac'h.	111
An den, unan eus porzhierien ar stal, evel hoc'h eus divinet, a	111
sachas an Tad Nedeleg war e lerc'h betek ur gambrig, hag a brennas an	111
nor warnañ, o huchal :	111
- Na ra ket a wad fall ! Ar bolised a vo amañ diouzhtu !	111
An Tad Nedeleg, sabatuet, a gouezhas war ur bank a oa eno. "Paotr	111
ar glaou" ! An tri ger-se a dinte c'hoazh en e zivskouarn ! Ya, an Tad	111
Nedeleg gwirion n'eo ket gwisket e gwenn, nag e ruz, nag e glas, na zo-	111
ken e liv gell evel Tadoù Nedeleg ar stalioù. Gwisket eo e du : duet eo	111
bet e sae gant moged kant mil siminal, bloaz goude bloaz, o redek war	111
an toennoù.	111
Astenn a reas e zorn da gemer e sac'h. Siwazh ! E sac'h a oa	111
chomet er-maez. Aet e oa gant ar porzhier !	111
Un trouz, gwashoc'h eget trouz ar gurun, a savas eus ar stal.	111
Kreskiñ ha kreskiñ a rae, mesket gant youc'hadennoù merc'hed ha bugale.	111
Youc'hadennoù a levenez da gentañ, a droas buan da leñvadennoù ha da	111
vlejadennoù a skrij hag a spont.	111
An Tad Nedeleg a redas betek dor e brizon, a lammas er-maez o	111
tivarc'hañ anezhi gant un taol skoaz.	111
Kompren a reas neuze ar pezh a oa c'hoarvezet :	111
Ar porzhier en doa eilpennet ar sac'h da welout petra oa e-barzh.	111
Raktal e oa kouezhet c'hoarielloù war ar plañchod. Ar paotr en doa	111
hejet traoñ ar sac'h da c'houllonderiñ anezhañ. Met kaer en doa bet	111
ober, ne c'houllondere ket. C'hoarielloù, c'hoarielloù, ur ribitañhad	111
c'hoarielloù a gouezhas hag a gouezhas c'hoazh war ar plañchod, hag a	111
ziñfargoellas neuze d'an traoñ e-giz ul lammdour, na oa ket brasoc'h da	111
gentañ eget lammdour Sant-Herbod e Bro-Gernev, hogen a ginnigas dizale	111
mont a vent gant lammdour an Niagara.	111
An Tad Nedeleg a sutas. Ken buan e pignas e holl c'hoarielloù d'an	111
nec'h e-barzh ar sac'h adarre. Neuze, o strinkañ e sac'h war e skoaz, e	111
lammas war an doenn hag e nijas kuit.	111
Ha betek an deiz a hiziv, ne oar ket da vat tud ar gêr-se, daoust	111
da veur a enklask graet gant ar bolised hag ar varnerien, petra a	111
lakaas e-pad dek munutenn ar spont da ren er stal vras.	111
-----	111
Le Gérant: Mlle Y. Martin, 21, rue Dixmude, Brest. - C.C.P.P. No. 36.242.	111
Ronéotypé par Rincazaux, 1, rue Alain Fournier, Brest.	111



AR BED KELTIEK

21, RUE DIXMUDE - SAINT-MARC

**B R E S T**

C. C. P. RENNES 1907-07